



HAL
open science

Ar c'hoariva brezhonek, 1970-2024. Leurenniñ e brezhoneg, leurenniñ ar brezhoneg : plas ar yezhoù arall.

Anaïs Mahé

► To cite this version:

Anaïs Mahé. Ar c'hoariva brezhonek, 1970-2024. Leurenniñ e brezhoneg, leurenniñ ar brezhoneg : plas ar yezhoù arall.. Linguistics. 2024. dumas-04595939

HAL Id: dumas-04595939

<https://dumas.ccsd.cnrs.fr/dumas-04595939>

Submitted on 31 May 2024

HAL is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution - NonCommercial - NoDerivatives 4.0 International License

**Skol-veur Roazhon 2
Kevrenn Brezhoneg ha keltiek**



Kounskrid master

ARC'HOARIVA BREZHONEK, 1970-2024 :

Leurenniñ e brezhoneg, leurenniñ ar
brezhoneg : plas ar yezhoù arall.

Anaïs Mahé

Edan renerezh Erwan Hupel

2024

Trugarekaat

Trugarez da Erwan Hupel, ma rener kounskrid, aveit bout bepred bet prest da sikour ha da dapout an amzer dalbezh prizius da ranniñ geniñ e alioù reizh ha madelezhus. Trugarez ivez aveit ar frankiz en deus leusket din aveit kas da benn ar labour-mañ.

Trugarez da skipailh Teatr Piba en doa reskontet d'am goulennoù niverus dre bostel hag en doa kaset din testennoù un nebeud pezhioù-c'hoari savet gete aveit sikour genin em labour kounskrid. Trugarez ivez d'ar strollad La Obra ha d'ar gompagnunezh Safar he doa ma degemeret, e Baod, e 2022, e-pad un abadenn graet aveit ar skolidi hepken.

Trugarez da z/Dandelion Epaud bout kaset e dezenn din aveit pinvidikaat ma frederiadennoù.

Trugarez da v/Brieg Doujet aveit e sikour adlenn ha reizhiñ ur lod ag ar labour-mañ.

Trugarez, erfin, da ma mignoned ha da ma familh : ma bugale, ma gwaz, ma zud aveit o souten hep defot hag o c'halonekaat ne c'heller ket kontiñ.

Berrskrid

Ur bochad emdroadurioù a zo bet en c'hoariva brezhonek adalek ar bleadoù 80. Lod a-ziàr an danvez ha lod a-ziàr an doare. Un c'hoant modernaat ha digoriñ a vez gwelet. C'hoant o deus ar leurenourion sachiñ muioc'h-mui a dud : brezhonegerion peurliesañ, mes pas hepken ; da lâret eo tud a ouia brezhoneg gwell pe well. Liesaat ha kreskiñ a ra an niver a bezhioù-c'hoari, etre abadennoù krouet penn-da-benn pe pezhioù-c'hoari klasel azasaet. Leurreniñ e brezhoneg a dalv neuze leurreniñ ar brezhoneg ha reiñ o lod d'ar yezhoù arall. Mes peseurt yezh ha peseurt lod ? N'eo ket ar galleg an harp nameitañ mes ar saozneg, ar latin, ar c'hembraeg a zo ivez anezhe... Perak e vez pe e vehe ezhomm ag ar yezhoù arall ? Penaos e vënt damveneget ha degaset àr ar leurenn, en ur mod fetis pe difetis ? Peseurt statud ha talvoudegezh o deus razh ar yezhoù-se ? Studiet eo bet ivez genomp choazoù ar leurenourion yaouank. Peseurt sell nevez o deus àr hor c'houlz hag hor c'hevredigezh ha penaos e vez lakaet àr-wel an doaroù nevez-se get an temoù dibabet gete ha get ar leurrenaoziñ.

Taolenn

Trugarekaat.....	3
Berrskrid.....	5
Taolenn.....	7
Digoradur.....	9
I.Implij ar yezhoù arall : perak ha penaos.....	15
I.1. Bout komprenet get ar brasañ niver.....	15
I.1.1.Aesaat ar c'hompren	15
I.1.2.Gober get ar galleg pa ne vez ger brezhoneg erbet.....	18
I.1.3.Listenniñ, niveriñ.....	19
I.1.4.Poueziñ àr un dra bennak.....	22
I.2.Gober daveoù	23
I.2.1.Menegiñ un oberenn pe un oberour arall.....	24
I.2.2.Ur « Serr-lagad » ag an oberenn a-orin (skouer an troidigezhioù).....	27
I.2.3.Ober dave d'ur c'hultur boutin.....	29
I.2.4.Daveiñ d'ur c'henarroud ofisiel.....	31
I.2.5.Menegiñ komzoù un dudenn er-maez ag an istoer.....	31
I.3.C'hoari get levezonioù ar yezhoù.....	32
I.3.1.C'hoarioù-gerioù.....	33
I.3.2.Meskiñ yezhoù.....	36
II.Damvenegiñ ha degas ar yezhoù arall.....	39
II.1.Get an tudennoù.....	39
II.1.1.Lesanvioù hag anvioù.....	39
II.1.2.Pouez-mouezh.....	44
II.1.3.Prezeg.....	45
II.1.4.Darempredoù get tudennoù arall, boazioù yezhoniel (code switching).....	46
II.1.5.C'hoari ar gomedianed.....	49
II.2.Get an danvez.....	51
II.2.1.Son.....	52
II.2.2.Gouloù.....	55
II.2.3.Skeudenn.....	57

II.2.4.Ar c'hinkladurioù.....	59
III.Peseurt sell àr peseurt yezh.....	63
III.1.Ar yezhoù brasniver.....	63
III.1.1.Skeudenn.....	63
III.1.1.1.Yezh ar galloud, yezh ar bleuñv ag an dud.....	63
III.1.1.2.Yezh ar vro pe yezh an estrañjourion.....	67
III.1.1.3.Yezh ar speredoù uhel, yezh an dud desket.....	71
III.1.2.Sell o c'homzerion àr ar yezhoù minorel.....	76
III.1.2.1.Sell an drevadenourion.....	76
III.1.2.2.L'arroseur arrosé.....	82
III.2.Ar brezhoneg hag ar vrezhonegerion.....	86
III.2.1.Ar re hañvalaet doc'h komzerion yezhoù brasniver.....	87
III.2.2.Ar vrezhonegerion, komzerion yezhoù minorel, ur skouer voutin kozh Noe.....	90
III.2.3.Nameidennoù	94
IV.Choazoù ar leurenourion yaouank.....	101
IV.1.Un c'hoant modernaat.....	103
IV.1.1.Ur sell dishañval àr ar bed hag àr Breizh.....	103
IV.1.2.Plas ha sell àr ar brezhoneg hag àr ar yezhoù arall.....	108
IV.1.3.Prederi liammet get hor c'hevredigezh ha hor c'houlz.....	115
IV.2.Reneveziñ ar leurenniñ.....	119
IV.2.1.Ar son.....	119
IV.2.2.Ar leurrenaoziñ hag ar goulou.....	121
Klozadur.....	127
Levrlennadur.....	133
Korpus.....	137

Digoradur

Adalek fin ar bleadoù daou-ugent eh eus bet gwelet ur gwir nevezadur ag an c'hoariva brezhonek, àr ar leurenn pe er radio. Ne dalv ket eo bet skarzhet an hengoun paseet penn-da-benn, diverket pep tra ha savet ur stumm nevez da c'hoari e brezhoneg. Kentoc'h en deus ster ar mennozh-mañ ag un adc'hanedigezh pe memes un dasorc'hidigezh¹. E penn-kentañ an dasorc'hidigezh-se e oa dreist-holl un c'hoariva pobl, diàr ar maez, aveit ha get ar vrezhonegerion hepken. Neuze e c'hallomp notiñ nevezadur an c'hoariva brezhonek a zo un anadenn ag a ya pelloc'h aveit enebiñ doc'h sevenadur kêr, met resisoc'h : a-enep d'ar sevenadur ofisiel. Kement a draoù a ziskouez an c'hoant c'hoari er vro get tud ar vro hepken². N'eo ket mui ken gwir èl a-raok. Un c'hoant da zedenn muioc'h a dud a vez santet mat abaoe bleadoù dija hag an c'hoariva e brezhoneg n'eo ket miret ken da vrezhonegerion varrek hepken. Komprenet o deus ar strolladoù buan a-walc'h e faote dezhe gober doc'h o endro diglosek aveit treuzveviñ. Kenderc'hel da ginnig abadennoù e brezhoneg aveit brezhonegerion dibabet hepken ne vize ket bet dibosubl met re ziasur. Gober ar choaj-mañ a vize bet serriñ muioc'h c'hoazh bed an c'hoariva brezhonek betek mervel. Digoret e oa bet tamm-ha-tamm an c'hoariva brezhonek d'ar vrezhonegerion nevez ha memes d'ar c'hallegerion pa generant ar riskl d'ober anaoudegezh getañ... Ret eo neuze kempoueziñ get liveoù kompren dishañval ar publik hep leuskel den erbet àr vord an hent. Ne oa ket pled ar strolladoù c'hoariva brezhonek koll tud just a-walc'h. Implij meur a yezh en c'hoariva n'eo ket ur boelladenn aes. Skoilhoù bras a zo ha ret eo klask penaos monet e-biou dezhe.

E-keñver an teknik e vez kavet muioc'h a ziskoulmoù aveit dirouestliñ kudennoù an c'hoari etre yezhoù. Ur yoc'h danvez zo. Diforc'hioù zo etre ar strolladoù a-vicher hag an amateurion, èl-just. Alies-tre e vez an dalc'h ur goulenn a argant hag a amzer.

Gwelet e vez, neuze, a-wezhioù pezhioù-c'hoari a vez kinniget an hanter e brezhoneg hag an hanter arall e galleg. Pegementadoù arall a vez gwelet, èl-just. Ur moaien da nompas dibab etre an div yezh. Tout an dud a c'hell heuliiñ an istoer memes pa ne vez ket komprenet pep tra gete. Ma c'houlenn un dudenn un dra e brezhoneg hag e respont egile e galleg e vez divinet doc'htu petra 'oa ar goulenn a-orin. An arvesterion a gompren a-drugarez d'ar c'henarroud. N'eo ket ral, koulskoude, an degouezhioù ma vez graet *private jokes* komprenet hepken get ar vrezhonegerion. Sachiñ evezh ar vrezhonegerion get c'hoarioù-gerioù, troidigezhioù fentus... Diskouez dezhe o deus ivez ar chañs

1 HUPEL Erwan ; *Le renouveau du théâtre en langue bretonne* ; 2012 ; pp. 203-216.

2 Ibidem.

mestroniñ an div yezh ha kompren tout penn-da-benn pa vez c'hwitet an dra-mañ-tra get ar c'hallegerion : gober un troadad fri d'an diglosiezh.

Tokarnoù-selaou a vez implijet resis get ur strollad hepken : an Teatr Piba. Ur strollad nevez a-walc'h a zo bet krouet e 2009. Daou avantaj a zo get an tokarnoù selaou. Da gentañ kinnig un abadenn aveit ar brasañ niver ag an arvesterion. Renkadoù pe lec'hioù resis a zo dibabet er sal aveit ar yezh-mañ-yezh (lod ar galleg ha lod arall). An diskoulm-mañ a zo koustus-tre aveit ar strolladoù. Posubl e vez er salioù zo hepken. Boas eo Teatr Piba da skigniñ o abadennoù. Eil avantaj an tokarnoù selaou a zo aveit enrolliñ ar pezh-c'hoari àr-eeun. Stad an enrolladenn àr-eeun a zamant binvioù mat hag arvesterion fur ha sioul. Un hanterer a zispleg, berped a-raok deroù ar pezh-c'hoari, penaos e vo graet ha petra emeur é c'hortoz diget an arvesterion. Sinoù a vez graet aveit gouiet pegoulz c'hoarzhin, estlammiñ... Ret eo bout an naturelañ hag ar flourañ posubl e-pad an enrolliñ é soñjal er skignerezh radio.

Gober get un troer zo posubl ivez. Ur finesa leurreniñ a zo d'e genstagiñ 'barzh ar pezh-c'hoari èl un dudenn e-touez ar re arall. 'Barzh *Neizheta, elle niche où la langue ?*³ get Teatr Piba e vez degaset tudenn an droerez e mod-se get unan ag an tudennoù pennañ (Katell Maligorn) : « Enfin pour finir une invitée spéciale : Michelle ! Michelle assurera la traduction en simultané pour les auditeurs et spectateurs ne sachant pas encore parler breton. Nobody is perfect ! ». Ur strategiezh fentus aveit monet e-biou da skoilh an diglosiezh. N'eo ket plijus da glevet berped rak trouzus eo ar vouezh gallek àr ar vouezh brezhonek. Ur finesa leurreniñ arall a zo ivez da reiñ karg an troer d'un dudenn arall e-pad ar senenn-mañ-senenn. Skouerioù niverus 'zo :

*Merc'h an eog*⁴, arvest 1, senenn 4

Loeiza - Trugarez deoc'h evit an degemer, un enor oa din o vezañ asambles ganeoc'h.

Mair (*Traduisant*) - Merci pour l'accueil.

Mam - Oh c'était avec grand plaisir. C'était bien de vous voir toutes les deux. »

pe c'hoazh 'barzh *Privezioù publik*⁵, arvest 1, devezh 1 :

« Abigaëlle – Oui bien sûr. Prop, kwa. Mah bon. N'eo ket memestra. Me gav hirrrrr ma amzer, Marijanik, ma ouifes. Oh je m'ennuie, si tu savais comment je m'ennuie.

Marijanik, *lentik* – T'as pas besoin de traduire, tu sais. Je parle un tammig memestra. C'est mieux en breton, il faut que j'apprenne. »

Gwelet e vez nebeutoc'h en c'hoariva brezhonek implij ur skramm get istitloù. Pa vez graet ne vez ket implijet hed-ha-hed an abadenn pa vez gwelet kalz aliesoc'h er pezhioù-c'hoari get yezhoù brasniver. Implijet e vez aveit ar pezh-c'hoari *War hent Youenn Gwernig*⁶ get Ar Vro Bagan, pa erru

3 *Neizheta, elle niche où la langue ?*, Teatr Piba, 2022. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

4 *Merc'h an eog*, Teatr Piba, 2016. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

5 *Privezioù publik*, Mélanie Giotto, strollad Paritito, 2015. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

6 *War hent Youenn Gwernig*, Ar Vro Bagan, 2019. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

Youenn Gwernig e New York. Mesket e vez skeudennoù a zelwenn ar frankiz bannet doc'h ur skramm get istitloù. Setu ur moaien da nompas implij ar skramm en ur mod rik hepken aveit an istitloù met bout tanavoc'h ha natureloc'h é veskiñ gerioù ha skeudennoù. Implij ur skramm a c'houlenn prederiadennoù en a-raok : soñjet e oa bet en istitloù e deroù ar pezh-c'hoari pe àr-lerc'h ? Prederiadennoù a seurt-se a c'hell cheñch plas an eil yezh, ar yezhoù arall, er pezh-c'hoari. Ur poent arall a zo talvoudus pa vez skrivet an droidigezh doc'h ar skramm : feal pe strategel an droidigezh ? Da lâret eo skriviñ pep tra en ur mod feal rik pe gober un dibab ha c'hoari get liveoù kompren dishañval 'barzh darvoudoù resis (kunjennoù, liveoù yezh, ...).

Erfin e vez kavet ivez strolladoù a choaz kinnig abadennoù e brezhoneg penn-da-benn pe dost memestra. Strolladoù amatourion 'zo met strolladoù a-vicher ivez, da skouer Ar Vro Bagan. Nicole Nolette 'deus studiet pizh labour Monica Heller, sokioyezhoniouerez a vro Ganada, a-ziàr implij meizad ar codeswitching etre galleg ha saozneg en Ontario hag e Kebek : « [...] le choix de l'usage ou du non-usage du *code-switching* participe d'une stratégie de mobilisation ethnique. Selon elle, l'abstention du *codeswitching* chez des individus de ces contextes provient soit d'une distance par rapport à la frontière linguistique (comme chez les unilingues), soit d'un désir de maintenir cette frontière. Dans ce cas, l'individu utilise le français comme langue unique par souci politique de contrer l'anglais dominant. Heller note que cette stratégie s'avère particulièrement valable parce qu'elle a mené à la valorisation du français et à la création de ressources contrôlées exclusivement par les francophones. Pour conserver ces ressources, il est donc important de ne pas parler deux langues à la fois, c'est-à-dire dans la même phrase ou dans la même suite de phrases. [...] Cette élite se définit par sa mobilisation ethnique, par la fierté d'allégeance au groupe culturel et linguistique [...] »⁷. En he fennad e komz Marie-Pierre Caire Mérida ag an divyezhegezh en c'hoariva a vro Katalonia er XIX^{vet} kantved : « La situation de diglossie, de supériorité du castillan, dans laquelle ce public évolue, n'est pas niée ni oubliée dans ces œuvres bilingues. Le castillan est présent pour témoigner de l'existence de la diglossie mais aussi pour renforcer l'idée que le catalan, malgré cette situation, est la langue des Catalans. Quelques références sont faites à la place des différentes langues, à leur rôle, à leur utilisation. »⁸. Ar pal a chomehe memestra, en darvoudoù resis, pa vez posubl, gober hep redioù an diglosiezh ?

C'hoari get div yezh a c'hell lakaat ar gomedianed diaes. Ma vez enrollet pezhioù-c'hoari en e-raok get Ar Vro Bagan pa vezent kinniget er-maez e vez graet kentoc'h aveit sikour an aktourion kar diaes eo ober get mikroioù. Estroc'h aveit komz àr ar prim a raer pa vez ankouaet un dra bennak. Un dibab a c'hell bout get ar gomedianed aveit adkavout ur lusk, souezhiñ an arvesterion, c'hoari get

7 NOLETTE Nicole é venegiñ Monica Heller ; *Le théâtre bilingue de l'ouest Canadien : stratégies et enjeux de traduction* ; 2011.

8 CAIRE MÉRIDA, Marie-Pierre. *Le bilinguisme dans le théâtre Catalan au XIXe siècle : un procédé dramatique* ; 2004.

arvesterion ar lec'h-mañ-lec'h. Graet e vez alies a-walc'h get Ar Vro Bagan pa vez c'hoariet gete er-maez ag o bro. Skouerioù niverus 'zo : gober anv ag ur string e Roskov, gober farsadennoù diàrbenn ar gwenedeg 'barzh An Oriant, ... 'Barzh an *Amoko 2*⁹ e vez klevet : « pour une poignée de dollars ils n'ont pas voulu faire réparer l'Amoko [...] gwashoc'h eget leoniz ! ». E *Ubu Roue*¹⁰ pand eo bet tapet Bordure get an Tad Ubu « deuet oc'h e bro Wened » pe diviz an Tad Ubu « Petra 'lavarez, ne 'z eus ket ken ? Mat ! War-raok an noblañsed, lazhañ an holl anezho a rankin ober evit pinvidikaat. O holl vadoù a deuo din evel-se. Alo, an noblañsed en toull-trap ! Ha buan ! ». Meneget e vez anvioù an nobled ha memes : « D'an toull Kervella » aveit echuiñ ! N'eo ket primaoziñ gwir d'ar liesañ ha traoùigoù a zo bet dibabet a-raok é pleustriñ. Neuze petra eo plas ar primaoziñ pa vez c'hoariet get div pe meur a yezh ? Aesoc'h e vez primaoziñ get unan aveit get eben ? Primaoziñ a dalvehe lakaat ur ger pe ur frazenn arall e lec'h ar ger/ar frazenn a-orin. Ret eo diwall doc'h ar ster, ar mennad/soñj, ar lusk. Penaos gober neuze : ret vehe kavout gerioù kevatal anavezet get an holl aveit nompas torriñ lusk an abadenn pe koll aked an arvesterion. « Établissant ainsi une analogie entre la traduction d'une langue étrangère et la transcription d'un texte à la scène, Vitez soulignait que ce n'est pas tant la traduction « du sens littéral » qui compte au théâtre, mais celle « du mouvement du sens »¹¹. Primaoziñ a dalv ivez bout emskiant eh eus traoù a vo kollet rak ne vint ket komprenet get an holl hag asantiñ an anad-mañ memestra. Jean-François Dusigne a veneg Roland Barthes pelloc'h, diàrbenn ar japaneg : « connaître une langue étrangère (étrange) et cependant ne pas la comprendre : percevoir en elle la différence, sans que cette différence soit jamais récupérée par la socialité superficielle du langage, communication ou vulgarité ; connaître, réfractées positivement dans une langue nouvelle, les impossibilités de la nôtre ; descendre dans l'intraduisible, en éprouver la secousse sans jamais l'amortir [...] »¹².

Un diaezamant diwezhañ a chom, goude an teknik hag an c'hoari : ar leurrenniñ. Penaos e vez graet aveit bout komprenet get ar brasañ niver get ur leurrennaoziñ get nebeut a draoù. Kemeramp skouer ur c'hiz nevez deuet àr-wel e brezhoneg abaoe ur pempzek vlez bennak : ar faltazioù radio. War lec'hienn internet Teatr Piba e vez kavet pezhioù-c'hoari ha faltazioù radio a zo bet enrollet. Un doare-ober dedennus é soñjal er skignerezh goude. Kavet e vezont àr lec'hienn internet ar strollad met ivez lec'hienn internet Radio Breizh, porched niverel ar radioioù brezhonek. Ur mod ijinus aveit skigniñ oberennoù arzel e brezhoneg er-maez ag ar salioù.

Ar faltazioù radio a zo dishañval doc'h ar pezhioù-c'hoari enrollet. Arvesterion a zo met n'eus kinkladur pe c'hoari gouloù erbet e-pad an enrolliñ. Ar leurrenniñ a vez graet get ar son hepken aveit

9 *Amoko 2* ; Ar Vro Bagan ; 1995. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

10 *Ubu Roue* ; Ar Vro Bagan ; 2008. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

11 DUSIGNE Jean-François é venegiñ Antoine Vitez ; *Jouer, étranger à sa propre langue*, *Nouvelle revue d'esthétique* ; 2009

12 *Ibidem*.

skeudenniñ ar pezh-c'hoari : c'hoari get trouziou (traou, danveziou, ...). Kemeramp skouer *Ar maeziou*¹³, diàr *The Country*¹⁴ get Martin Crimp. 'Barzh an diviz etre Corinne ha Rebecca e vez klevet an trouziou tro-dro dezhe : son un nor digoret, ar lazher gouloù, an dour a ver en ur werenn... Labouret e vez get ar gomedianed àr ar pouez-mouezh, an taol-mouezh, ar lusk, ar c'has, an distrip, ar live-son pe c'hoazh ar c'hreñvder. Ret eo kempoueziñ an diouer a skeudenoù get ar son : trouziou gwir a zo bet enrollet pe onomatopeennoù. Ar faltaziou radio a vehe marse ur stumm etre ar pezh-c'hoari hag ar gontadenn. Un mod da adkrouiñ ur liamm get un hengoun dre gomz a blije kement gwezhall ?

Gwelet hon eus emañ ret prederiñ e kalz traou e-raok pa vez savet abadennoù divyezhek pe liesyezhek. Estroc'h aveit kudennoù a vez get ar liesyezhegezh. Un doare arall da ober c'hoariva eo. Leurenniñ e brezhoneg a dalv leurenniñ ar brezhoneg ha reiñ o lod d'ar yezhoù arall.

Ret eo, da gentañ, kompren perak e vez implijet ar yezh-mañ-yezh ha penaos e vez graet ez-pleustrek. Peseurt paliou a zo a-dreñv an dibab-mañ-dibab : gober daveoù, aesaat kompren an arvesterion, c'hoari get ar yezhoù hag o hañvaledigezhoù, o diforc'hioù, levezon unan àr egile... Implij meur a yezh a c'hellehe servij ur pal dramaturjiel. Marie-Pierre Caire Mérida a lâar « Mettre en scène des situations où se côtoient des individus [...], montrer leur aisance ou au contraire leur difficulté à communiquer peut correspondre à une *recherche de réalisme*. [...] Et puis nous trouvons également des dialogues dans lesquels les langues sont mélangées, c'est à dire que des mots ou expressions d'une langue sont insérés au milieu de l'autre langue, ou une des langues est déformée sous l'influence de structures de l'autre ; il s'agit là d'interférence linguistique ou de convergence, selon les expressions employées par José Luis Blas Arroyo. »¹⁵.

Da heul e klaskimp gwelet penaos e vez damveneget ha degaset ar yezhoù arall. « Ce qu'on en sait par le discours tend à « se traduire » tout de suite dans un des aspects de l'espace scénique. » a skrive Patrice Pavis¹⁶. Resisoc'h penaos e vez graet a-drugarez d'ar leurenniñ : get an tudennoù pe get an danveziou.

Ne vez ket lakaet ar memes talvoudegezh àr tout ar yezhoù. Ar yezhoù o deus statudoù dishañval. Met perak ? Ur goulen arall a zo dedennus tre ivez : peseurt yezh ha perak ? « [...] individuelles ou collectives, les situations de bilinguisme impliquant des langues aux statuts inégaux (majoritaire/minoritaire, dominant/dominé) supposent des enjeux considérables au plan personnel et sociétal. Car toutes les langues sont potentiellement en concurrence et co-existent dans

13 *Ar maeziou*, Teatr Piba ; 2015. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

14 *The country* ; Martin Crimp ; 2000.

15 CAIRE MERIDA Marie-Pierre ; *Le bilinguisme dans le théâtre Catalan au XIXe siècle : un procédé dramatique* ; 2004.

16 PAVIS Patrice ; *Chapitre XVIII. Production et réception au théâtre : La concrétisation du texte dramatique et spectaculaire* ; 2007.

une tension idéologique. [...] »¹⁷. Prederiet e vo àr peseurt sell àr peseurt yezh. Hep adc'hoari an duvell etre David ha Goliath : doc'h un tu lod ag ar yezhoù brasniver hag o c'homzerion ha doc'h un tu arall ar brezhoneg hag ar vrezhonegerion.

Aveit echuiñ e studiimp doare dishañval ar rummadoù yaouank en c'hoariva brezhonek. Ma vez kavet berped strolladoù a-vicher o deus graet o zreuz, tost hep gouzañv red an amzer, e vez kavet muioc'h-mui a strolladoù yaouank o deus c'hoant modernaat an c'hoariva hag e dostaat ag o c'houlz. Ur sell dishañval àr ar bed hag àr Breizh a vez kinniget gete. Prederiadennoù liammet muioc'h get o c'houlz (heñvelrevelezh, tu ar merc'hed, trañsreizhelezh, disvroiñ, ekologiezh...) a zo e-kreiz o oberennoù hag a levezon ivez labourioù strolladoù koshoc'h. Erfin e vez gwelet mat gete penaos eh eus bet klasket reneveziñ ar leurenniñ aveit donet da benn da ginnig stummoù da ginnig un c'hoariva simploc'h, nebutoc'h a c'hlabous hag a ginkliñ ennañ.

17 GADET Françoise, VARRO Gabrielle, *Le "scandale" du bilinguisme, Langage et société* ; 2006.

I. Implij ar yezhoù arall : perak ha penaos

Implij yezhoù arall, estroc'h aveit ar brezhoneg, a zo un tammig ret aveit abegoù niverus ha dishañval. Rediñ a ra an diglosiezh an arזורion da dremen dre wenojennoù kenstur pa vez savet ur pezh-c'hoari e brezhoneg. Ur pal dramaourel fetis a zo berped a-dreñv pa vez graet resis get ar yezh-mañ-yezh, er prantad-mañ-prantad. Ma vez aveit aesaat ar c'hompren, farsal ha c'hoari get ar yezhoù pe gober daveoù e vez soñjet mat en a-raok, get ar leurenourion ijinus, perak ha penaos poentaouiñ ar resit get ar yezhoù arall a-drugarez da zisailhadennoù berr.

I.1. Bout komprenet get ar brasañ niver

Bout komprenet get ar brasañ niver eo ar pal kentañ. Èl hon boa lâret dija en digoradur e vez digoret muioc'h-mui a bezhoù c'hoari e brezhoneg d'arvesterion a bep seurt, o deus liveoù dishañval e-keñver mestroniñ ar yezh. Setu perak e vez kavet er prantadoù strategel, gerioù pe frazennoù e galleg, d'ar muiañ.

I.1.1. Aesaat ar c'hompren

Aesaat o c'hompren d'an arvesterion, pa vez implijet gerioù pe meizadoù diaes da gompren, a vez graet a-drugarez d'ar galleg. 'Barzh *Mont a raio kuit*¹⁸ e vez graet alies a-walc'h kar komzet e vez ag ur c'hlenved-spered. Kontin a ra istoer Erwan, un den yaouank a vev get ar skizofreni. Ur sterva resis a zo : gerioù a vez implijet get tud a-vicher. Troiennou skiantel a vez klevet get ar vedisinerez, meur a wezh, er pezh-c'hoari. Skouer an diviz etre ar vedisinerez ha tud Erwan (arvest 2, diviz 3) :

Ar vedisinerez - Klanv eo ho mab... Penaos lavaret deoc'h... Votre fils souffre de schizophrénie.

Ar vamm - Petra eo ar «schizophrénie»?

Ar vedisinerez - C'est une affection psychotique.

An tad - Petra eo «affection psychotique»?

Ar vedisinerez - Une désorganisation mentale, une dissociation.

An tad – Ne gomprenan ket.

Ar vedisinerez - Penaos displegan deoc'h ? C'est la perte de l'unité psychique. Un relâchement des associations entre les idées, les émotions, les attitudes... La pensée devient

¹⁸ *Mont a raio kuit*, Ar Vro Bagan, 2021. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

floue, discontinue ; le discours est illogique, difficile a suivre. [...]unité psychique. Un relâchement des associations entre les idées, les émotions, les attitudes... La pensée devient floue, discontinue ; le discours est illogique, difficile à suivre. [...]

Troioù-lavar a zo ivez. « Le stabiliser » a vez klevet meur a wezh get ar skipailh medisinel, get ar mab, an dud... Neuze e vize ar galleg yezh ar skiant ? « Le discours est flou » a lâar ar vedisineres mes he doare da gaozeal ivez.

Ar memes finesa leurrenniñ a vez gwelet 'barzh *Ubu roue*¹⁹(arvest 1, diviz 7) : ne vez ket komprenet ur ger get an tudennoù a zo àr ar leurrenn, àr a seblant, met graet e vez, èl-just, aveit an arvesterion.

Tad Ubu – Va mignoned kaer ! Poent bras eo deomp renkañ an traoù evit an irienn.

An holl – Hein ?

Tad Ubu – An irienn. Ar gonjuration.

An holl – Aaah !

Pe 'barzh *Mont a raio kuit*²⁰ en-dro :

Kamalad – Peoc'h gant en em zistrujañ. O trouktunañ emout !

Ar Mab – Quoi ? Drouktunañ petra ?

Kamalad – Tu fais du chantage.

A-wezhioù e vez graet goap doc'h an diglosiezh, un troatad fri dezhi. *An Albatroz*²¹ a zo ur gontadenn a diretennoù e lec'h e vez kontet istoerig poar faotr àr ur bank. Aotrou Mouffet, Aotrou Komiser, Aotrou Leclerc, Aotrou Belleguic a zo tud a renkoù uhel. An diviz a grog etreze e galleg met a echu e brezhoneg kar ne gomz ket mat galleg an Aotrou Belleguic. Ur farsadenn, un eilpenn graet get ar c'homedian.

Memestra get *Privezioù Publik*²² . An abadenn a gont istoer peder maouez e privezioù publik ur greizenn koñvers bennak e Breizh. En arvest 2, diviz 2 :

Marjanik – Ah non alors, achu ! N'oc'h ket kat da ziskouez un tamm solidarité memes !

Leila – Kengred.

Marjanik - ... un tamm kengred ! Aet on faezh ganeoc'h !

Leila – Wahou. Brezhoneg brav ganit.

19 *Ubu Roue*, Op. Cit.

20 *Mont a raio kuit*, Op. Cit.

21 *An Albatroz* ; Kompagnunezh Safar ; 2022. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

22 *Privezioù Publik*, Op. Cit.

Marjanik, *laouen memestra* – Da veg.

Pa zifazi Leila Marjanik e lar dezhi penaos e vez troet «solidarite »e brezhoneg hag ar ger a vez desket d'an arvesterion ivez.

Pe en ur senenn arall c'hoazh (arvest 1, senenn 2) :

Leila – J'ai quatre heures de pause avant de rembaucher. Vous venez prendre un café ?

Marjanik ha Libellule a c'houll an eil gant eben, a selloù didrouz.

Leila, *o kinnig mont er-maez* : O tont emao'h ?

Libellule - N'emaon ket. Ne yan ket me er-maez.

Leila - Ne deuez ket ?

Libellule - Selaou... n'hallan ket.

Marjanik - Ne c'hell ket.

Leila - Petra 'sinifi an dra-se ?

Libellule - N'hallan ket. Dañjerus eo evidon er-maez. Techet on d'en em goll.

Leila - Petra eo an istor-se ? Pe oad out ? Ne gavez ket da vammig ?

Libellule - N'eo ket se.

Marjanik - Ro peoc'h dezhi, pa lar dit eo techet d'en em goll.

Leila - Sapre inosantez da vignonez nevez pe petra ?

Marjanik - Laosk anezhi trankil. Ne ouzez ket.

Leila - Petra 'zo ? Larit din ! Drammoù a werzhit amañ ?

Marjanik - Lar dezhi, Libellule. Gwelloc'h dezhi gouzout. D'am soñj e c'hell kompren.

Libellule, *diardou* - C'est étrange à raconter mais c'est pas très compliqué. [...]

Amañ daou elfenn a zo da notiñ e-keñver implij ar galleg. Leila a c'houlenn e galleg ha n'he deus ket bet reskont erbet. Adgoulenn a ra e brezhoneg èl ne oa ket bet komprenet ar wezh kentañ get an div arall. Libellule a gont hec'h istoer e galleg kar pouezus aveit ster an istoer ha luzietoc'h an traoù aveit ar pezh a bretant Libellule.

'Barzh *Metamorfoz*²³ get Teatr Piba e reomp anaoudegezh get ar vamm Damokle. Ur vaouez a-benn, ur rebell, un dispac'herez. Prezeg Damokle a vez kontet e galleg hepken (senenn 11):

Damokle - [...] L'Internationale Fanfaronne lutte sans relâche contre les rapaces capitalistes dans tous les pays du monde. Pouvait-elle se détourner hypocritement de la lutte de libération nationale des pays coloniaux et semi-coloniaux ? L'odieux régime de l'indigénat, imposé par l'impérialisme capitaliste, vous prive de toute liberté individuelle, de tout droit politique et

23 *Metamorfoz*, Teatr Piba ; 2014. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

social, vous plaçant ainsi au rang inférieur des bêtes de somme. Le capitalisme exploiteur vous maintient dans l'obscurantisme [...]

Implij ar galleg ha luadenniñ propaganda ar sindikadoù. Komz a wirioù ar labour get troiennoù èl « L'odieux régime de l'indigénat », « le capitalisme exploiteur vous maintient dans l'obscurantisme » ... Embannet e vez mennozhioù a vize bet diaes siliñ anezhe e brezhoneg. Marse e vez graet goap ivez a brezegennoù politikel gwall luziet. Pezh a zo talvoudus get an divyezhegezh. Gellet a raer c'hoari get talvoudegezh arouezek pep yezh. Lâret e vez eno ur bochad traoù, alies digomprenus, get troiennoù n'int ket sklaer. Da lâret eo un « Internationale fanfaronne » a ra kalz a drouz aveit nebeut a dra. Un c'hoari a zo etre ar c'homzoù « Internationale Fanfaronne » hag ar skeudenn ar leurenn e-lec'h emañ Damokle é prezegenniñ hag ar bagad a-dreñv dezhi. Ar bagad a vize da dostaat doc'h « fanfaronne » aveit « fanfare » marse. Damokle a zo èl dileuriadez ag ar strollad politikel. « L'internationale fanfaronne » a zo tost a glichedoù an tu kleiz mes ivez pa studiamp komzoù he frezeg ag ar sonenn dispac'hel get Eugène Pottier *L'Internationale*²⁴. Ar sonenn-se a zo un arouez kreñv ag an emgannoù sokial tro-dro ar bed. Kanet hag adkanet eo bet meur a wezh get ar sosialisted, an anarchisted, ar gomunisted, an enepkevalaourion. Damokle a lâret just a-walc'h : « L'Internationale Fanfaronne lutte sans relâche contre les rapaces capitalistes dans tous les pays du monde. ». Met n'eo ket tout. Komzet e vez ivez a drevadenouriezh « Pouvait-elle se détourner hypocritement de la lutte de libération nationale des pays coloniaux et semi-coloniaux ? ». E-barzh *Metamorfoz* e vez kontet istoer an tad-kozh a oa kargiad trevadennel e broioù pell. Neuze ar « pays coloniaux et semi-coloniaux » a vize ar broioù pell hepken pe an holl broioù a zo bet trevadennet get ar C'hallaoued ? Breizh da skouer ? « L'Internationale Fanfaronne » a glask digoriñ bras divskouarn ha spered an arvesterion aveit ma ne laoskehe ket « Le capitalisme exploiteur [les maintenir] dans l'obscurantisme [...] ».

I.1.2. Gober get ar galleg pa ne vez ger brezhoneg erbet

Ma oa er lodenn diaraog ur skoilh bras e-keñver ar c'hompren : mennozhioù a vize bet diaes siliñ anezhe e brezhoneg, troiennoù skiantel pe me-ouia-me, eo un tammig dishañval implij ar galleg er poent-mañ. Faota d'ar leurenourion bout feal da spered ar brezhoneg. Pa vez ur ger nevez ha n'eus ger kevatal e brezhoneg pe unan ne vehe ket anavet get razh an arvesterion e c'hellant monet dre ar yezhoù arall. Gober get ar galleg pa ne vez ger brezhoneg erbet a zo kentoc'h aveit bout simploc'h, fluoc'h er resit. Ar gerioù galleg a vez implijet amañ a zave doc'h ijinadennoù modern : mekanikoù, savadurioù.... Klask o zreiñ e brezhoneg a vize bet, marse, luzietoc'h ha pounneroc'h, kamm-digamm, 'barzh lusk ar pezh-c'hoari.

²⁴ *L'Internationale*, Eugène Pottier, 1871

*Fest ar pimoc'h*²⁵ a ginnig skouer ur mekanik nevez pa skandalat an tad e vab oa mezv ha en doa laeret un dra bennak : « Ha mezv ouzhpenn. Langachet gantan Terez Karioù. Bremañ emañ o vont da lakaat da zilhad ha kas ar velomoteur en-dro diouzhtu. Lanfre ! Laskar ! Feneant ! ».

N'eo ket ar skouer nemeti e-menn ma vez komzet a vekanikou nevez. *Eden Bouyabes*²⁶ get Teatr Piba a ro da welet istoer repuidi en ur c'hamp bennak (arvest 2, diviz 1) a gomz a :

Sobrino – Med... (etre daou soñj da vad) Med petra 'hellan ober neuze ?

Gastrig – Ma, n'ouzon ket, blenier tramway da skouer !

Sobrino – Med Tio ! N'eus tramway ebed amañ !

Krog eo Gastrig da jestraoui an tramway o loha gand eun onomatopeen :

Gastig – Klangadiklangadon.

Sobrino a zell deuz Gastrig e-pad eur pennad mad, tres immobil warnañ, hag eñ o veza krog da hoari gantañ.

An daou – Klangadiklangadon... [...].

Amañ e vez graet oc'hpenn get jestroù hag onomatopeennoù aveit sklaeraat ar c'homzoù.

Er pezh-c'hoari *Ma c'helljen-me kanañ laouen*²⁷ get Ar Vro Bagan e vez farset a-drugarez da dudenn An Aotrou K a lâr : « Va c'hamalad an Aotrou Daougano 'vije laouen da gaout an tamm-se da sevel kasinoioù, marinaioù hag a bep seurt evit an douristed. ». Ar pezh-c'hoari-mañ a gont aloubadeg Breizh get politikerion, touristed hag embregerezhioù galloudus. Tremen dre ar galleg aveit komz a savadurioù a vez savet ha graet aveit an douristed, gallegerion en o zouez, er vro. Farsal ivez àr anv ar paotr, an Aotrou Daougano e plas an Aotrou Trigano, gwir rener an embregerezh c'hall a ginnig kirri hag ekipamant dudi aveit ar vakañsoù. Ar memes tra a oa bet graet e-barzh ur pezh arall : *Kernevez City*²⁸. Ur western Kig-ha-fars ma oa James Billy e-lec'h Jakez Tilly a oa e penn ar stal lazhiñ yer e Gwerliskin.

I.1.3. Listenniñ, niveriñ

A-wezhioù e vez efedusoc'h, a-sko muioc'h, ur listenn aveit ur prezeg hir. Distilhiñ tammoù hep lâret re hag a spered a raio ar peurrest. Tremen dre ar yezhoù arall, dre ar galleg dreist-holl, pa vez ezhomm listenniñ un dra bennak. Pa vez graet ur roll bennak hag a zo hir a-walc'h e vez barnet aesoc'h rolliñ e galleg. Pa vez komzet a draoù ispisial eo ret bout ar resisañ posubl peotramant e vehe kemeret riskl koll evezh an arvesterion. Diwall da vout borodus ha belbetus.

25 *Fest ar pimoc'h*, Ar Vro Bagan. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

26 *Eden Bouyabes*, Teatr Piba. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

27 *Ma c'helljen me kanañ laouen*, Ar Vro Bagan, 1977. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

28 *Kernevez City*, Ar Vro Bagan, 1991.

*Fest ar pimoc'h*²⁹ (arvest 3) :

Ar vamm (é pellgomz) – Mont a ra mat. Ket 'avat, pebezh amzer lous ! Ar reverdi vras a zo !
Ya. Daouzek trañchenn galantin, daouzek trañchenn « jambon », c'hwec'h kostezenn, ul lur «
poitrine fumée ». Evit pet den ar balaten ? Ya. Silzig mogedet evit c'hwec'h den ? Ya. An hini
vihan n'he do nemet dont a-benn ur c'hard-eur. Mat eo. Kenavo « Madam » Lukaz.

Amañ e vez gwelet e vez klasket lakaat liv ar wirionez. An itron Lukaz a ra he frenadennoù dre
bellgomz. Diskouez a ra ar gevredigezh divyezhek èl ma oa gwecharall.

Memestra get *Privezioù publik*³⁰ e-lec'h e vez kavet roll an holl lec'hioù dibaotr get ar peder
maouez:

Libellule, *o c'hoarzin* - Ne ran ket. Lec'hioù dibaotr 'vez kavet e pep lec'h er bed.

Abigaëlle – Mais tu manges comment ?

Libellule – Je mange bien. J'ai ma place dans presque toutes les cuisines du monde, tu sais.
Je vais partout où les femmes sont ensemble.

Marjanik – Les usines de crêpes, les écoles d'infirmières et de cantinières...

Libellule – Les écoles de couture et de mode, de coiffure, de secrétariat...

Marjanik – Les toilettes des discothèques, les crèches...

Libellule – Les vestiaires de piscine, les cours d'aquagym...

Abigaëlle – Les soirées meufs, les réunions sex-toys et tupperware, les équipes de volley-
ball...

Leila – Le village des schtroumpfettes...

Marjanik – Les prisons...

Abigaëlle – Le moment de la vaisselle dans les repas de famille...

Marjanik – Les BEP couture, les chaînes dans l'agro-alimentaire...

Libellule – Les sabbats de sorcières, les groupes féministes non-mixtes, les mères de la Plaza de
Mayo...

Leila – Les hammams, les instituts de beauté, les magasins de lingerie...

Abigaëlle – Les rayons serviettes hygiéniques, les cabines d'essayage...

Libellule – Les salles de reconstruction mammaire, les cours de danse et de twirling...

Marjanik – Les syndicats de caissières, aussi.

Leila – Les chorales en Finistère...

Abigaëlle – Les salles d'avortement...

29 *Fest ar pimoc'h*, Op. Cit..

30 *Privezioù publik*, Op. Cit.

Leila – L'art floral, toutes ces conneries, là.

Marjanik – Les cours de scrap-booking et pour faire des meubles en carton et des bagues en perles...

Abigaëlle – Les sorties des écoles, les pressings à cinq heures, les réunions du planning familial.

Libellule – Les maisons de retraite.

Abigaëlle – Les réu' Weight Watchers, les salles d'attente des gynécos.

Libellule – Les salles de maquillage des bordels [...]

Pa vez lâret get Libellule «Lec'hioù dibaotr 'vez kavet e pep lec'h er bed. » e vez gortozet, sur a-walc'h, gouiet hiroc'h get an arvesterion. Lec'hioù dibaotr' e pep lec'h er bed, ya mes pe re ? Ne vez ket meneget hepken lec'hioù difennet d'ar baotred mes ivez lec'hioù e-lec'h ne vezont ket gwelet james pe pas kalz. Lec'hioù 'zo a vize aveit ar merc'hed : « Les rayons serviettes hygiéniques », « les salles d'attente des gynécos »... Lec'hioù 'zo e-lec'h e vize kavet merc'hed hepken é labourat : « Les usines de crêpes, les écoles d'infirmières et de cantinières... », « Les écoles de couture et de mode, de coiffure, de secrétariat... », « Les syndicats de caissières, aussi. ». Da lâret eo : klichedoù lan a seksism. Ma vez komzet ag an toullou-bac'h, ar privezioù pe ar gwiskvaoù er poull-neuial a zo lec'hioù dispartiet dre ret hrevez ar jener ; n'eo ket tout. Pa vez faret diâr-benn an tiez ar re gozh e-lec'h ma vez kavet muioc'h a merc'hed a vev pelloc'h aveit ar baotred, ar lazoù-kaniñ e Penn-ar-Bed, ar c'hentelioù scrap-booking ; n'eo ket tout c'hoazh. Amañ e vez graet roll ar lec'hioù dibaotr er bed aveit komz ag an dizingalded etre paotred ha merc'hed. « Les sorties d'écoles », « les pressings à cinq heures » pe « Le moment de la vaisselle dans les repas de famille » a zo aveit ar merc'hed a ra àr dro ar vugale hag ar mererezh pemdeiz d'ar muiañ ; « Les réu' Weight Watchers » pe « Les hammams, les instituts de beauté » aveit komz a verz àr divskoaz ar merc'hed ag ar braventez, ar yaouankiz, ar moanded. Pebeilet e vez etre traoù skañv èl « Les soirées meufs, les réunions sex-toys et tupperware » ha traoù siriusoc'h, engouestletoc'h : « Les salles de reconstruction mammaire », « les réunions du planning familial. », « Les salles d'avortement ». Un diviz benevelour eo, anat eo : « Les sabbats de sorcières, les groupes féministes non-mixtes, les mères de la Plaza de Mayo ». Ur pezh-c'hoari diâr-benn privezioù publik ar merc'hed aveit komz ag o selloù, o c'hoantoù, o huñvreoù, o c'heuzioù,.. Diskouez a ra na pezh pounner e chom c'hoazh karg ar merc'hed, direizh an traoù aveite ha penaos emañ gwriziaouet mat ar batriarkiezh.

I.1.4. Poueziñ àr un dra bennak

Lennet e vez 'barzh *Fest ar pimoc'h*³¹ (arvest 2) :

Ar vatezh – Pemoc'h lous ! Ma vijen bet mamm dit 'm oa kirijet ac'hanout.

Ar mab – 'Pezh zo, n'out ket mamm din. Va revr ganit !

Ar vatezh – Tamm « mal-poli » !

Ar brezhoneg a vez implijet amañ, hag alies tre 'barzh pezhioù-c'hoari, aveit kunujenniñ, implij gerioù pe troioù-lâr groñs. Pa reskont ar vatezh « mal-poli » e vez santet muioc'h c'hoazh na pezh feuket eo bet aveit ma 'dize reskontet dezhoñ get kunujennoù arall e brezhoneg. Èl ma oa miret ar galleg aveit liveoù yezh resis. Ar brezhoneg aveit ar gerioù groñs, ar bed prevez, an trivliadoù. Ar galleg aveit ar bed publik, an neuz, an dereadegezh. Amañ e vez graet get ar galleg aveit diskouez dezhañ na pezh vil eo ar pezh en deus graet.

Fest ar pimoc'h (arvest 3). Memes skouer pelloc'h get ar mab a lâar : « A 'ta aotrou Direktour, ar vakansoù zo ! [...] ». Lakaet e vez, memes, ur bennlizherenn d'ar ger Direktour. Ma oa pompusoc'h, ofisieloc'h implij direktour e plas renour. Reiñ muioc'h a dalvoudegezh é lakaat ar ger galleg. Ar farsadenn a za da vout trenkoc'h c'hoazh. Gober goap dre ar galleg.

Pa vez goulennet get ar werzherez yerezed, er pezh-c'hoari *Piv ? Penaos ? Ha Petra ?*³², penaos e oa ar muntrad : Un den « Comme il faut » a reskont. Pa vez klasket termenniñ an dro-lâr-mañ « Comme il faut » e vez gwelet doc'htu e vez implijet aveit diskouez un den reizh. Un droienn a dalv ur mod jaojapl da vout pe d'ober. Un den a vehe dereat, seven, din, onest. Tost un den levn, hep sioù àr-wel. Un den a genglott get gortadennoù ar gevredigezh. Pa vez implijet get ur plac'h a gomz brezhoneg an droienn galleg « Comme il faut » eo èl ma oa un testeni a galite uhel. Ar muntrad a oa « Comme il faut » hervez muzulioù ar gevredigezh gall. Èl ma oa just a-walc'h ar gevredigezh gall an dave peurvat. Emgann an dud sevenet, tud « comme il faut » a-enep an dud ruzeg.

Un unangomz dedennus a zo 'barzh *Privezioù publik*³³ (arvest 2, devezh 2) hag a skeudenn mat ar mennozh-mañ. Roet eo bet he sac'h d'Abigaëlle, ur vamm dizimez, un tregont vlez bennak dezhi. Sezizet eo get anken hec'h amzer-da-zonet :

Abigaëlle – Là, c'est fini. Je ne vois pas comment je m'en sortirai. Je ne serai plus qu'une mère.

Traitée comme une mère. Une pauvre mère. Je vais disparaître entre le mardi et le mercredi.

Pouf ! Un tamm plac'h-bet disec'het, steuziet en amzer, hejet-dihejet etre bevañs ha dazont he

31 *Fest ar pimoc'h. Op. Cit.*

32 *Piv ? Penaos ? Ha Petra ?* Strollad Kallag ha Gwerleskin, 2022. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

33 *Privezioù publik. Op. Cit.*

re vihan. Oh, gouzout a ouzon awalc'h : pred, boued, kentelioù, vakansoù, levrioù, dilhad, tele, c'hoarioù, pred adarre. Ne harzin ket ken gant ar skuizhder. Riñset e vin. “Nozvezh vat deoc'h ma re vihan, kouskit c'hwek ken warc'hoazh.” Lonket e vin. Hejet ha dihejet. Lonket ha dislonket. Tennañ arc'hant gant an dent, lonkañ ma lorc'h, duiñ paperioù, mont war glask an aluzenn, gant esperañs lar reiñ dezho kig mat ur wech ar sizhun. Klask ur stammenn, pe loeroù, atav. Laerezh yaourt-e-damm-frouezh, ma ouifent 'zo diouto. Laerezh digant ar bed pep munutenn eus o yaouankiz evito. Steuziañ ar gwellañ ma c'hellin, m'o defe ket soñj deus stad o mamm, ma ne vefent ket desachet d'ar foñs war-lerc'h, gant ar soñj ac'hanon. Din d'en em zastum warnon-me ma-unan, un dudenn dister, ur virgulenn 'barzh an istor. Ha laret a raint : “M eus aon 'oa ket mamm ur plac'h eürus e oa, 'mod-se emañ”. Une femme dissoute. Un alka-seltzer. Pchhhhtttt. Pfwit. La gym, tiens, ça me manquera. C'est rien, mais ça faisait tenir. Soñj dous ur vuhez evidon-me. Unan, daou, tri, santout ma c'horf din o vezañ bev c'hoazh, unan, daou, tri. Eh bah, fini la gym. Biken ken dorn dous unan o flourañ ma c'hein din. Biken ken unan o krial e joa e-barzh ennon. Biken ken lenvañ gant ar blijadur. Ha padal, na karet em eus bet c'hoari ar c'hroc'hennoù ! Kenavo froud ar garantez, kouskadennoù don e pleg an deiz. Plus jamais. Serret eo ar stal. Mammig a vo o labourat.

Amañ e vez tremenet d'ur yezh d'egile get onomatopennoù “Pouf”, “Pchhhhtttt. Pfwit.” Notet e vez implij ar brezhoneg aveit komz a he c'harg mamm, he buhez revel. An diforc'h etre an dro-lâr arouezek « fini la gym » ha penaos e vez displeget e brezhoneg fromadennoù donoc'h : « Biken ken unan o krial e joa e-barzh ennon. Biken ken lenvañ gant ar blijadur ». Muioc'h a zisplegadennoù a vez roet e brezhoneg get trivliadoù donoc'h. Muioc'h a frankiz ha nebeutoc'h a vezh é lâret traoù 'zo e brezhoneg ur wezh oc'hpenn ?

I.2. Gober daveoù

N'eo ket an abeg nemetañ tremen dre ar yezhoù arall aveit aesaat ar c'hompren. Labourat àr ar c'hompren a servij ur pal fetis mes tremen dre ar yezhoù arall a c'hell ivez pinvidikaat danvez ar pezh-c'hoari, ha servij, ar wezh-mañ, ur pal kenedusoc'h, difetisoc'h. Gober daveoù ag oberennoù pe arzurion arall o deus levezonet pe awenet ar pezh-c'hoari, gober ur serr-lagad bennak ag ur sevenadur boutin. Gober daveoù aveit krouiñ liammoù, sevel pontennoù etre levezonioù a bep seurt tennet a sevenadurioù dishañval.

I.2.1. Menegiñ un oberenn pe un oberour arall

A-wezhioù e vez meneget arroudoù tennet ag oberennoù arall er pezhioù-c'hoari. Oberennoù arall o deus un dason ispisial get an istoer pe o deus awenet ar leurenourion pa oa bet skrivet pe leurennet ar pezh-c'hoari.

*Mont a raio kuit*³⁴ (arvest 3, diviz 7) :

(testenn tennet eus *L'enfant des brumes*³⁵ gant Louis Bertolom)

Ar Mab – je suis né dans les brumes.

Ar Glañvdiourez – Enfant des brumes percé de visions. Tu exhales tant de voix improbables qui t'effrayent, t'interrogent, te labyrinthent. Entouré d'un monde qui te refuse. Te cajole à la fois.

Ar Mab – Sauve-moi ! Sauve-moi !

Je suis l'enfant perdu

Enlisé dans le fog

Je prierai si tu veux

Inflige-moi des Golgotha

Dans la forge des tortures

Bats-moi, exorcise-moi

Que s'extirpent de mon corps

Les démons de mon âmes

Sauve-moi ! Sauve-moi !

Ou alors, laisse-moi ! Salv ac'hanon pe laosk me !

Amañ e vez skeudennet mat kleñved spered Erwan get barzhoneg Louis Bertolom. Levr *L'enfant des brumes*³⁶, en deus ar memes titl ag ar barzhoneg-mañ, a oa bet skrivet get Louis Bertholom pa oa klañvdiour en ur bredospital. Aotre o dez ar varzhed da lâret muioc'h aveit ar re arall. « Enfant des brumes percé de visions » aveit komz ag ar skizofreni. Santet e vez na pezh diaes eo stourmiñ a-enep e gleñved aveitañ « Bats-moi, exorcise-moi / Que s'extirpent de mon corps / Les démons de mon âme ». A-benn ar fin e echu memes get « Sauve-moi ! Sauve-moi ! Ou alors, laisse-moi ! Salv ac'hanon pe laosk me ! », un droukziougan teñval. Taolenniñ e framm-spered a-drugarez da c'herioù unan arall e plas lakaat gerioù skiantel èl e vez graet pa vez komzet ag e yec'hed get tudennoù arall. Amañ e vez lakaet muioc'h a blas aveit an damveneg. Komz a drivliadoù e donder e ene, lakaat an

34 *Mont a raio kuit. Op. Cit.*

35 Barzhoneg *L'enfant des brumes* tennet a levr *L'enfant des brumes*, Louis Bertholom, Éditions Rafael de Surtis, 2018.

36 *L'enfant des brumes*, Louis Bertholom, Éditions Rafael de Surtis, 2018.

arvesterion e plas Erwan. Amprestiñ d'ar galleg met kloziñ e brezhoneg.

Ar memestra a vez gwelet en ur pezh-c'hoari arall savet get Ar Vro Bagan : *Kof-ha-kof*.³⁷ En Kontiñ a ra an abadenn-se istoer un ostaleri vihan ag an Arvor é tonet da vout sal-zañs ha boest-noz diwezhatoc'h. En arvest 1 e vez kontet istoer Finn a zo he c'harantez etre daou baotr. Meneget e vez oberenn Shakespeare *A Midsummer Night's Dream*³⁸. Un dudenn etre un elf pe ur c'horrigan a zegas ur boked anvet « pensée d'amour ».

*An Albatroz*³⁹ a vez levezonet bras get barzhoneg Charles Baudelaire⁴⁰. Meneget e vez ivez ar barzhoneg er pezh-c'hoari :

Souvent, pour s'amuser, les hommes d'équipage
Prennent des albatros, vastes oiseaux des mers,
Qui suivent, indolents compagnons de voyage,
Le navire glissant sur les gouffres amers.

A peine les ont-ils déposés sur les planches,
Que ces rois de l'azur, maladroits et honteux,
Laissent piteusement leurs grandes ailes blanches
Comme des avirons traîner à côté d'eux.

Ce voyageur ailé, comme il est gauche et veule !
Lui, naguère si beau, qu'il est comique et laid !
L'un agace son bec avec un brûle-gueule,
L'autre mime, en boitant, l'infirme qui volait !

Le Poète est semblable au prince des nuées
Qui hante la tempête et se rit de l'archer ;
Exilé sur le sol au milieu des huées,
Ses ailes de géant l'empêchent de marcher

Ar varzhoneg-mañ aveit komz a daou elfenn. Istoer Yann-Vari Ar Bris en doa an huñvre bras : nijal èl an evned. Savet en doa mekanikoù a bep seurt. Penaos en doa graet kazeg meur-a-wezh a-raok donet da benn da sevel unan ag ar c'hirri-nij kentañ. Met ivez penaos evezhiiñ an evned pa oa martolod ,Yann-Vari Ar Bris, en doa e sikouret aveit ijiniñ e vezanikoù. Amañ an albatroz a zo

37 *Kof-ha-kof*; Ar Vro Bagan ; 2022. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

38 *A Midsummer Night's Dream*, William Shakespeare, 1594-1595.

39 *An Albatroz*, *Op. Cit.*

40 *L'Albatros*, Charles Baudelaire, tennet a *Les fleurs du mal*, 1859.

Yann-Vari Ar Bris, diampart en oabr, a glask nijal èl ur lapous arall. Ur paotr ha n'eo ket en e vleud àr an douar « Exilé sur le sol au milieu des huées, / Ses ailes de géant l'empêchent de marcher ».

Barzh *Merc'h an eog*⁴¹ e vez lâret dre eñvor get Mair ur varzhoneg a Vro-Gembre, he bro.

Mair - Ar pezh a larez a zegas ur varzhoneg da soñj din, unan zo brudet e Kembre. Kaoz ez eus enni deus petra eo bezañ perzh eus un dra bennak. Kontañ a ra ar barzh n'eo nemet an dra-se un degouezh a-benn ar fin : hini da lec'h ganedigezh. Ha bez e rankez rannañ ur sevenadur bennak, ur mod da vevañ gant ur bern tud all, en desped dit. Anat eo gwall ziaes-diaes. Neuze... sevel a ra ar barzh ur goulenn outañ e-unan : "pelec'h emañ ma repu ?" Ha mont a ra, dre hunvre pe en gwirionez, ne ouian ket, mont a ra da gavout ti e vugaleaj en dro. Loeiza, *Lonkañ a ra he banne, morenn war he zal, flourañ a ra blev Mair en ur vouse'hoarzhin*) - Kontañ a ri din ?

Mair a serr he daoulagad evit dibunañ he barzhoneg, 'vel ur skoliadez aketus.

Mair, *O klask he gerioù emañ* - Kaoc'h... ne zeu ket din ken. Gortoz.

Kemer a ra he foellgomz en he sac'h, klask a ra an destenn ha lenn anezhi buan-ha-buan, didrouz.

Loeiza, *Dibasianted o welet Mair a lenn didrouz* - Neuze ?

Mair - A ya, se eo. « A dyma fi yno... (*tav berr*) Dyma'r Wyddfa a'i chriw / Dyma lymder a moelni'r tir / Dyma'r llyn a'r afon a'r clogwyn... » (*O tennañ war he anal ha treiñ afrapadoù*) : « Sed 'hont menez Wyddfa hag e... e dro-war-droioù / Sed 'hont... an douar fraost ha... diornamant / Sed 'hont al lenn hag ar stêr hag an tornaod... » (*Ouzhpennañ a ra evit Loeiza*) Ha kement-se n'en deus ket ezhomm da ijinañ. Kement-se zo gwirion... « Ac, ar fy ngwir, Dacw'r ty lle'm ganed... », « Hag evit gwir... sed amañ an ti lec'h m'on ganet. » (*Ouzhpennañ a ra evit Loeiza*) Ha pa erru en e di, kompren a ra eo bet aloubet al lec'h ant seblantoù ha mouezioù iskiz, ha diskaret eo diwar-se... (*fromet*) « ac meddaf i chwi / Mae rhyw ysictod fel petai'n dod drosod i... »⁴².

Ur varzhoneg arall aveit skeudenniñ santimantoù tudenn Mair. Hekleviñ get un arzour arall en doa ivez, dija, deskrivet ar memestra. T.H. Parry Williams e oa get e varzhoneg *Hon*.

Er senenn-mañ emañ Mair en ur greizenn thalasso get he dousig Loeiza hag o mignonez Céline. Distroet int a Vro-Gembre abaoe tri devezh. Tennet-didennet eo spered Mair etre he buhez e Breizh hiziv hag he buhez paseet e Kembre. Kollet eo Mair en he frederiadennoù a-hed an deiz. D'un taol e za en-dro d'he spered ur barzhoneg he doa desket pa oa skoliadez. Ar varzhoneg-mañ a skeudenn

41 *Merc'h an eog. Op. Cit.*

42 *Hon, T.H Parry Williams, h.d.*

mat he soñjou. Diverriñ a ra da Loeiza petra a gont ar varzhoneg. A-benn ar fin e c'houlenn Loeiza get Mair he c'hontiñ. Gwelet e vez eo ur prantad nesaek etre an div blac'h, un prantad didrouz, a-vat aveit digor he c'halon : « (Loeiza, *morenn war he zal, flourañ a ra blev Mair en ur vousc'hoarzhin*) ». « Frometoc'h-frometañ eo Mair en ur dezrevelliñ ar varzhoneg da Loeiza. Displeget e vez get an didaskaliezhou : « (*tav berr*) », « (*O tennañ war he anal ha treiñ afrapadoù*) », « (*fromet*) ». Talvoudus eo da v/Mair e vo komprenet mat ster ha pouez ar gwerzennoù get Loeiza. Na pezh kreñv eo karantez ar barzh aveit « menez Wyddfa », e venez ; « an douar fraost ha... diornamant / Sed 'hont al lenn hag ar stêr hag an tornaod... », e zouar, e stêr. Setu lec'h e c'hanidigezh : « « Hag evit gwir... sed amañ an ti lec'h m'on ganet. ». Tost-tre eo spered ar varzhoneg-mañ a hani Anjela Duval *Karantez-vro*. Adkavet e vez ar maeziou ken karet he vro, c'hoant ar frankiz hag an emvrud aveit e yezh hag e vro. Echu a ra Mair é lâvar : « (*Ouzhpennañ a ra evit Loeiza*) Ha pa erru en e di, kompren a ra eo bet aloubet al lec'h gant seblantoù ha mouezioù iskiz, ha diskaret eo diwar-se... ».

Implij ar gembraeg hag a zo ivez, èl ar brezhoneg, ur yezh rannvroel he deus un dason don. N'oa ket bet choazet treiñ ar varzhoneg e galleg mes e brezhoneg. Tremen d'ur yezh vinorel d'egile. Choazet a zo bet ur yezh vihan, yezh ar galon aveit komz ag an trivliadoù ha pas ar yezh ofisiel a vize bet dibersonel. Ur geñveriadur, un dostidigezh a vez graet doc'htu 'barzh spered an arvesterion. Degouezh Kembre a zo tost-tre ag hani Breizh. Komzet e vez e-pad tout ar pezh-c'hoari ag ar santimant he deus familh Mair, da lâret eo ar gembraegerion, bout diberc'hennet ag o vro, o yezh, o sevenadur. Traoù dibriz aveite met o deus ur briz hrevez lod just a-walc'h. Mair a oa distroet da Vro Gembre aveit obidoù he moereb Gwyneth ha kompren a ra duhont ar vank he deus ag he bro. Muioc'h c'hoazh pa gompren e vo gwerzhet ti-ferm he familh a-benn nebeut. Kompren a ra Mair emañ aze lec'h he repu, ti he bugaleaj èl ma kont T.H. Parry Williams en e varzhoneg.

Soutil eo ivez ar finesa leurreniñ. Pa gomz Mair e kembraeg e tro doc'htu e brezhoneg aveit Loeiza, mes kentoc'h, aveit an arvesterion a-benn ar fin.

I.2.2. Ur « Serr-lagad » ag an oberenn a-orin (skouer an troidigezhioù)

Aveit an troidigezhioù eo un afer arall. N'eo ket ral kavout ur serr-lagad bennak pe daou kuzhet er pezh-c'hoari ha diduelliñ a ra ar leurenourion é kemer mui-pe-vui a frankiz.

Soñj ho peus, marse, a *Ubu Roi*⁴³ en doa graet un droukskouer vras pa oa bet diskouezet aveit ar wezh kentañ àr ar leurren. « Merdre » Jarry a oa unan e-touez ar munudoù niverus o doa spontet an

43 *Ubu Roi*, Alfred Jarry, 1895.

arvesterion. Ar Vro Bagan en doa choazet, neuze, chom feal da spered Jarry pa oa bet troet get Goulc'han Kervella « Merdre » e « Kraoc'h ».

An Teatr Piba en deus choazet lakaat roudoù a yezh an oberenn a-orin aveit troidigezh *Ar maeziou*⁴⁴. Tennaet 'oa a *The Country*⁴⁵, ur pezh-c'hoari skrivet e saozneg get Martin Crimp.

Corinne – Neuze, ne oa sac'h ebet ?

Richard – (Petra) 'Ta ?

Corinne – Ur sac'h ? Ur vanity ? N'oa ket ganti ur seurt...

Richard – Ur vanity ?

Corinne – Ya, ur vanity, ur sac'h. Ne vern petra ! Ne rez ket ar penn pleup-se !

Richard, *un ton disprizus gentañ* – Perak e larez-se ? Ur vanity ?

Corinne, *un ton fulloret/feuket ganti* – Perak e laran-se ?

Richard – Perak e larez-se a ouiez n'eo ket brezhoneg ?

Corinne – Petra n'eo ket brezhoneg ?

Richard – Vanity ! N'eo ket brezhoneg !

Corinne – N'emaon ket o komz brezhoneg !

Richard – Evèl-just emaout o komz brezhoneg !

Corinne, *fuloret* – Ah neuze ?

Richard – Petra 'zo ?

Corinne – Unan a oa ganti ?

Farsal get an dibaboù treiñ, farsal a-drugarez d'ar yezhoù : « Petra n'eo ket brezhoneg ? / Vanity ! N'eo ket brezhoneg ! / N'emaon ket o komz brezhoneg ! / Evèl-just emaout o komz brezhoneg ! ». Setu ur goulenn a-bouez kuzhet a-dreñv an diviz mousfent-mañ.

Un tabut a grog amañ etre Richard hag e wreg Corinne diàr-benn ur plac'h yaouank a zo bet kavet diveiz, àr vord an hent, get Richard. He addegaset en deus d'ar gêr. Goulenn a ra Corinne getañ ma n'oa ket roud erbet ag hec'h indentelezh, ma ne oa ket malizenn, sac'h pe vanity erbet geti. Lâret hon eus dija e oa ur pezh-c'hoari skrivet e saozneg e penn-kentañ ha troet, goude, e brezhoneg get Teatr Piba. Chom get ar ger « vanity » a zo neuze un dibab treiñ dedennus. Corinne a lâvar : « Ur sac'h ? Ur vanity ? N'oa ket ganti ur seurt... ». Kinnig a ra ar ger e brezhoneg « sac'h » hag ar ger saozneg « vanity » doc'htu goude. Marse e c'hellamp soñjal n'eo ket bet troet ar ger-se kar implij ar ger « vanity » a zo boas, boutin bremañ. Ne vez ket troet ar ger vanity ken kar tout an dud a oui petra eo. Sac'h a vehe marse ledanoc'h e ster e brezhoneg kar vanity a zo resisoc'h. Mes Richard a reskont memestra : « Ur vanity ? » pe pelloc'h « Perak e larez-se ? Ur vanity ? ». Fulloretoc'h-fulloret eo

44 *Ar maeziou*, Op. Cit.

45 *The Country*, Martin Crimp, 2000.

Corinne : « Ya, ur vanity, ur sac'h. Ne vern petra ! Ne rez ket ar penn pleup-se ! ». Èl ma vize bet, d'un taol, strinkennet an tabut etreze tro-dro implij ar ger-mañ get Corinne. Tamalliñ a ra Richard : « Perak e larez-se a ouiez n'eo ket brezhoneg ? » ha pelloc'h « Vanity ! N'eo ket brezhoneg ! ». Corinne, gwriziaouet mat an dudenn : « N'emaon ket o komz brezhoneg ! ». Ar c'homedian a c'hoari Richard a zo fuloret-mik : « Evèl-just emaut o komz brezhoneg ! ». Implij ur ger saozneg en ur pezh-c'hoari e brezhoneg a zo gwelet èl un troc'h. C'hoariet e vez get meizad ar « 4ème mur »⁴⁶ a zo torret.

Ar « pevare moger » a zo, en c'hoariva, ur moger faltaziet a zisparti an arvesterion doc'h ar gomedianed àr ar leurenn. Torriñ meizad ar « 4ème mur » e vez graet get un dudenn, pe muioc'h ag unan, a sell doc'h an arvesterion pe a gomz dezhe. Diskouezet e vez geti pe getañ e oui emañ é kemer perzh en ur faltazi. En em c'houlenn a ra an arvesterion hag-eñ e oa gwir pe get, hag-eñ e oa graet a-ratozh pe get. Un troc'h a vez graet en istoer. Ur prantad didermenet etre gwirvoud ha faltazi.

I.2.3. Ober dave d'ur c'hultur boutin

Pa vez meneget ur merk, un ensavadur, titl ur levr pe ur film, pe un dra resis e vez, alies-tre ha forset-mat, graet get ar yezh a-orin. Da skouer pa vez komzet get ar werzherez legumaj ag he foan divhar 'barzh *Piv ? Penaos ? Ha Petra ?*⁴⁷ e vez aliet doc'htu get he c'homaer implij « bicarbonate de soude pe jouvence de l'abbé soury ». En *Ma c'helljen me kanañ laouen*⁴⁸ e vez komzet a « [E] baradoz ar c'hêrioù bras / Koka-kola ha bara kras ». E *Mont a raio kuit*⁴⁹ e vez selaouet doc'h ar radio ha klevet e vez : « Vrai/faux journal de France Inter. Méfiez-vous des imitations ». Pe pelloc'h, c'hoazh. En diviz etre Erwan hag e vignonez 'barzh *Mont a raio kuit* diàr-benn peseurt micher 'do c'hoant gober en amzer-da-zonet, petra vo graet goude ar « bacho » :

Ar Mab – Ha te, petra 'ri ?

Ar Gamaladez – Sporchoù, pe ur vicher da vont er mor. Splujer pe se.

Ar Mab, é farsal – E-giz 'barzh Glas meur.

Ar Gamaladez – Hein ?

Ar Mab – Ar glas meur ! Le Grand bleu quoi !

Graet e vez àr ton ur farsadenn etre daou vignon, ur farsadenn a ya da gaoc'h-heiz. Tremenn a ra

46 Le quatrième mur : *Quatrième mur*, La langue française, s.d. Ha *Comment et pourquoi les cinéastes « brisent le quatrième mur »*, Télérama, 2015

47 *Piv ? Penaos ? Ha Petra ? Op. Cit.*

48 *Ma c'helljen me kanañ laouen. Op. Cit.*

49 *Mont a raio kuit. Op. Cit.*

Erwan dre ar galleg 'benn ar fin.

An holl skouerioù-se a c'hell kemeret èl daveoù ur seurt sevenadur pobl ha hollek. Daveoù anavet get an holl. Krouiñ ha magiñ ur seurt unaniezh e-touez an arvesterion. Ma n'o deus ket an holl ar memes live e-keñver mestroniñ ar brezhoneg o deus ur c'hultur boutin. Skouerioù a seurt-se a ziskouez mat o deus an arvesterion oc'hpenn o sevenadur brezhonek. Daveoù dre ret e-keñver tout an doareoù ofisiel (doareoù melestradurel, ensavadurioù ofisiel...). Daveoù a zo bet tapet en ur mod tost otomatik 'barzh medioù da skouer (lugan bruderezh,...). Daveoù tennet ag ur c'hultur a zo àr un dro personel hag àr un dro hollek (filmoù, levrioù, sonennoù...). Ur skeudenn a-feson eo a levezon ur c'hultur mestr. Diskouez a ra ivez argezh an digulturiñ o deus bevet ar Vretoned a-hed ar bleadoù. Gwelet e vez penaos an digulturiñ a zepend bras ag ar gevredigezh ha dreist-holl ag an darempredoù galloud. Reizhennoù a vez gourlakaet, alies hep bout emskiant dezhe, aveit bout enklozet en ur strollad.

Pa vez sarmonet ar mab ha na ra netra vat get e dad 'barzh *Fest ar pimoc'h*⁵⁰ : « [...] Gra e-giz Loui Mignot, te hag a blij dit lavigat, kae da lakaat da anv e-barzh al « Légion Étrangère ». Gounit mat a ra e vuhez. ». Kar gwelet e vez na pezh doujapl e vez kaout ur vicher en un ensavadur èl « [la] Légion Étrangère » hrevez an tad.

Pa vez gwerzhet kazetennoù get paotrig ar straed 'barzh *An Albatroz*⁵¹ e vez kemennet a vouezh uhel an titloù e brezhoneg ha pa c'houlenn unan bennak resis petra c'hoarvez da Yann-Vari Ar Bris e reskont ar paotrig didrouz : « War a seblant emañ o labourat 'barzh ur hangar deus an Transatlantique ». Amañ e vez santet mat ar lorc'hañs levezonet get an anv-mañ « transatlantique ».

E prolog *Metamorfoz*⁵² 'zo un diviz etre ar mab Abegile hag e vamm Damokle :

Ar vamm - Ma... c'hem... n'ouzon ket me... po nemet lezel anezhañ e ti-pakajoù an ti-gar !

Graet vo war e dro pa vo echu gant da vakañsoù, mat eo ? Hend-all e vo kaset da Frejuz !!!

Abegile - Met petra eo Frejuz ?

Ar vamm - Giz-se vo graet ? Mat e vo ? Na zisoñjez ket, hañ ? A-bouez eo evidout...Pokoù

trouz ! E ! C'hwi holl ! Arabat lonkañ re a vinouz, hañ ! Pevare vi distro dija ? A ya d'ar 25...

Ober a rin war dro pa vi distro... Serr anezhañ ba'n ti-pakajoù ma ne fell ket dit kas anezhañ ganit ! Pokoù !

Elle s'en va.

Abegile - Puten mais c'est quoi Fréjus ? [...]

Amañ e vez c'hoariet get Frejuz/Fréjus, ur ger kevrinus aveit Abegile. Ur gourdrouz a zo kas du-

50 *Fest ar pimoc'h. Op. Cit.*

51 *An Albatroz. Op. Cit.*

52 *Metamorfoz. Op. Cit.*

se restajoù korf marv e dad-kozh hag e vehe spontus met perak ? Ne zispleg ket en ur mod resis ar vamm he deus an c'hoant, sklaer a-walc'h, d'en em zizober ag an aner-mañ. Un dave a c'hell bout a vaen-koun brezelioù an Indochin a zo e Frejuz kar an tad-kozh Norbert a oa gwazour trevadennel. Ar vamm/Damokle he deus mennozhioù d'an tu kleiz, a-enep an drevadenouriezh ha ne blijehe ket dezhi e vehe lakaet restajoù he zad en ur ensavadur èl-se. Santet e vez he deus mezh a base he zad hag e kav gwelloc'h e vehe lakaet e jarl ludu « e ti-pakajoù an ti-gar » e-pad vakansoù he mab aveit e Frejuz.

I.2.4. Daveiñ d'ur c'henarroud ofisiel

Distroamp da Frejuz neuze get *Metamorfoz* get Teatr Piba :

Abegile - Puten... Da goulz teus-te choazet evit dont war-wel... A ! Frejuz ! (*lisant une feuille du dossier*) : « *Demande gracieuse de translation des restes au mémorial de Fréjus, non titulaire de la mention mort pour la France* »... meneg mat ebet zoken... loser jusqu'au bout... Oas ket evit chom ahont, non ? ... Dont da dorriñ ma revr din da goulz ma vakañsoù ... (*toujours lisant les feuilles du dossier*) « agent subdivisionnaire de la circonscription coloniale de ... Norbert Abegile, décédé des suites de fièvres tropicales au dispensaire de ... »...blabla bla... inhumé dans l'annexe du cimetière français de Luang Prabang... suite à une inondation...le terrain a été acquis par le groupe chinois Da Wei... drainage du terrain... dans le cadre du projet Laothai de barrage sur la Nam Ngun, conformément aux accords bilatéraux... rapatriement dépouille... Fréjus... caveau de famille... pffffff... [...]

Daveiñ d'ur c'henarroud ofisiel a zo, forset-mat, gober get yezh ofisiel ar Stad aveit bout gwirion. Gober get ar galleg a zo yezh ar skrid aveit ar melestradur, yezh ar lod muiañ ag ar mediaoù ivez. Pa vez skignet keloù 'barzh *Mont a raio kuit*⁵³ e vez klevet « Vrai/Faux journal de France Inter, méfiez-vous des imitations ». Un skouer meneget geneomp uheloc'h dija hag un testeni arall ag an diglosiezh.

I.2.5. Menegiñ komzoù un dudenn er-maez ag an istoer

Implijet e vez an doare-ober-mañ dreist-holl pa vez meneget komzoù unan bennak pe istoerigoù tud er-maez ag ar pezh-c'hoari, tudennoù neant. Kontet e vez get un dudenn e gwir ar leurenn, un hanterour, ar pezh a zo c'haorvezet dezhe pe traoù o doa lâret an tudennoù neant-se. Alies-tre e vez dezrevellet an istoerioù diavaez e galleg penn-da-benn, pe get disailhadennoù yezhoù arall, pe é

53 *Mont a raio kuit. Op. Cit.*

skeudenniñ ur vro pe ur sevenadur arall. Faota d'ar leurenourion diskouez mat d'an arvesterion emaint er-maez a istoer pennañ ar pezh-c'hoari.

Istoer Nafisatou 'barzh *An Albatroz*⁵⁴ hag a ya e darempred get ur c'hlopenn a zo ur skouer a-feson. Kontadenn Nafisatou a zo ur c'hontadenn hengounel a Afrika. Amañ e vez kavet kontadennoù 'barzh kontadennoù. Pellaat ag istoer pennañ Yann-Vari Ar Bris hag an Istoer, get un i bras, get tud o nijal el Mermoz ha Saint-Exupéry. Poentaouiñ istoer Yann-Vari Ar Bris get kontadenn Nafisatou aveit komz ag e veajoù tro-dro ar bed pa oa martolod. Lakaat gerioù e yezhoù arall er gontadenn aveit bout eksotekoc'h.

*Privezioù publik*⁵⁵ a ziskouez ur skouer arall ag ar stumm-mañ. En ur senenn emañ Bec'hed hec'h-unan er privezioù. C'hoant he deus displegiñ d'an arvesterion perak e chom luziet aveiti bout amañ er privezioù publik, doc'h tu ar merc'hed. En unangomz Bec'hed e vez klevet : « N'eo ket tout an dud e vez digor mat o spered ganto. Bet e oa bet unan o huchal din : “Sortez ! Y a des enfants ici ! Y a des enfants” ». Digoriñ a ra he c'halon d'an arvesterion diàr benn hec'h istoer. Distroet eo da Vreizh aveit gober àr-dro he mamm a zo klañv-bras « e-lec'h ma oa o chom pa oa ur paotr bihan anezhi. ». Bec'hed 'deus chañchet reizh neuze. Hanterourañs ar plac'h spered-strizh-se a vez graet e galleg, un troc'h 'barzh istoer Bec'hed. Amañ ar galleg en deus talvoudegezh an hani a varn petra 'zo mat ha petra 'zo a-dreuz, gouarner an dereadegezh.

I.3. C'hoari get levezonioù ar yezhoù

Levezonioù ar yezhoù etreze a c'hell krouiñ darvoudoù farsus. Lakaat an dud da c'hoarzhin a zo ar pal kentañ é c'hoari get ar levezonioù-se. Atahiniñ ar c'hoarzh en un c'hoari get dishañvalduriòù pe hañvalduriòù ar gerioù (ster, son, distagadur...) etre yezhoù dishañval. C'hoari get an harzoù : harzoù ar yezhoù, da lâret eo posubl eo lâret pe treiñ pep tra er yezh-mañ-yezh ? Mes ivez harzoù an arvesterion : komprenet e vo na pezh soutil eo ar skrid gete ? Mard eo ar fent « an excellent resource for neutralising tension and creating role distancing, it also points to the benefits of bilingualism shared among those on the [sociological] language border »⁵⁶ ne dremenont ket ar leurenourion hep implijiñ, alies-tre, farsadennoù pe c'hoari-gerioù a-seurt-se.

54 *An Albatroz. Op. Cit.*

55 *Privezioù publik. Op. Cit.*

56 NOLETTE Nicole é venegiñ Monica Heller ; *Le théâtre bilingue de l'ouest Canadien : stratégies et enjeux de traduction* ; 2011 ; 173-182.

I.3.1. C'hoarioù-gerioù

'Barzh *Eden Bouyabes*⁵⁷ e vez farset, da skouer, get droukvesk ster ar gerioù etre ar galleg hag ar brezhoneg (malproprisme). Ur meskaj a zo etre dantelezerez/dantourez, streptokok/stetoskop (Kanaouenn IV - Streptokok). Soda, dantelezerez ar c'hamp repuidi a c'hoari bout ur vedisinourez gwezh ha gwezh arall.

Arvest 1, devez kenta, lodenn 1 :

Maouez – Hei, an dantelezerez ! Kerz da gousked pelloh !

Soda, *o tihuni gand eur mousc'hoarzh daoust d'eun tortad braz paket an noz a-raog* –
Dantourez... ha n'eo ket dantelezerez, gast... ped gwech warn-ugent... Aaa... [...]

Ha pelloc'h c'hoazh er lodenn 4 e vez gwelet gwelloc'h :

[...] *War al leurenn, eur gador-dantour hag eur pezh-mell barill houarn, tan ennañ. Ennañ 'zo bet plantet eur berchenn-forn.*

Soda – Kit da heul al lostennad, pep hini a heul-da-heul, founnuz, na jomit ket da strani ! Ale, eur viskoulennad ! Buan ! Setu... Emaoh o vond da dremen bizit ar re glañv, na vezit ket chalet ! 'Benn goud ma'z oh beo c'hoaz ! (*Prienti a ra he binviji*) Amañ e voh degemeret oll, er stad m'emaoh, e-giz-se ema. [...] (*D'ar paotr gourvezet*) Larit tranntroa ! (*O c'hoari medisin*) [...]

C'hoari ag an diforc'h etre ur vicher sirius graet get un amatourez hag an digompren, an implij a-dreuz a c'herioù/troioù-lavar skiantel aveit krouiñ un darvoud farsus : « larit tranntroa ».

'Barzh *Metamorfoz*⁵⁸ e vez c'hoariet get anvioù boued er prolog :

Abegile - Ya, mais... non, ket er mod peus graet ! Trawalc'h oa dit kontañ ar sardines... da vezañ sur ma oa trawalc'h a gorzhennoù... 'moa ket laret dit sevel anezhi er saloñs... mert' quoi... Dav vo adplegañ pep tra goude... [...]

Frei 2, *Considérant la table pleine de victuailles et d'objets* - Ar boestoù-koñserv eo ar ponnerañ... et des quenelles ouzhpenn !... M'añfin, ezhomme vo quenelles, evit gwir ? C'est mon café ça ?

Abegile - Ma hini eo... Ben ouais, ben, goude ur sunvezh bara-sardin 'on sur e klemmi evit kaout des quenelles... t'auras plus envie de faire ton beg-figus, c'est clair...

Amañ e vez c'hoariet get ar ger « sardine » a vez implijet aveit komz ag ar pesked met ivez aveit komz a bikedoù o zeltenn. N'eo ket boued ag ar vro « Quenelles » ha miret eo bet an anv a-orin.

57 *Eden Bouyabes. Op. Cit.*

58 *Metamorfoz. Op. Cit.*

Diviz Mair ha Loeiza 'barzh *Merc'h an eog*⁵⁹ a ziskouez mat penaos e vez graet en ur mod soutiloc'h an c'hoari-se en akt 2. Mair a zo melkoniek ha prederiet, hiraezhus ag he bro, diantell e-keñver hec'h amzer da zonet. En ur greizenn thalasso emañ get he dousig Loeiza hag ur vignonez Céline.

Mair - Mat. Mont a ran da veuziñ...

Loeiza, *Sabatuet* - Petra peus laret ?!

Mair - Emaon o vont d'ar poull ! (*O pouezañ war he gerioù*) Da neuñ, laran dit...

Pelloc'h e vez poentet get Céline, feuket, ar bochad finesa yezh a vez kavet ha perak e fell da Loeiza bout resis pa c'houlenn get Mair penaos emañ an traoù geti.

Céline - Parce que tu le sais, ce qu'elle a, Mair ? Tu lui as demandé, toi, si elle avait de "l'hiraezh" ou de "l'hirnezh", ou du je sais pas quoi que je suis pas sûre de comprendre vu que je parle pas le memes brezhoneg ?

Amañ e vez c'hoariet etre an hiraezh hag an hirnezh, daou c'her o deus sterioù tost met get arlivioù dishañval. Dibab an hani gwellañ aveit klask kompren Mair a zo a-bouez memestra. Gober a ra goap Céline, un tammig, doc'h Mair a zo klemmus hrevezi. Oc'hpenn hag echu a ra Céline get an diskoulm klasel « je ne parle pas le memes brezhoneg ». Klask bout kuzhet a-dreñv an digarez-se. Santet e vez na pezh chifoket-bras eo Céline. Èl ma oa bet lakaet en arvar gwirionded, kalite he brezhoneg get Loeiza. Da lâret eo ma ne gomz ket Céline ar memes brezhoneg marse ne oui ket resis petra zo é c'hoari get Mair, pe n'eo ket kap d'he c'hompren.

En arvest 1, senenn 1 e vez c'hoariet get ur ger a vez lâret ha skrivet er memes mod e brezhoneg hag e kembraeg pa lavar Loeiza diàr-benn Bro Mair, Kembre : « Un hevelep bro a bep tu d'ur mor bihan ». Ar ger « bro » a dalv ar memestra e kembraeg hag e brezhoneg.

'Barzh *Neizheta, elle niche où la langue ?*⁶⁰ get an Teatr Piba e vez c'hoariet e gwir, àr ar leurenn, get ar yezhoù hag o levezonioù. C'hoari get ar lec'hanvadurezh : Kroaz forn, ti-nevez... hag o reizhskrivadurioù giz galleg.

Get « la minute linguistique » e vez c'hoariet get ar « bretonnismes ». Da lâret eo troiennoù brezhoneg reizhet e galleg. Ar « bretonnisme » a c'hell bout un droidigezh ger-ha-ger ag ar vrezhoneg d'ar galleg pe ur ger brezhonek a vez implijet en ur frazenn e galleg. Perak e vez, da skouer, kustumet an dud, e Breizh, implij « envoyer » e plas « apporter », e galleg ha peseurt levezon en deus bet ar brezhoneg àr ar boaz-mañ. C'hoariet e vez, da gentañ, e galleg hag eo ret d'an arvesterion choaz etre « apporter » pe « envoyer ». :

⁵⁹ *Merc'h an eog. Op. Cit.*

⁶⁰ *Neizheta, elle niche où la langue ?. Op. Cit.*

Hugo - Ce sont ces formulations ou expressions bretonnes qui subsistent dans le français comme autant de fantômes d'une langue à disparaître et c'est vraiment surprenant. Ah, tenez, tout à l'heure nous avons entendu le témoignage de cette dame de l'ephad qui nous disait que la langue avait été avalée, que nous avions avalé la langue. Alors qu'ailleurs, le nom que l'on cherche est sur le bout de la langue, mais nous Bretons, nous n'hésitons pas à l'avalier [...] « j'ai avalé son nom » [...]. la traduction littérale du verbe lonkañ en français c'est avaler, absorber, engloutir, mais au sens figuré on lui donne la traduction de oublier. Alors qu'en français d'école, avaler est principalement traduit, au sens figuré, par croire ou admettre. Est-ce que ça ne serait pas un peu difficile à avaler, justement, tout ça ? [...]

Charles – [...] J'ai découvert, figurez-vous, que si votre voisin dans la cuisine vous demande de lui envoyer le sel, pas la peine de le lui balancer a travers la pièce, non non non. [...] Il souhaite, tout simplement que vous lui apportiez la salière. [...] Et de même, si vous avez un enfant affamé qui vous dit « j'ai envoyé mon quatre heure », pas la peine d'aller dans la boite aux lettres. Non. Il veut simplement signifier qu'il a apporté son goûter. [...] Et sachez, mon cher Hugo, que les bretons ont vraisemblablement un problème à faire la différence entre les verbes envoyer, emmener, apporter et amener. Et oui. Et vous savez pourquoi ?

Hugo – Et non !

Charles – Et bien parce que tous ces mots se traduisent par le même verbe en breton. Le verbe « Kas » et sa déclinaison « Degas ». Ah ! Et c'est simplement les prépositions qui ensuite font la différence. « Kas » exprime un mouvement vers l'extérieur et « Degas » un mouvement vers soi. Et c'est les prépositions qui font la différence. Alors je vais vous poser deux questions mon cher Hugo et on va voir si vous avez bien révisé. Si je vous dis « Kas da » ?

Hugo – Et bien vous l'avez dit !

Charles – C'est amener. Et si je vous dit « Kas gant » ?

Hugo – Vous allez me dire ce que ça veut dire.

Charles – Apporter.

[...]

Hugo – C'est le moment de tester les connaissances de notre public avec notre jeu. [...] Alors, cher public, à partir d'une formulation toute bretonne vous devrez essayer de trouver le verbe qui correspond en français standard pour remplacer les verbes envoyer, amener ou emmener. On commence tout de suite avec la première formulation. Si je vous dit : « je vais envoyer ma mère à la gare », vous me dites quoi ?

Ur lodennig ag an arvesterion – « Kas da ».

Hugo – Oui mais en français, qu'est-ce qu'il faudrait dire plutôt ?

An arvesterion – « Emmener » !

Hugo et Charles – Oui ! Je vais emmener ma mère à la gare. Vous êtes encore là. Vous êtes en forme.

Charles – Et si je vous dis : « Tiens, envoie ce livre avec toi si t'as envie » ? [...]

Hugo – Si je vous dis : « Attendez, je vais vous aider à envoyer vos courses jusqu'à la voiture » ?

An arvesterion – « Apporter ».

Hugo – « Apporter », tout de suite, bravo ! Vous êtes vraiment très forts.

Charles – Pour terminer, double question. Si je vous dis : « Tu peux m'envoyer à la poste, j'ai un colis à amener à Paris » ? [...]

Dedennus-bras ar finesa leurenñ-mañ savet get an Teatr Piba. Graet e vez ur gentel ledañ deskamant diàr-benn ar brezhoneg aveit an arvesterion : perak ar « bretonnisme »-mañ- »bretonnisme », e orin. Amañ get ar verb Kas/Degas hag e sterioù niverus : « les Bretons ont vraisemblablement un problème à faire la différence entre les verbes envoyer, emmener, apporter et amener. [...] Et bien parce que tous ces mots se traduisent par le même verbe en breton. ». Penaos e skeudenn « bretonnisme »-mañ- »bretonnisme » en ur mod fetis en o buhez pemdeiz, alies hep e c'houiet. Splann, resis ha simpl ar gentel a vez desket d'an arvesterion get stumm un c'hoari.

Alies ivez e vez implijet troioù-lâr 'barzh pezhioù-c'hoari. Implijiñ troioù-lâr idiomatek a zo ur boaz kalz plijet d'ar vrezhonegerion. Setu perak e vez kavet kement a levrioù d'o deskiñ aveit teurel blaz àr ar yezh. Ur mod da boentaouiñ an diviz, skeudenniñ ar c'homzoù en ur mod efedus. Pa vez graet e vez alies-tre troet goude doc'htu. Ur mod da gelenn d'an arvesterion. 'Barzh *Ar Roue Arzhur*⁶¹ get Ar Vro Bagan e vez klevet da skouer : « Gortoz pell, gortoz gwell. Tout vient à point à qui sait attendre ».

I.3.2. Meskiñ yezhoù

Skouerioù dedennus a zo ag ar meskiñ yezhoù 'barzh *Mont a raio kuit*⁶². An tad a zigor e galon d'an arvesterion, mizioù goude emlazh e vab. Dislpegiñ a ra na pezh start e oa bet aveitañ : keuz, fulor, digenvez ha dreist-holl na pezh kablus en em sante, perak n'oa ket bet gouest da virout doc'h e vab. Penaos « an diskoulmerez kudennoù pe ar bsikologez » he doa e sikouret. Implijet e vez an daou dermen-mañ just a-walc'h aveit dimeziñ an dour hag an tan, gober get spered ar brezhoneg ha spered ar galleg. Lâret a ra ivez pelloc'h (Arvest 5, diviz 1) :

An tad - « « Treuziñ an dezerzh », e-giz ma vez lavaret e galleg ».

61 *Ar roue Arzhur*; Ar Vro Bagan, 2023. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

62 *Mont a raio kuit*. Op. Cit.

Ur wezh c'hoazh gober get spered an div yezh. Tapout un dro-lâr e c'halleg, he zreiñ e brezhoneg met oc'hpenniñ mesmestra « e-giz ma vez lavaret e galleg ».

'Barzh *Fest ar pimoc'h*⁶³ (arvest 4) eo un afer arall. Ar vamm hag an tad a zo é komz a emzalc'h strobuz ha dizereat o mab get ar mevel yaouank. N'int ket en o bleud hag e klaskont chom didrouz. Diaezamantoù he deus ar vamm aveit kaout he gerioù ha diaezamantoù en deus an tad d'he c'hompren, blaz ar vezh a zo get o c'homzoù.

Ar vamm – Ne lâre tra ebet, nemet « ambetiñ » anezhañ.

An tad – Penaos 'ta ?

Ar vamm – Ma, « ambetiñ » anezhañ, kwa.

An tad – Petra edo oc'h ober se ?

Ar vamm – Ar mous 'oa e-kichen al « levié », ha egile oa oc'h ambetiñ anezhañ.

Ar meskiñ yezhoù a vez implijet alies ivez aveit lakaat an dud da c'hoarzhin pe da vouse'hoarzhin d'an nebeutañ, èl hon boa lâret dija. Setu perak e vez klevet e *Ma c'helljen me kanañ laouen*⁶⁴ Yann a lavar : « Lak an tele en-dro 'ta, me gav din ez eus ur western kig-ha-farz. ». Amañ e vez graet ur farsadenn etre anv ofisieloc'h ar western spaghetti hag ur western kig-ha-farz, ur western mod Breizh ? Unan a zo bet c'hoariet get Ar Vro Bagan diwezatoc'h : *Kernevez city*⁶⁵.

'Barzh *Priveziou publik*⁶⁶, en arvest 1, devezh kentañ, senenn 2 e ra anaoudegezh Abigaëlle get tudenn Libellule :

Libellule – Bonjour.

Abigaëlle – Bonjour.

Libellule, o kinnig he dorn – Libellule.

Abigaëlle – Hep dekonin ? Abigaëlle.

Monet e darempred e galleg get an dud dianavez met donet a ra en-dro buan ar brezhoneg get ar souezhadenn kavout unan bennak anvet Libellule. Ar live yezh a chañch ivez. Krogin a ra get ur « Bonjour » seven ha kinnig a ra he dorn Libellule met un troc'h a zo pa lavar Abigaëlle « Hep dekonin ? ».

Implij ar yezhoù arall a c'hell neuze bout graet en ur mod fetis, dre gomz, èl hon eus displeget aveit : bout komprenet get ar brasañ niver, pa vez ur pouez bennak enkloziñ un dave diavaez, pe

63 *Fest ar pimoc'h. Op. Cit.*

64 *Ma c'helljen me kanañ laouen. Op. Cit.*

65 *Kernevez City, Ar Vro Bagan, 1991.*

66 *Priveziou publik. Op. Cit.*

aveit gober goap ha c'hoari ag an diglosiezh. Met ar yezhoù arall a c'hell bout damveneget ha degaset, àr ar leurenn, get finesaoù gweled hag ar munudoù didrousañ pe disterañ aveit sikour an arvesterion sevel o skeudenn en o speredoù, hep bout re intruek.

II. Damvenegiñ ha degas ar yezhoù arall

Ne vez ket posubl lâret pep tra àr ar leurenn en ur prantad berr-tre, setu perak en deus an damveneg ur plas a-bouez er bed an c'hoariva. Aweit arboelliñ an amzer hep riskliñ koll aked an arvesterion get komzoù hir-abominapl e vez roet da gompren traoù talvoudus en istoer a-drugarez da finesaoù leurenniñ. Degas munodoù dre-amañ, dre-aze ha spered an arvesterion a raio ar peurrest : sevel ur skeudenn, faltaziñ ar c'henarroud...

II.1. Get an tudennoù

An tudennoù a c'hell bout unan ag ar skorioù pennañ aweit skeudenniñ ur yezh estren pe ur vro arall. Ma vez lâret e galleg « Le diable se cache dans les détails » e vez gwiriet get leurenourion pa vez savet ur pezh-c'hoari. Faota dezhe soñjal e munodoù niverus aweit bout ar re soutilañ met ar re splannañ posubl é sikour an arvesterion. C'hoari get boazioù an tudennoù, o arouezioù met chom naturel. Pe monet pelloc'h geti ha gober goap àr un ton flemm ha krouiñ ur ludresadenn.

II.1.1. Lesanvioù hag anvioù

Lesanvioù aweit komz ag an estrañjourion. 'Barzh an diviz etre ar vugale e *39-45 Brezel e Bro-Leon*⁶⁷ get Ar Vro Bagan e vo kavet hon skouer kentañ. An abadenn-se a gont ac'hubiñ ur gêriadenn e gwalarn Breizh get an Alamaned e-pad an eil brezel bed. E penn-kentañ ar pezh-c'hoari e vez klevet komz ag « ar boched, ar jap, ar yankies ». Skeudenniñ ar bec'h hag ar broioù tapet 'barzh ar brezel : Alamagn, Japan, Stadoù Unanet. Lec'hiiñ an traoù. Implij daveoù anavezet get an holl aweit distigniñ ar c'hompren. Krouiñ ur mennozh, adkavout un eñvor. Lesanvioù implijet get bugale met klevet gete e beg o zud. Skouer an akt 1, senenn 1 : daou vugel a gomz etreze « t'as un prénom macaroni ». Pe pelloc'h c'hoazh 'barzh an akt 1, sennen 8 :

Enfants – Les macaronis mangent le pain des français et couchent avec leurs femmes. Ils font un petit coup de mandoline et les gonzesses tombent dans leurs bras. Ils n'ont qu'à aller jouer la mandoline chez Mussolini.

Directeur – Silence ! Nous allons chasser les doryphores.

Enfant – C'est quoi les doryphores ?

Enfant – Mon père dit que ce sont les boches.

Enfant – Les boches les doryphores ?

⁶⁷ *39-45 Brezel e Bro-Leon*, Ar Vro Bagan, 1998. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

Enfant – Oui parce qu'ils sont venus sur la Bretagne comme les doryphores sur les champs de patates. Prêts à tout bouffer.

Enfant – Mon père à moi dit que ce sont les juifs qui ont pillé la France.

Directeur – Les doryphores sont des larves rouges qui mangent les feuilles de pommes de terre...

Enfant – Ils sont dangereux, ils piquent, mordent, sautent aux yeux, percent les oreilles...

Directeur – Allons ! Ça n'est pas vrai... Voici les pots de fer dans lesquels nous allons les brûler. Allons-y.

Enfant – Tu viens pas avec nous Fritz... On va faire la chasse à tes frères.

Fritz – Ya ! Ya ! Dorifored ! Ya ! Ya !

Ar rener a zo, èl tudenn ar vestrez-skol, ur seurt hanterour poellek ha rezonet. Klask a ra torriñ skeudennoù fall 'barzh spered e skolidi : « Allons ! Ça n'est pas vrai... ». Torriñ a ra komzoù ar vugale aveit lakaat un termen d'an tabut. Ar rener hag ar vestrez-skol o deus ur roll peoc'haer. A-drugarez d'o micherioù o deus trawalc'h a c'houiziegezh aveit gouiet n'eo ket reizh prezeg ar vugale, da lâret eo, prezeg o zud : « Mon père à moi dit que ». Klichedoù maget get ar velkoni, an ogn, ar boan,...

Komzet e vez ag ar « Macaronis » aveit komz ag an Italianed. Macaroni, un anv taozennoù a vro Italia. Choaz un anv-boutin hag anavet get an holl aveit daveiñ an Italia. Pe zibab ur strategiezh arall èl skouer an dorifored aveit komz ag an Alamaned. Keñveriet e vez amañ an dorifored get an Alamaned. Kenveriiñ aloubadeg an dorifored àr ar parkoù hag aloubadeg an Alamaned e Breizh. An dorifored a zo amprevaned noazus a argad a-stroll, a zistruj. Diaes eo d'en em zizober. Diskouezet e vez mat na pezh anc'hoantadus eo an Alamaned get ar lesanv-mañ hag get ar frazenn : « Oui parce qu'ils sont venus sur la Bretagne comme les doryphores sur les champs de patates. Prêts à tout bouffer ».

Choazet eh eus bet lesanvioù gouennelour ha disprizus a-ratozh. Komprenet e vez mat e vez levezonet, kreñvaet mennozhioù gouennelour an dud a-gaoz d'ar brezel. Maget e vez fulor an dud get ar feulster, diouer a voued : « Les macaronis mangent le pain des français. », ar santimant bout diberc'hennet : « Oui parce qu'ils sont venus sur la Bretagne comme les doryphores sont les champs de patates. Prêts à tout bouffer. ». An estrañjourion a vez gwelet amañ èl un dañjer da vat o deus c'hoant tapout pep tra : « Prêts à tout bouffer. ». Kiriek a boanioù spontus : « Ils sont dangereux, ils piquent, mordent, sautent aux yeux, percent les oreilles ». C'hoant o deus d'o lakaat, an estrañjourion, er-maez ag ar vro : « Ils n'ont qu'à aller jouer la mandoline chez Mussolini. », « Nous allons chasser les doryphores. », « Tu viens pas avec nous Fritz... On va faire la chasse à tes frères. ». Fritz a zo ur skouer ag an estrañjour a c'houzañv ag ar skeudenn-se kar choaz a raio en em lazhiñ a-benn ar fin.

Setu un elfenn pouezus a zo da notiñ. Tudennoù estrañjour a c'hell bout taolennet èl tudennoù galloudus, disprizus, drouk. Tudennoù a zo dreist ar re arall da-vat met tudennoù estrañjour a c'hell bout diskouezet èl tudennoù edan, a c'houzañv sell an dud àrne, a c'houzañv pouez o orin.

Pe 'barzh *Eden Bouyabes*⁶⁸ get an Teatr Piba a gont istoer ur c'hamp repuidi, e vez lâret en arvest 1, diviz 3, get ar bodad degemer : « Peseurt re eo ? Pennou-koko ? Reoriou-roz ? Kaherien-kraoñ ? Morilloned, debrerien-riz, pennou-du ? Pennou-galouer ? [...] ». Lesanvioù dismegus, berped. Komzoù gouennelourion aveit damvenegiñ broioù a-vaez-bro, ar re isdiorroet. Ar « pennou-koko », èl ar frouezh trovanel, ar « reoriou-roz », èl ar makaked, « pennou-du » pe c'hoazh « morilloned » aveit komz ag an Afrikaned ? « Pennou-galouer » aveit komz ag an Arabed ? « Debrerien-riz » pe « kaherien-kraoñ » aveit komz ag an Azianed ? Rolliñ an holl lesanvioù gouennelour posubl a-ziàr forzh peseurt estrañjour a c'helleze bout lâret get ar re o degemer : tud wenn, tud ar c'hornôg, tud o deus danvez... Sevel ur flemmigan àr an holl klichedoù (livioù o c'hroc'henoù, boazioù sevenadurel...) e vez implijet aveit rummadiñ an dud. Gober goap doc'h ar re o degemer. Ar re n'int ket kap d'ober an diforc'h etreze. Ar re zu, pennoù-koko tout. Ar re velen, debrerien-riz, forset-mat.

Ha petra lâret bremañ ag an anvioù ?

Eden Bouyabes (arvest 2, diviz 1)

Sobrino – Ata Tio ! Me an hini eo !

Gastrig – Mab va hoar ? (o komz dezhañ e-unan) Eur hoar am-eus-me ? Gast ! Va hoar evel just !... med peseurt hini ?

Sobrino – Anna Maria Cruzada Cabeza de Vaca Del Monte ! [...]

Ur c'hoar a Su Amerika he deus un anv àr-astenn. Krouiñ an dilec'h etre Gastrig n'eo ket mui sur kaout ur c'hoar ha Sobrino a reskont resis èl pa vehe anat « Anna Maria Cruzada Cabeza de Vaca Del Monte ». Farsal diàr-benn anvioù latino a vize hir-hir a-hrevez.

Anvioù an tudennoù 'barzh *Eden Bouyabes* a ziskouez ur liested, un hironiñ. Kavet e vez mesk-ha-mesk : Soda, Sobrino, Baby-yar, Stella Maris, Gastrig, Saint-Frusquin... Dedennus studial anvioù an tudennoù. Saint-Frusquin, ur sant faltaziet aveit komz ag ar pezh omp perc'henn àrnañ. Mes ivez aveit komz a draoù didalvoud ha n'eo ket dav menegiñ anezhe ; èl ma vez lâret e galleg « ... et tout le Saint-Frusquin ». Komz ag ar repuidi o deus an nebeutañ. Baby-yar he deus ur « gourdad », un tad-kuñv brezhonek anvet Matilin Ar Gow (an anv brezhonek nemetañ er pezh-c'hoari). Displegadenn hec'h anv a zo levezonet get sevenadurioù dishañval ha niverus mes mirout ur « serr-lagad » d'he gwrizioù ? N'eus ket mui « Pennou-koko ? Reoriou-roz ? Kaherien-kraoñ ?

⁶⁸ *Eden Bouyabes. Op. Cit.*

Morilloned, debrerien-riz, pennou-du ? Pennou-galouer ? » èl ma oa en arvest 1, senenn 3. N'eo ket an dalvoudegezh àr ar fed emañ gwir o anvioù tudennoù pe e oa bet faltaziet gete mes anvioù resis o deus an tudennoù bremañ. Soda, Sobrino, Baby-yar, Stella Maris, Gastrig, Saint-Frusquin... a anavez ar re arall hag a zo anavet gete. An diforc'h bras etre ar senennoù-se a zo ar live darempred etre an dud.

Memmes hironiñ aveit komz ag ar yaouankiz, hiziv an deiz pa vez lennet 'barzh *Feulster... Nann* !⁶⁹ anvioù an dud yaouank : Lucky, Muis, Amina, Kevin. Bout tostoc'h ag ar wirionez amañ aveit bout gwirion, aveit kontiñ istoer krennarded en ur gêr vras. Gober giz ar vro 'barzh 39-45 *Brezel e Bro-Leon*⁷⁰ get an Alamaned : Karl, Franz ha Fritz.

*Neizheta, elle niche où la langue ?*⁷¹ get Teatr Piba a zo ur pezh-c'hoari diàr-benn ar yezhoù minorel ha div resis e Frañs : euskareg ha brezhoneg. Setu perak emañ anvioù an daou abadenour etre an daou sevenadur-se : Katell Maligorn aveit ar brezhoneg ha Charles Etchepareborde aveit an euskareg.

Gober doc'h an anvioù aveit lec'hiiñ an tudennoù, o stagiñ d'ur c'hultur, d'ur vro, d'ur rummad, d'un orin sokial... Da lâret eo lakaat àrne, a-drugarez d'ar merker kentañ, o anvioù, an holl arouezioù dereet d'un identelezh. Goulennata an anv èl ma vize trawalc'h aveit goulennata an orin hag an aparchant.

'Barzh *Privezioù publik*⁷² e vez kavet tudennoù yaouank : Leila pe Abigaëlle. Santet e vez emañ ar levezon gete. Fiziañs o deus ag o stad. Ar fiziañs-se a rez, a-wezhioù, ar rogentez hag an dispriz. N'eus nameit div dudenn o deus anvioù brezhonek : Gwendal ha Marjanik. Tudennoù eil renk a vez alies dibriziet. Gwendal eo preizh nevez Leila, an debocherez. N'en deus ket ur plas termenet mat en istoer ha danevellet e vez e gomzoù d'ar liesañ get Leila just a-walc'h. Diskouezet e vez èl-se (arvest 1, senenn 1) :

Leila – Hiziv 'yan da bokat da Wendal. Dec'h em boa divizet an dra-se, hag hiziv 'vo graet. Abaoe ur sizhunvezh dija e sellan outañ hag e sell ouzhin. Re zo re. 'Yan da bokat dezhañ.

Marjanik – Gwendal du magasin de chaussures ?

Abigaëlle – Divalaoc'h a baotr 'vez kavet war an douar.

Marjanik – Ha war-lerc'h ?

Leila – Petra war-lerc'h ?

Marjanik – Pa vo poket, petra a ri ? 'Maout ket o vont da bokat dezhañ ha kuit ! Ale, salud !

69 *Feulster... Nann !*; Ar Vro Bagan ; 2017. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

70 *39-45 Brezel e Bro-Leon. Op. Cit.*

71 *Neizheta, elle niche où la langue ? Op. Cit.*

72 *Privezioù publik. Op. Cit.*

Petra a lari dezhañ ?

Leila – War-lerc'h 'vo traoù tud deuet. N'hon do ket da gaozeal, 'rez ket bil, Mimile.

Setu an titouroù nameite hon bo diàr e benn : Gwendal a labour er stal botoù, n'eo ket divalav tamm erbet, n'eo ket bet dibabet get Leila aveit e gaozeadenn ha get ma vezo brav n'eo ket dav dezhoñ kaozeal.

Ne gomz ket mat brezhoneg Marjanik, kousket a ra er priveziou, plac'h ar c'hempenn eo... Ne gomz ket kalz. « Laret e vez dezhi ne gomz ket re vat brezhoneg, ha poanius eo dezhi klevet se. En em santoud a ra e-maez ar jeu pa glev Abigaëlle ha Leila o vrezhonegañ ».

'Barzh *Priveziou publik* e vez gwelet mat an diforc'h a-bouez a zo etre mestroniñ ar yezh a vez merzet èl ur varregezh vicherel, un atoud aveit bout degemeret er strollad sokial (amañ strollad merc'hed ar priveziou) : « Leila 'zo bet desavet e Diwan, ha joa he devez o komz brezhoneg gant Abigaëlle. Karout a ra Leila Marjanik, met kaozeal brezhoneg ganti ne ra ket kalz, peogwir e tisplij he fouez-mouezh dezhi. Kavout a ra dezhi ne ya ket buan awalc'h, neuze e kav atav aesoc'h mont e galleg ganti. », « [Abigaëlle] Ar brezhoneg a zeu aes dezhi, james n'eo bet un emgann eviti. N'eo ket dezhi un danvez da vezañ tabutet (nemet e vefe strategiezh werzhañ) ». Kaout un anv-bihan brezhonek a zo un afer arall èl Marjanik ha Gwendal da skouer. Mestroniñ ar brezhoneg a zo un atoud bras mes kaout un anv brezhoneg a zo liammet get ur c'hiz kozh hrevez Abigaëlle pe Leila. Kaout un anv-bihan brezhonek a sinifi amañ bout un dudenn « faire-valoir » aveit ar re arall. Alies e vezont disprizet, palvataet, dreist-holl get Leila. Gwendal ha Marjanik a zo tudennoù jentil, gredus, dibourvez a arvez :

Arvest 3, senenn 3 :

Leila – Graet 'm eus war-dro. Fin, n'eo ket me 'm eus graet.

Abigaëlle – Ne gomprenan seurt.

Leila - ♪ ♪ Karantez, karantez gologolo-giligili... ♪ ♪. Gwendal a gar ac'hanon da vat, goût a rez.

Abigaëlle, *o vousc'hoarzhin* – Ha perak ne rafe ket ! Laret en deus dit ?

Leila – Lavarout ne ra ket, diskouez ne laran ket ! [...] Komzet 'm eus bet gant Gwendal. Selaou a ra ouzhin, gout a rez. [...] N'empêche Gwendal, il est gentil, hein, il était pas obligé d'intervenir. Talvezout a ra, memestra, tu crois pas ? Il était tout chevalier servant, comme ça, whou. Evit ma flijadur din-me nemetken, soursial diouzhin [...].

II.1.2. Pouez-mouezh

Ar pouez-mouezh a zo un arouez splann aveit skeudenniñ ar yezhoù arall. Diskouez int estrañjourion, tudennoù dishañval doc'h an tudennoù arall, a-drugarez d'an arouez-se.

Ar soudarded o deus ur pouez-mouezh alamanek e 39-45 *Brezel e Bro Leon*⁷³. Merc'h an armatour, he gwaz hag ar barner o deus ur pouez-mouezh amerikaneg en *Amoko 2*⁷⁴. Santet e vez mat, er skouerioù-se, n'int ket an tudennoù madelezhusañ, doujaplañ. Tudennoù o deus ur galloud kreñv. Tudennoù talvoudus, lan a zispriz.

An tudennoù estrañjourion n'int ket tout taolennet èl tud otus ha disprizus. N'eo ket, èl-just, liammet forset-mat get orin an tudennoù mes dreist-holl get o statud sokial, o fersonelezh, o fal...

Ar pouez-mouezh a c'hell bout un arouez bennak aveit diskouez unan bennak a glask deskiñ ur yezh nevez. Unan a zo é pleustriñ èl Gastrig Barnejee 'barzh arvest 2, diviz 1 *Eden Bouyabes*⁷⁵ :

Gastrig Barnejee a zo teski yezou nevez dre lenn ha keñveria eun notennig teknikel

Gastrig – Maracaibo !

Lavaroud hag adlavaroud a ra frazennoù an notennig en eur ijina beb a bouez-mouez d'ar yezou, keit m'ema o skriva pajennadou en e garnedig. O trei 'ma ar hranked 'zo o rosta war grill eur fust houarn.

Arabat ankouaat emañ Gastrig en ur c'hamp repuidi. Ur repuad eo met ur roll a-bouez en deus er c'hamp : touller-bezioù. Neuze e vez graet bravoc'h doc'htoñ kar talvoudus eo aveit an dud kiriek ag ar c'hamp, hag a-drugarez d'ar statud-se e vez doujet dezhañ get ar repuidi arall. Amani e c'hell skeudenniñ ar boelladenn-mañ c'hoant ar paotr pignat ar skeul sokial, donet da vout barrekoc'h. Ur mennozh bout degemeret en ur strollad tud, bout enklozet gete, an c'hoant kaout un amzer da zonet gwelloc'h, a zo sur a-walc'h en e spered. Deskiñ ur yezh nevez a vez gwelet èl un atoud emañ a chañchehe e vuhez. Ne ouia ket Gastrig Barnejee peseurt yezh eo ha penaos e vez distaget. Primaaziñ a ra en ur lenn e notennig teknikel. Truez o deus an arvesterion dezhañ kar memes get e strivoù e vez komprenet doc'htu ne zay ket a-benn.

73 39-45 *Brezel e Bro-Leon. Op. Cit.*

74 *Amoko 2. Op. Cit.*

75 *Eden Bouyabes. Op. Cit.*

II.1.3. Prezeg

Daomp en-dro get Ar Vro Bagan ha get *War hent Youenn Gwernig*⁷⁶ pa vez goulennet get mestr Youenn Gwernig pa oa é labourat en Amerika : « How do you say « Merry christmas » in your country ? » ha roet e vez reskontoù niverus get tud an embregerezh deuet a Spagn, Iwerzhon, Breizh, Turki...

Prezeg an tudennoù a c'hell henchañ faltazi an arvesterion. Ma vez implijet gete gerioù a yezhoù arall, pe komzet ag ur lec'h, ur vro arall e krog tamm-ha-tamm da stummiñ ur skeudenn. Skeudenn ar « meuriad bras », *La grande tribu*⁷⁷, doc'h titl romant gallek Youenn Gwernig.

'Barzh *War hent Youenn Gwernig* e komz Jack Kerouac get ur pouez-mouezh saoznek hag e saozneg a-wezhioù. Jack Kerouac en deus gwrizioù brezhonek ivez neuze ne c'hell ket bout disprizus e-keñver ar brezhoneg ha Youenn Gwernig a zo é chom en Amerika d'ar prantad-se hag e fell dezhoñ komz yezh ar vro : ar saozneg. Setu perak n'eo ket ral kavout tammoùigoù frazennoù 'barzh an diviz etre Youenn Gwernig ha Jack Kerouac e brezhoneg, galleg ha saozneg.

Jack Kerouac – Ta mère va bien ?

Youenn Gwernig – Oui... Yes... Ya.

Pe pelloc'h c'hoazh int mezv-dall é kerzhet er straedoù hag e yeont e darempred get un archer :

An archer – Nozvezh vat deoc'h !

Jack Kerouac – What did he say ?

Youenn Gwernig – Oh ! He speaks breton !

Da lâret eo e vez kavet Bretoned e pep lec'h ha memes an archer en deus ur galloud bennak a-drugarez d'e vicher a zo un den habask pa vez kavet kenvroidi getañ. Komz a ra doc'hte e brezhoneg aveit diskouez, marse, ur mank bennak ag e vro hag e yezh pe an c'hoant bout kenstaget en ur gumuniezh. Un doare farsadenn a zo ivez get ar pezh-c'hoari. Lakaat brezhoneg get unan o dize an holl é soñjal e vize saozneg getoñ. Ar brezhoneg eo ar yezh estren amañ.

Memestra get Youenn Gwernig a implij ur « bretonnisme » pa vez pedet e ti Jack Kerouac ha pa c'houlenn maouez Jack Kerouac getañ petra 'do : « Un café ira avec moi ». Ur mod da farsal etre brezhonegerion. Amprestañ d'ar brezhoneg ha lakaat e galleg. Jack Kerouac ha Youenn Gwernig a zo gouest d'en em gompren memestra e n'eus forzh peseurt yezh : brezhoneg, galleg ha saozneg.

Met n'eo ket ret implij gerioù a yezhoù arall aveit reiñ heklever ur yezh arall da glevet. 'Barzh

⁷⁶ *War hent Youenn Gwernig. Op. Cit.*

⁷⁷ *La grande tribu*, Youenn Gwernig, 1982, Paris, B. Grasset.

*Eden Bouyabes*⁷⁸, (Arvest 1, diviz 7) e lavar Stella Marris : « Erruet on Totor. War dreuzou Bro an Aod. 'Peus ket riou ? Me 'me-eus ket. Leun a dud oa war an aod. Med 'maon ket-me en o zouez. Ne gomprenen ket ar pezh a larent. Roet o-doa kraoñ din ha dour ivez. [...] ». Amañ e vez displeget mat emañ erruet Stella Marris er c'hamp repuidi goude ur veaj hir « Erruet on Totor. War dreuzou Bro an Aod ». Ema é komz get he gwaz èl ma n'oa ket marv abaoe pell dija. Displeg a ra dezhañ « Leun a dud oa war an aod. Med 'maon ket-me en o zouez. Ne gomprenen ket ar pezh a larent. ». Komprenet e vez get an arvesterion eo Stella Marris un estrañjourez ha ne gomz ket yezh ar vro nevez.

Memestra get *Merc'h an eog*⁷⁹ (akt 1, senenn 2) pa lak dre gomz Loeiza he chastre bout hec'h-unan e-touez kembraegerion hepken : « Ma, diaes eo, ya, dreist-holl pa n'eus 'ken 'met kembraegerien tro-dro din. (*Jenet gant he skerb*). Perak meus gwisket hemañ ? Na droch on ! 'Vel pa vijen o klask sachañ evezh an dud warnon... »

II.1.4. Darempredoù get tudennoù arall, boazioù yezhoniell (code switching)

Levezonet e vez implij ar yezhoù get an tudennoù ha get o boazioù yezhoniell. Depantiñ a ra ag o darempredoù get ar re arall : get piv e vez implijet ar yezh-mañ-yezh, e peseurt darvoud, aveit lâret petra, rummadoù an tudennoù ivez. Gwelet e vez mat eh eus sistemoù resis a za en-dro alies.

Gwelet e vez muioc'h a c'halleg pe a saozneg e-mesk brezhoneg ar rummadoù yaouankañ.

Meneget hon boa dija skouer farsadenn Erwan diâr-benn film brudet Luc Besson *Le grand bleu*⁸⁰. Un dave a vize, marse, anavezet dreist-holl get ur rummad resis kar skignet e oa bet *Le grand bleu* e 1988 ha graet en doa berzh. *Mont a raio kuit*⁸¹ a gont istoer un den yaouank er bleadoù 1990. Neuze pa c'houlenn Erwan get e gamaladez petra a raio pa labouro :

Kamalad – Sporchoù, pe ur vicher da vont er mor. Splujer pe se.

Ar Mab – E-giz 'barzh ar *Glas Meur* ! Diwall da veuziñ, yantav !

Kamalad - Hein ?

Ar Mab - Le grand bleu !

Get merc'hed yaouank *Merc'h an eog*⁸² a zo ivez ur meskaj etre brezhoneg, galleg ha saozneg (akt 2)
:

78 *Eden Bouyabes. Op. Cit.*

79 *Merc'h an eog. Op. Cit.*

80 *Le grand bleu*, Luc Besson, 1988.

81 *Mont a raio kuit. Op. Cit.*

82 *Merc'h an eog. Op. Cit.*

Loeiza - Ola, biskoazh ! Mat eo ! (*d'an holl dud, gant un taol mouez brein*) Life is life ! C'est la vie quoi !

Pe pelloc'h e vez klevet :

Céline - Y aurait pas James, ben, laouen 'vijen bet da vezañ skrapet ha maltretet gant ar barman...

Loeiza, *A lamm he zammoù konkombrez* - T'as de ces façons de parler, toi !

Celine a c'hoarzh. Mair a zeu-tre, he blev gleb, ur vailhurenn ganti. Mont a ra en he c'hoazez war an deirvet kador-astenn da sec'hiñ he blev.

Céline - Ur meno mat oa an talaso, 'gav ket deoc'h ?

Loeiza, *A zo o chaokat he zammoù konkombrez* - Ne ra ket a zroug bepred !

Mair - 'Ra ket, nemet... 'Vel un touell a zo... e vijemp-holl ac'hanomp kreiz ar bed...

Rouanezed ar gouel.

Céline - Ben, ar pal eo, en fait.

Amañ e vez tremenet dre ar galleg hag ar brezhoneg get an teir flac'h e-touez ar memes kaozeadenn, hep kudenn erbet. Diskouez a ra int boazet gober e mod-se. Da lâret eo en deus c'hoariet ar skrivagner gant an dra-se evit lakaat liv ar yaouankiz war o c'haoziou ?

'Barzh *Priveziou publik*⁸³ e vez komprenet mat doc'htu peseurt pouez a zo roet d'ar yezh-mañ-yezh get an holl tudennoù ha peseurt boazioù implij ar yezh-mañ-yezh o deus. Er lodenn « poltriji an tudennoù » e vez lennet :

Leila - [...] zo bet desavet e Diwan, ha joa he devez o komz brezhoneg gant Abigaëlle. Karout a ra Leila Marijanik, met kaozeal brezhoneg ganti ne ra ket kalz, peogwir e tisplij he fouez-mouezh dezhi. Kavout a ra dezhi ne ya ket buan awalc'h, neuze e kav atav aesoc'h mont e galleg ganti...[...]

Marjanik - [...] Laret e vez dezhi ne gomz ket re vat brezhoneg, ha poanius eo dezhi klevet se. En em santoud a ra e-maez ar jeu pa glev Abigaëlle ha Leila o vrezhonegañ.

Abigaëlle – Ar brezhoneg a zeu aes dezhi, james n'eo bet un emgann eviti. N'eo ket dezhi un danvez da vezañ tabutet [...]

Libellule - [...] Brezhoneger ez eo Libellule, met laret a ra ez eo brasoc'h he buhez eget ur yezh vihan. [...]

Alice – he deus aon rak ar vrezhonegerien [...]

Amañ e vez pouezet àr ar brezhoneg da gentañ hag ar galleg goude. Ar galleg a zo an eil choaz pa ne vez ket posubl komz brezhoneg. Èl 'barzh darempred Leila ha Marjanik. Ar brezhoneg a zo un

83 *Priveziou publik. Op. Cit.*

arouez a c'hell kevrediñ pe dispartiñ izili ar strollad merc'hed. Souezhusoc'h c'hoazh : termenet e vez an tudennoù diouzh ar yezh(-où) a za gete. Èl pa vije lodenn bennañ o fersonelezh.

Pa zispleg Leila, berped 'barzh *Priveziou publik*, he deus c'hoant da bokat da Wendal, gwerzhour ar stal botoù hag e ra goap ar re arall dezhi :

Abigaëlle – Setu. Arruet eo-hi foll-tout. Na roue, na mestr, hag hormonou e pep lec'h !

Leila, *fulor o sevel enni* – Ecoutez les filles, moi je vends des fringues. Toute la journée je vends des fringues. Je la joue stupide et jolie pour garder mon poste, vous savez pas comment c'est fatiguant. Je vends à d'autres femmes qui doivent juste être stupides et jolies pour garder leur poste.

Ar cheñchamant yezh a ziskouez na pezh kreñv eo fromet ar vaouez. Pa vez fuloret Leila e adtremen dre ar galleg. Dreist-holl pa vez un tennad hir. Pa vez ret komz buanoc'h, kreñvoc'h aveit diskouez ar fulor e vez aesoc'h dezhi implij ar galleg. Ha n'eo ket ar skouer nameiti. Ar c'hontrol a vez gwelet ivez get Marjanik en arvest 3, senenn 3. Klevet he deus Marjanik droukkomzoù Leila hag Abigaëlle diàr he fenn ha diàr-benn Libellule. Donet a ra da vout kreñvoc'h-kreñv fulor Marjanik :

Marjanik – Evidemment que j'ai entendu. Vous croyez que je comprends pas assez bien le breton, c'est ça ? [...] Sortez ! [...] Sortez ! [...] 'Maez ma buhez. Bremañ.

Krogiñ a ra da gomz Marjanik e galleg mes n'eo ket klevet get an div arall. Echu a ra e brezhoneg èl ma oa kreñvoc'h, peurglokoc'h pouez he c'homzoù.

Memestra 'barzh *Metamorfoz*⁸⁴. Ar pezh-choari-mañ a gont istoer Abeguile a zo ret dezhañ adaptout restajoù korf marv e dad-kozh, tad-kozh dianav dezhañ, e-raok monet da vakansiñ get e vignoned. Er prolog emañ Abeguile é komz get e vignoned : « Mais fais gaffe ! Pouezuz-tre eo an doser-mañ ! Bon, renk da deltenn bremañ... C'est bon, on improvisera... Plega anezhi ! Ha kempenn bepred ! Eizh voestad chimik, trawalc'h vo gav dit ? Bon, qu'est-ce qu'elle fait ma mère ? ». Komzet e vez get Abegile get e vignoned en ur meskaj galleg/brezhoneg. Ar live yezh implijet a zo dishañval. Kavet e vez gerioù pe frazennoù e brezhoneg laosk èl : « Mert' quoi », « Excuse, j'savais pas », « Barrez-vous », « Bon, tirez-vous », « loser jusqu'au bout »... N'eo ket souezhus ar mod da gomz a zo gros, distripet etre Abeguile hag e vignoned.

Pelloc'h e erru e vamm hag a gemenn dezhañ e vo ret dezhañ adaptout restajoù korf marv e dad-kozh :

Ar vamm - Skrivet kement tra zo en doser... Mont a ri, hañ ? 'Zisoñji ket ? Da dad-kozh eo !

84 *Metamorfoz. Op. Cit.*

Abeguile - Mmmya, ma, da dad dit eo ivez... Petra zo kaoz e rankfen-me ober war e dro ?

Ar vamm - Ya, ma, c'hem... hañ... da dad-kozh dit eo dreist-holl... Fell ket dit ma vo bannet er foz boutin e-giz Mozart, geo ?... Dit d'ober war e dro : soñj ba Mamie memestra ! Dal, pa soñjan, un taol sikour 'roi din... ? (*lui tend une liasse de tracts*).[...]

Hervez komzoù ar vamm e vez santet mat ar liammoù dishañval a zo etre an tudennoù-se : « Da dad-kozh » met « mamie ». « Mamie » a zamant ur liamm kreñvoc'h, bevoc'h get teneridigezh aveit unan a zo bet anavet mat met « tad-kozh » a vez implijet aveit komz ag ur garg hag ur lec'h bennak er wezenn-gerentiezh. Tad-kozh a zo un hollidigezh aveit komz hag e hendad mes mamie (e galleg) a zamveneg karantez. Mes e c'hell bout, marse, luzietoc'h aveit an dra-se : hiziv an deiz e tro e-giz-se abalamour d'an diglosiezh ?

II.1.5. C'hoari ar gomedianed

Degas ar yezhoù arall a-drugarez d'ar leurenñ a c'hell bout graet get c'hoari ar gomedianed. P'ema Gastrig Barnejee é teskiñ yezhoù nevez dre lenn 'barzh *Eden Bouyabes*⁸⁵ (arvest 2, diviz 1) e vez graet get sikour ar skeudenn : Gastrig Barnejee a zo àr ar leurenn é lenn un notenn deknikel. Gwelet e vez ar paper en e zorn. Met n'eo ket echu. Aveit lakaat an arvesterion da c'houiet peseurt paper eo e vezont sikouret a-drugarez d'e c'hoari. Komprenet e vez get an arvesterion ar pezh emañ ec'h ober Gastrig Barnejee kar gwelet e vez emañ é lenn, é keñveriiñ ar pezh a zo skrivet àr e baper. Lâret hag adlâret a ra ar frazenn é faltaziñ pouez-mouezhioù dishañval ha posubl aveit pep yezh èl, da skouer, pa lenn a vouezh uhel « Maracaibo ». C'hoariet e vez get ar pouez-mouezh, an taol-mouezh, ar lusk, ar soñj, an disklipe aveit diskouez emañ é teskiñ. C'hoariet e vez get an eztaoladennoù àr e zremm : kriziñ an divabrant, distagiñ get ar beg digoret mat...

Memestra get skouer *Merc'h an eog*⁸⁶ (arvest 1, senenn 1) pa c'houlenn Loeiza get Mair petra a dalv ur ger resis he deus klevet pa oa Mair é tabutal get hec'h eontr hag he mamm :

Loeiza, *À Mair* - Petra eo, « sgwarnogod »? (*NdT : lièvre se dit « sgwarnogod » en gallois*).

Mair lui repond en mimant les longues oreilles du lièvre.

Loeiza - Ah ! Gwelet a ran ! Skouarnioù hir ! Gedon !

Loeiza regarde Mair en tirant sur les lobes de ses propres oreilles.

Loeiza - Skouarneged ! (*NdT : oreille se dit skouarn en breton*)

Mam - Oui les lièvres sont sans doute les plus vieux habitants de ce pays. Aujourd'hui comme dit Gwil' ils sont en voie de disparition.

85 *Eden Bouyabes. Op. Cit.*

86 *Merc'h an eog. Op. Cit.*

Get jestraouiñ Mair eo deuet da benn Loeiza da gompren petra a dalve « sgwarnogod ». Aweit sikour muioc'h an arvesterion e vez roet dre gomz geti ar ger kevatal e brezhoneg « gedon ».

Pa echu ar vamm get « Oui les lièvres sont sans doute les plus vieux habitants de ce pays. Aujourd'hui comme dit Gwil' ils sont en voie de disparition. » eo, sur-walc'h ur c'heñveriadur get ar gembraegerion pe ar vrezhonegerion.

'Barzh *An Albatroz*⁸⁷ get ar gompagnunezh Safar emañ Lukas Nedeleg é taolenniñ an evn-se. Displeg a ra e zoare da nijal, e neuz diasur. Un evn diampart ha dizampart. E jestraouiñ e vod da nijal emañ Lukas Nedeleg aveit skeudenniñ e gomzoù : « « tost da « s'écraser » àr ar mor... mais non il ne s'écrase pas du tout, il remonte avec un petit poisson dans sa bouche » ». Jestraouiñ a ra e zivaskell digoret bras-meurbet hag e nijadenn diasur é kosteziñ gwezh doc'h un tu ha gwezh doc'h un tu arall mes ivez e fonn pa ya a-benn d'an avel buan.

Get barzhoneg Eva diàr-benn Divanac'h 'barzh *Metamorfoz*⁸⁸ e vez taolennet geti e mod-se :

Eva - Hir e zivrec'h a santan tro dro din

ken hir hag e vañchoù.

Heñvel ouzh dour ar ruñvier kaniet

emañ o redek flour e gomzoù.

E-giz ar maen-diazez 'dan ar redour,

e vezan gwasket dindan e breder.

Stok-ha-distok vez ganin, e-giz bleud,

pa gouezh er sac'h a-stroñsadoù.

O treiñ-hanter-treiñ dizehan,

Emañ e gorf em zrowardroioù.

Karantez klouar a vag eviton,

ur mesk soutil eo, rezon ha pasion.

E-tal dezhi emañ Abeguile é tañsal : « *en ur dreiñ 'giz unan sot emañ Abegile* ». Treiñ hag adtreiñ a ra e bep tu ag ar leuren. N'eus ster erbet en e zañs. Èl ma oa mezv pe saouzanet Abeguile get ar sonerezh, èl ma vize ur serpant saouzanet. En ur bed arall emañ àr a seblant. Un heklev a zo etre barzhoneg Eva hag ar sonerezh a vez skignet : *Le serpent qui danse*⁸⁹, barzhoneg Baudelaire, kanet get Serge Gainsbourg. *Le serpent qui danse*⁹⁰ a gont karantez korfel ha pasion en doa bet Charles

87 *An Albatroz. Op. Cit.*

88 *Metamorfoz. Op. Cit.*

89 *Le serpent qui danse*, Charles Baudelaire, *Les fleurs du mal*, 1857.

90 *Le serpent qui danse*, Serge Gainsbourg, *Serge Gainsbourg N°4*, 1962.

Baudelaire get Jeanne Duval, e Vénus du. Eroték an ton, meuleudi ag ar c'horf : « O treiñ-hanter-treiñ dizehan, / Emañ e gorf em zrowardroioù. / Karantez klouar a vag eviton,[...] ». Barzhoneg Eva a zo awenet bras get hani Baudelaire. An drevezadur-mañ a zo hañval get ar stumm, ar stil, ar soñj.

Er fin eh eus ur skouer dedennus arall 'barzh *Buhez Yann Gonan*⁹¹ get Ar Vro Bagan. Pa erru Yann Gonan get ar peurrest ag an akipaj betek an Douar Nevez e ya e darempred get ar sovajed. Diskouezet e vez àr ar leurenn peseurt diaezamantoù o deus aveit eskemm kar ne gomz ket an daou strollad ar memes yezh. Aveit krouiñ ur liamm etreze ha bout gouest da zaremprediñ e vez implijet trouzioù ar loened. Yann Gonan a gont d'an indianezez istoer Santez Jenovefa a Vraban (trouz an dañvad, trouz ar bleiz,...). Implijet e vez ivez jestroù èl aveit yezh ar sinoù, gober amplik an eztaoladennoù àr dremmoù an tudennoù. Diskouez e ra ivez, doc'h un tu arall, eh eus berped moaien d'en em gompren hag ar jestroù, an trouzioù a zo a-benn ar fin ur yezh hollvedel.

II.2. Get an danvez

Ne c'hellont ket an tudennoù bout an harp nameitoñ aveit ar leurenourion. Paour ha diglok e vize hollad ar pezh-c'hoari. An hewel pe ar son 'zo harpoù ken efedus. Da lâret eo : an danvez a zo ken pouezus ag ar stumm. Ar faltazi he deus ezhomm ar gweled hag ar c'hleved aveit sikour an arvesterion. « Espace dramatique et espace scénique ressortissent de deux systèmes sémiologiques sans aucun rapport : l'espace dramatique par le langage qui n'existe que dans un référent imaginaire, créé par le discours ; l'espace scénique visible, iconisé et montré là et maintenant pour le public (communication par ostension, pas nécessairement par iconisation). La première fonction de l'espace de la fiction scénique est ainsi d'exhiber les énonciateurs, d'occuper le terrain où l'action va se dérouler. L'espace s'organise par rapport aux sources de l'énonciation, de la figuration scénique au sens concret, de la deixis, comme mode de communication par indication et ostension. Par rapport à l'espace scénique, l'espace dramatique, notamment celui qui est symbolisé par le *texte* dramatique, devient presque redondant, ou moins immédiat et plus « effacé ». Ce qu'on en sait par le discours tend à « se traduire » tout de suite dans un des aspects de l'espace scénique. »⁹².

An danvez aveit kreñvaat, souten, skeudenniñ, damvenegiñ ar prezeg pe ezvezañs ar prezeg just a-walc'h.

91 *Buhez Yann Gonan*, Ar Vro Bagan, 1998. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

92 PAVIS Patrice, *Chapitre XVIII. Production et réception au théâtre : La concrétisation du texte dramatique et spectaculaire*, 2007

II.2.1. Son

Unan ag an harpoù pennañ er leurrenniñ eo ar son. Ar son a c'hell bout ar sonerezh pe an trouziou ivez. Ar son aveit sikour ar liesyezhegezh, lakaat an dud da gompren, da welet, da faltaziñ traoù n'int ket lâret dre gomz. Traoù a vize bet, marse, re ziaes da gompren hep sikour ar son. Pe e c'hell bout ivez, just-walc'h, ar son ur voaien da greñvaat ar prezeg.

Da skouer : son an taboulinoù hag ar c'han hengounel indian a zo trawalc'h dija aveit displegiñ d'an arvesterion emañ erruet Yann Gonan betek an Douar Nevez 'barzh *Buhez Yann Gonan*⁹³. N'eus ket bet lâret netra c'hoazh mes komprenet e vez emañ Yann Gonan en ur vro estren hag e vo a-benn nebeud klevet ur yezh nevez. Ar son a ziaerog ar c'homzoù. Servij a ra da staliñ un aergelc'h, da brientiñ spered an arvesterion d'ar pezh a c'hoarvezo.

Anal boest an diaoul e-barzh *An Albatroz*⁹⁴ a skeudenn gwezh trouz an avel a c'hwezh greñv e-pad ur barr-avel, gwezh anal Jean-Marie Le Bris a roeñv... *An Albatroz* a zo ur pezh-c'hoari a vez kinniget d'ar vugale adalek 6 vlez. Diskouezet e vez el un abadenn divyezhek. 'Barzh *An Albatroz* e vez alies-tre tremenet d'ur yezh d'egile aveit miret ur lusk reoliek. Da lâret eo emañ ar son un harp a-bouez aveit lakaat an arvesterion yaouankañ da gompren. En em harpiñ a ra ar son àr ar prezeg. Bouest an diaoul a daolenn nijadennoù an evned mor aveit komz diàr o fennoù get gerioù hanter brezhoneg, hanter galleg : « albatroz, fou de bassan, [...] ». Nijadennoù a c'hell bout skañv pe pounner, buan pe goustad, ampart pe diampart hrevez an evned.

Ar sonerezh a vez implijet kalz 'barzh *39-45 Brezel e Bro-Leon*. Sonenn *Lili Marleen*⁹⁵ a skeudenn an Alamagn el-just hag *In the mood*⁹⁶ a skeudenn ar Stadoù-Unanet. Choazoù sonerezh poellek hag un tammig « cliché » kar an div sonenn-se a zo deiziet a brantad an eil brezel bed. *Lili Marleen* he doa graet berzh er bleadoù 1940', en Alamagn nazi. Kanet e veze get Marlène Dietrich a oa a-enep mennozhioù an nazied ha chañchet e oa bet geti un nebeud frazennoù 'barzh ar barzhoneg a-orin. *In the mood* a oa sonenn Glenn Miller, soner trombon ha penn-soner *Glenn Miller Army Air Force Band* ag an US Air Force e 1939.

'Barzh *Metamorfoz*⁹⁷ e vez klevet sonenn Billie Holliday *Body and soul*⁹⁸ e-pad senenn kouronkadenn Eva. Divanac'h a zo é walc'hiñ anezhi. Ur liamm ispisial a zo etre Eva ha Divanac'h.

93 *Buhez Yann Gonan. Op. Cit.*

94 *An Albatroz. Op. Cit.*

95 *Lili Marleen*, Marlène Dietrich, 1938.

96 *In the mood*, Glenn Miller and The big band jazz, 1939.

97 *Metamorfoz. Op. Cit.*

98 *Body and soul*, Billie Holliday, *Body and soul*, 1957.

Divanac'h a zo skeudenn gwaz Eva 'barzh huñvre Abeguile. Ar sonenn *Body and soul* a gont glac'har ur plac'h goude bout dilaosket get he mestr. Ar memes santimant he deus bevet Eva pa oa bet dilaosket get Divanac'h aveit Meluz. Meluz a ziskouez ar janglenn, mestrez kentañ choazet get Divanac'h, da lâret eo buhez an avantur. Displegiñ a ra Eva he foan : « Adarre ? (*Pour elle-même*) Ha ma c'hallfemp ober hep ar gwalc'haj, ur wech bennak ? Ha ma c'hallfemp mont da lugudiñ war ribl ar ster vras. Mont d'en em goll un nebeut eurvezhioù-pad pe un nebeut devezhioù, un nebeut sizhunvezhioù-pad pe un nebeut bloavezhioù. Un templ a zo n'omp ket bet o welet. Ur menez a zo oac'h sañset kas ac'hanon eno, un olifant a zo oamp sañset pignat gant e gein, ur bugel a zo oamp sañset desevel asambles. ». Pelloc'h e kendalc'h er senenn 7 :

Eva, *trist-bras diwar hiraezh* – Nav miz-pad 'm oa gortozet ma merc'hieg. Hanter-kant vloaz-pad 'm eus gedet distro he zad. Tec'het kuit, ur wech. Chomet eo hep distreiñ. Ar gwaz-se a vezan war c'hed anezhañ, bez' ez eus bet dioutañ memestra ?

Meluz – Ar gwaz-se a chomo ganin, Eva, na vez ket war-c'hed anezhañ ken.

Echuiñ a ra Divanac'h riñsañ blev Eva.

Ar sonerezh aveit skeudenniñ fromadennoù, trivliadoù an tudennoù. Ar pozioù aveit hekleviñ ar pezh a vez lâret pe ne vez ket lâret gete kar re boanius eo. Skouer *Boys don't cry*⁹⁹ a vez skignet 'barzh ur senenn diaes 'barzh *Mont a raio kuit*¹⁰⁰. Ur c'henstur etre poan Erwan ha rakvarnioù ar gevredigezh.

Dedennus eo skeudennaouiñ an c'hoariva a-vremañ gant sonerezh ag a lec'hioù arall. Un doare liesyezhegezh arall, dre souch.

Stella Marris, un dudenn ag *Eden Bouyabes*¹⁰¹ a za ag ur vro estren. Menegiñ a ra kêr Sofia « O labourad 'oan e ti eun orolajer e Sofia ». Pa ya Stella Marris d'an Anaon e kan Baby-Yar aveit hec'h enoriñ « *Krog eo da gana kanaouenn Stella Marris e bulgareg, keit m'ema ar zonerien o planta tiz tamm-ha-tamm* ».

Lan a ganaouennoù a vez kavet 'barzh *Eden Bouyabes*. Echu a ra ar pezh-c'hoari get ur sonenn a ziskouez mat levezonioù niverus ar broioù arall er c'hamp repuidi, just a-walc'h :

Baby-Yar – Shanti Shanti Shanti

N'ouzon ket petra 'dalv...

Mes eun traet eo evid ar reuzidi [...]

Soda - [...] Shanti Shanti Shanti

99 *Boys don't cry*, The Cure, *Boys don't cry*, 1979.

100 *Mont a raio kuit*. Op. Cit.

101 *Eden Bouyabes*. Op. Cit.

N'ouzon ket petra a dalv
Med eun traet eo evid ar reuzidi
Da heñcha a ran war treuzou Eden Bouyabes
Hag e tistroin gand va hlañvourion dibasiant
Da zistana tourmant o lignez, d'o dizamma euz o identelez
Da ginnig dezo planedennoù re uhel evid o botou korrigez
Da hada huñvreou diboell e foñs o godelloù teuh [...]
Gastrig – Shanti Shanti Shanti ha kement zo
Maracaibo ! [...]
Pell er hornôg pella, e-leh m'ema penn ar bed, e choman em bro henidig.
Leh ma timez dindan heol kreisteiz huñvreoù ar Reter, ar Hornôg, an Hanternoz hag ar Su Pell
er Hornôg pella,
Leh ma vez fardet an traet evid ar reuzidi
Pell er Hornôg pella,
Leh ma tarz c'hoarzedennou Baby-Yar
Em bro henidig, er gêr,
Leh 'm-eus taolet va fouez.

Pa lâr Baby-Yar, Soda pe Gastrig « Shanti Shanti Shanti / N'ouzon ket petra a dalv.../Mes eun traet eo evid ar reuzidi » e vez santet mat ar forc'hellegezh. N'ouiont ket petra a dalv « Shanti » kar ne gomzont ket ar sanskrit. Setu ar pezh a c'hellamp kompren da gentañ. Mes pa sellamp resisoc'h doc'h ar pezh a dalv « Shanti » e sanskrit e vez kavet ur ger sterioù lies dezhoñ èl : peuc'h, sioulder, dienkreiz, levez, joaiusted... Da lâret eo un dra n'anavont ket er c'hamp repuidi, en o buhez enbroad. Ur peurvad bennak, marse, a n'oa ket bet gwasket gete. Soda a zispleg-mat ar santimant-mañ pa lâr : « Hag e tistroin gand va hlañvourion dibasiant / Da zistana tourmant o lignez, d'o dizamma euz o identelez / Da ginnig dezo planedennoù re uhel evid o botou korrigez / Da hada huñvreou diboell e foñs o godelloù teuh [...] ». Na pezh kriz eo pa glevamp Soda é vennegiñ he « hlañvourion dibasiant » da biv e fell dezhi distaniñ tourmant o lignez, disammiñ ag o identelez. Piv a fell dezhi disammiñ ag o identelezh ? Ar villigadenn bout ganet e lec'hioù fall. Amañ emañ re bounner pouez an identelezh, un dra a ne c'hell ket bout sammet. Ne c'hellont ket tenniñ lorc 'h ag an dra-se. Ur villigadenn lan a vezh hag a-boan eo an identelezh aveite. C'hoant o deus kaout ur vro nevez pe adkavout o bro. Setu perak e oc'hpenn Gastrig : « Pell er Hornôg pella / Leh ma vez fardet an traet evid ar reuzidi [...] Em bro henidig, er gêr / Leh 'm-eus taolet va fouez. »

*Neizheta, elle niche où la langue ?*¹⁰² get Teatr Piba en deus, a veit neudenn, hon liamm, hiziv an deiz, get ar brezhoneg. Ur bochad sonennoù a zo bet implijet en abadenn a gont an istoer-se. Er pezh-c'hoari-mañ e vez implijet ar sonerezh èl un heklek d'ar c'homzoù. Ar sonerezh a lâre e plas ar gomedianed ar pezh a ne c'hell ket bout lâret. Komzoù kizidik, fromadennoù forc'hellek a zo diaes da dermeniñ. Lâret e vez an traoù dre souch. Ar sonerezh a strilh ster d'ar prezeg. Sonennoù liesyezhek a veit un abadenn liesyezhek. Choaz *Dis quand reviendras-tu ?*¹⁰³ get Barbara a veit goulenn get ar yezh just a-walc'h : « Dis, quand reviendras-tu ? Dis, au moins le sais-tu ? Que tout le temps qui passe, ne se rattrape guère / Que tout le temps perdu, ne se rattrape plus ». *Huñvreoù merglet*¹⁰⁴ get Krismenn a veit komz ag ar Vrezhonegerion : « Piv eo ar re-mañ gant o reun war o fennoù? / Graet e vez deusomp Paotred tralalaleno » hag ar sell a chom c'hoazh àrne. Skignet e vez enrolladennoù a vugale skol divyezhek Pont-Scorff é kaniñ *Emañ Joseb é tañsal, Marzhin ar strobinner*¹⁰⁵. Kanaouennoù brudet er skolioù brezhonek a veit krogiñ get ar yezh.

A veit kloziñ an abadenn e lavar Katell Maligorn : « J'ai fait chou blanc. Mais j'ai compris quelque chose. Je me dis qu'une langue ça disparaît jamais complètement. Ça se niche toujours quelque part. Je vous écoutais tout du long : « la langue en pointillés »,... et je me dis que si on avale une langue elle reste en nous ». Echu a ra get sonenn Youenn Gwernig : « *Avel, avelig C'hwezhit 'ta...*¹⁰⁶ Langue, va par les quatre vents ». Da lâret eo : Dalc'h atav brezhoneg ha kae get ar seizh avel.

II.2.2. Goulou

Ar goulou a zo ur voaien dedennus arall da siliñ traoù n'hallont ket bout lâret hep bout re bounner pe re beurglok. Traoù 'zo a vije bet diaes da zisplegiñ e brezhoneg. Traoù 'zo a zo bet damveneget a-youl a veit doujiñ doc'h lusk an abadenn, a veit « ekonomiezh » ar pezh-c'hoari. Implijet e vez ar goulou dreist-holl a veit aesaat kompren an arvesterion é skeudenniñ ar c'homzoù.

Kanaouenn VI – Maro Saint-Frusquin – Trezeg ar goulou a zo ur skouer a-feson a vez kavet 'barzh *Eden Bouyabes*¹⁰⁷. Kanet e vez :

Deuet ar mare da gimiad

Taoliou an daf d'az kerhad

¹⁰² *Neizheta, elle niche où la langue ?*. Op. Cit.

¹⁰³ *Dis, quand reviendras-tu ?*, Barbara, *Dis, quand reviendras-tu ?*, 1962.

¹⁰⁴ *Huñvreoù merglet*, Krismenn, 'N om Gustumiñ deus an Deñvalijenn, 2017.

¹⁰⁵ *Marzhin ar strobinner*, Pempbiz, Pempbiz, 2010.

¹⁰⁶ *E Kreiz an noz*, Youenn Gwernig, *E kreiz an noz*, 1975.

¹⁰⁷ *Eden Bouyabes*. Op. Cit.

War an drêzenn, bag Kornog
Pa hwez avel Tir na nÓg
'Trezeg ar goulou [...]]
Lufir ar stered, bolz an noz
Leun a gevrin dihortoz
Kouezet warnout an hun don
Skañv ar vuhez evel don
'Trezeg ar goulou [...]]

Amañ e vez c'hoariet get ar goulou aveit skeudenniñ ar marv. Lan a vetaforennoù eo *Eden Bouyabes*. Damveneget e vez ur bochad traoù ha dre chañs, spered an arvesterion a raio ar peurrest. Pozioù ar sonenn a zispleg an tremenvan etre daou bed : hani ar re varv ha hani ar re vev. Komz ag ar marv en ur mod barzhhek hep lâret re, hep bout re griz, re dañval, re hudur... En em harpiñ a ra ar goulou àr ar prezeg. Diskouez a reont fetis an tremenvan d'an arvesterion aveit o c'honfortiñ en o c'hompren. Tañval àr an douar aveit diskouez an dristidigezh, ar glac'har ar re a chom. Ar re varv a ya àr-du ar goulou. Goulou an oabr « Lufir ar stered, bolz an noz », « Da dremm 'welin en egor », « Deuet ar mare da gimriad / Taoliou an daf d'az kerhad », « Trezeg ar goulou ».... Èl just e vez adkrouet an aergelc'h àr ar leurenn a-drugarez da chañchamantou goulou fetis get an deknikourion.

Barzh *Ar Roue Arzhur*¹⁰⁸ e vez kavet senennoù niverus a emgannoù. Unan ag an emgannoù a greñva santimant an aon, an dizesper pa vez klevet : « You're finished ! » ha doc'htu goude « Vous êtes finis ! ». Komprenet e vez eh eus div vro a dal an eil doc'h egile. N'eus ket ezhomm oc'hpenniñ traoù dre gomz. Teñval an aergelc'h àr ar leurenn. C'hoariet e oa bet er-maez. Neuze e vez lazhet tost tout ar goulou. Du an traoù aveit krouiñ an aon. Diaes gwelet spis an traoù. C'hoariet e vez get ar skeudoù. Èl ma oa aveit damvenegiñ feulster an emgannoù hep chifokiñ re an arvesterion. Ur wezh an amzer e vez gwelet ur bann goulou ruz, orañjez aveit skeudenniñ an tan, ar gwad...

Sellamp bremañ doc'h *Buhez Yann Gonan*¹⁰⁹ get Ar Vro Bagan Tapet int bet, Yann Gonan ha daou ag e gamalad, get an Indianed. O c'has a ra an Indianed betek o c'hamp. An tri faotr a zo taolet àr ar leur. An Indianed kurius a za d'o zouch, d'o flouriñ, da sellet doc'hte. Klevet e vez son an taboulin hag ar c'han hengounel. Èl ma vize tost kroget ur lid bennak gete. Komzet e vez e brezhoneg get an tri faotr mes « ar sovajed » a gomz get komzoù dianav, jestroù pe trouziou

108 *Ar Roue Arzhur. Op. Cit.*

109 *Buhez Yann Gonan. Op. Cit.*

hepken. C'hoariet e vez get an digrompren etre an daou strollad hag a zaio d'en em gompren a-benn ar fin get jestroù ha trouzioù ivez. Mes ankeniet-bras eo an tri martolod betek poent, aon-spontus o deus da vout debret get ar « sovajed ». Ne ouiont ket ar pezh a c'hoarvezo dezhe. An noz eo. Tañval an aergelc'h àr ar leurenn. N'eus nameit gouloù gwenn sklaer a vez implijet àr an uhelder. Gouloù yen a vize gouloù naturel kavet er-maez. Ur c'helc'h gouloù gwenn a ziskenn d'ar solier aveit skeudenniñ ar loar. Tost ag ar leur e vez bannet gouloù ruz, melen àr korfoù hanter noazh ar gomedianed pe gwisket get livioù sklaer, aveit skeudenniñ gouloù an tan. Krouet e vez un aergelc'h gouloù naturel. N'eo ket bet dibabet ar gouloù-mañ-gouloù aveit harpiñ pe kreñvaat ur santimant bennak. Fetisoc'h eo dibab ar gouloù amañ. An dibab-mañ a zo bet graet aveit sikour an arvesterion, dreist-holl, da sevel en o fennoù ur gweledva. Unan a glotehe get an istoer a zo bet skrivet get Yann Gonan mes ivez get faltazi an arvesterion. Implijet e vez ar goulou aveit sikour an arvesterion da heuliñ an istoer é harpiñ o evezh àr un dra bennak fetis pa n'eo ket posubl kompren pep tra. Liveoù leurenniñ niverus a zo 'barzh *Buhez Yann Gonan* : ar pezh a c'hoarvez da Yann Gonan àr ar leurenn mes ivez mouezh an daneveller difetis, da lâret eo Yann Gonan ivez, a apparchant doc'h ur realded arall. Neuze a pezh a c'hoarvez d'an hani yaouank a zo kontet get an hani kozh. Diaes e c'hell bout heuliñ. Ar gouloù a zo amañ ivez aveit dispartiñ liveoù an istoer hag ambroug an arvesterion àr ar leurenn.

'Barzh *War hent Youenn Gwernig*¹¹⁰ eo ar c'hontrol. Lakaet e vez ar pouez àr fromadennoù Youenn Gwernig. Er senenn e-lec'h emañ Youenn Gwernig e New York, aveit Nandeleg. Pell ag e vro en deus un tammig hiraezh. Yen eo er-maez hag erc'h a zo. Sevel a ra e c'hoùgenn vantell aveit en em dommiñ. An noz eo. Kerzhet a ra er straedoù get ar voutailhad hag ar yar-indez a zo bet profet get e batrom. Tañval er lec'h uhelañ ag ar leurenn met àr an tudennoù sklaer ar gouloù. Gouloù ar postoù-lamp. Ar gouloù a zo gwenn, gris aveit skeudenniñ an aergelc'h. Kreñvaat ar santimant a zigenvez, a velkoni. Tud a dremen, buan, e-tal dezhañ, er straed : harluidi Portoricaned, Iwerzhoned, Afrikaned... Yezhoù niverus ha dianav dezhoñ. Santet e vez an hirnezh ag ar vro en deus kuitaet hag ag e yezh ne gomz ket kalz. Ar gouloù a greñva fromadenn melkoni Youenn Gwernig. Ne gomz ket kalz Youenn Gwernig er senenn-mañ mes trawalc'h eo implij ar gouloù, son ar yezhoù estren aveit lakaat an arvesterion da gompren ar pezh a sant Youenn Gwernig.

II.2.3. Skeudenn

Abaoe un nebeud bleadoù e vez muioc'h-mui implijet benvegou teknologel nevez aveit

110 *War hent Youenn Gwernig. Op. Cit.*

arboelliñ ar gomz, implijiñ liveoù niverus ar leurenn, chañch-dichañch ar gened, displegiñ an traoù en un doare berr hag a-vras.

Ar skramm en deus un dalvoudegezh fetis 'barzh *War hent Youenn Gwernig*¹¹¹ get Ar Vro Bagan. Implijet e vez en ur senenn aveit diskouez troiad Youenn Gwernig e Breizh ha goude en Amerika. E plas kontiñ dre gomz e oa tremenet dre ar lec'h-mañ-lec'h ha riskliñ kaout ur roll hir, enoeus ha get anvioù-lec'h dianavez da dud 'zo eo bet kalz sklaeroc'h choaz Ar Vro Bagan : ur gartenn bannet àr ar skramm, poentoù bras e liv, get anvioù ar lec'hioù ha liammet ar re goude ar re arall hrevez e droiad.

Pa erru Youenn Gwernig en Amerika e vez gwelet àr ar skramm skeudennoù bannet aveit taolenniñ New York : delwenn ar frankiz, straedoù New York. Komzet e vez a zivroerezh Bretoned Kreiz-Breizh betek ar Stadoù-Unanet, adalek an 19^{vet} kantved. Taolenn a ra ar senenn-mañ emgav pobloù ha sevenadurioù dishañval duhont. Pelloc'h c'hoazh e klasker tostaat istoerioù ar minorelezhoù. Ar moustradur o deus bevet an Indianed, dishañval èl-just, hag an hani o deus bevet ar Vretoned, ar vrezhonegerion. Gwelet e vez poltreoù a Vretoned hag Indianed, e gwenn ha du, mesk-ha-mesk, àr ar skramm... Ur vouezh off a gont ar gwask a zo bet àr an Indianed. Istitloù a c'hellamp lenn ivez, àr ar skramm.

Implij ar skramm hag an istitloù aveit kelenn d'an arvesterion. Ur mod da vulgariziñ an Istoer eo. Un argadenn berr ha buan ha ne gemer ket re a blas en istoer mes pouezus aveit e zirolliñ. Titouroù talvoudus a vez strilhet. Berr eo an implij ag ar skramm mes a-bouez memes tra neuze e vez graet get ar vouezh off ha get an istitloù. Ar pal eo bout sur e vo komprenet ha dalc'het soñj ag ar muiañ a draoù posubl.

En arvest 2 'barzh *Merc'h an eog*¹¹² emañ Loeiza, Mair ha Céline en ur greizenn talasso : « Quelques jours plus tard. *La cafeteria d'un centre de thalassotherapie d'un blanc éblouissant, au centre de laquelle se trouve une fontaine. Musique classique revisitée en mode easy-listening. De grands écrans suspendus diffusent une propagande hygiéniste, en anglais et en français, images de femmes à la peau lisse et tendue.[...]* ».

N'eo ket èl ar skouerioù a vez kavet 'barzh *War hent Youenn Gwernig*¹¹³ e-menn e vez goulennet rekour ag ar skramm aveit reiñ muioc'h a ditouroù en ur mod berr hag efedus, magiñ ha pinvidikaat ar gomz. Amañ e vez implijet ar skrammoù aveit muioc'h a wirvoud. C'hoariet e vez etre div yezh vras ag a zo ar galleg hag ar saozneg. Ne vize ket bet, marse, a-walc'h skigniñ bruderezh a-seurt-se e brezhoneg. Un arouez bennak ag an diglosiezh eo ivez.

111 *War hent Youenn Gwernig. Op. Cit.*

112 *Merc'h an eog. Op. Cit.*

113 *War hent Youenn Gwernig. Op. Cit.*

Skigniñ skeudennoù merc'hed get ur c'hroc'hen peurvat èl bruderezh n'eus forzh peseurt kreizenn talasso. Fougeal perzhioù mat ag an dienn-mañ-dienn pe an dretamant-mañ-tretamant aveit sevel ar c'henarroud 'barzh spered an arvesterion. N'eus douetañs erbet get bruderezh a-seurt-se. Komz a draoù àr-chorre. Klask gwerzhiñ traoù aveit tostaat ar muiañ ar gwellañ d'ar peurvad kinniget amañ. Komz a ra ag ar verz, ag ar vraventez, ar yaouankiz, ar voanded. Ar pellder a seblant brasoc'h c'hoazh etre an teir flac'h en ur lec'h èl-se :

Céline - Ur meno mat oa an talaso, 'gav ket deoc'h ?

Loeiza, *A zo o chaokat he zammoù konkombrez* - Ne ra ket a zroug bepred !

Mair - 'Ra ket, nemet... 'Vel un touell a zo... e vijemp-holl ac'hanomp kreiz ar bed...

Rouanezed ar gouel.

Céline - Ben, ar pal eo, en fait.

Amañ emañ Céline aveit diskuizhiñ, profitiñ ag ar vuhez aes a vez kinniget er greizenn talasso. Seblant a ra aner, didalvoud, gaou ar pennad-mañ aveit Mair : « 'Vel un touell a zo ».

II.2.4. Ar c'hinkladurioù

Ar c'hinkladurioù, ar leurennaoziñ, a zo, marse, ar skor kentañ 'barzh spered ar lod brasañ pa soñjamp er leurreniñ, en ur mod fetis. Emañ é chañch tamm-ha-tamm ar c'hiz diàr-benn ar c'hinkladurioù en c'hoariva. Muioc'h-mui a zamveneg a vez kavet hiziv an deiz àr ar leurenn. Ar son hag ar gouloù a gemer muioc'h a bouez. Ur wezh an amzer, koulskoude, e vez kavet un dra pe zaou hepken. Ar c'hiz-se a zo kentoc'h get ar strolladoù yaouankoc'h.

Nebeutoc'h-nebeut a bezhioù-c'hoari a vez gwelet get kinkladurioù bras ha chañchamantou niverus-tre èl ma oa bet graet bleadoù 'zo.

Get *Al labous hag ar pesketour*¹¹⁴ get Ar Vro Bagan c'hoazh e kemer harp an istoer àr ar c'hinkladur. Aveit gwir eo ur pezh-c'hoari aveit ar vugale. Monet da gaout ar vugale a dalv implij muioc'h ar skeudenn aveit sikour ar gomz. Kontiñ a ra istoer ur pesketour a vev àr an traezh en un toull-ti koad. Hennezh en deus doujañs-bras e-keñver ar loened hag an natur. Un devezh bennak e kav un evnig gludet get mazout, goude ur lanv du. Gwelet e vez mesk-ha-mesk àr ar leurenn : an toull-ti koad, ar mein, ar bezhin, ar rouedoù, ar roeñvioù... An unangomz, en arvest 1, a zo liammet diouzhtu get ar skeudenn aveit lakaat an arvesterion yaouank da gompren aes « va roeñv amañ, va c'havell aze, (diskouez a ra an traoù get e zorn) me [...] war ar garreg-mañ, gleb ar bezhin (ar paotr a sav, ec'h ober fas koad, sellet a ra doc'h e vragoù), va c'hontell em godell (skeiñ a ra doc'h e

114 *Al labous hag ar pesketour*, Ar Vro Bagan, 2002. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

c'hodell)... ».

Pe pelloc'h c'hoazh e-barzh *Al labous hag ar pesketour* e vez c'hoariet get an adimplij a-drugarez d'ur sonenn aveit deskiñ ar livioù ha skeudennet get kinkladurioù aveit displegiñ d'ar re vihan e menn lakaat an dra-mañ-tra. Un adimplij a zo ur ger nevez e brezhoneg a zo bet troet e galleg. Komprenet e vez aes-tre, normal a-walc'h, petra a dalv mes diskouezet e vez memes tra petra eo en ur mod fetis : « 'Barzh ar c'havell gwer, lakit tammoù gwer / An tammoù plastik er c'havell glazig / Paper ha lien er c'havell melen / 'Barzh ar c'havell ruz... an traoù dañjerus » a gan tudenn Yannig an aod.

*Privezioù publik*¹¹⁵ get Mélanie Giotto a zo un abadenn kalz nevesoc'h kar savet e 2015. Gwelet e vez àr ar leurenn nebeutoc'h a ginkladur. Kuboù gwenn aveit reiñ da welet ar privezioù. C'hoari get furmoù geometrek ha gouloù aveit chañch lec'h an c'hoari. Un arouez a zo dedennus. Implijet e vez get ar strollad merc'hed ar banell “Attention sol glissant”. Ar banell-mañ a zo trawalc'h aveit termeniñ ar lec'h. Ur banell anavet get razh an arvesterion. Buan-tre e c'hell an arvesterion kompren a beseurt lec'h emañ é komz, peseurt harz fetis en deus ar lec'h c'hoari. Ur lec'h digor d'an holl verc'hed « privezioù publik » pe ur lec'h serret, miret aveit o strollad hepken. Un drokell ijinus aveit bout trankil. Ar pezh a zo dedennus ivez 'zo n'eo ket bet troet frazenn ar banell e brezhoneg. Ar brezhoneg a zo ar liamm etre tout ar merc'hed, memes m'o deus ur live mestroniñ dishañval ag ar yezh. Neuze leuskel ar banell e galleg a sinifi lakaat ar gallegerezed/c'hallegerion er-maez ag ar jeu/ag an c'hoari. Ar re a gomz galleg a chomo a-sav dirak titour ar banell mes ar re a gomz brezhoneg a oui n'eo nameit un dro louarn.

Neuze, ur bochad finesa leurenniñ a zo aveit degas ha damvenegiñ ar yezhoù arall. An tudennoù a c'hell bout an dileuridi gentañ ag ar yezhoù arall a-drugarez d'o fouez-mouezh, d'o anv pe d'o lesanv... met ivez a-drugarez da c'hoari ar gomedianed èl hon boa lâret uheloc'h. Implijiñ jestroù, diskouez diaezamantoù é kehentiñ, dreveziñ an digompren. An danvez a zo ivez ur skor ken efedus aveit servij ar memes pal. Implijiñ ar son, ar video, kinkladurioù, ar gouloù ; en ur mod koublet pe get aveit skeudenniñ ar gomz pe an danvez aveitañ e-unan.

Ur goulenn donoc'h a zo a-dreñv koulskoude : penaos dibab ar strategiezh efedusañ aveit bout komprenet get an holl ? Damvenegiñ, degas yezhoù arall ha tremen gete aveit chom hep ober gant ur brezhoneg re ziaes ? Moaiennoù arall 'zo memes tra get an danvez pe an c'hoari. Kemeramp skouer *Al labous hag ar pesketour*¹¹⁶ a-ziàr an adimplij : kaniñ, jestraouiñ, evit displegiñ ar ger "adimplij" ha chom hep ober getañ.

115 *Privezioù publik. Op. Cit.*

116 *Al labous hag ar pesketour. Op. Cit.*

Met, èl hon eus gwelet uheloc'h ar preveudiou, n'eo ket ar memes sell pe ar memes talvoudegezh àr an holl yezhoù. Petra a chañch neuze ? Perak mirout implij ur yezh en darvoud-mañ-darvoud pe get an dudenn-mañ-dudenn hepken ?

III. Peseurt sell àr peseurt yezh

Talvoudegezhioù dishañval a vez roet d'ar yezh-mañ-yezh. Un distok bras a zo, èl-just, etre ar yezhoù brasniver hag ar yezhoù minorel. Abegoù fetis ha pennabegoù difetisoc'h 'zo 'barzh ar jeu : an arveregezh, ar lorc'hañs pe an afekt, miret ur liamm get ur sevenadur. Statud ur yezh a levezon he skeudenn, anat eo. An arvesterion o deus en o spered, soñjoù resis a-walc'h a beseurt skeudenn he deus ar yezh-mañ-yezh hag he c'homzerion. Ar skeudennoù-se o deus emdroet, memestra, tamm-ha-tamm, a rummad da rummad ha variezonoùigoù dishañval a vez gwelet get ar leurenourion yaouankañ. D'ar leurenourion da zibab, neuze, harpiñ doc'h ar skeudenn faltaziet-mañ é vonet pelloc'h er flemmdresadenn pe c'hoari get ar rakvarnioù, o zorriñ soutil ha klask cheñch penn d'ar vazh.

III.1. Ar yezhoù brasniver

Ar yezhoù brasniver pe ar yezhoù mestr a vo studiet er lodennig-mañ. Ar galleg a vo, èl-just, ar yezh brasniver mestroniet get an holl, en darvoud-mañ. Mes komzet e vo, ivez, ag ar saozneg, an alamaneg... Liammet e vez ar yezhoù brasniver, d'an aliesañ, doc'h tudennoù a zo e penn ar skeul sokial. Tudennoù o deus galloud, lorc'hañs, arc'hant. Tudennoù desket a zispak razh o gouiziegezh. Tudennoù o deus ur sevenadur uhel diazezet àr ur seurt c'hlaselezh. Tudennoù disprizus, randonus ; da lâret eo tudennoù fallakr. Tudennoù a blij d'an arvesterion kasaat. Digoll goapaus ar re wasket. Mes n'int ket tout hañval, unanig bennak anezhe a ouia ur yezh vras hag ur yezh vinorel hag o deus roll un hanterour hag ur skeudenn dedennus.

III.1.1. Skeudenn

III.1.1.1. Yezh ar galloud, yezh ar bleuñv ag an dud

« Chers amis de Portsall, du Finistère, des Côtes d'Armor, de Bretagne... Ce soir, je suis fier de participer à cette fête d'abord de l'amitié, n'est-ce pas cher Alphonse et cher Charles ? Charles ? Et chers amis du Finistère et des Côtes d'Armor. Cette fête de l'amitié mais aussi du souvenir et de la solidarité. Je retiens deux messages : solidarité dans l'adversité, confiance en la justice. Merci de nous avoir livré ce soir ce message et merci à vous tous et à vous toutes. Vive la France ! » a lâret an

aotrou ministr 'barzh an *Amoko 2*¹¹⁷. Ugent vlez 'zo abaoe peñse an Amoco Cadiz àr aodoù Breizh. Ar fest a zo bet aozet get an aotrou maer en deus c'hoant da lidiñ an 20vet deiz-ha-blez. Mes ne vez ket klevet prezeg ar ministr a-bezh kar tud ar barrez a zo é kanal *Bro gozh ma zadoù*¹¹⁸ a vouezh-uhel Ar laz-kaniñ a ra muioc'h a drouz aveit ar ministr hag a c'holo e gomzoù. Un doare da ziskouez, sur-walc'h, diskouez d'ar pennoù bras (ministr, prefed...) ne reont ket foutr ag ar pezh e lâr kannadourion ar Stad. Komzoù brav aveit lâret netra. Tud helavar ha ne ouiont ket da betra e komzont. Bevet o deus an darvoudoù a-bell. Tud koutant ha brasonius. Sur ag o divizoù savet mat. Diskalonek ha prederiet da zimeziñ an dour hag an tan. Komz a gengred, ag eñvorenn mes ma c'hoarvezehe en-dro ? Aze eh int, ar pennoù bras, aveit en em veuliñ, en em foeñviñ « Vive la France ! »...

Pouezet e vez àr an arouezenn-mañ. Taolennet int, alies-tre, èl tudennoù na reont ket a van get ag an traoù n'int ket berniet gete. Faota ket gober re a drouz. Pa vez komzet a peñse eoullistr an Erika 'barzh *Al labous hag ar pesketour*¹¹⁹ e krog ar pezh-c'hoari get un tennad a geloù èl ma vize bet skignet àr ar radio e-penn-kentañ ar gwalleur : « Le pétrolier Erika a été pris dans une grande tempête , au large de Dunkerque, alors qu'il se dirigeait vers l'Italie. Il s'est brisé en deux au large de Penmarc'h. Vingt-six marins ont été sauvés. Il y a 28 000 tonnes de fioul à bord. Entre 1500 et 7000 tonnes sont déjà sorties du navire. Il n'y a aucun danger, rassure le préfet maritime, qui vient de déclencher le plan Polmar ». Resister an titouroù a lak an arvesterion da c'hoarzhin glas : « Entre 1500 et 7000 tonnes sont déjà sorties du navire » hag arabat bout ankeniet hrevez ar prefed a zistign, memestra, ar plan Polmar.

Daomp en-dro get an *Amoko 2*¹²⁰, get Ar Vro Bagan. Senenn prosez an Amoco a zo dedennus-bras aveit studial ar liamm etre yezh ha galloud. Amañ e vez c'hoariet etre galleg, saozneg ha brezhoneg. « E Chicago emaoen en em gavet e 1978 ». Krogiñ a ra get ur sonenn a c'hellehamp kavout en ur western spaghetti bennak. Erru a ra ar barner. Dic'hizet eo èl ur seurt shérif get un tok cowboy hag ar sterenn peget doc'h e roched, a-c'haoliad àr un dañvad, treuzwelus àr ar leurenn mes klevet e vez memestra e vegeliadennoù :

Ar barner - Je sais que vous avez fait un très long voyage mais je suis sûr que vous serez satisfait de la justice américaine.

An aotrou maer hag ar peurrest a strollad ar Vretoned, *àr an daouilin* – Ya, Breizhiz dister, hon eus fiziañs ennoc'h.

Monet a ra àr-wel, àr ar leurenn, skipailh avokaded an armatour, kompagnunezh ar petrol.

117 *Amoko 2. Op. Cit.*

118 *Bro gozh ma zadoù*, Taldir Jaffrennoù, 1898.

119 *Al labous hag ar pesketour. Op. Cit.*

120 *Amoko 2. Op. Cit.*

An holl gwisket get trench coat hir ha tokoù feltr a zamguzh o zremmoù., Ur seurt mafia, skeudoù gourdrouzus, a erru àr ar leurenn, àr sonerezh film Le Parrain¹²¹. Lod get armoù poentet àr ar Vreizhiz

Ar barner, a dreuz ar leurenn etre an daou strollad enebour. Sevel a ra e vrec'h – Je déclare la séance open !

Un avokad amerikan – J'assigne le chantier espagnol qui a construit l'Amoco. J'assigne le remorqueur allemand qui n'a pas su le sauver. J'assigne l'État français qui n'a pas su sauvegarder ses côtes. [...] Voilà les véritables coupables !

[...]

Kablus tud an Amoko hrevez ar barner. Laouen eo ar Vretoned. Ne bad ket pell...

Ar barner – Je ne paie que sur factures !

Ar Vretoned, é kanal – Setu ar faturennoù !

Evit an ostilhoù, evit an ostilhoù,

Hag evit an aochoù, hag evit an aochoù,

Evit an trakterien, evit an trakterien,

Evit an tourterien, evit an tourterien,

Evit an tevinier, evit an tevinier,

Ar « préjudice écologique », ar « préjudice écologique »,

Hag an « atteinte » deus an « image de marque » deus ar « v/Bretagne », Hag an « atteinte » deus an « image de marque » deus ar « v/Bretagne ».

Ar barner, é kanal - Et vous avez agis.

Ar Vretoned, é kanal – Et nous avons agis.

Ar barner, é kanal – Comme un automobiliste.

Ar Vretoned, é kanal – Comme un automobiliste.

Ar barner, é kanal – Qui aurait eu un a...

Ar Vretoned, é kanal – Qui aurait eu un a...

Ar barner, é kanal – Un accident de charrette.

Ar Vretoned, é kanal – Un accident de cha... rrette ?

Ar barner, fuloret – Yeah, de charrette ! Et qui voudrait une Cadillac à la place !

Skipailh an avokaded amerikan, é kanal – Et vous l'avez dans le baba baba doubidouwoua !

Ar maer – Lâvar 'ta deomp-ni : gangster pe incorruptible ?

Ar barner, fuloret, ober a ra biz d'ar maer – Et estimez-vous heureux que je ne vous fasse pas payer le pétrole que vous avez ramassé avec vos tonnes à lisier.

¹²¹ *Le Parrain*, Francis Ford Coppola, 1972.

Skipailh an avokaded amerikan, *ec'h ober bisk d'ar Vretoned é trezveziñ ur garotezenn a vez kignet* - Gnin gnin-gnin-gnin gnin !

Ar barner – Now, the decision !

[...]

Ar ministr – Six cent millions de dollars, parfait. [...] C'est la part de l'État français.

Ar maer – Penaos ? Ar Vretoned oc'h ober al labour hag ar gouarnamant a rastell an arc'hant ?

Merc'h an armatour, *é hopal ar Vretoned get un minc'hoarzh bras* – Ouh ouh !

Ar Vretoned, *é reskont à ar memes ton* – Ouh Ouh !

Merc'h an armatour – Je fais appel !

Setu ur skouer a-feson aveit skeudenniñ tudennoù liammet get ar galloud. Tudennoù krafek, dizonest, emgar. Emgann David ha Goliath. Ur strollad tud wan, ar Vretoned, a-enep un hamboud mestr ha galloudus, an embregerezhioù liesvroadel. Emgannoù a seblantehe kollet en e-raok memes e c'hoarvez trec'h ar re wasket, ur wezh an amzer.

Ur skouer arall ag ar wask, an dominasion a zo 'barzh *39-45 Brezel e Bro-Leon*¹²² get Ar Vro Bagan, c'hoazh. Carl Gernstein, an ofiser, a zo un dudenn lorc'hus ha galloudus. An Alamand galloudusañ staliet e Plougerne. Diuntuek ha diblegus e chom berped pa vez lakaet e gefridi en arvar. Lorc'h ennañ d'en em reiñ d'ar bobl alaman. Sur eo a reizhegezh ha brasoni raktres ar Reich : « J'ai prêté serment devant Dieu, le serment sacré d'obéir en tout à Adolphe Hitler, führer du Reich et du peuple allemand. Je suis prêt à donner ma vie pour respecter ce serment. ». Truez en deus aveit ar bobl digablus mes dispriz ha dismegañs ivez : « La lâcheté de tous les jours, petits besogneux, ne se posant pas de questions, toujours à mi-hauteur. ».

'Barzh *Fêtes et légendes de Kerjean*¹²³ get Ar Vro Bagan, un abadenn a oa bet aozet e 1990 aveit kontiñ amzer paseet lorc'hus ar c'hastell, e vez komzet a huñvreoù gloer ha meurdez an noblañs :

Hamon – Vois-tu mon neveu Louis, cette fortune que j'ai lentement amassé, tu l'utiliseras à bâtir Kerjean. Un château tel que les plus puissants n'en puissent égaler la magnificence.

Louis – Un pareil dessein, n'est-il point entaché d'orgueil, mon oncle ?

Hamon – Orgueil ? Enrichir le patrimoine artistique de notre pays ? Dieu nous pardonnera ce petit péché. [...] Aujourd'hui, tout rentre dans l'ordre. En 1536, le roi François Ier a autorisé la reconstruction du manoir ruiné. Une fois le château construit, notre noblesse sera indiscutable. [...] Ayons de l'audace !

Ur liamm anat a zo amañ get mestroniñ hag implij ar galleg, get ur live yezh uhel ha renkad

122 *39-45 Brezel e Bro-Leon. Op. Cit.*

123 *Fêtes et légendes de Kerjean*, Ar Vro Bagan, 1990. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

sokial uhel an tudennoù. C'hoant en deus bout pinvidikoc'h ha brudetoc'h c'hoazh : « Un château tel que les plus puissants n'en puissent égaler la magnificence. » pe « Notre noblesse sera indiscutable. ». Bout galloudusoc'h e-touez ar re c'halloudusañ. Da lâret eo diskouez d'ar re arall eo ur familh pouezus, galloudus, pinvidik. Tud o deus levezon, a zigaso brud vad da dud : « Enrichir le patrimoine artistique de notre pays ». C'hoant en deus Hamon Barbier sevel e gein ha donet da vout un aotrou.

Taolennet e vezont ivez èl tud feneant, n'int ket digourdi ha dic'houest d'ober traoù 'zo o-unan hep sikour an dud vunut. Ur senenn farsus a zo 'barzh *Ma c'helljen me kanañ laouen*¹²⁴ :

Un aotrou – Salud deoc'h tudoù ha trugarez da vezañ deut d'ar gouel graet evit lidañ ar vro nevez-savet. Gwelout a ran an aotrou K. en hon touez. An Aotrou K. eo en deus kaset al labour-kaer-mañ da benn. Trugarez bras deoc'h Aotrou K., ur brezegenn a reoc'h ?

Aotrou K – Digarezit ac'hanon 'm eus ket skrivet netra.

An holl – O, Aotrou K. !

Aotrou K. - Re wir ! Va sekretourez a oa klañv.

Diaes krediñ en deus kaset ar "labour-kaer-mañ da benn" e-unan pa n'eo ket gouest da skriviñ ur brezegennig e-unan hep sikour e sekretourez

III.1.1.2. Yezh ar vro pe yezh an estrañjourion

Divroidi, touristed, alouberion... Meur a skouer a zo aveit skeudenniñ an estrañjourion. N'eo ket, èl-just, ar memes sell àr pep hani. N'eo ket taolennet hañval an tudennoù, kennebeut arall.

'Barzh *Eden Bouyabes*¹²⁵, get Teatr Piba, e tremen an istoer en ur c'hamp repuidi. Ur senenn a ziskouez penaos e vez disprizet ar minorelezhioù get ar gouarnamantoù galloudusañ, penaos e vez graet ar lu gete pa vezont degemeret. Ar broioù a zegemer anezhe a zo, èl-just, broioù ar yezhoù brasniver. Skouer an akt 1, senenn 3 :

Ar bodad degemer – Dre beleh oh deuet ?

Dre an aod pe dre ar mor ?

Peur c'hwi kuitaet ?

Ket gwelet arceherien, griped, policia, poulets, poulaga ?

Ket klevet chas ?

124 *Ma c'helljen me kanañ laouen. Op. Cit.*

125 *Eden Bouyabes. Op. Cit.*

C'hwi kartenn identelez ? Paperiou ? Papiers ? Papir ? ID card ?

Brezel ?

Mizer ?

Skoillou ?

Politikel...

Pe ekonomikel ?

Touristed ? A a a.

Da veg !

Documentos de identidad ?

Documentelore de identitate ?

Nhân dang vản bản

Ching chong vhang chuang... a a...

Da veg !

Ne jom plas ebed ken. Kit pelloh !

Leun eo !

N'it ket !

Degemer mad !

Flêr 'zo ganto ! [...]

Diskouez en ur mod kriz na pezh start eo d'an enbroidi kuitaat o broioù a-gaoz d'ar « Brezel ? Mizer ? Skoilloù ? Politikel... Pe ekonomikel ? » ha bout degemeret e mod-se. N'eus anv erbet amañ, n'eus den resis. Komzet e vez ag un tolpad tud. Èl ma vize an enbroidi niverennoù hepken àr ur roll hir. Enbroidi èl tud anc'hoantadus, degemeret rekin, rediet broioù ar c'hôrnog get pouez dereadegezh ha bevezañs ar gwirioù mab-den : « Degemer mad ! Flêr 'zo ganto ! [...] ». Gwelet e vez na pezh disprizus eo ar bodad degemer. Penaos e ra goap doc'h an estrañjourion : « Flêr 'zo ganto ! », « Touristed ? A a a. », « Ching chong vhang chuang... a a... »... Ar bodad degemer a zo amañ un unvezh dizremm, un ensavadur a servij ar galloud politikel. E dibab un anv-stroll « bodad degemer » e vez dibersonel, n'eo ket mui denel. Skeudenniñ a ra un ensavadur.

Amañ e vez c'hoariet get meur a yezh dishañval, yezhoù gaopaet, yezhoù marmouzet : « Documentos de identidad ? Documentelore de identitate ? Nhân dang vản bản. Ching chong vhang chuang... a a... ». Da lâret eo, ne dalv netra yezhoù ar repuidi kar n'o deus ket talvoudegezh erbet an dud-se. Perak gober strivoù aveit o c'hompren ? C'hoariet e vez get ur live yezh izel ha frazennadur simpl : « c'hwi kartenn identelez ? », « Ket klevet chas ? », « Ket gwelet arceherien, griped, policia, poulets, poulaga ? »... Èl pa vident tud sot, dic'houest da gompren. Hag a-benn ar fin ne vez ket selaouet o reskontoù : « Da veg ! ». Ar bodad degemer a ra get ar yezh brasniver mes

rediet eo da dremen dre ar yezhoù arall aveit kas àr-dro an embroidi. Testeniñ a ra a fiziañs ha doujamant ar bodad degemer a oui mat eo mestr àr pep tra er c'hamp ha droed o deus d'o c'has er-maez : « Ne jom plas ebed ken. Kit pelloh ! Leun eo ! N'it ket ! ».

An tu kontrol a vez gwelet 'barzh *Ar roue Ubu*¹²⁶ (arvest IV, diviz IV). Krog eo an emgann etre an Tad Ubu, e soudarded hag ar lu rusian :

Ur ofiser rusian – En garde, Majesté !

Tad Ubu – Dal, te ! Oh ! Aiou ! Alato memestra. Ah, pardon, Aotrou, laoskit ac'hanon trankil.

O ! N'am eus ket graet espres.

Get an ofiser rusian e vez komzet galleg aveit displeg d'an arvesterion int an estrañjourion. Unan ag an ofiserion rusian en doa lâret, un tamm uheloc'h, en destenn e oa daet amañ : « Evit Doue hag ar Csar » (arvest IV, diviz 4) ! Diskouez ivez int ar re c'halloudusañ ec'h implij ur yezh brasniver kar an Tad Ubu a za doc'h o c'hiz é reskont eñ-ivez e yezh an alouber : « Ah, pardon [...] ». O gervel a ra memes : « Aotrou », sin a zoujañs. Kompren a ra buan a-walc'h Ubu int oc'hpenn dezhañ. An Tad Ubu en deus aon dirak a nerzh hag ar c'hreñvder skeudennet gete, èl ur bugel 'dize graet ur sotoni bennak : « laoskit ac'hanon trankil. O ! N'am eus ket graet espres. ». Dismantr tudenn an Tad Ubu a zo ur farvell lu ha tarodet get an c'hoant arc'hant hag an c'hoant galloud.

'Barzh *Merc'h an eog*¹²⁷ eh eus ur prantad dedennus-bras bras e-keñver ar liesyezhegezh. Mair a zo distroet e Kembre, get he dousig Loeiza a zo brezhonegerez, aveit obidoù he moereb. Er senenn-mañ emañ familh Mair, Mair ha Loeiza doc'h taol. Diskouez a ra d'an arvesterion nag a ziaezamantoù 'zo aveit en em gompren ha lakaat da genveññ meur a yezh en un diviz, dreist-holl yezhoù brasniver ha yezhoù minorel. An akt 1, senenn 1, a zibun e Bro-Gembre, e ti familh Mair. Mair, he mamm, lesanvet Mam, Loeiza, dousig Mair hag an eontr Gwyllim a zo doc'h taol. Mam a zo é servij ur banne te da Loeiza. Goulenn a ra get ar re arall :

Mam - J'ai une question à poser à Loeiza. Loeiza saura peut-être nous dire pourquoi on appelle les rats les « souris françaises » ?

Loeiza a sav he fenn é klevet hec'h anv-bihan. Lan he beg. Lonkañ a ra ur lommig te.

Mair - Graet e vez « logod gall » eus ar razhed e Kembraeg.

Mam, *e saozneg* - C'est curieux, non ?

Loeiza - Kurius eo ? Ma... fentus eo !

126 *Ubu Roue. Op. Cit.*

127 *Merc'h an eog. Op. Cit.*

Mam, *da Loeiza* - Un peu de... « gâteau » (*e galleg*), Loeiza ?

Loeiza, *a glask respont e kembraeg* - Oui ? *Kemer a ra un tamm gwastell, e vlaziñ a ra* -
Mmm. Délicieux. Merci.

Mam - “Gâteau“ ma sœur.

Mousc'hoarzhin a reont an eil d'eben.

E Kembre emaint. Komzet e vez e galleg, d'ar muiañ, get ar gembraegerion. Ur finesa leurrenniñ kentañ : tremen dre ar galleg rak an arvesterion ne ouïont ket kembraeg, mes dreist-holl aveit mirout dizomach brezhoneg Loeiza ha Mair ha kenderc'hel d'e implij. An eil finesa leurrenniñ a zo farsusoc'h c'hoazh pa estlamm Mam, e saozneg : « C'est curieux, non ? ». Tremen dre ar saozneg, ar yezh etrebroadel, ar yezh mestr e Breizh-Veur, ar referañs aveit en em gompren get an holl. Mair a gomz an teir yezh (galleg/kembraeg, brezhoneg ha saozneg) a ra ar jubennourez, an droerez pa vez ezhomm. Kenderc'hel a ra an eskemm :

Mam - Encore du gâteau, Loeiza ?

Loeiza - Merci ! C'est délicieux !

Mam - Délicieux ! (*Ndt : C'est le même mot en gallois et en breton*) Bien, on arrivera bien à se comprendre avant que vous ne repartiez en Bretagne.

Loeiza ne comprend pas et regarde Mair.

Mair, *é treiñ aveit Loeiza* - An holl a vo gouest da gompren an eil egile ‘raok ma ‘z aimp kuit.

Loeiza, *é komz da v/Mam* - Un hevelep bro a bep tu d'ur mor bihan. (*Ndt : Pays se dit BRO en breton et en gallois*)

Mair, *é treiñ da v/Mam* - Un pays identique, des deux côtés d'une petite mer.

Mam, *da v/Mair* - « Bro », ça veut dire aussi pays, c'est ça ?

Mair - Oui.

Gwilym - A l'entendre, c'est pas tout à fait évident.

Mair - C'est parce que l'oreille doit s'accoutumer, il faut oublier son anglais.

An holl a ra strivoù aveit en em gompren, dreist-holl Mam ha Loeiza. An div blac'h-se a zo abouez ha liammet a-dost get an dudenn pennañ : Mair. Gwilym a seblant amlavaroc'h, disfisoc'h. Liammet eo get e emzalc'h kroz. Ar senenn-mañ a skeudenn mat petra eo buhez Mair a vev etre meur a sevenadur, meur a yezh. An div yezh pouezusañ a zo memestra ar brezhoneg hag ar c'hembraeg. Ar galleg pe ar saozneg a zo un tammig ret pa n'eo ket mui posubl en em gompren get

unan ag an div yezh vinorel. Ne gomz ket brezhoneg Mam hag eontr Gwilym. Ne gomz ket kembraeg Loeiza.

Ar pezh a zo dedennus memestra : graet e vez ur c'henstur etre an div yezh vinorel. Diskouez hag addegas o deus an div yezh-se un istoer kumun, ur vammenn hañval da soñj d'an arvesterion. Div skouer fetis a zo : get ar ger « délicieux » hag e vez skrivet à an destenn « (*Ndt : C'est le même mot en gallois et en breton*) » ha get ar ger « Bro », « (*Ndt : Pays se dit Bro en breton et en gallois*) ». Un troatad fri d'ar yezhoù brasniver pa oc'hpenn Mam : « Bien, on arrivera bien à se comprendre avant que vous ne repartiez en Bretagne. ». Da lâret eo, dre forzh kavout kement a hañvalidigezhioù etre an div yezh vinorel ne vo ket mui ezhomm ag ar saozneg. Loeiza a gendalc'h er memes tu é lâret : « Un hevelep bro a bep tu d'ur mor bihan. ». Ur c'heñveriadur arall a zo amañ etre o div bobl, o div vro ha, marse ivez, degouezh o yezhoù.

Chom a ra un tammig luziet memestra hag eontr Gwilym a zo goapaus, gober a ra goap doc'h distagadur Loeiza : « A l'entendre, c'est pas tout à fait évident. ». Gober goap doc'h taol-mouezh saozneg ar c'hallegerion. Diskouez an dishañvalduriòù distagadur a zo etre saozneg, brezhoneg ha kembraeg. Ha Mair a echu get : « C'est parce que l'oreille doit s'accoutumer, il faut oublier son anglais. ».

III.1.1.3. Yezh ar speredoù uhel, yezh an dud desket

Krogamp get skouer ar latin a zo ur referañs klasel mestroniet, d'an aliesañ, get ur rummad tudennoù resis. Ar latin a zo, 'barzh speredoù an dud, yezh ar sevenadur henamzerel, liammet get prederouriezh ha lennegezh ar vistri bras. Ur c'hultur liammet ivez get ar relijion hag ar skridoù santel, buhez ar sent... Da lâret eo ur c'hultur uhel n'eo ket doc'h entent n'eus forzh piv. Mestroniet eo ar latin get tudennoù liammet get ar galloud dre vras : roueed ha rouanezed, nobled, tud an iliz... Tudennoù o deus ezhomm ha c'hoant diskouez d'ar re arall int dreistordinal, uheloc'h aveit an dud vunut. Mestroniñ ur yezh brasniver a ro dezhe ur galloud oc'hpenn : hani ar ouiziegezh. Ha, ne dremenont ket hep he dispakiñ d'an aliesañ posubl.

'Barzh *Ubu Roue*¹²⁸ get Ar Vro Bagan eh eus skouerioù niverus ag implij ar latin get tudennoù o deus ar galloud politikel ha peurgetket an Tad Ubu, just-walc'h (arvest IV, diviz 6). Daoust ha ken desket e oa an tad Ubu. Marse eo un doare da ober goap doc'h ar re-se a ra gant brizhlatin evit brabañsal ? Emañ Cotice, Pile hag an Tad Ubu en ur c'hev. Un arzh a za e-barzh ar c'hev. Aon o deus da vout debret get an arzh. Cotive ha Pile a glask hag a lazh an arzh a-benn ar fin. Ubu a zo é pateriñ :

Tad Ubu – Sanctificetur nomen tuum.

Cotice – Foerer divalav !

¹²⁸ *Ubu roue. Op. Cit.*

Pile – Ah ! Lammat a ra din. O ! Salver ar bed, savetaït ac'hanon, marv oun.

Cotice – Gellet 'm eus gloazañ anezhañ.

Pile – Hourra ! O koll e wad anezhañ.

Youc'hal 'ra an arzh gant ar boan, Cotice ha Pile gant ar bec'h... Ubu o pateriñ atav.

Cotice – Krog mat ennañ ma pakin va « mell-dourn-tarzhus ».

Tad Ubu – Panem nostrum quotidianum da nobis hodie.

Pile – Emañ dit 'benn ar fin ? Me ne badan ket ken.

Tad ubu – Sicut et nos dimittimus debitoribus nostris.

Cotice – Emañ din !

Un tarzh ; marv an arzh.

Pile ha Cotice – VIKTOR !

Tad Ubu – Sed libera nos a malo. Amen. Daoust ha marv mat ? Ma c'hellin diskenn diwar ar roc'h.

Pile, *gant fae* – Diskennit ma keroc'h.

Tad Ubu - Ma z'oc'h laouen o vezañ bev atav ha da c'hellout bale adarre war erc'h Lituania ez eo a-drugarez da vertuz uhel-meurbet mestr ar finañoù hag en deus poaniet, bec'hiet, youc'het a-bouez penn evit dibunañ betek mougañ paterioù ha pedennoù evit ho salut. C'hoariet en deus ken kalonek gant kleze speredel ar bedenn evel m'ho peus c'hwi c'hoariet gant kleze douarel mell-dourn-tarzhus ar Palotin Cotice amañ prezantamant. Brasoc'h devouamant hon eus diskouezet c'hoazh o pignat war ur roc'h uhel-kenañ evit ma yafe buanoc'h a-se hor pedennoù betek an neñv.

Pile – Spontus eo klevet kement-se !

Er senenn-mañ e leusk an Tad Ubu, Cotice ha Pile d'en em zibab get an arzh. Lach hag emgar e vez Ubu, èl kustum. Chom a ra, e surentez, àr ur roc'h uhel-tre. D'an daou arall da zirouestliñ kudenn an arzh. Ne gemero riskl erbet an Tad Ubu. Ne c'hell ket bout lakaet en arvar, un den èl-se, a zo penn-bras ar vro. D'an dud vunut d'en em aberzhiñ. Ur flemmigan a zo, èl-just, a-ziàr an holl roueed, pennoù bras ag ar Stad a choaz digoriñ ar brezel mes hep en em ganniñ o-unan, tud a gemer divizoù mes ne vezont ket lakaet e pleustr gete james. Sevel a ra ar fulor get Cotice ha Pile : « Foerer divalav ! », « Spontus eo klevet kement-se ! »... Mes ur louarn ampart eo an Tad Ubu a glask sachañ an dour àr e brad. Displegiñ a ra, hep mezh, da b/Pile ha Cotice int bev c'hoazh a-drugarez dezhañ ha chañs-bras o deus « da c'hellout bale adarre war erc'h Lituania ». Hep « vertuz uhel-meurbet mestr ar finañoù hag en deus poaniet, bec'hiet, youc'het a-bouez penn evit dibunañ betek mougañ paterioù ha pedennoù evit ho salut. » petra a vize c'hoarvezet dezhe ? Komz a « g/ kleze speredel ar bedenn » aveit komz a wir doueel ar roue a zo an hanterour anvet get Doue aveit eskemm getañ. Mes komz a « g/ kleze douarel mell-dourn-tarzhus » aveit degas koun ag an trevelloù izel goulennet

get ar bobl. Implijet e vez trede gour an unander get an Tad Ubu aveit komz diâr e benn hag er fin e ya memes get gour kentañ ar liester : « Brasoc'h devouamant hon eus diskouezet c'hoazh o pignat war ur roc'h uhel-kenañ evit ma yafe buanoc'h a-se hor pedennoù betek an neñv. ». Da lâret eo eo bet graet ar brasañ labour get an Tad Ubu, memestra, hag arabat d'an daou arall ankouaat an dra-se !

Pelloc'h, en arvest V, diviz 1 emañ an Tad ubu é kousket. An noz eo. Donet a ra ar Vamm Ubu er c'hev. Tec'het eo kuit ag ar palez. Ar Boloniz àr he lec'h aveit he lazhiñ. N'he deus ket gwelet an Tad Ubu. Lâret a ra sekredoù dre-guzh d'an arvesterion : e istoer karantez get ar Palotin Giron, penaos he deus laeret argant get he fried, he « folichinel » tev... Klevet a ra an Tad Ubu pep tra. Un tabut a grog etreze :

Tad Ubu, *o tihuniñ tamm-ha-tamm* - Pakit ar Vamm, Ubu ! Troc'hit he diskouarn outi !

[...]

Mamm Ubu, *outi he unan* – Greomp hor mat eus ar stad m'emañ hag eus an noz, lakaomp anezhañ da grediñ en ur weledigezh dreist-naturel ha lakaomp anezhañ da brometiñ e pardono din bezañ laeret anezhañ.

Tad Ubu – Dre Sant Anton, unan bennak zo o komz. Jambedieu. Ma vezit krouget !

Mamm Ubu, *kreñv he mouezh* – Ya, Aotrou Ubu, emær o komz, gwir eo. Se a lavar trompilh an arc'hael Gabriel hag a zle tennañ ar re varv diouzh al ludu hag ar boultrenn ziwezhañ. Klevit e vouezh c'harv. Mouezh Sant Gabriel eo ha ne ro nemet kuzulioù mat.

Tad Ubu – A zo gwir moarvat.

Mamm Ubu – Chomit peoc'h-c'hwi pe mut e chomin-me hag echu pelloc'h gant ho « jiborne ».

Tad Ubu – A vajidouilh ! Reiñ a ran peoc'h, ger ebet ken na lârin. Kendalc'hit, Itron an Aparision !

[...]

Gober a ra ar Vamm Ubu bruderezh vat aveiti : « ur vaouez amiab », « Gwreg dilisius hag adorab, n'eus na si na tech na abeg enni », « ne vez ket o c'hoari gant gwazed all », « Gweneg ebet ne ya ganti »...

Mamm Ubu – Ne chom nemet un dra ganeoc'h d'ober evit bezañ pardonet.

Tad Ubu – Peseurt tra eo ? Prest on da vezañ ur sant. Un eskob a fell fin bezañ ha kaout un anv war an almanak.

Mamm Ubu – Neuze eo ret deoc'h pardoniñ d'ar Vamm Ubu da vezañ laeret ur gweneg bennak diganeoc'h.

Mes domaj eo aveiti kar emañ an heol é sevel.

Tad Ubu – Laerezh va arc'hant a rae va gwreg, kontant-bras 'on ouzh e c'houzout. Gwir bater eo

neuze ! Omnis a Deo scientia, da lavaret eo Omnis : Holl, a Deo, ar skiant : scientia, a zeu eus Doue. Sell 'ta, Itron an Aparision ne lavar grik ebet ken.

A-drugarez da sklêrijenn Doue, pe simpl-ha-simpl, a-drugarez da c'houlou an heol, eo bet digouezhet ar wirionez get an Tad Ubu a lâz sur dezhañ : « Omnis a Deo scientia ». E wreg e oa ha n'oa ket « Itron an Aparision ». Ar Vamm Ubu he doa profitet ag an deñvalijenn aveit treiñ ar c'hrapouezhenn. Graet kazeg geti !

Ur skouer arall ag implij ar latin a zo 'barzh *Gwerzenn ar vezhinerien*¹²⁹, get Ar Vro Bagan ivez. Liammet eo, ur wezh oc'hpenn, get ar relijion.

Klevet e vez latin e-pad pardon Sant-Mikael, rhevez an destenn ha pardon Sant-Egarec rhevez an enrolladenn video. Son kloc'h an iliz. Kanet e vez get ar brosesion kantik *Rouanez karet d'an Arvor* a zo bet adskrivet e brezhoneg « O Sant-Egarec hon patrom... amañ e Kerlouan ». Prezegenn ar person a zo e latin ha bennigiñ a ra ar mor hag ar bigi. Ar person a zo plom àr ur roc'h. Sellet a ra a-bell ha razh an dud aketus-bras é sellet doc'htañ, sur a dalvoudegezh, levezon ha galloud e gomzoù aveit o diwall en amzer da zonet : « *Deus cuius verbo sanctificantur omnia, benedictionem tuam effunde super creaturas istas : et praesta ut quisquis eis secundum legem et voluntatem Tuam cum gratiarum actione usus fuerit per invocationem sanctissimi nominis Tui corporis sanitatem et animae tutelam Te auctore percipiat per Christum Dominum nostrum.* ». Latin un oferenn eo. Pedenn ar *Benedictio ad Omnia* eo. Ur bedenn a vez implijet aveit bennigiñ an traoù boutin. Amañ eo bet dibabet ar latin aveit muioc'h a wirvoud ha kaout un ton lidus. Pa echu e brezegenn getañ e vez klevet youc'hadennoù joa ha levenez.

Ar galleg a c'hell bout ivez yezh ar ouiziegezh hag ur skouer a zo 'barzh *Piv ? Penaos ? Ha petra ?*¹³⁰

Ar pezh-c'hoari-mañ a zo ur gome dienn polis e-lec'h e vez klasket piv en deus lazhet « aotrou maer ur gêr vihan sioul deus Kreiz-Breizh ». Ur pezh-c'hoari mod kozh eo get lan a glichedoù : tud a barrez a zo peizanted palod, eeunek, tost amoed. Un dudenn a zo, berped, e-kreiz an itrikoù : « an Doktor Kilhog , un den misteriu » . Èl just eo dishañval-bras an doktor doc'h an tudennoù arall. Sell ur fripon. Mousc'hoarzh ur gaouiad. Un dudenn lorc'hus eo, en deus fiziañs-bras ennañ. Un den desket en deus ur vicher uhel hag a-bouez bras.

Ar medisin, ur paotr fin mes dizonest-kenañ a zo, ivez, kravek-tre. Klask a ra, kentañ ma vez posubl, sachiñ ar muiañ a argant posubl ag e glañvourion. Pa za yac'h an dud d'e wellet ez aont kuit klañvoc'h aveit e-raok get louzoù a bep seurt, emgavioù niverus arall ha faturenoù hir-abominapl.

129 *Gwerzenn ar vezhinerien*, Ar Vro Bagan, 2005. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

130 *Piv ? Penaos ? Ha petra ?*. Op. Cit.

En ur senenn e komz an Doktor Kuilhog get gwreg Albert Plouz hag e lâr dezhi he deus : « Ur c'hleñved multipolaire ». « Multipolaire » a dalvehe ur c'hleñved 'dehe abegoù niverus, efedoù lies ? Displegiñ a ra dezhi, en ur mod gwall luziet hag amsklaer-tre, perak n'e ya ket mat geti, petra eo he c'hleñved mes dreist-holl perak e kousto ker-ruz dezhi : ur louzaouerezh fonnus hag a bado hir.

An holl a zouj dezhañ memes ne vez ket komprenet pep tra a lâr. Pa douet unan bennak ag unan ag e ali e za berped da benn, an doktor Kilhog, lakaat an darvoud a-du getañ. Eñ en deus ar ouiziegezh, eñ a oui muioc'h ha gwelloc'h aveit ar re arall. Ar ouiziegezh medisinel a zo forset-mat liammet get ur yezh brasniver.

'Barzh *Ar Basion Vras*¹³¹ e vez implijet an italianeg aveit degas ag an c'hoariva 'barzh an c'hoariva. C'hoant Ar Vro Bagan get ar pezh-c'hoari-mañ a oa ivez dikouez « penaos an Arz breizhek zo bet en em vodet diwar arzoù Europa »¹³². Setu perak e c'hellamp kavout meur a zave ag ar C'homedie Dell 'Arte e Basion Vras get Ar Vro Bagan : « Pulcinella, personnage de la Comédia Dell Arte, genre théâtral né en Italie, aidée de deux servantes, prépare la scène pour le lavement des pieds. L'art breton est né de plusieurs influences à une époque d'échanges économiques et culturels. Deux Italiens ont signé le calvaire du Traon à Plougerneau. La Comédia Dell 'Arte aurait inspiré quelques scènes de calvaires. »¹³³ e c'hellamp lenn pelloc'h e levrig an abadenn. Ar senenn a implij italianeg a ziskouez hent ar groaz. Jezuz a zo poaniet é tougen ar groaz. Glac'haret eo, daoulinet, dic'houest da vonet pelloc'h. Re bounner eo ar groaz. Soudarded pinvidik ha galloudus a zo é voutiñ anezhañ aveit e rediñ da gendalc'h. Droukverzh dezhe kar ne gerzh ket. Mont a reont da gerc'hat ur pevare gwaz : « Simon de Cyrène, paysan léonard, est réquisitionné pour aider Jésus à porter sa croix. »¹³⁴. Hennezh a oa é pourmen ha n'en deus ket c'hoant kemer perzh er vaskaradenn-mañ. Rediet eo memestra ar pevare peotramant e vo « torret e fri » get ar re arall. Implij a reont o galloud hag o statud aveit e sujiñ. Klask a ra sevel ar groaz mes an tri bourev a zo é c'hoarzhin, gober a reont goap doc'htañ. Pal a re arall a zo jahiniñ Jezuz ar muiañ posubl. C'hoarzhadegoù drouk ha divizulek. N'o deus ket c'hoant sikour Jezuz hag ar paourkaezh Simon a ra strivoù e-unan e-pad ma sell an tri arall doc'h un abadenn arall a grog àr ar leurenn...Un dudiamant kriz, brutal eo hepken aveite. Hag ar c'henstur-mañ a vez skeudennet get unan ag an dremenadur niverus a vez kavet etre daou senenn a-bouez ag ar basion. « Surgit dans l'enclos un groupe de comédiens italiens, montrant une fois de plus l'interpénétration des cultures. Nous sommes en pleine renaissance et nous sommes en Europe, non plus à St Thégonnec ! »¹³⁵. Erru a ra, àr un taol, harlikined tennet ag ar

131 *Ar Basion Vras*, Ar Vro Bagan, 1991. Kavout a rahet un diveriñ er lodenn Korpus, e p. 137

132 *Ar Basion vras*, Goulc'han Kervella, 1991.

133 *Ibidem*.

134 *Ibidem*.

135 *Ibidem*.

C'homedia dell' Arte. Gwiskamantoù bolzennus get livioù gweliapl. Furlukined masklet a zo é tañsal, lammat, farsal, rodal. Get jestroù bras e kemennont a vouezh uhel : « la bella Franceschina ». Ur plac'h a zo e-kreiz get ur vinc'hoarzh vras hag amplik. Kendalc'h a reont get : « la bella franceschina », « ninina », « bufina », « la fili bustachina »... Da lâret eo penn-kentañ pozioù sonenn *la bella franceschina*, sonenn un oberour dizanv mes brudet-tre 'barzh ar C'homedia dell' Arte. Kontiñ a ra un darvoud farsus klasel : ur plac'h yaouank he deus c'hoant dimeziñ get ur paotr a blij dezhi mes n'emañ ket a-du he zad. Ha *la bella franceschina* « la souspira » é skrij, etre bourrusted ha souezh, é c'hoari betek re.

Div vaskaradenn a zo amañ : hani *La bella franceschina* ha hani sikour Jezuz. Un ober pilpous ha graet e gaou get an tri gwaz kentañ. C'hoant o deus en em ziduiñ. N'eus nameit Simon de Cyrène ha n'en deus ket komprenet e oa didalvoud gober strivoù aveit adsevel ar groaz a chomehe àr ar leur a-gaoz da strivoù kontrol an tri arall. Ne wel ket, kennebeut arall, an abadenn arall a zo é c'hoari e-tal dezhañ. Amañ e vez c'hoariet get ur « mise en abyme » : an c'hoariva 'barzh an c'hoariva. Un dra a blij kalz da c'h/Goulc'han Kervella, leurenour Ar Vro Bagan. Tremen d'un trajedi, hent ar groaz, d'ur c'homedien, *La bella Franceschina*. Ur liamm a zo ivez etre ar C'homedia Dell' Arte hag *Ar Basion Vras* a zo daou bezh-c'hoari pobl.

III.1.2. Sell o c'homzerion àr ar yezhoù minorel

III.1.2.1. Sell an drevadenourion

Paot eo an niver a skouerioù, 'barzh an c'hoariva brezhonek e-lec'h vez taolennet komzerion ar yezhoù brasniver èl trevadenourion. Da lâret eo tud lorc'hus, disprizus, dismegañsus, fallakr. Ur soñj gwashaus hag ur sell faëtis o deus e-keñver ar yezhoù minorel, o c'homzerion, o hengounioù... Liammet eo aveite get skeudenn ar blouked, tud a-ziàr-lerc'h, palod, bajaneg a zo chomet gennet pell ag an araokaat hag ar vodernelezh. Tud difeson, speredoù-berr a zo staget doc'h hengounioù ha kredennoù kozh ; traoù a ag an amzer paseet.

Charles Etchepareborde a zo unan ag an daou abadenour 'barzh *Neizheta, elle niche où la langue ?*¹³⁶. Ar pezh-c'hoari-mañ a vez graet èl un abadenn radio ha komzet e vez ag hon liamm pemdeziek get ar yezh : gwelapl pe disgwel, emskiant pe diemskiant. Daou sell dishañval a zo a-

¹³⁶ *Neizheta, elle niche où la langue ?*. Op. Cit.

ziàr ar brezhoneg etre an daou abadenour : Katell Maligorn a vehe, kentoc'h, doc'h tu ar brezhoneg, a glask, pizh-ha-pizh, adkavout hent ar yezh ha Charles Etchepareborde a vehe suspicionus hag entremar e-keñver ar brezhoneg. En ur senenn emañ é tigorin, Charles Etchepareborde, an abaden radio ha kinnig a ra tem an devezh d'ar selaouerion. Ema é klask e c'herioù, àr un ton hanter souezhet, hanter dic'hoantek ha klevet e vez mesk-ha-mesk : « Il y a 120 ans parler breton était la norme », « paradoxalement c'est peut-être aujourd'hui que la langue est la plus visible. On voit de plus en plus... euh... des panneaux... euh... bilingues à l'entrée des routes... euh... à l'entrée des villes, quelques supermarchés... euh... ont mis en place des signalétiques... euh... bilingues... Les signes extérieurs ne manquent pas. » , « A l'ouest de la Bretagne on parlerait une langue qui n'est pas le français, Katell ? »... Kement a skouerioù a ziskouez splann peseurt plas en deus ar brezhoneg aveite : Gwir eo ? E Breizh eh eus ur yezh dishañval ag ar galleg ? ; ur yezh a veze komzet bemdez, ya... mes muioc'h a gant vlez zo' ; faota ket d'ar vrezhonegerion bout direzon a-ziàr o yezh kar panneloù divyezhek a zo dija àr an hentoù, e stalioù 'zo... A-dreñv ar prezeg flemmus-se e vez displeget e oa ar brezhoneg ar yezh a veze komzet e Breizh get ar muiañ a dud n'eus pell 'zo ha sinoùigoù 'zo, èl panneloù hent a addegas ar liamm istorel-mañ da soñj an arvesterion.

Skouerioù dibosupl da niverin ha kalz krisoc'h a zo 'barzh *Ma c'helljen me kanañ laouen*¹³⁷ get Ar Vro Bagan. Alies-tre bountet betak ar pellañ posubl. Kontin a ra aloubadeg Breizh get touristed, embregerezhioù galloudus, politikerion... Penaos e vez prenet ha gwerzhet douar, tier, traoù a bep seurt mes savet ivez kazinoioù, kreizennoù nukleel ha me oui-me, gete. Penaos eo diberc'hennet ar Vretoned a bep tra o deus talvoudegezh dibriz aveite : o hengoun, o yezh, o bro, o frankiz... E raskrid ar pezh-c'hoari eh eus skrivet get Goulc'han Kervella, skrivagner ar pezh-c'hoari : « Daoust hag e c'hell chom an c'hoariva brezhoneg distag diouzh buhez hor bro hep kemerout perzh e stourm pobl Vreizh ? [...] *Ma c'helljen...* a zo ur pezh-c'hoari engouestlet penn-da-benn. Fraezh e vez diskouezet e peseurt stad emañ ar vro hag e vez gwelet pobl Vreizh o tihuniñ da c'houde un hir a gousk. Ur pezh a « bolitik-faltazi » ez eo eta. ». D'an neb a lenno !

Krogin a ra ar pezh-c'hoari get *Gwerz an dizurzhioù* : « [...] Ha trouz ebet er gêr tro-dro / 'Met hennezh, er bod-haleg / Ul labous hanter-varo / O kanañ ur werz vrezhonek. / Mallozh deoc'h-c'hwil, mondianed Kerne / P'emaoc'h dres evel gisti / O werzhañ an douar d'an arme / An douar 'gredemp oa deomp-ni. [...] ». Ur labous hanter-varo a gan ur werz vrezhonek aveit berziñ tud ar vro a betra a c'hoarvezo dezhe. Èl un devarnadenn pe un avertisamant da vondianed Kerne, ha da vondianed arall, a zo èl gisti é werzhiñ o douar. Komz a ra dezhe é kanal, pas èl forzh peseurt evn mes é kanal ur werz vrezhonek. Da lâret eo ur yezh a vez komprenet gete ha gete hepken. Ur mesaj alc'hwezhet ha subtil, hani ar gizidigezh, hani ar liamm. Komz a hengoun kanet ar Vretoned aveit

¹³⁷ *Ma c'helljen me kanañ laouen. Op. Cit.*

komz ag ar brezhoneg mes ivez ag o sevenadur dre vras. 'Barzh ar gwerzioù e vez kontet darvoudoù spontus, skrijus, trist. Komz ivez ag ar c'holl. Ma vez gwerzhet o douar e vo gwerzhet ivez o frankiz, o sevenadur, o yezh.

Ur sal gwerzh a zo lan a douristed « gwisket kran hag ardoù ganto » :

Gwerzher kentañ – Peoc'h er sal mar plij. Trugarez bras deoc'h da vezañ deut d'ar werzhidigezh-mañ. Hirio e vezo gwerzhet stal-labour Yann-Forzh-Piv ha n'eo ket deut da benn da beañ e OuelMikael... Ha da gentañ e vezo gwerzhet traoù a nebeut a dalvoudegezh : ur c'holier, ur pod-laezh, ur falc'h, ur rastell-aod, ur valizenn. Ha da gentañ setu ar c'holier, 50 lur ar c'holier.

Un douristez – O ! Se 'vo mat din d'ober ur melezour.

Gwerzher 1 – 50 lur ar melezour, ur wech...

Un den – Hennezh 'vije mat din d'ober ur gador-doull. [...]

Gwerzher 1 – Ar melezour, ur wech, div wech, teir gwech. Ha setu bremañ ur pod-laezh a servije d'an dud gwechall pa veze savet saout er vro-mañ. 50 lur ar pod-laezh.

Un douristez – Se 'vefe mat din da lakaat bleunioù.

Gwerzher 1 – 50 lur ar pod-fleur, ur wech, div wech, teir gwech [...]

Paourkaezh Yann-Forzh Piv n'en deus talvoudegezh erbet, èl vez diskouezet mat get e anv, a oa kulet get e deleoù « ha n'eo ket deut da benn da beañ e OuelMikael ». Tampir aveitañ mes gwell a se aveit an douristed 'do bremañ : ur melezour nevez, ur pod-fleur ivez... En traoù e lenner ar cheñchamant sevenadur hag ar cheñchamant yezh : ur c'holier, aveit ar loened, a zo daet da vout ur melezour, ur pod-laezh a zo daet da vout ur pod-fleur... Gwerzhet e vez « traoù a nebeut a dalvoudegezh » a goust 50 lur memestra, ur voaien da gaout argant aes kar ret eo paeñ priz ar gouezoni hag ar wirionded : « Ha setu bremañ ur pod-laezh a servije d'an dud gwechall pa veze savet saout er vro-mañ. ». Unan a ginnig un implij arall ec'h ober goap : « Hennezh 'vije mat din d'ober ur gador-doull. ». Tudenn ar gwerzher a enkorf talvoudegezh an argant. Penaos e vez lakaet an argant e renk kentañ. Ret eo gounit ar muiañ argant posubl get ar werzh-mañ. Sklaer hag aes eo da gompren aveit an arvesterion pa chañch implij an traoù a vez gwerzhet : tremen d'un implij pleustrek d'un implij kinklerez. Ma vez chañchet implij ar pod-laezh a zaio da vout ur « pod-fleur » aveit plijadur an douristed, n'eo ket ur gudenn aveit ar gwerzher keit ha ma vez gwerzhet ar pod. Dibabet e vez gwerzhiñ traoù a zo liamet get ar labour-douar, ur bed kozh get binviji giz-kozh ivez. Traoù a nebeut a dalvoudegezh aveit an douristed pinvidik a dreuzfurmo anezhe e kinkladurioù « vintage », mes get un dalvoudegezh gwall zishañval, èl-just, aveit Yann-Forzh Piv kar ma vez gwerzhet traoù a seurt-se ne chom ket mui netra dezhañ sur-walc'h.

Pelloc'h :

Gwerzher 1 - [...] Ha bremañ vo graet gwerzhidigezh an douaroù. *Dizoloet eo bet ar gartenn.* Sed amañ avat un tamm douar hag omp gwall-nec'het o klask gwerzhañ. Kaer he deus bet ar c'houarnamant ober n'eo ket deuet a-benn da lakaat tamm talvoudegezh ebet ennañ. Kaout a ra deomp evelato a vezo kavet er sal-mañ unan bennak hag en devo ar vadelezh da bremañ anezhañ evit sikour ar Vretoned. A-raok avat gwerzhañ ar pezh a chom da werzhañ hon eus graet ur studiadenn gant grafikoù diwar-benn stad ar vro.

Dont a ra an eil Gwerzher gant un daolenn. Ar Gwerzher kentañ a ra grafikoù warni.

Stad al labour-douar. D'an traoñ.

Stad ar beskerezh.

Stad ar porzhioù, ar c'henwerzh.

Stad al labouradegoù, an ijinirezh.

Stad ar mengleuzioù.

Stad ar artizanerezh.

Stad ar skolioù, an henchoù.

Stad ar re yaouank... Etrezek Pariz.

Me 'gav din eo sklaer-kenañ deoc'h bremañ e peseurt stad emañ ar vro-mañ. An tamm kentañ n'emañ ket da werzhañ. Kemeret eo bet gant... e Roazhon.

An eil Gwerzher a denn tammou kuit dre ma vezont gwerzhet.

An tamm-mañ n'emañ ket da werzhañ kennebeut. Dija eo aet gant ar « Pays de Loire »... An trede tamm a zo bet kemeret gant ar c'houarnamant d'ober ur Park Naturel el lec'h ma vezo miret un nebeut Bretoned evit diskouez penaos oa ar vro gwechall. Bro-Dreger a zo aet get an Amerikaned... Ha setu bremañ un tamm da werzhañ : douar fall, mes aodoù kaer ha peadra d'ober ur bern traoù a-hed ar mor. [...]

Piv 'do, e-touez ar re c'halloudusañ hag ar re binvidikañ, ar vadelezh da sikour ar Vretoned. N'eus, èl-just, liamm erbet get ar sikour mes get an astennerezh kar ur postiñ strategel eo : « douar fall, mes aodoù kaer ha peadra d'ober ur bern traoù a-hed ar mor. ». Ar re c'halloudusañ, an drec'hourion a ra ar ranniñ, èl ma vez graet goude ur brezel, hag a sav kartennoù nevez hrevez o flijadur hag o c'hoant. Pa vez meneget ar « Pays de Loire » e vez dija graet an disparti etre Breizh ha Bro-C'hall. Un dave eo, sur-walc'h, a bemp departamant istorel Breizh mes an c'hoant a zo diskouez e oa bet un troc'h rik get ar gouarnamant. Ma eo ken pouezus a Roazhon, o deus bet an tamm kentañ, e oa bet diverket roud an Istoer pa vez lâret bremañ, e galleg, «Pays de Loire ». Memestra get ar label gallek « Park Naturel ». An diviz a vez kemeret get kuzul ar vinistred aveit krouiñ ur « Park Naturel ». Ar label a vez renet get ar lezenn. Divizet e vez pep tra get ar Stad gall ha kenderc'hel get ar label « Park Naturel » e galleg a ziskouez mat piv en deus ar galloud. Implij ar galleg, yezh ar Stad, ar

yezh vistri aveit komz ag an darempredoù galloud. Skeudenn piv en deus ar ger diwezhañ. Un douar foaret, hrevez muzulioù ar stad, get tud un tammig gouez a zo da saveteiñ pe da sevenaat. Ur flemmigan eo pa gomz ar gouarnamant a sevel « ur Park Naturel el lec'h ma vezo miret un nebeut Bretoned diskouez penaos oa ar vro gwechall. ». Mirdi an hengounioù kozh pe park dudi aveit an douristed. Pe krisoc'h c'hoazh : gober ur liamm get ar pezh a zo bet graet, meur a wezh, a-hed ar c'hantvedoù aveit kement a vinorelezhioù : gwarezva aveit an Indianed, skolioù aveit ar samied... Parkiñ an dud en ur lec'h serret hag evezhiet mat aveit, doc'h un tu, ha doc'h un tu arall o sevenaat, o skoliñ. Un tennad aveit komz ag an akulturiñ rediet.

Setu perak n'eo souezhus lenn pelloc'h frazennoù gouennelour, lan a rakvarnioù, pa gomz touristezed ag o jav a zo aet kuit :

Touristez 2 – Te 'gav dit e teuio en-dro ?

Touristez 1 – Piv ?

Touristez 2 – Baleri, sell. Me 'ouie mat hon defe bet trubuilhoù gantañ. Ne gaven ket en doa ur penn onest.

Touristez 3 – Me 'gave en doa ur penn « breton sympatik ».

Touristez 2 – Me a gave en doa penn ur pagan.

Rakweladus e oa aveit an douristez daou : « Me 'ouie mat hon defe bet trubuilhoù gantañ. Ne gaven ket en doa ur penn onest. », « Me a gave en doa penn ur pagan. »... Ne vez ket komzet ag ar loen, èl-just, mes a-ziàr dud ar vro, ha resis, tud ar vro bagan lec'h e tremen an istoer : « Me a gave en doa penn ur pagan. ». Rakvarnioù niverus he deus an douristez daou doc'h ar Vretoned : n'int ket fiziapl, dizonest ha fallidik int... He « 'ouie mat hon defe bet trubuilhoù gantañ. ». Pa sevel a ra an douristez tri a-enep komzoù he mignonez pa lâ, e galleg : « Me 'gave en doa ur penn « breton sympatik » e vez gwelet talvoudegezh ar galleg. Taolenniñ e oa bet ur souezhadenn vat, a-benn ar fin, aveit an douristez tri monet e darempred get tud, loened ar vro. N'oa ket, ar jav-se, ken gouez ha ken grignouz aveit ma soñje. Sichant e oa, e-feson ac'hoel. Implij an droienn-mañ aveit skeudenn arbenn an douristez tri. Komz ag ar ouennelouriezh pa vez barnet tud ar vro diàr o neuz hepken.

Ur skouer dedennus arall a zo 'barzh *Merc'h an eog*¹³⁸ get Teatr Piba, en akt 1, senenn 1. Emañ é komz an eontr Gwilym get e c'hoar. Fuloret eo é klevout é c'hoar é komz galleg ha saozneg get Loeiza dousig he merc'h Mair.

Gwilym - Nom de Dieu, tu ne vas pas t'y mettre, toi aussi Mag ! On est trop vieux pour ce genre de conneries. Ça suffit pas déjà d'avoir à se coltiner cette saloperie d'anglais à la mode : 'élevé à la main', 'fumé au bois de chêne' et que sais-je encore ! Des conneries insignifiantes !

Tu savais que le jambon de Parme venait de Carmarthen, en fait ? Ce sont les Romains qui

138 *Merc'h an eog. Op. Cit.*

ont piqué leur savoir-faire aux paysans du Comté de Dyfed et ils l'ont ramené chez eux ! Et maintenant, ils nous vendent nos propres produits à prix d'or ! (*Ndt: le Dyfed est un comté rural du sud-ouest du Pays de Galles*).

Arabat ankouaat e vez komzet e galleg get ar gembraegerion er pezh-c'hoari *Merc'h an an eog*. Dibabet oa bet ar finesa leurrenniñ-mañ aveit kenderc'hel get ar brezhoneg a zo yezh vinorel bennañ an abadenn, èl hon eus displeget dija. Sell Gwilym a zo hani trevadennet àr ar saozon trevadennour : « Ça suffit pas déjà d'avoir à se coltiner cette saloperie d'anglais à la mode ». Pa glaskamp er geriadur petra a dalv « se coltiner » e c'hellamp lenn, dre-vras : dougen get poan ha diaezamant un dra bennak a zo pounner-tre, en ur mod fetis, pe gober àr-dro ur labour poanius ha displijus, en ur mod difetis. Skeudenniñ a ra mat peseurt sakrifis eo aveit Gwilym tremen dre ar saozneg. Skuizh ha fuloret-bras eo Gwilym da vout rediet da gomz saozneg a zo daet da vout « e-giz », a zo daet da vout ar yezh trec'h. N'eo ket e yezh ha n'en deus ket c'hoant d'hec'h implij. Muioc'h a fulor a za ennañ pa veneg Gwilym luganoù èl : « élevé à la main », « fumé au bois de chêne ». Graet e vez getañ un dave a labeloù a zo bet krouet get komzerion yezhoù brasniver, 'barzh embregerezhioù galloudus. Labeloù a zo, èl-just, e yezhoù brasniver, àr produioù beveziñ er supermarc'hadoù... Teknikoù koñvers implijet aveit gwarantiñ ur seurt wirionded. Gwirionded « produioù an terouer. » Ret eo paeiñ muioc'h èl-just aveit o c'haout. Priz lorc'hañs ar label. « Tu savais que le jambon de Parme venait de Carmarthen, en fait ? Ce sont les Romains qui ont piqué leur savoir-faire aux paysans du Comté de Dyfed et ils l'ont ramené chez eux ! Et maintenant, ils nous vendent nos propres produits à prix d'or ! ». An drevadennourion a zo laeron, Profitiñ a reont a binvidigezh hag atoudoù ur vro aveit en em zereñ anezhe. Mirout a reont krog àrne hag « ils nous vendent nos propres produits à prix d'or ! ». Gwilym en deus, splann eo, ar santimant bout laeret, stranet, diberc'hennet. En em lakaat a ra a-enep forzh peseurt tra a za ag ar broioù galloudusañ a zo gwelet getañ èl treuzpiaouerion.

Ret eo komz ivez ag ar ouennelouriezh ordinal e-keñver ar yezh. Gwalennadoùigoù reizhiadek, boutin-tre, alies-tre. Gouennelouriezh disgwel ha judaz. 'Barzh eil rakskrid *Privezioù publik*¹³⁹ e vez komzet a daou seurt gouennelouriezh ordinal : unan e-keñver ar yezh hag unan e-keñver ar reizh. Lec'h pennañ ar pezh-c'hoari, privezioù publik ar merc'hed, a zo a-vat get kejadenoù tud a bep seurt. En arvest 3, senenn 2, e klev Marjanik, plac'h ar c'hempenn, mouezhioù maouezed a dremen amañ.

Mouezh ur plac'h all – Nan mais foufoune tu le dis pas en breton , quand même, si ? Et tampon ? Tu dis tampon ? Mais pas celui de la douane, hein. Ah trop bien !

139 *Privezioù publik. Op. Cit.*

Èl pa vize bet gerioù a-viskoazh e yezhoù brasniver aveit komz a draoù 'zo. Komprenet e vez get prezeg ar plac'h e soñje e oa dibosupl lâret pep tra e brezhoneg. Komzoù godiser ha disprizus : « Et tampon ? Tu dis tampon ? ». Ur souezhadenn vras aveiti, ar plac'h dize bet c'hoant kaimantal e brezhoneg. Èl pa vize ret bout resis é oc'hpenniñ : « Mais pas celui de la douane, hein. » peotramant ne vize bet komprenet he farsadenn get brezhonegerion 'dize ur fent kentañ derez hepken. Komzerion yezhoù brasniver a zo tudennoù sur dezhe, sur ag o zrec'hded, sur ag o fent : « Ah trop bien ! ». Mezhekaat ar vrezhonegerion dre harzoù faltaziet o yezh, ur yezh kozh 'dize, neuze, harzoù strisoc'h aveit re ar yezhoù brasniver.

III.1.2.2. L'arroseur arrosé

Ma vez kavet skouerioù niverus-bras a drevadennourion galloudus, disprizus, laer, feneant, digalon ha kement traoù arall 'barzh *Ma c'helljen me kanañ laouen*¹⁴⁰ e vez kavet ivez ur bochad skouerioù lan a spered rebechour. Santet e vez na pezh plijadur a oa bet, sur-walc'h, skriviñ pe c'hoari frazennoù 'zo àr ar leurenn goude. Aze e vez graet al lu doc'h ar re c'halloudusañ ha gwelet e vo piv a vo an hani diwezhañ da c'hoarzhin. N'eo ket, komprenet e vez doc'htu, ar Vretoned ar re c'henaouekañ.

En ur senenn eh eus touristed get ur jav a sache ur roulotenn ha n'en deus mui c'hoant monet e-raok :

An douristed – Hu, hei, hu 'ta...

Touristez 1 – Pegen tenn eo bet ar sav.

Touristez 2 – Me 'gave din ne vijemp ket bet deuet a-benn da bignat.

Touristez 3 – Aet e vijemp war hor c'hiz d'an traoñ paneve am boa stardet mat ar rod.

Touristez 1 – Ar paour kaezh Baleri zo skuizh ivez kredapl.

Touristez 2 – Ha tomm e tle bezañ dezhañ.

Touristez 3 – Sell 'ta berv eo. Douetus emañ an derzhienn vras gantañ.

Touristez 1 – Taolomp dour warnañ ; vad a raio dezhañ.

Ar marc'h – Br... br... br... Gisti sot.

Touristez 2, *get ul levr* – Ale, deus amañ... Hei, hu, sou, a-dreñv, ho, chom, tro, kul...

Touristez 3 – Ne gompren ket pezh a leverez ?

Touristez 2 – Vasil n'eo ket memes brezhoneg a zo ganeoc'h.

Touristez 1 – Amañ emamp brav evit ober un ehan. Deomp da glask frouezh ha tokoù-tousegi.

¹⁴⁰ *Ma c'helljen me kanañ laouen. Op. Cit.*

'Toare ez eus kalz er vro-mañ.

Touristez 2 – Ya, mes dav eo reiñ da zebriñ da Valeri a-raok.

Touristez 3 – Pelec'h emañ ar c'herc'h ganit ?

Taoler a reont un dornad kerc'h d'al loen war an douar.

An douristed – Piti, piti, piti... Trawalc'h en deus bet, deomp...

[...]

Al loen – Piti, piti. Me ray piti deoc'h, gisti sot. Ar re-mañ a gav dezho on ur yar-me. Ha da belec'h int aet bremañ, ha me oc'h ober va sot amañ.

[...]

Touristez 2 – Kavet 'peus tokoù-tousegi ?

Touristez 3 – Ya, maread 'm eus kavet.

Touristez 1 – 'Barzh boestoù eo 'peus kavet anezho. Kaout a rae din 'poa kutuilhet anezho 'barzh ar gwez.

Touristez 3 – Ket. Ar re-mañ zo o tont eus Hong-Kong.

Touristez 2 – Aze eo skrivet « Pur produit breton » war ar voest ivez.

Kavet e vez meur a zigarez get an douristed aveit displegiñ perak e chom difiñv ar jav : « Pegen tenn eo bet ar sav. », « Ar paour kaezh Baleri zo skuizh ivez kredapl. », « Ha tomm e tle bezañ dezhañ. », « Ne gompren ket pezh a levez ? »... Ya paourkaezh roñse a zo skuizh-bras gete. Kemmesket e oa bet get ur yar : « Piti, piti, piti. » hag un tamm kerc'h hepken a zo bet roet dezhoñ. Klemm a reont penn-araok ha penn-adrenv ar marc'h : « Gwechall e oa start ar vuhez ivez, arat, charreat kolo pe foenn ha mont d'an aod. Met doujet e vezemp ha boued a gonsekañs hon deveze. ». N'en deus ket bet chañs get touristed dizampart get loened a glask en ur mod-implij bennak penaos gober doc'hte : « Ale, deus amañ... Hei, hu, sou, a-dreñv, ho, chom, tro, kul... ». Ha pa ne gerzh ket mat e vez sur-walc'h kar « Vasil n'eo ket memes brezhoneg a zo ganeoc'h. ». N'eo ket digourdi an douristed kennebeut arall. Dic'houest int da gavout tokoù-tousegi en natur mes loba a-walc'h aveit o freniñ 'barzh boestoù a za a Hong-Kong get merkezenniñ : « Pur produit breton ».

Un eil skouer e c'hellamp lenn pelloc'h en destenn. O paouez distreiñ emañ an douristez unan get ur votez-koed a zo bet roet dezhi get un den kozh ag ar vro. D'ar c'hallegerion da zougen ar simbol bremañ ! Ha graet e oa bet goap doc'hti :

Touristez 1 – Bez' em eus bet anezhi gant un den kozh eus ar vro. Hag ouzhpenn-se en deus desket din kanañ ha dañsal.

Touristez 3 – Diskouez deomp penaos e vez graet 'ta ; e mod-se e c'hellimp mont d'ar fest-noz emberr.

Touristez 1 – N'eo ket diaes tamm ebet. 'Peus ken met ober e giz-mañ :

Les petites Parisiennes en short

Viendront danser la gavotte

Et donneront des cacahuètes

Aux Bretons en botou-koed.

Ils ont des chapeaux ronds

Les bretons typiques

Ils ont des chapeaux ronds Vive les Bretons !

Dansons la capucine...

Chou petit caillou...

Adkavet e vez pozioù sonenn Gilles Servat : *Les bretons typiques*¹⁴¹. Ar sonenn-mañ he deus memes sujed ag ar pezh-c'hoari just-walc'h pa gan Gilles Servat : « Notre bonne vieille république / Jalouse des Américains / A fait du parc d'Armorique / Une réserve d'Armoricains [...] Voilà les touristes qui viennent / Manger des crêpes en auto / Y causeront aux indigènes / Ils sauront dire kenavo [...] ». Amañ a zo bet c'hoariet un dro louarn d'un douristez get « un den kozh eus ar vro » en deus desket dezhi dañsal ha kanal. En darvoud-mañ e vez eilpennet implij ar brezhoneg hag implij ar galleg. Ar brezhoneg a zo implijet get gallegerion, komzerion ur yezh brasniver ha pa oa bet desket d'an douristez kanal mod ar vro a zo bet graet e galleg a-drugarez da sonenn Gilles Servat. Ne gomprenont ket netra neuze ag ar pezh a ganont, an dra a zo farsusoc'h c'hoazh kar graet e vez goap doc'h te resis : « Les petites Parisiennes en short / Viendront danser la gavotte / Et donneront des cacahuètes / Aux Bretons en botou-koed. ». Graet e vez goap doc'h an douristed diseven, luet e vez an tudennoù klapez-se.

N'eo ket ar skouer nameiti ma vez c'hoariet get an digompren e-keñver ar yezh ha c'hoariet e vez diàr-goust komzerion ar yezhoù brasniver. 'Barzh an *Amoko 2*¹⁴² e kavamp mesk-ha-mesk :

Ar ministr - Chers amis de Portsall, du Finistère, des Côtes d'armor, de Bretagne... Ce soir, je suis fier de participer à cette fête d'abord de l'amitié, n'est-ce pas cher Alphonse... Et Charles...et j'en profite pour vous dire ce petit poème qu'un grand oncle a composé dans votre langue : « ma spered a zo o nijal evel eul labous...»

Diaezamantoù en deus ar prefed da zistagiñ, da lenn ar brezhoneg. C'hoant en doa gober giz ar vro, reiñ ar santimant d'ar Vretoned e oa nes dezhe. O c'homprenet en doa. Graet en doa strivoù arzel

141 *Les bretons typiques*, Gilles Servat, *La blanche hermine*, 1971.

142 *Amoko 2. Op. Cit.*

aveite, aveit tostaat ag o yezh, o spered... « ce petit poème qu'un grand oncle a composé dans votre langue ». Amañ e vez implijet ar brezhoneg aveit servij arvezioù politikel ar ministr a glaske bout tost doc'h ar bobl é komz brezhoneg. Ema é kabaliñ, klask a ra mouezhioù. Èl ma oa bet graet get ar jeneral Charlez Bro-C'hall, e Kemper, e 1969, aveit e brezegenn foran diwezhañ : « Va c'horf 'zo dalc'het / Met davedoc'h e nij va spered / 'Vel ul labous a-denn-askell, / 'Nij da gavout e vreudeur a-bell. »¹⁴³. Gwerzennoù a oa bet skrivet get e contr anvet ivez Charlez Bro-C'hall hag e anv-pluenn a oa Barz Bro-C'hall pe Charlez a Vro-C'hall. Kontrol da Charlez ar Gall a ouie, marse, dre-vras emichañs, ar pezh a gonte d'ar Vretoned e Kemper, ar ministr ne ouia ket ha ne gomprena ket netra ag ar pezh emañ é tezrevelliñ. N'int ket loba ar Vretoned a skrign dirak ar preder fromus-mañ a servij ur pal deuriet.

Un dudenn resis a vez luet, alies-tre, en *Amoko 2* : ar barner amerikan, Mc Garr.

Ar barner – Ah ! Moi aussi j'ai commandé un destroyer pendant la guerre, dans le Pacifique. Ah les Japs... ta... ta...ta...

Ar c'hazetenner – Vous étiez déjà juge ?

Ar barner – Après seulement ! Professeur de droit, avocat, professeur d'anglais, d'art oratoire... *Il s'est mis au piano*. Ah ! L'Amoko, l'affaire la plus dure de ma carrière... Mais je suis bien content d'avoir aidé mes cousins Bretons. « C'est pas ça qu'elle a voulu... » *Kana a ra e-serr c'hoari gand ar piano*.

Ar pesketaer – Sikouret ar Vretoned ! Langoun. En toull emañ da blas, n'eo ket amañ eo.

A.Abaela – Ro peoh deza 'ta.

Ar pesketaer – Ha te ivez assemblez gantañ, tamm laer, laskar divalo.

Ar barner, bamet é estlammañ - Divalo ! Je regrette de ne pas connaître votre langue si pleine de poésie.

A-drugarez d'ar brezhoneg ha n'eo ket mestroniet get Mc Garr e vez dieubet komz an dud vunut ha resis hani ar pesketaer : « Langoun. En toull emañ da blas, n'eo ket amañ eo. », « laskar divalo. »... N'en deus ket mui aon nag a c'halloud ar barner nag a felladenniñ outraj a reizhaouer. Kas a ra ar pesketaer hag ar c'hazetener an ton pa adgan ar barner gete sonenn Gilles Servat *Kaoc'h-ki gwenn ha kaoc'h-ki du*¹⁴⁴. Èl-just e vez distaget fall ar pozioù get Mc Garr, ar pezh a lak an arvesterion da c'hoarzhin muioc'h pa glevont un dra tost a : « c'est pas ça qu'elle a voulu *coche ki gwenn*, c'est pas ça qu'elle a voulu *coche ki gwenn à coche ki du* ». Pozioù ar sonenn a ra heklev a brosez an Amoko ha hengoun dispac'hel ar Vretoned : « Quand le Breton se révolte / La répression est féroce / Partout on viole et on tue / Chaque arbre porte un pendu / C'est pas ça qu'Anne a voulu / Kaoc'h ki gwenn / C'est pas ça qu'elle a voulu / Kaoc'h ki gwenn ha kaoc'h ki

143 *Da varzed Breiz*, Charlez Bro-C'hall, 1864.

144 *Kaoc'h-ki gwenn ha kaoc'h-ki du*, Gilles Servat, *La blanche hermine*, 1971.

du ». Reiñ da lâret gerioù groñs pe kunujennoù da dudennoù a seurt-se ha ne gomprenont ket netra ag ar pezh a lâront e vez gwelet èl un digoll frank ha tridus àrne. Ne douet ket tamm erbet ar barner : « Divalo ! Je regrette de ne pas connaître votre langue si pleine de poésie ».

Pa erru skolidi nevez a oa é tonet a Vrest 'barzh 39-45 *Brezel e Bro-Leon*¹⁴⁵ e vez degemeret ar re nevez get skolidi Plougerne.

Ar rener skol, *a c'houlenn gant skolidi Brest* – Alors ça vous plaît votre nouveau pays ? *O komz d'e skolidi*. Larit demat dezho 'ta.

Ar vugale – Demat, mont a ra mat, ya ?

Bugale Brest – Oh, ils ont dit « ya ». Ce sont des boches.

Ar rener skol – Mais non ! Ce sont des petits Bretons qui parlent breton... Allons à l'école !

Deomp d'ar skol !

Luet eo skolidi kêr Vrest a gomz galleg ha ne ouiont ket e vez komzet brezhoneg nepell dezhe. C'hoariet e vez get ar ger « ya » a vez klevet e brezhoneg hag e alamaneg, hag a dalv ar memes tra en div yezh mes ne vez ket skrivet er memes mod : « ya » ha « ja ». Keñveriet o deus doc'htu skolidi Brest ar « ya » brezhoneg da « ja » an Alamaned : « Ce sont des boches. ». Ar rener skol a vestroni an div yezh a ra goap dezhe ha reskont a ra dezhe é c'hoarzhin : « Mais non ! Ce sont des petits Bretons qui parlent breton... ». An droukfazi a za ag an dic'houiziegezh. Dianavout a raont skolidi kêr bezoud yezh o bro. Aonik int bet dirak bugale a gredent bout enebourion hag a oa Bretoned èl te benn-ar-fin.

III.2. Ar brezhoneg hag ar vrezhonegerion

Amañ eh eus un diforc'h kentañ, bras-tre, etre rummadoù ar leurenourion. N'eo ket ar memes sell tamm erbet etre an daou a-ziàr ar vrezhonegerion. Get ar rummadoù koshañ e vez gwelet tudennoù taolennet èl tud an terouer, tud a-ziàr ar maez. Tudennoù lorc'hus, pennek, palod mes onest ha kalonek. Ur bentadenn gozh. Get ar rummadoù yaouank e vez dousaet an tenn. O zudennoù o deus ur sell tostoc'h ag o c'houlz ha ne vez ket mui ken don ar foz etre ar c'hallegerion hag ar vrezhonegerion. Tostoc'h e chom memestra sell an daou rummad leurenourion a-ziàr ar brezhoneg a chom get he skeudenn, hani ur yezh droukziforc'het hag izelaet.

145 39-45 *Brezel e Bro-Leon*. Op. Cit.

III.2.1. Ar re hañvalaet doc'h komzerion yezhoù brasniver

Diskouezet int el tudennoù pinvidikoc'h aveit ar Vretoned arall, tudennoù stipet. Diskouezet int èl tudennoù lore'hus. Tudennoù o deus istim doc'h te o-unan ha sur ag o chañs. Alies tre e vezont dizonest ha mataus. Kustumet int da dostaat doc'h tudennoù o deus ar galloud. En em ouestliñ a raont aveite. O lesaat a raont. Gwisket int gwelloc'h aveit ar vrezhonegerion arall : dilhad modernoc'h, muioc'h doc'h ar c'hiz. Da lâret eo e klaskont bout an tostañ posubl ag an tudennoù o deus c'hoant bout hañval dezhe. Met n'int ket ha ne vint ket james èl te penn-da-benn daoust d'o strivoù diniver. Tudennoù galloudusañ a addegas an dra-se d'o soñj alies. Ur vuhez un tammig aesoc'h o deus a-drugarez d'o darempredoù gwall uhel. O fal a zo pignat ar skeul sokial, bout pinvidikoc'h, bout galloudusoc'h, bout levezonusoc'h.

Ar c'higer a zo ur skouer heverk, 'barzh 39-45 *Brezel e Bro-Leon*¹⁴⁶, aveit diskouez resis peseurt tudennoù int. En akt 1, senenn 10, emañ ar c'higer hag e wreg é komz get an ofiser alaman galloudusañ : « Hitler va sauver l'Europe. Il faut que la France soit avec Hitler. La France et l'Allemagne sont deux grands pays qui doivent s'entendre. Ce sont les politiciens et les juifs qui veulent la guerre. Les anglais sont gouvernés par les youpins ». Frikotiñ a ra get an Alamaned aveit donet da vout mignon gete, ha kaout ur plas gwelloc'h. Aes e vez d'ar c'higer cheñch tu d'e grampouezhenn. Kalonekaat a ra memes e vab Saïg er senenn 6, akt 2, aveit ma yahe da labourat en Alamagn get an STO. N'en deus ket aon aveitañ memes e verz anezhañ tudenn Tomaz pa lâr da Saïg : « Un homme qui part est un otage aux mains des ennemis. Si tu ne veux pas subir les brimades et mourir sous les bombes anglaises, ne pars pas en Allemagne. ». A-du e vo berped get ar vistri kar gete emañ ar wellentez.

En akt 2, senenn 7 e vez graet ur c'hemenn ofisiel get Carl Gernstein, an ofiser alaman galloudusañ :

Carl Gernstein – Le Führer a entrepris la construction du mûr de l'Atlantique, pour nous protéger des débarquements ennemis. L'école sera réquisitionnée pour les ouvriers de l'organisation TODT venus travailler sur les fortifications.

Maria, ar vestrez-skol – Mais enfin mais où mettrons-nous les enfants ?

Carl Gernstein – Il vous sera affecté d'autres locaux. Les Champs Park ar c'hastell-mein, park an toull-bras, ar grugell seront réquisitionnés pour les mines. Interdit aux animaux et aux hommes. Vous trouverez sur le mur de la Kommandantur le nom des hommes requis cette semaine pour le transport du sable et du ciment, avec cheval et charrette, vers les différents chantiers...

Maria – Les réquisitions massives sont contraires aux clauses de l'armistice.

Ar martolod – Hag al laezh hag an amann, ar c'hezeg, ar saout, ar moc'h hag ar maout. Hag

¹⁴⁶ 39-45 *Brezel e Bro-Leon*. Op. Cit.

ar gwin 'ta ! Tout ez eont e kof ar Boched ! Me rank kaout ur banne koulskoude.

Ar c'higer – Avant le Maréchal on mangeait beaucoup trop, on buvait à plus soif, on n'allait plus aux vêpres, on ne portait plus la coiffe, on ne priait plus Jeanne d'Arc... La France n'était plus française... Tandis que maintenant...

An Alamaned a implij ar galleg er pezh-c'hoari, anat eo. Mes n'eo ket memes talvoudegezh implij ar galleg etre tudenn Maria, ar vestrez-skol ha tudenn ar c'higer. Maria a c'houlenn titouroù fetis ha resis get Carl Gernstein : « mais où mettrons-nous les enfants ? ». Ankeniet eo e-keñver amzer-dazonet ar vugale, penaos e raio he labour... En em sevel a ra ha diskuliñ a ra an amjustis : « Les réquisitions massives sont contraires aux clauses de l'armistice. ». Maria a dremen dre ar galleg aveit gallet eskemm get an ac'hubourion. Lâret e vez an traoù à an ton bras e galleg. Gouiet a ra ne vo selaouet nameit ma tremen dre ar galleg . N'eo ket ar memes savboent tamm erbet aveit ar c'higer. N'implij ket ar galleg aveit monet e darempred get an Alamaned aveit abegoù fetis èl Maria. Tremem a ra dre ar galleg aveit diskouez d'ar re arall emañ a-du gete. Choazet en deus e du. Meuliñ a ra ar Marichal Pétain, a zalc'h ar sac'h d'an Alamaned. Ar Marichal Pétain, ha neuze an Alamaned, a zo gwarant ag ur Frañs dereat, doujapl : « Avant le Maréchal on mangeait beaucoup trop, on buvait à plus soif, on n'allait plus aux vêpres, on ne portait plus la coiffe, on ne priait plus Jeanne d'Arc... ». An hardizhegezh en deus da lâret memes : « La France n'était plus française... Tandis que maintenant... ». A-drugarez da skiant vat an ac'hubourion alaman eo daet ar Frañs da vout galloc'h, pe da vout gall en-dro.

Familh ar c'higer a-bezh a zo bet kendrec'het get raktres ar Reich. Komprenet o deus petra oa o interest en riskl traisiñ o re ha dinac'h o c'hredennoù. « Betek-hen n'hon oa ket da glemm ganto... C'est vrai les Allemands c'est pas ce qu'on nous avait dit. Moi, je les trouve bien. L'Allemand est un bon occupant, sévère mais juste. » a lâre ar gigerez. Mes pa c'hoarvez ar pezh a dlee c'hoarvezet, drougziwezh an Alamaned, e youc'h ar c'higer da razh an dud, hep mezh na gablusted :

Ar c'higer - Plusieurs fois j'ai failli entrer dans la Résistance. Demandez à ma femme.

Hein ?

Ar gigerez - C'est vrai ! Plusieurs fois il m'a dit : et si j'entrais dans la résistance.

Ar c'higer – Mon beau-frère aussi, lui, il était résistant.

Ar gigerez – Tout comme mon mari...

Ur skouer arall a c'hellamp menegiñ a zo 'barzh *Eden Bouyabes*¹⁴⁷ get Teatr Piba. Er lodenn 4 ag an arvest 1 emañ tudenn Soda, leterner hag ur bagad sonerion, termenidi kozh, é tegemer tremenidi

147 *Eden Bouyabes. Op. Cit.*

nevez erruet er c'hamp Eden bouyabes.

Krog eo al leterner gand eur brezegenn-degemer; o tortal hag o teurel sellou war-zu ar haorhouarn. O selaou ar brezegenn hir ha poaniuz-se emañ an oll.

Leterner - An aotrou Saint-Frusquin, komiser rannbarz Bouyabes-an-Trêz... *O hoarzin 'ma ar zonerien* ha me ma-un', gand oll gumuniez Eden Bouyabes, pe dost, om eüruz meurbed o tegemer ahanoh en or hêr vamuz... Eee... feal d'he hengoun a zegemer hag a vrokusted.... eee... roet 'vo deoh goudor ha gwarez evel m'ho-peus c'hwi... eee... hetet ha goulennet [...] Bet om bet, eee... leuriet ha karget gand ensavaduriou ar gouarnamant war tachenn an divroi hag ar reoliata yehed... eee... a-benn degemer ahanoh en on zouez, eee... ha skoazella ahanoh da êsaad ho tremenvan... eee, ho tremenerez, pe ho staliadur. Dre ze, eo red din ho tiarbenna : *o fulori Bez'* 'hellfe nijal, dre zegouez, daved ho tiskouarn louz, kontadennu brein, koz kaoziou yud... [...] lañchennou fallakr, gwall gomzou ha burutellou gwidal, savet oll diwar mojennou dister tennet deuz eun istor a-hervez a-zivoud EB... [...] eee... ho kuzulia groñs a ran nompaz rei kred d'ar bidennou-se... [...] Dalhit soñj ivez ho -po pep tra da goll, en despet d'an aliou 'zo bet roet deoh, dre heulia ar bidennou-ze peotramant ar re o-dije savet ha strewet anezo... [...] Mad ! Evel ma kustumer d'ober, e kinnigan deoh selled ouz eun arvestig istorel bihan a-zivoud or hêrig vamuz. [...] Degemer mad e Eden Bouyabes-trêz, kêr vamuz – an hini bella 'zo e Kornôg ar bed anavezet. Gwechall... Bro ar varzed hag ar boeted, douar a hengoun, war he aodou 'vez degemeret oll tud dilaosket ar bed a-bez. Brudet-mad er bed -oll evid he degemer dispar. Amañ en eul leh yah ha diogel, e vo tu deoh da ragaoza, sioul ha plên, ho tonedigezh 'ba 'r bed gwir. He aodou heoliet mad, klouarded degemeruz an amzer, a zegaso deoh ar peoh hag an distan a hortozit. Dibaoe eun nebeud amzer ha dre hras gwardigez madelezuz ar gouarnamant om perhenn war eur sistem efeduz a-benn kontroli ar mond-ha-dond. A-benn bremañ emañ EB unan deus kampou surra Kornog ar bed, akipet gand eur hog-dour nevez-flamm a-benn klota gand an normou-yehed.

Setu Leterner a zo é c'hoari an aotrou maer : « An aotrou Saint-Frusquin, komiser rannbarz Bouyabes-anTrêz... *O hoarzin 'ma ar zonerien* ha me ma-un', gand oll gumuniez Eden Bouyabes, pe dost, om eüruz meurbed o tegemer ahanoh en or hêr vamuz ». Gober goap ag an anvioù rikamanet e giz gallek : Bouyabes-anTrêz. Anvieu a seblant bout faltaziet hepken aveit sachiñ an douristed. C'hoarzhin a ra ar sonerion é klevet prezegenn sklêrijennet Leterner ! Ur politiker low-cost a glask gober brud vat d'ar c'hamp èl pa vize bet é tegemer touristed é vakansiñ : « Bouyabes-an-Trêz », « feal d'he hengoun a zegemer hag a vrokusted », « Bro ar varzed hag ar boeted, douar a hengoun », « Brudet-mad er bed oll evid he degemer dispar. », « Amañ en eul leh yah ha diogel, e

vo tu deoh da ragaoza, sioul ha plên, ho tonedigezh 'ba 'r bed gwir. He aodou heoliet mad, klouarded degemeruz an amzer, a zegaso deoh ar peoh hag an distan a hortozit. », « Mad ! Evel ma kustumer d'ober, e kinnigan deoh selled ouz eun arvestig istorel bihan a-zivoud or hêrig vamuz. ». C'hoant en deus diskouez Leterner d'ar re arall eo un den a-bouez ha galloudus er c'hamp ; eñ mes ivez an « Aotrou » Saint-Frusquin en deus ur vicher uhel « komiser rannbarz Bouyabes-an-Trêz » . Get komzoù soutil a-walc'h e tispleg e oant bet kefredet get ensavadurioù uhel hag o deus neuze ur statud uheloc'h aveit ar re arall er c'hamp : « Bet om bet, eee... leuriet ha karget gand ensavaduriou ar gouarnamant war tachenn an divroi hag ar reoliata yehed... ». Aveit bout asuret a zoujañs ha sujidigezh ar re nevez e trouktun anezhe : « Bez' 'hellfe nijal, dre zegouez, daved ho tiskouarn louz, kontadennu brein, koz kaoziou yud... [...] lañchennou fallakr, gwall gomzou ha burutellou gwidal, savet oll diwar mojennou dister tennet deuz eun istor a-hervez a-zivoud EB... [...] eee... ho kuzulia groñs a ran nompaz rei kred d'ar bidennou-se... [...] Dalhit soñj ivez ho -po pep tra da goll, en despet d'an aliou 'zo bet roet deoh, dre heulia ar bidennou-ze peotramant ar re o-dije savet ha strewet anezo... ». Hag aveit echu e brezegenn, un tamm mell d'ar pennoù bras : « Dibaoe eun nebeud amzer ha dre hras gwardigez madelezuz ar gouarnamant om perhenn war eur sistem efeduz a-benn kontroli ar mond-ha-dond. A-benn bremañ emañ EB unan deus kampou surra Kornog ar bed, akipet gand eur hog-dour nevez-flamm a-benn klota gand an normou-yehed. ». Da lâret eo eo bet graet pep tra aveit kouchiñ ar repuidi nevez, gwarantiñ e aotrouniezh, diskouez ar skeudenn lañsusoc'h ag ar c'hamp ha den erbet 'do droed da glemm. Ur *lapsus linguae* bennak a ro, marse, ar skeudenn wirañ ag ar lec'h ha petra c'hoarvezo d'ar repuidi prestik a-walc'h : « ha skoazella ahanoh da êsaad ho tremenvan... eee, ho tremenerez, pe ho staliadur. ». Amañ en deus ar brezhoneg talvoudegezh ar galleg. Implijet e vez ar brezhoneg aveit komz d'an enbroidi, tud vunut, o yezhoù munut ivez. Graet e vez ar liamm etre galleg ar gouarnamant ha brezhoneg tud Eden Bouyabes. Komz ur yezh vinorel, ur yezh vihan aveit bout komprenet gete. Amañ e vez komzet brezhoneg get doareoù ar galleg, yezh ar bolitikerion dres. Setu perak eo pompus an ton, c'hwezet stumm ar frazennoù, rikamanet pep tra 'barzh prezegenn Leterner.

III.2.2. Ar vrezhonegerion, komzerion yezhoù minorel, ur skouer voutin kozh Noe

An diforc'h brasañ a zo, etre ar rummadoù leurenourion, àr ar poent resis-mañ : peseurt skeudenn ag ar vrezhonegerion a ziskouezont àr ar leurenn.

Krogamp get *Ma c'helljen-me kanañ laouen*¹⁴⁸, get Ar Vro Bagan, hag ur barzhoneg bennak :

148 *Ma c'helljen me kanañ laouen. Op. Cit.*

« Tud ar mor bras tud an douar
Bemdez gwasket ha bemdez suj
Poan ha glac'har dalc'het e kuj.
Ar bezhiner, ar martolod
En e c'henou treujoù kalkod
Bemdez, bemnoz o pesketa
Ha tarzhiou-mor 'vit peadra
Hag an arnev hag an tourmant
D'e rekompañs evit e boan »

Ur skouer voutin kozh Noe ag ar vrezhonegerion a veze hag a vez gwelet c'hoazh, nebeutoc'h-nebeut memestra, 'barzh pezhioù 'zo. Tudennoù brezhonegerion a zo tennet ag ur gartenn-post e-maez ar c'hiz. Tud ar mor, tud an douar. Tudennoù palod, bongorz. Tudennoù elevezus, tavedek. Tudennoù lorc'hus, onest ha kalonek. Tudennoù a zo stag mat doc'h o c'hredennoù ha feal d'o c'hendrec'hidigezh. Tudennoù skouerius o deus talvoudegezhioù kreñv. Tudennoù simpl get doareoù pe dilhad dilontek, a-wezhioù ivez get dilhad hengounel. Èl ma oa un c'hoant bennak d'o dispartiiñ mat d'an tudennoù arall, en ur mod gwelapl mes ivez en ur mod diheversoc'h, é tostaat anezhe ag ar rakvarnioù boutin-se. E mod-se emaint merkadus, anavezapl. Ur mank a arliv a zo en daolenn-mañ hag ar vrezhonegerion a zo serret-mat en ur skeudenn gozhik he deus poan-bras emdreñ get he c'houlz hag a gendalc'h da vagiñ ar rakvarnioù.

Ar memes stadad a zo e-keñver ar yezhoù brasniver. Pa implijont ar galleg, da skouer, e vez dreist-holl pa vezont rediet. En akt 1, senenn 9 e *39-45 Brezel e Bro-Leon*¹⁴⁹ eo pedet Marie ha he familh get an Alamaned d'ur bal, aozet gete. Komzet e vez e galleg get an alamaned hag e brezhoneg get ar familh.

Franz ha Fritz – Radio Paris ment ! Radio Paris est allemand !... Ah ! Ah ! Ah!

Franz - Mesdames et Messieurs, le Commandant de la place m'a fait venir pour vous inviter à partager la soirée avec nous...

Maria – Vous croyez que...

Franz - Oui ! Tout le village est invité et le Commandant compte beaucoup sur vous... A ce soir...

An tad – Pediñ ac'hanomp da vont da frikotañ ganto...

Ar vamm – Ret eo deomp mont. Ezhomm hon eus anezho : te evit ar vag, Maria evit ar skol.

An tad – Ha lod evit ar moc'h, lod all evit an amann, lod all evit an dra-mañ-dra hont...

Ar vamm – N'o deus graet seurt ebet deomp...

149 39-45 *Brezel e Bro-Leon. Op. Cit.*

An tad – Tra. Seurt ebet nemet ambetiñ hor revr deomp. Kit en o gwele ivez kement hag ober.
Ar vamm – Tud a-walc'h a zo e-barzh dija.

An tad – Ha me bet o terriñ ma revr en Dardanelles... Er Somm hag e Verdun. Pebezh glapez sot !

Diskouez a ra e vez ar galloud get an Alamaned kar komzet e vez e galleg, ar yezh mestr, gete. Maria a zo an hanterourez hag ar jubennourez nameiti er senenn-mañ, é komz galleg get an Alamaned, ha brezhoneg get he familh. Hep Maria e vize bet luzietoc'h an eskemmoù aveit abegoù niverus. Muioc'h a boan o deus ar Vretoned é komz get an Alamaned, en ur mod fetis dija a-gaoz d'o mestroniñ ag ar galleg mes ivez e-keñver o soñjoù. E-pad ma komz an daou soudard e chom ar Vretoned mut ha serret o dremmoù. Selaou a reont mes ne sellont ket doc'hte. O selloù a zo skoet àr ar leur. Tremen dre ar galleg, komz gete, monet d'o bal, « frikotañ ganto »... Re zo re ! An tad a chom start get e soñj : « Ha me bet o terriñ ma revr en Dardanelles... Er Somm hag e Verdun. Pebezh glapez sot ! ». Fuloret eo an tad pa za en-dro en e spered eñvorennoù kriz ar brezel bed kentañ, pa oa ec'h en em ganniñ a-enep ar soudarded alaman just a-walc'h. Graet en doa kement a strivoù aveit netra ? Keuz, fulor c'hoazh ha dreist-holl blaz ar c'hwerv getañ : « Pebezh glapez sot ! ». En em gannet en doa graet aveit ar frankiz ha kaout an Alamaned en e vro, bout mestroniet gete, bout rediet da implij ar yezh brasniver a lak an drougziwezh da vout poaniusoc'h. « Ret eo deomp mont" a lâr ar vamm, rekin an tamm anezhi "Ezhomm hon eus anezho ». Ezhomm o deus anezhe, n'o deus ket ar choaz. Aon o deus marse ivez kar gouiet a reont ar pezh a ra soudarded ar Reich, èl a lâr Maria en ur senenn arall : « Vous massacrez selon la loi et la logique ». Koulskoude ne vo ket nameit Maria hag ar vamm a yay d'ar bal hag a gomzo e galleg, get an Alamaned, an nebeutañ tout : « non merci je ne bois pas » a lâr ar vamm é nac'hiñ ur werennad gwin-Champagn, « Non merci, je ne danse pas avec l'Occupant » a reskont Maria d'an ofiser Carl Gernstein, é c'houlleñ he gwerennad àr ar leur. Komz galleg dre ret.

E degouezhioù zo' e vezont ivez taolennet èl glepeion, farvelloù sot. Komzerion yezhoù brasniver a zo dudiet dirak o amedigezh pe nec'hañset dirak kement ag eeunegezh.

Aveit diskouez mat d'an arvesterion an diforc'h a zo etre ar beizantez palod, sot hag ar medisin fripon ha desket 'barzh *Piv ? Penaos ? Ha petra ?*¹⁵⁰ eh eus ur senenn get an doktor Kilhog en e vurev get ar werzherez yerezed.

Ar medisinour – Ni zo o vont da mesurer ho poan get ar skeul-mañ.

Ar medisinour a ziskouez ur baper ag e vurev. Un baper get sifroù etre 1 ha 10 ha livioù.

Gwerzherez yerezed, é sellet tro-dro dezhi get daoulagad digor-bras – Peseurt skeul ? Ne

150 *Piv ? Penaos ? Ha petra ? Op. Cit.*

welan ket skeul ebet amañ. Ur skeul bennak 'peus ?

Amañ e vez c'hoariet get un droidigezh ger-ha-ger e galleg d'ar brezhoneg aveit komz ag un doare-ober difetis. Ha goapaat a reer ar vaouez a c'hellehe bout gwelet èl un dudenn bleup, get ur c'hompren pragmatek koulz hag an doktor. C'hoant en deus diskouez bout un den speredekoc'h get e vinviji rikamanet. Diskouez a ra dispriz ar medisin ha n'en deus ket c'hoant bout lakaet diaes en e spered é tisplegiñ resis petra eo ar skeul-mañ ha penaos e implij dezhi. C'hoant en deus chom mestr àr an darvoud, gwelloc'h aveitañ kenderc'hel get gerioù digomprenus ha miret e vo e greñv àrni.

Ur skouer arall a zo 'barzh *Neizheta, elle niche où la langue ?*¹⁵¹ Get Teatr Piba. Ur vaouez anvet Noëlle a zo aterset hag a gont enrolladenn he farsadenn àr France Inter e-pad gouel ar Seulines e Kiberon, bleadoù 'zo. Goulennet e oa bet geti komz e brezhoneg er radio. Setu ar farsadenn :

Noëlle - Me lare dezhañ mon chou

Hag-eñ lare din mon chou

Me dezhañ e mod-se mon chou

Hag-eñ lare din mon chou

Et j'lui dis mais tu prends mon cul pour un chou..

Et c'est là que j'aurais pas du la traduire car à l'époque on disait pas ce genre de chose...

c'hoarzh nec'hañset, mais c'était pas très grave car ce que les gens ont retenu c'est la chanson que j'ai faite après [...]

Ar brezhoneg a c'hell reiñ kement a lorc'h hag a vezh dezhe. 'Barzh *Fêtes et légendes de Kerjean*¹⁵² eh eus un diviz etre daou vevel yaouank. Ar paotr yaouank a zo distroet ag ur veaj hir e Breizh-Veur. Ar vatezh a c'houlenn, un tamm jaloux, get he galant hag-eñ en deus ket kavet un dousig arall duhont : « Et les Anglaises ? Et les Galloises ? ». Hag eñ da reskont, àr un ton farset : « Je préfère les Cornouaillaises, elles parlent breton comme nous ». C'hoari etre Kernev ha Kernev-Veur. Komz a vammenn kumun ar yezhoù keltiek. Degas koun ag emdroadur ar yezh a vir c'hoazh hañvalderioù. Komz a levezonioù ha liammoù kreñv a chom etre ar yezhoù hag ar broioù keltiek. Siliñ en deus ar brezhoneg un dalvoudegezh etrebroadel. Ar liamm get ar brezhoneg a zo ar liamm get ar gumuniezh yezhoniel. Ar yezh a zo pouezus aveit an tudennoù-se.

Ar lorc'h a za, neuze, kentoc'h ag an diabarzh. Donet a ra a strollad ar vrezhonegerion, bout kenstaget hag anavet 'barzh ur gumuniezh. Ar vezh a za ag an diavaez pa vezont disprizet, goapaet get komzerion ar yezhoù brasniver é komz brezhoneg pe pa implijont ar yezhoù brasniver mes en ur mod kamm-digamm.

151 *Neizheta, elle niche où la langue ?*. Op. Cit.

152 *Fêtes et légendes de Kerjean*. Op. Cit.

Un diviz a zo etre Maria, Per hag o merc'h 'barzh *Ma c'helljen me kanañ laouen*¹⁵³ a skeudenn mat ar poent-mañ. Distroet eo ar verc'h ag ar skol. Er ger emañ ar vamm é komz get an tad :

Ar verc'h – Bonjour papa, bonjour mama n !

Maria – Diwall, n'ez ket da gailharañ pelec'h 'm eus gwalc'het.

Per – Houmañ a denn d'he zad yañ.

Maria – Ale, kae da evañ ur banne kafe.

Ar verc'h – Oui, mais il est trop chaud.

Maria – Fais puff dessus alors.

Per – Galleg brav a zo ganeoc'h amañ. [...]

Àr ton ar rebech pe ar goaperezh e ya Per doc'h e wreg : « Galleg brav a zo ganeoc'h amañ. ». Da lâret eo n'eo ket bet gouest Maria da lâret d'o merc'h : « Souffle dessus alors » hag implijet he deus un onomatopeenn kar ne ouie ket ar ger dereat e galleg.

N'eo ket ar skouer nameiti ma vez diskouezet kudenn mestroniñ ar yezhoù brasniver ha dresit-holl ar galleg get ar vrezhonegerion. 'Barzh *Kof-ha-kof*¹⁵⁴, get Ar Vro Bagan ivez, eh eus ur senenn er sal-dañs ar Pifoun. É klemm emañ an dud eh eus re a drouz. Savet e vez panneloù get an amezeion aveit klemm a-enep an dancing. Unan a zo e brezhoneg : « N'omp ket gouest da gousket ganeoc'h » hag unan arall a zo bet troet e galleg-saout « Il y a trop de bruit avec vous ». Implijet e vez amañ ur « bretonnisme ». Daou zoare a zo da zisplegiñ an dra-se : implij ar « bretonnisme » aveit komz ag ar galleg fall a veze get ur lod ag ar vrezhonegerion, c'hoazh e blezadou 50. Pe komz ag an diglosiezh. Troet e oa bet e galleg aveit bout komprenet get razh an dañsourion er Pifoun, da lâret eo, razh an arvesterion er sal, mes mirout memestra spered ar yezh, ur seurt troatad-fri farsus.

Unan arall a zo pelloc'h er memes abadenn pa za daou werzher pesked get o froduioù ha kartonsoù bruderezh : « pesked, pesked brein, pesked leun a zrein » é lâret e galleg, a vouezh uhel « poissons, poissons, il est frais mon poisson. ». Amañ e vez graet ur farsadenn komprenet get ar vrezhonegerion hepken. An daou werzher yaouank a zo lan a valis o daoulagad, dudiet-bras da c'hoari un dro-louarn d'ar c'hallegerion fizius.

III.2.3. Nameidennoù

Er lodenn-mañ e vez kavet, marse, an tudennoù dedennusañ. Ar re a ra ar liamm etre tout an tudennoù. Ar re a zo gouest da gompren ha da gomz get pephani, gouest da glotiñ o frezeg hrevez ar yezh, ar live yezh ag an dud diraze. Ar re a vestroni mat-tre an div yezh, pe a-wezhioù, muioc'h

153 *Ma c'helljen me kanañ laouen. Op. Cit.*

154 *Kof-ha-kof. Op. Cit.*

c'hoazh..

An tudennoù-se a zo brezhonegerion, pe komzerion forzh peseurt yezh vinorel, a-vihanik hag o deus desket ar galleg, pe forzh peseurt yezh brasniver, diwezhatoc'h. Komz a reont galleg brav ha flour, hep fazi groñs pe distagadur a-dreuz. Ar brezhoneg a zo liammet get o « gwrizioù », o hendadoù. Yezh o c'halon, yezh an afekt. Implijet e veze e-pad o bugaleaj hag implijet e vez c'hoazh get o familh pe mignoned. Get ar galleg o deus pignet àr ar skeul sokial. Rediet int bet d'ober get ar yezhoù brasniver mes o mestroni ampart ag ar yezh mestr a zo daet eo da vout un atoud bras. Taolennet e vezont èl tudennoù onest, feal d'o familh, d'o yezh. Tudennoù speredek, diplomat, subtil. Tudennoù kompez, evezhiek ha tud a-breder. A-drugarez d'o emzalc'h ha d'o deskadurezh o deus gouniet doujañs komzerion yezhoù brasniver. N'int ket liammet 'barzh spered ar c'hallegerion get ar vrezhonegerion diseven ha pront. Pa vez ezhomm e ouiant implij o statud hanterour hag e zeont da benn da stourm ha da zifenn o soñjoù get soutilded, onestiz hag efedusted.

An tudennoù-se a vez lakaet àr-wel a-drugarez d'o micher, d'o statud sokial 'barzh pezhioù-c'hoari zo'. D'ar liesañ micherioù uhel ha kargoù a-bouez.

Ar c'hazetenner 'barzh an *Amoko 2*¹⁵⁵ a implij pe ar galleg pe ar brezhoneg hrevez an darvoudoù, an degouezhioù pe an tudennoù a vez aterset getañ. Ur statud disheñvel en deus, ur seurt tudenn kameleon, èl an aotrou maer ag a zo gouest d'ober ar liamm etre ar bobl hag ar ministr, ar prefed. Skouer an diviz 13 :

Ar hazetenner, *o komz en e zonenroller* – Ah ces terribles Bretons ! Il faut dire que sans potion magique ils ont fait plier le terrible Amoko...

Ar pesketaer, *tenna a ra boutailladou gwin euz e zah* – Set' amañ Posion Majik ar Vretoned.

Ar hazetenner, *o lenn pez eo skrivet war ar boutaillou* – Ar Vretoned ! Farserien daonet ! Dond a ra ganto ! Bolhen (1976), Olympic Bravery (1976), Torrey Canyon (1967), Tanio (1980), Amoco Cadiz (1978), Gino (1979).

Ar haner – Unan a vank.

Ar hazetenner – Pehini ?

Ar haner – Amoko II !

Oll – Ah ! Ah !

Ar pesketaer, *a-raog eva* – Yehed mad d'an holl, hemañ zo o vond da goll !

Ar haner, *o kana* - « Pinard, pinard a zo mat da gas kuit ar hafard »...

Ar hazetenner, *o eva* – Erk !

Amañ e vez gwelet mat o deus ar Vretoned fiziañs er c'hazetenner ha pedet eo bet da farsal ha da eviñ o evaj ispisial.

155 *Amoko 2. Op. Cit.*

Ur skouer arall a zo get tudenn ar vestrez-skol 'barzh 39-45 *Brezel e Bro-Leon*. Maria, ar vestrez-skol, a za en-dro en he bro. He neuz a zo hani ur vaouez yaouank é tonet ag ur gêr vras. Maria a zo gwisket chik ha cheuc'h : ur vantell feur, ur sae, botoù uhel, un torkad blev... Pell a skeudenn tud ar gêriadenn get dilhad pemdez o fal pleustrek ha pas kenedus. Komz a ra brezhoneg, get ur blijadur gwelapl, get he familh, tud he c'hêriadenn met komz a ra e galleg get bugale he c'hlasad, get an Alamaned. Gwelet e vez na pezh pinvidik he frezeg, uhel he live yezh pa gomz galleg, mes ivez, na pezh naturel ha flour e vez he frezeg pa gomz brezhoneg. Skouer an akt 2, senenn 5 : An noz eo. Kirri-nij ar Saozon a zo é bombeziñ Plougerne. Klevet e vez ar c'hwitellerez-tro é huchal aveit berziñ tud ar barrez. Tout an dud a zo strollet er-maez é sellet doc'h an oabr.

Carl Gernstein, an ofiser, *é lâr d'an dud* – Kit holl da gousket ! En em glozit mat en ho tiez ! An disterañ gouloù a zo gouest da sachañ ar marv warnoc'h. *É komz da Varia, ar vestrez-skol* : Pitié madame !

Maria – Me zo gwelloc'h chom er-maez.

Carl Gernstein, an ofiser – Vous n'êtes pas comme eux. La lâcheté de tous les jours, petits besogneux, ne se posant pas de questions, toujours à mi-hauteur.

Maria – C'est à mi-hauteur que je tiens à eux. Quoi que vous fassiez, ces hommes seront toujours plus grands que vous. Ne raillez pas leurs têtes baissées car voici des siècles que le malheur leur pèse sur les épaules. Ne riez pas de leur air de crainte, voici des siècles qu'ils meurent que leur amour est déchiré. Le plus grand de leur crime aura toujours un pardon. Vous, vous massacrez selon la loi et la logique.

Tudenn Maria a ziskouez ur seurt « emdroadur » skeudenn gozh ar Vretoned pa lâr Carl Gernstein : « Vous n'êtes pas comme eux. ». Da lâret eo e wel Maria tostoc'h ag e skeudenn, tostoc'h ag ur skeudenn e varn dereat hrevez e vuzulioù. Dispriz ha dismegañs en e gomzoù doc'h ar Vretoned arall : « La lâcheté de tous les jours, petits besogneux, ne se posant pas de questions, toujours à mi-hauteur. ». Loened-samm dinerzh ha diforzh. Tud vunut n'o deus ket c'hoant uhelaat o spered. Setu perak e kred tudenn Maria defial aotrouniezh an ofiser alaman. Ne c'houzañv ket Maria klevet traoù a-seurt-se diâr-benn he zud, he re. « C'est à mi-hauteur que je tiens à eux. Quoi que vous fassiez, ces hommes seront toujours plus grands que vous. [...] Le plus grand de leur crime aura toujours un pardon. Vous, vous massacrez selon la loi et la logique. ». Emskiant ha bamet eo Maria ag o zalvoudegezh, o c'halon, o emnac'h, o dalc'hegezh : « Ne raillez pas leurs têtes baissées car voici des siècles que le malheur leur pèse sur les épaules. Ne riez pas de leur air de crainte, voici des siècles qu'ils meurent que leur amour est déchiré. ». Santet e vez karantez ha doujañs Maria e-keñver he yezh, he bro.

Un disparti arall a vez graet etre an tudennoù-se get ar leurenourion yaouank. N'eo ket mui micherioù, statudoù sokial pe an neuz a ra an diforc'h èl ma veze e-raok d'an aliesañ . N'eo ket mui ken fetis an disparti.

Kemeramp skouer anv an dudenn pennañ Abeguile 'barzh *Metamorfoz*¹⁵⁶ get Teatr Piba. En un doare resis e komz an anv Abeguile ag an arallded, ar liested hag ar lignez ! Abeguile, da lâret eo Mab egile. E prederouriezh e vez komzet ag an arallded aveit ober anv ag an diforc'hioù diforc'hioù : sokial, yezhoniel, sevenadurel, etnologel, relijiel... Mes Abeguile a c'hellehe n'eus forzh piv. Tudenn Abeguile a c'hellehe bout un dudenn hollvedel. Abeguile a c'hell bout, neuze, unan doc'h un tu ha meur a hani doc'h un tu arall. N'eo ket piv eo Abeguile ar pezh a gont mes kentoc'h petra a zo skeudennet dre an anv-se. An anv-se a ziskouez mat peseurt roll en deus an dudenn-mañ er pezh-c'hoari. Ar paotr yaouank a raio ar liamm etre ar rummadoù-tud en e familh pa zaio da glask restajoù e dad-kozh, pa ziluzio istoer ha sekredoù ar familh. Amzer ar pezh-c'hoari a zo hani huñvre Abeguile a vo test a veur a vetamorfoz.

Ar pouez a vez lakaet kentoc'h àr ar lec'hiadur dishañval a vez kavet 'barzh prezeg, emzalc'h pe choazoù an tudennoù. *Merc'h an eog*¹⁵⁷, akt 2 :

Loeiza - Ne gred ket din. Gwechoù zo bet eo c'hoarvezet ar memes tra ganin.... Bep tro meus interet unan eus tudennoù ma bugaleaj, meus bet ar santimant da goll un tamm eus ma bugaleaj...

Céline - Met hon bugaleaj n'eo ket kollet dija, de toute manière ?

Loeiza - Geo. Met tud zo ne welez ket mui, e lec'hioù zo ne zistroi ket, yezhoù zo ne gomzi ket mui... Hiraezh a zeu dit.

Céline, *Ne gompren ket ar ger* - « Hiraezh » ?

Loeiza - Ya, hiraezh. Hiraezh a zeu din da skouer, pa ne zistroin ket da di ma zud-kozh ken... Pa ne gomzin ket brezhoneg ganto ken.

Céline - Ganin e komzez brezhoneg !

Loeiza - N'eo ket ar memes tra...

Céline, *Hegaset* -A ya, gwelet a ran. "N'eo ket memes tra, n'eo ket memes brezhoneg"... Fais gaffe, hein, te zo o krog da gomz 'vel ar re gozh !

Amañ eh eus div vignonez a gomz ag o liamm get ar yezh a-benn ar fin : « Bep tro meus interet unan eus tudennoù ma bugaleaj, meus bet ar santimant da goll un tamm eus ma bugaleaj... ». Ur sell

156 *Metamorfoz. Op. Cit.*

157 *Merc'h an eog. Op. Cit.*

dishañval penn-da-benn o deus. Aweit Céline : « Met hon bugaleaj n'eo ket kollet dija, de toute manière ? ». Da lâret eo faota ket kaout keuz a draoù ne vint ket mui adkavet. Loeiza he deus hiraezh : « Met tud zo ne welez ket mui, e lec'hioù zo ne zistroi ket, yezhoù zo ne gomzi ket mui... », « Hiraezh a zeu din da skouer, pa ne zistroin ket da di ma zud-kozh ken... Pa ne gomzin ket brezhoneg ganto ken. ». Loeiza a zo é komz ag an treuzkas, ar liamm a zo etre ar rummadoù tud 'barzh ar familh a-drugarez d'ar yezh ivez. Aon ha hiraezh he deus a draoù a zo é vonet diàr-wel. Kollet e vo, goude marv he zud-kozh, un tamm ag hec'h istoer, un tamm ag istoer he familh. Kollet e vo un tamm a he yezh, ar yezh a zo bet desket dezhi gete, un tamm ag istoer ar yezh ivez pa vo echu get rummad he zud-kozh : « yezhoù zo ne gomzi ket mui » kar displeg a ra da Céline n'eo ket memestra komz brezhoneg geti ha get he zud-kozh. Komz a ra ag yezh glan a-vihannik. Beviñ a ra en un huñvre get ur skeudenn peurvat ag ar yezh. Komz a ra a draoù difetis mes a a-bouez bras a zifloupat deomp. Difenn a ra ur seurt mallusted ivez, goude o marv ne vo ket mui posubl komz brezhoneg gete ken. Ret eo komz bremañ e-raok ma vo re ziwezhat. Keuz he do ag an amzer paseet a zo liammet get eñvorennoù plijus ha fromadennoù puilh gete. Santet e vez na pezh pouez en deus ar brezhoneg en he darempred get he zud-kozh : un diazez pennañ. N'o deus ket ar memes talvoudegezh an traoù-se aweit an div blac'h pa reskont Céline : « Ganin e komzez brezhoneg ! », « A ya, gwelet a ran. "N'eo ket memes tra, n'eo ket memes brezhoneg"... Fais gaffe, hein, te zo krog da gomz 'vel ar re gozh ! ».

Er memes pezh-c'hoari e komz Mair a-ziàr hec'h eontr Gwilym hag ar memes spered a vez adkavet 'barzh he c'homzoù :

Mair, *O huanadiñ, hag o vousec'hoarzhin* -Kement den, kement istor, ar wirionez oa gant Gwilym. « Dyn ei filltir sgwâr oedd », se eo 'pezh vo laret diwar e benn. Un den deus ar bobl en deus dalc'het dre ziviz - ha dre zlead ivez - istor e di-feurm, e barrez, e vro... Goude sellet pizh ouzh an traoù, ar boutinañ eo da istor, ar muiañ a greder ennañ. (*tav*) Met pleg an drama zo gant Gwilym ivez. Da vat. Atav eo bet 'vel-se. Pa vezemp o pourmen gantañ er maeziou, an istorioù a gonte hag a frome anezhañ, a oa istorioù savadegoù a-enep d'an amjustis. Sot oa gant hini merc'hed Becha.

Setu poltred kozh ar Vretoned, komzerion ar yezhoù minorel meneget get tudennoù yaouank : « Un den deus ar bobl en deus dalc'het dre ziviz - ha dre zlead ivez - istor e di-feurm, e barrez, e vro... » aweit diskouez o c'homprenont gwelloc'h bremañ int daet da vout tud en oad. Gouiet a reont mat ar pezh o deus treuzkaset dezhe, petra eo o herezh. Emskiant int ag e dalvoudegezh. Mes c'hoant o deus paouez get ur skeudenn gozh memestra : « Met pleg an drama zo gant Gwilym ivez. Da vat.

Atav eo bet ‘vel-se. Pa vezemp o pourmen gantañ er maeziou, an istoriou a gonte hag a frome anezhañ, a oa istoriou savadegoù a-enep d'an amjustis. ».

« C'est là où j'ai eu mes premières frustrations de me sentir en pays étranger alors que j'étais en France. » a lâz tudenn Hugo 'barzh *Neizheta, elle niche où la langue ?*¹⁵⁸. Un dudenn a-bouez eo Hugo. Un hanterour daouek eo. Gober a ra ar liamm etre ar leurenn hag an arvesterion èl « chauffeur de salle ». Gober a ra ivez ar liamm get an div yezh, brezhoneg ha galleg, pa gont penaos e-pad e studioù e Brest 'oa daet da-benn da gavout e « wrizioù » brezhonek : « Je suis ému. Fromet on. Breizhad am santan bremañ ».

'Barzh *Privezioù publik*¹⁵⁹ eh eus un diviz etre div blac'h : Alice ha Batgirl. Batgirl a zo ivez, en ur mod, un hanterourez daouek. Gober a ra ar liamm etre brezhoneg ha galleg é treiñ aveit Alice. Gober a ra ar liamm etre paotred ha merc'hed ivez kar a-fetepañs n'ouier ket gwall vat piv eo. Amañ emañ a-dreñv ivez goulenn ar reizhenn sokial àr daou boent resis en abadenn : ar yezh hag ar reizh.

Alice ha Batgirl a zo é komz er lostad gortoz dirak ar privezioù publik.

Batgirl – T'es sûre qu'on rentre là-d'dans ? C'est peut-être pas pour nous. [...] Moi je me sens toujours déguisée avec ça. Tu sais, au fond, je suis pas une fille. Je me trouve toujours grotesque avec ça sur le dos.

Alice – Mais si tu es une fille ! Tu pourrais même être une très jolie fille, si tu voulais. Pourquoi tu dis ça ? Regarde, une belle cape bien coupée, tu penches les reins, tu souris et hop ! [...]

Batgirl - [...] J'espère qu'on va rentrer quand même.

Alice – Moi ce qui m'inquiète c'est la langue. Je ne sais pas si je vais bien comprendre. Moi je parle pas breton, alors je pense que je vais me sentir très seule ! *Strafuilhet*. Déjà dans la queue j'entends des trucs, euh bizarres ! J'aime bien, mais je comprends rien de rien ! En tout cas, la queue, elles ont pas surtitré.

Batgirl – Je te traduirai, si ça gêne pas les gens autour.

Alice – Bah si tu rentres, parce qu'à ce rythme-là...

Batgirl – Je peux rentrer sans cape, quand même. C'est pas obligé d'en porter une.

Alice – Le secret, c'est l'attitude. C'est vraiment de faire comme si tu en portais une d'habitude. *Didrouz*.

Batgirl – Tu sais, pour le breton tu fais tout pareil. Tu fais comme si tu le parlais d'habitude. On verra bien.

Alice – Pour nous il y a un surtitrage au moins. Toi il te faudrait un surtitrage pour ceux qui

158 *Neizheta, elle niche où la langue ?*. Op. Cit.

159 *Privezioù publik*. Op. Cit.

parlent pas fille !

Batgirl – Se 'zo fin. Allez viens.

Skeudennoù gwall zishañval zo neuze àr ar yezhoù, etre yezhoù brasniver ha yezhoù minorel, èl-just, mes ivez etre ar rummadoù leurenourion. Gwelet hon eus peseurt sell a zo, dre vras, àr peseurt yezh. Ha penaos ar selloù-se a zo materializet, enkiget a-drugarez d'an tudennoù. Doc'h un tu e vehe komzerion ar yezhoù brasniver disprizus, dismegañsus, rondonus ha dizonest. Ha doc'h un tu arall o enebourion : komzerion ar yezhoù minorel stag doc'h ur skeudenn er-maez ar c'hiz, tud palod, pront, pennek. Aze emañ an dalc'h : taolennet e vezont èl enebourion hepken, tud kontrol penn-da-benn. An tudennoù a c'hell neuze kendalc'h da vagiñ ar rakvarnioù da bep tu. Graet eo bet a-fetepañs-kaer sur a-walc'h met hep gout d'ar leurenourion ivez marse. Un dra diemskiant heritet hag un hengoun hir.

An daouelezh etre ar rummadoù tudennoù a za da vout disteraet get ar rummadoù yaouankoc'h. N'eo ket ken bras an harz etre an tudennoù bremañ. Eh omp o pellaat ag ar bentadenn aveit muioc'h a wirvoud hag a blaended. N'eo ket an tudennoù hepken a zo berniet get ar chañchamantoù leurreniñ. Chañchamantoù a-bouez a vez gwelet gete a-ziàr an danvez hag an doare. Kinnig a reont ur sell dishañval ha modernoc'h, àr Breizh hag ar bed, ha pridiri liammet muioc'h et o c'houlz.

IV. Choazoù ar leurenourion yaouank

Er lodenn-mañ, an hani diwezhañ, e vo studiet pizh choazioù leurrenniñ rummad nevez ar leurenourezed, leurenourion. Gete a zo daet àr-wel un c'hoant modernaat an traoù a-ziàr ar stumm hag an tem. Soñjoù ha mennozhioù dishañval a zo gete, tostoc'h marse a spered o c'houlz. Aze emañ an dalc'h : daoust ha mod kozh eo ar re arall ? En ur mod, sur eo, e-keñver abegoù a vo displeget pelloc'h. Mes daoust ha mod nevez eo ar re yaouank àr an danvez ha àr an doare ? Mennozhioù a vez difennet a vehe dishañval hrevez ar rummadoù pe graet e modoù dishañval ? Ober a reont get doareoù an c'hoariva memestra. Setu un arroud ag un atersadenn dedennus a c'hellamp kavout er gelaouenn Hopala, niverenn 11¹⁶⁰. Un atersadenn a oa graet get René Lafitte, renour Théâtre (s) en Bretagne hag ivez renour ar strollad Groupement d'Action Culturelle de l'Ouest. Ar strollad-mañ a zo edan gwarez kuzul-rannvro Breizh :

René Lafitte - [...] Cet enrichissement des rubriques plus l'articulation de la revue avec des séminaires de réflexion sont pour nous une manière de réinsérer la revue dans le tissu local sans la régionaliser au sens étroit du terme.

Hopala ! – Et au sens non étroit du terme ?

René Lafite – Ce que je veux dire, c'est que mon approche régionale, ancrée dans la région n'est pas régionaliste au sens où il y a dans ce dernier terme, une inévitable connotation idéologique.

Hopala ! - On peut observer que sur six numéros dernièrement parus, donc couvrant près de deux ans, il n'est pas une seule fois question de théâtre en langue bretonne alors que jusqu'au début du 20e siècle , il y a eu en Bretagne une riche et féconde tradition de théâtre populaire en Bretagne.

René Lafitte – Sur ce point, il ne m'appartient pas (ce n'est ni mon rôle, ni ma compétence) de faire des recherches historiques ; par contre, si des chercheurs font un travail rigoureux et intéressant sur ce thème, nous n'hésiterons pas à en faire état, voire à leur ouvrir nos colonnes. Pour ce qui est des représentations de la troupe Ar Vro Bagan qui joue presque exclusivement en breton, il est vrai que nous n'en n'avons jamais parlé.

160 Hopala, niv 11, atersadenn get René Lafitte a Théâtre (s) en Bretagne, 2002.

Hopala ! - Pourquoi ? Vous consacrez pourtant une part (qui pourrait être plus importante, mais cette part existe) de chaque numéro à une évocation critique de la vie théâtrale en Bretagne. Alors Ar Vro Bagan est hors-champ ? Ou est-ce un choix politique ? Une hostilité personnelle par rapport au parler breton ?

René Lafitte – Non. Je peux vous assurer qu'il n'y a dans la revue aucun interdit – institutionnel ou personnel – à l'égard de la langue bretonne. Mais disons que mon choix est de privilégier un théâtre très contemporain dans sa forme, un théâtre qui sait donner toute sa place au silence, un théâtre productif de formes nouvelles. Or, pour moi, le théâtre d'Ar Vro Bagan est un théâtre par trop démonstratif, une forme théâtrale entravée par une parole prolifique. De mon point de vue, ce n'est pas une forme théâtrale contemporaine.

Hopala ! - Que vous et les rédacteurs de votre revue soyez critiques à l'égard de la forme théâtrale portée par Ar Vro Bagan, cela peut se comprendre. Mais le silence n'est pas de l'ordre de la critique, il est de l'ordre du jugement, sinon du mépris. Le silence comme critique n'est pas acceptable [...]

René Lafitte – Que ça soit clair, je n'ai aucune hostilité à l'égard de la langue bretonne, ni à l'égard de sa présence dans l'espace théâtral. [...] Et si nous n'avons pas parlé des productions d'Ar Vro Bagan, peut-être cela vient-il de ce qu'il est toujours difficile de parler d'une manifestation culturelle avec la forme de laquelle on se trouve en désaccord, spécialement lorsque que cette manifestation présente, comme c'est le cas avec Ar Vro Bagan, d'indéniables aspects militants. [...].

Setu unan ag ar poentoù pennañ ag an disput etre ar rummadoù leurenourion : plas ha pouez ar stourm en o labour. Peseurt stourm, peseurt abegoù, peseurt moaien, peseurt mesaj, peseurt doare... ? Ur sell fallakr a zo àr ar re a stourm re sonn, re frank : « lorsque que cette manifestation présente, comme c'est le cas avec Ar Vro Bagan, d'indéniables aspects militants. », « le théâtre d'Ar Vro Bagan est un théâtre par trop démonstratif, une forme théâtrale entravée par une parole prolifique. De mon point de vue, ce n'est pas une forme théâtrale contemporaine. ». Ret e vize bet dezhe monet dre an didrouz « un théâtre qui sait donner toute sa place au silence » ur voaien seven ag a ali ur seurt emzalc'h pe d'ar gwashañ ur mudadur. C'hoari e brezhoneg ha stourm aveit ar brezhoneg, aveit Breizh a dalv forset-mat bout tamallet da vout rannvroelour : « mon approche régionale, ancrée dans la région n'est pas régionaliste au sens où il y a dans ce dernier terme, une inévitable connotation idéologique. ». Santet e vez mat na pezh serret hag entremar e chom René

Lafitte a-ziâr an c'hoariva e brezhoneg, memes e-keñver e istoer : « si des chercheurs font un travail rigoureux et intéressant sur ce thème, nous n'hésiterons pas à en faire état, voire à leur ouvrir nos colonnes. ». Implij a ra an amzer divizout ha goulenn a ra ur labour skiantel dedennus ha pizh, èl pa vize dibosubl àr an tem-se. Kalz a zivizoù neuze aveit lakaat trawalc'h a gehid ha diskouez na pezh bihan eo e zudi.

N'oa ket tro-spered ar re yaouank. Nebeutoc'h a stourmerien a zo o-zouez. Komprenet o doa marse ar rummadoù yaouank ar rekiz àr o skoaz da vout soutiloc'h, kermer hentoù distroet, dieeun aveit monet pelloc'h.

Kavet e vez muioc'h a blas d'an damvenegiñ, d'an ijin. Leusket e vez muioc'h a frankiz d'an arvesterion. Liveoù kompren ha displegiñ niverusoc'h a zo c'hoazh. Àr ar leurenn e vez dishañval an traoù ivez. E-keñver an danvez eh eus nebeutoc'h a draoù ha kemeret e vez harp kentoc'h doc'h ar son pe ar gouloù aveit kempoueziñ. Implijet e vez ur bochad arouezioù pe lunioù-stil. Ha ma vez plijet tud zo' get kement a frankiz ne gav ket mui pephani e gont get ar c'hiz nevez-mañ. Tamallet e vez rummad ar leurennourion yaouank da ginnig traoù re luziet, rikamanet, re zifetis. N'eo ket mui c'hoarzhin pal kentañ o fezhioù-c'hoari mes dreist-holl prederiñ. N'eo ket bet skarzhet ar fent penna-da-benn hag eüruzamant. Mes n'eo ket mui ar memes fent memestra. Gouniet e oa bet muioc'h a soutilded marse. Gwelet e vez, a-du-arall, o deus ar rummadoù yaouank ur levezon bennak àr razh ar strolladoù c'hoariva micherel. Chañchamantoùigoù a vez gwelet dre-amañ, dre-aze, ivez 'barzh ar strolladoù koshoc'h.

IV.1. Un c'hoant modernaat

Ur c'hwezh a vodernelezh a ziruilh 'barzh ar pezhioù-c'hoari a vez kinniget get rummad ar leurennourion yaouank. Sellet a ra kement doc'h ar stumm hag an danvez. Ur chañchamant a sell a vez gwelet : sell àr ar bed ha àr Breizh, sell àr ar yezhoù, sell àr ar c'houlz. Temoù ha soñjoù nevez a za àr wel, liammet eo get dalc'hoù hor c'houlz, kudennoù hor c'hevredigezh, prederi ar rummadoù yaouank.

IV.1.1. Ur sell dishañval àr ar bed hag àr Breizh

An arouezenn gentañ a vez kavet get ar rummadoù yaouank-se a zo liammet get ur sell dishañval àr ar bed hag àr Breizh. N'eo ket strizh dremmwel arzourion ar rummadoù nevez. Hardishoc'h eo ar leurennourion nevez ha monet a raont pelloc'h geti. Monet a ra pelloc'h an c'hoariva brezhonek gete hag a-drugarez dezhe.

Ur sell ledanoc'h ha digoroc'h a ginnigont. An troc'h kentañ a zo e-keñver Breizh. N'eo ket mui kreizet pep tra àr Breizh. N'eo ket mui Breizh lec'h pennañ pe nameitañ an istoer. Emdroadur an harzoù douaroniel a zo. Ne vez ket mui liammet penn-da-benn tem an abadenn doc'h sevenadur, istoer, hengounioù Breizh. Nebeutoc'h-nebeut a pezhioù-c'hoari a gont darvoudoù istorel e Breizh. N'eo ket mui Breizh a-enep ar peurrest ag ar bed mes Breizh a zo daet da vout un tamm ag ar bed. Ne vez ket mui gwelet un diforc'h ken bras etre Breizh hag ar peurrest ag ar bed. Tremenet omp ag ur sell hiniennel d'ur sell a-stroll. Un dilerc'h ag ar bedeladur, sur a-walc'h, en deus levezonet ivez bed an arzourion e Breizh. Ur sell a-stroll a liamm d'an aliesañ darvoud Breizh mes ivez re ar minorelezhioù arall. Liammoù ha peushañvaldedoù doc'h statud, degouezh pe skeudenn minorelezhioù arall.

An eil chañchamant a-bouez a zo : skarzhet eo bet skeudenn gozh ar Vretoned. Komprenet o deus e oa ur gudenn identifiñ get ar skeudenn-se. N'eo ket mui hañval ar poltred-mañ doc'h ar Vretoned pe ar vrezhonegerion hiziv an deiz. Staget eo doc'h ur bed arall, un amzer paseet. Tudennoù o fezhioù-c'hoari a zo tostoc'h ag o c'houlz. Kuñvaet e vez an dresadenn. Un araokadenn vras a zo ha klask a raont chañch sell an dud àr Breizh hag ar vrezhonegerion. Pellaet e vez ag ar c'hlichedoù ivez.

Ha penaos lakaat àr-wel emdroadur o sell, en ur mod fetis ? Graet e vez a-drugarez d'an tudennoù d'an aliesañ. Kemer a raont harp doc'h an tudennoù hag o arouezioù aveit lakaat an arvesterion da gompren eh eus bet un troc'h. Tudennoù yaouankoc'h o deus : prezeg, chaozioù, prederi, soñjoù dishañval. Lakaet int bet an tudennoù yaouank en ur c'heñver da dudenoù tostoc'h ag ar skeudenn gozh.

'Barzh *Merc'h an eog*¹⁶¹ get Teatr Piba e vez kontet istoer Mair a za en-dro da Gembre, get he dousig Loeiza, aveit obidoù he moereb Gwyneth. Ar forc'hadur etre rummad tudennoù Mair, Loeiza ha Rhys, breur Mair ha rummad tudennoù Mam ha Gwilym, contr Mair, a skeudenn mat tro-spered an tudennoù hrevez o rummad. En ur senenn emañ Mair ha Loeiza é komz a werzh ti-feurm familh Mair. Mair a gont eñvorennoù he deus a-ziàr Gwilym da Loeiza :

Mair, *o vouzc'hoarzhin* - Met aet eo war deneraat gant an amzer ivez. Marteze peus bet ar santimant e oa begdreuz hiziv... Met pa oamp bihan, Gwil' na vouc'hoarzhe 'ken ur wech ar sizhun : da sul, ouzh taol, pa veze lakaet dirak e fri ar podad lipig gant Gwyneth. Ha ma veze un dartezenn vouar da heul, ma...

Mair a'z en he sav da vont da goazezañ war ur garreg Lonket gant he soñjoù.

161 *Merc'h an eog. Op. Cit.*

Mair - Met ne vezemp ket distro en ti-feurm hep klevet un istor digantañ. Digantañ eo 'moa klevet anv eus Siôn Cwilt ha peñseourien Cyntydu, deus arneviou-mor spontus a listri o vont da zrailhañ war ar c'herreg... Gwilym a gonte laouen penaos en doa kavet hon hen-hen-hen tad-kuñv ur yalc'had aour war an draezhenn, da heul ur barrad-arnev-mor. Hag aet da brenañ kerkent ti-feurm kentañ hon familh... N'eo ket sur e vije bet ken divoutin an traoù : c'hwez war o zalioù ha labour kalet kentoc'h.

Un ehanig gant Mair, en em soñjal a ra un tamm.

Mair - Deus pelec'h 'teu an traoù ? Ur paotr bihan zo bet deus Gwilym ivez...Gantañ hunvreoù e-leizh, piv oar, rañjeal ar Beg-Horn marteze... Ken na rankas en em stropañ gant e istorioù kaer... Met piv a oar ha n'on ket bet maget diwar an istorioù-se, listri ha tud oc'h en em gavout war hon zraezhennig... Piv oar ha n'eo ket d'ar c'houlz-se, tro dek vloaz marteze, ma oa savet ennon an c'hoant da...

Loeiza - Da rañjeal ar Beg-Horn, te ivez ?

Loeiza a ziskenn diwar ar gloued, tapout a ra he foellgomz ha krog da luc'hskeudenniñ Mair.

Mair- Ya, moarvat, un dra 'seurt-se... Ha Mam, goude-se, he doa lakaet en he soñj mont da blac'h-kêr... Perak ? 'Vel ma vefe un tu divalav da gement chupenn gaer zo.

Sellet a ra Loeiza ouzh skramm he hezoug, ha neuze, ouzh Mair a ziskouez bezañb nec'het.

Renkañ a ra Loeiza he foellgomz..

Loeiza - Trist out ? Ti moyn cwtsh ?

Mair, *O huanadiñ, hag o vouzc'hoarzhin* -Kement den, kement istor, ar wirionez oa gant Gwilym. « Dyn ei filltir sgwâr oedd », se eo 'pezh vo laret diwar e benn. Un den deus ar bobl en deus dalc'het dre ziviz - ha dre zlead ivez - istor e di-feurm, e barrez, e vro... Goude sellet pizh ouzh an traoù, ar boutinañ eo da istor, ar muiañ a greder ennañ. (*tav*) Met pleg an drama zo gant Gwilym ivez. Da vat. Atav eo bet 'vel-se. Pa vezemp o pourmen gantañ er maeziou, an istorioù a gonte hag a frome anezhañ, a oa istorioù savadegoù a-enep d'an amjustis. Sot oa gant hini merc'hed Becha.

Ar senenn-mañ a ziskouez mat eo echu get ar bed-se, ar rummad-se. Un troc'h arouzel e-touez an tudennoù aveit komz ag emdroadur ar gevredigezh, emdroadur sell an tudennoù. Mair a zo tudenn pennañ en abadenn mes ivez un dudenn ag ar rummad yaouank. N'eus ket dispriz pe mezherbet e-keñver an amzer tremenet-se. Ar c'hontrol eo. Kalz a zoujañs, a garantez he deus Mair e-keñver hec'h eontr hag eñvorennoù prizius a zo liammet getañ : « Met pa oamp bihan, Gwil' na vouse'hoarzhe 'ken ur wech ar sizhun : da sul, ouzh taol, pa veze lakaet dirak e fri ar podad lipig gant Gwyneth. Ha ma veze un dartezenn vouar da heul », « Digantañ eo 'moa klevet anv eus Siôn Cwilt ha peñseourien Cyntydu, deus arneviou-mor spontus a listri o vont da zrailhañ war ar c'herreg... », « c'hwez war o zalioù ha labour kalet kentoc'h. », « Un den deus ar bobl en deus dalc'het dre ziviz - ha dre zlead ivez - istor e di-feurm, e barrez, e vro... »...

Meuleudi ar blaended hag ar gwirvoud. Kontiñ a ra, ivez, penaos e oa bet savet mojenn ti-feurm ar familh get ur yalc'had aour a oa bet kavet àr an draezhenn get an hen-hen-hen tad-kuñv goude ur barrad arnev-mor ha penaos en doa prenet un dachenn ha savet ti-feurm ar familh da c'houde. An treuzkas a zo a-bouez er senenn-mañ. Treuzkas traoù fetis a rummad da rummad èl an ti-feurm. Treuzkas an traoù difetis èl pa gonte Gwilym istoerioù hengounel, èl hani merc'hed Becha, da Vair ha Rhys pa oant bihan.

Mair a zo un dudenn dedennus a-ziàr ar sell nevez àr ar bed. Staget e chom doc'h bed he bugaleaj ha talvoudegezhioù he familh a zo a-bouez bras aveiti. Ne zinac'h netra. Emskiant eo a petra zo bet treuzkaset dezhi. Mes graet he deus un troc'h en he buhez kar e Breizh emañ é chom bremañ, get he dousig. Etre daou ved e chom Mair a-hed ar pezh-c'hoari : Breizh ha Kembre, ar bed paseet hag ar bed a-vremañ. Setu perak e vez implijet ar c'hembraeg get Loeiza pa c'houlenn get Mair : « Trist out ? Ti moyn cwtsh ? ». Da gustum e komz brezhoneg an div blac'h pa vezont asambles. Stag eo ar c'hembraeg doc'h eñvorennoù bugaleaj Mair. Gwelet e vez ar memestra pa lâar Mair a-ziàr Gwilym : « « Dyn ei filltir sgwâr oedd », se eo 'pezh vo laret diwar e benn. Un den deus ar bobl en deus dalc'het dre ziviz - ha dre zlead ivez - istor e di-feurm, e barrez, e vro... ». Penaos menegiñ Gwilym hep menegiñ e vro pe e yezh. Komz ag ar liamm a zo bet treuzkaset dezhi a-ziàr he yezh, he bro a-drugarez d'he familh ha da w/Gwilym peurgetket. Troet e vez ar c'hembraeg e brezhoneg get Mair amañ. N'eo ket un droidigezh ger-ha-ger mes miret e vez ar pouezusañ : spered ar yezh. Miret e oa bet ar c'hembraeg aveit d'e lakaat àr-wel, d'e lakaat da glevout, monet e darempred geti. Ar yezh a lak an arvesterion da gompren e tremen an istoer en ur vro arall hag e komz Mair ag e eontr a zo ag ur vro arall : Kembre. Aveit ar pezh-mañ a oa liesyezhek (kembraeg, brezhoneg, galleg, saozneg ha kreoleg) e oa bet implijet un arload àr pellgomzer hezoug an arvesterion hag un tokarn-selaou, ha d'an arvesterion da zibab ar yezh o doa c'hoant aveit heuliñ an abadenn.

Skouer un dudenn arall a zo 'barzh *Metamorfoz*¹⁶² get Teatr Piba, c'hoazh. Tudenn Abeguile hon boa komzet diàr e benn dija, e-keñver choaz e anv. Un anv aveit komz just a-walc'h ag an arallded hag an hollvedelezh. Heuliet e vez beaj subjektivel Abeguile, e-pad prantad un huñvre. Ar paotrmañ en deus, un devezh bennak, keloù ag e dad-kozh marv ha dianav dezhañ. Ret eo dezhañ kemer e restajoù peotramant e vint kaset da Fréjuz. Un daoust pe zaoust eo aveit Abeguile : petra gober ? « Aze emamp c'hoazh war-lerc'h an taol-tourmant. N'eo ket ni ken avat. Marvet un dra ennomp ha ganet un dra war un dro. Gant sikour hon doueed deomp-ni, eñvorennoù, parlantoù, divizoù difin, e skrivomp istorioù evit klask ur ster... »¹⁶³ e vez kinniget ar pezh-c'hoari get ar gerioù-se get Teatr Piba. Gwelet e vez emdroadur e sell etre penn-kentañ ha fin an abadenn. Klask a ra dirouestliñ itrikoù ha sekredoù e familh. Klask a ra kompren hag adkavet ar liamm. Klask a ra ur ster ag e vuhez mes peseurt ster.

Er prolog e c'hellamp lenn :

Abeguile – Puten... Da goulz 'teus-te choazet evit dont war-wel... A ! Frejuz ! *O lenn unan deus follennoù an doser* : « Demande gracieuse de translation des restes au mémorial de Fréjus, non titulaire de la mention « Mort pour la France »... Meneg mat ebet zoken... Loser jusqu'au bout... 'Oas ket evit chom ahont, non ?... Dont da dorriñ ma revr din da goulz ma vakañsoù... *O lenn follennoù an doserad atav* : « Agent subdivisionnaire de la circonscription coloniale de... Norbert Abéguilé, décédé des suites de fièvre tropicales au dispensaire de... ». Bla bla bla... « Inhumé dans l'annexe du cimetière français de Luang Prabang... Suite à une inondation... Le terrain a été acquis par le groupe chinois Da Wei... Drainage du terrain... Dans le cadre du projet Lao-thai de barrage sur la Nam Ngun, conformément aux accords bilatéraux... Rapatriement dépouille... Fréjus... Caveau de famille... », pff...

Hag er senenn diwezhañ :

Tamm-ha-tamm e weler an hunvre o tont da wir hag ar gwirvoud o vont da hunvre en-dro. Tostaat a ra ur soner ouzh Abeguile evit kempenn e vlev, e abid. [...] An holl, Abeguile en o zouez, a ra bec'h a-benn kaout ul lid a don bras met n'eo ket anat da zen ebet.

Abeguile – Mat. Deomp dezhi. Norbert, lakaet 'vi amañ da c'hortoz ma vin distro deus ma vakañsoù... 'Bado ket pell... 'Rabat dit bezañ fachel, d'am soñj ez eus bet graet gwasoc'h dit... Graet 'm eus war-dro Eva, 'giz 'poa diskouezet din... Mont a raio bremañ, sur...

Setu aze, pozet out da repoziñ amañ. Bremañ emeon o vont de brennañ war da lerc'h. 'Benn div sun e teuin da gerc'hat ac'hanout hag e kasin ac'hanout da di Eva, 'balm', 'hend-all e vi kaset war-eeun da Frejuz, ha ma 'm eus komprenet mat, n'eo ket lerc'h an c'hoari las eno... Met

162 *Metamorfoz. Op. Cit.*

163 *Metamorfoz*, lec'hienn internet Teatr Piba.

bremañ diouzhtu 'm eus ket amzer. Laouen 'vo Eva, d'am soñj. Mat. Serret 'vi amañ, hañ, mat eo, graet eo, prennet 'vo ganin.

Soniñ a ra Ar Fanfar un ton obidoù.

N'eo ket mui ar memes darempred etre Abeguile hag e dad-kozh Norbert e penn-kentañ hag e fin an abadenn. Er prolog e komz Abeguile ag un den a zo « deuet war-wel » a-doal trumm. Hegaset ha fuloret eo Abeguile : « Da goulz 'teus-te choazet evit dont war-wel », « Dont da dorriñ ma revr din da goulz ma vakañsoù »... Dispriz ha fulor a vez santet a-ziàr an tad-kozh-se : « Meneg mat ebet zoken... », « Loser jusqu'au bout... », « 'Oas ket evit chom ahont, non ? »... Lennet e vez a-vouezh uhel ar lizher ofisiel a zo bet skrivet e galleg ag en em gemmesk get prederi Abeguile e brezhoneg. Ar galleg, yezh ar velestradurezh, aveit diskouez an disrann : disrann an amzer ha disrann douaroniel. Diskouez a ra un darempred difed, neptu. E fin ar pezh-c'hoari e aoz Abeguile ur seurt lid, obidoù aveit e dad-kozh a zo daet da vout Norbert bremañ. Doujañs ha hegarated a zo daet àr-wel. Komz a ra dezhañ èl pa vident tostoc'h an eil doc'h egile. Klask a ra e frealziñ pa lâr : « Graet 'm eus war-dro Eva, 'giz 'poa diskouezet din... Mont a raio bremañ, sur. ». Adsavet en deus ar liamm e familh, komprenet en deus traoù, pardonet en deus traoù ivez. Diskouez a ra eo echu get ur rummad hag un tremen a zo bet graet d'ar rummad yaouank.

Setu an dalc'h aveit leurenourion ar rummadoù yaouank : paouez get ar c'hlichedoù, torriñ skeudenn gozh ar Vretoned hep dinac'hiñ o gwrizioù. N'eo ket o fal skarzhiñ pep tra a oa bet difennet get ar rummadoù koshoc'h. Just a-walc'h : kenderc'hel a raont da gomz a Vreizh, ag ar brezhoneg mes en ur mod dishañval. Ur mod nevez, modernoc'h, marse, mes dreist-holl tostoc'h a spered o c'houlz.

IV.1.2. Plas ha sell àr ar brezhoneg hag àr ar yezhoù arall

Ma vez diskouezet ur skeudenn dishañval ag ar Vretoned hag ar vrezhonegerion get rummad yaouank ar leurenourion e vez heuliet ar memes hent aveit ar yezh.

C'hoari a raont get skeudenn ha statud ar yezhoù a zo 'barzh spered an dud. Diskuliiñ rakvarnioù, skiant ar mad, emzalc'hioù anienel a vehe gourc'hemennet get ijin an holl. Soñjoù pe emzalc'hioù a en em gav en-dro, a bad er gevredigezh a-ziàr ar yezhoù. Klask a reont lakaat àr wel, diskouez d'an arvesterion, kudennoù ar yezhoù minorel. C'hoant o deus diskouez n'eo ket ur yezh kozh ha marv ar brezhoneg mes ur yezh a c'hell bout doc'h hec'h amzer. Ur yezh a bad hag a bado. Ur yezh he deus gouiet emdroiñ. Labourat a reont aveit ma vo gwelet muioc'h ha pelloc'h ar brezhoneg hag ar yezhoù minorel en c'hoariva. Mes n'eo ket un daolenn ideelet memestra. Emskiant int ag ar gwask a

zo àr ar brezhoneg hag àr ar yezhoù minorel dre vras. Kenderc'hel a raont ar stourm tennet a herezh an c'hoariva brezhonek é tiskuliñ an diglosiezh. N'eus ket mui ar brezhoneg, ar yezh vihan, hag ar galleg, ar yezh mestr, hepken mes ledanoc'h ha luzietoc'h eo an traoù. Ur wezh oc'hpenn e tremenamp ag ur sell hiniennel d'ur sell hollvedel.

Un nebeud skouerioù aveit skeudenniñ ar poent-mañ : 'barzh *Eden Bouyabes*¹⁶⁴ get Teatr Piba e vez komzet a vinorelezhioù er bed a-bezh kar tremen a ra an istoer en ur c'hamp repuidi. 'Barzh *Merc'h an eog*¹⁶⁵ get Teatr Piba e vez keñveriet degouezh Breizh ha hani Kembre, degouezh ar brezhoneg ha hani ar c'hembraeg. 'Barzh *Kakaw*¹⁶⁶ get La Obra e vez komzet e brezhoneg hag e tzotsil aveit kontiñ istoer ar chokolad, hag aveit komz a hengounioù ha lidoù Maya.

Kemer a ra perzh Teatr Piba er raktres Europe Créative, anvet *Phōnē : Giving minority languages a voice*, etre miz Ebrel 2022 ha miz Here 2024. Àr lec'hienn internet ar strollad Piba e c'hellamp lenn : « Les structures qui participent au projet : Le Tryater basé à Leeuwarden aux Pays-Bas – Frison ; le Deutsch-Sorbisches Volkstheater à Bautzen en Allemagne – Sorabe ; le Teatrul Evreiesc de Stat à Bucarest en Roumanie – Yiddish ; le Stadttheater Bruneck à Bruneck en Italie – Ladin ; le Teatr Piba à Brest en France – Breton ; le Kvääniteatteri à Storslett en Norvège – Kven ; le Dramático Galego à Santiago de Compostela en Espagne – Galicien et le théâtre Fibin dans le Connemara en Irlande – Irlandais / Gaélique. Avec la Hanze University des Sciences Appliquées à Groningen aux Pays-Bas et l'Université de Leipzig en Allemagne.

« *Phōnē – Giving Minority Languages a Voice s'attachera à développer un réseau d'artistes européen appartenant à une minorité linguistique, au-delà des frontières linguistiques et culturelles. Phōnē veut contribuer activement à la vitalisation des langues et cultures minoritaires vulnérables et tentera de leur donner une voix, une scène, ainsi qu'à bâtir une plateforme d'échange favorisant la circulation des artistes et des œuvres. (...) Tout le travail artistique ambitionnera de travailler « à partir de » et avec les communautés. L'établissement d'une grammaire commune, d'écritures et de dramaturgies se nourrissant de collectages constituera le socle commun des 8 projets de création. (...) »*

Chacune de ces compagnies s'engage dans une écriture et une production spécifique, qui se déploiera sur les deux prochaines années. Entre autres résultats finals attendus, une traduction vers l'une ou plusieurs des huit langues d'expression du projet *Phōnē* et la présentation d'une maquette dans certaines des régions partenaires.

164 *Eden Bouyabes. Op. Cit.*

165 *Merc'h an eog. Op. Cit.*

166 *Kakaw*, strollad La Obra, 2022. Kavout a rahet un diverriñ er lodenn Korpus, e p. 137

Le Teatr Piba y proposera le projet de création « Dépassés / BASTARDS ».¹⁶⁷

Un abadenn arall a zo 'barzh ar raktres-mañ : *Roud / Diroud*¹⁶⁸, a-zià an treuzkas. Savet eo bet get Mona Caroff ha Teatr Piba.

Teatr Piba a zo entanet get seurt raktresoù. « *L'action culturelle, désormais appréhendée comme un instrument de cohésion sociale et de développement, est devenu un champ transversal des politiques locales, c'est notamment ce dont témoigne la démultiplication des projets artistiques et culturels de territoire. Ces derniers, en faisant appel à la participation des citoyens, invitent à repenser les rapports entre les habitants, les artistes et les acteurs publics et privés* »¹⁶⁹. O fal a zo neuze monet e darempred get an dud en ur lec'h resis. *Histoire d'objets*¹⁷⁰ e oa bet savet get tud enez Eusa, e 2020. Un abadenn a-zià glad an inizi, traoù ha memor familhoù an inizi.

Pelloc'h oant bet e 2022 get ur pezh-c'hoari a oa ar yezh, ar brezhoneg, an tem pennañ anezhañ. E Pont-Skorf e oa bet savet *Neizheta, elle niche où la langue ?*¹⁷¹. Kinniget e vez ar pezh-c'hoari e mod-se get Teatr Piba : « Qu'elle soit présente en creux (regret de ne pas la parler, de ne pas l'avoir transmise) ou en relief (transmission active, militantisme), la langue bretonne est là, au quotidien, elle nous construit et nous entoure. Mais où précisément ? Où se niche-t-elle ? C'est à cette question que notre projet veut répondre de manière ludique, inclusive et joyeuse.

Il s'agira de questionner le rapport que nous entretenons à notre langue, à nos langues : celles qui nous suivent, qui sont invisibles ou transparentes, celles qui nous embarrassent ou celles que nous semons, celles que nous cachons ou que nous poursuivons. Le projet ambitionne une approche collective qui s'attacherait à déceler, dans nos témoignages intimes ou nos anecdotes familiales, les relations, en aller-retours, avec ces langues héritées et couvées ; ces langues qui comme autant de territoires fantômes, nous habitent, nous façonnent ; ces langues qui, en creux, travaillent et poussent, se ramifient et se transforment de génération en génération.

Le projet veut aborder cette sorte d'archéologie intime en donnant à entendre, avec humour et distance, une polyphonie intergénérationnelle en va-et-vient entre réel et fiction, en va-et-vient entre les langues, guidés par une question : elle se niche où la langue ? »¹⁷². À ar leurenn un abadenn radio faos mes skignet aveit gwir, àr-eeun, àr wagennoù Radio Bro-Gwened. Ur « radioforum » mod-kozh. Charles Etchepareborde ha Katell Maligorn, an daou abadennour, Hugo, ar « chauffeur de salle » a bepeil etre atersadennoù, kelaouadennoù hag enklaskoù aveit adkavet ar yezh. Ar liamm get ar yezh a zo tem pennañ an abadenn. Katell Maligorn a ra àr-dro neudenn an abadenn : adkavet

167 Àr lec'hienn internet Teatr Piba : <https://www.teatrpiba.bzh/project/phone-giving-minority-languages-a-voice-2022-2024/>

168 *Roud / Diroud*, Mona Caroff ha Teatr Piba, 2024, <https://www.teatrpiba.bzh/project/roud-diroud/>

169 LANGEARD Chloé, *Les projets artistiques et culturels de territoire. Sens et enjeux d'un nouvel instrument d'action publique*, 2015.

170 *Histoire d'objets*, Teatr Piba, 2020.

171 *Neizheta, elle niche où la langue ?*. Op. Cit.

172 *Neizheta, elle niche où la langue ?* àr lec'hienn Teatr Piba, <https://www.teatrpiba.bzh/project/elle-niche-ou-la-langue/>

ur sonenn hag ur c'hanour a vez klevet àr un enrolladenn gozh graet e Pont-Skorf blezadòù 'zo. Furchal a ra 'barzh straedoù Pont-Skorf hag e ya e darempred get an annezourion.

Katell Maligorn - « Et Oui ! La langue bretonne semble toujours être là, se cacher dans les moindres recoins de notre Bretagne... profonde, secrète et mystérieuse. Et aujourd'hui, nous avons souhaité vous convier à une aventure fabuleuse : une chasse au trésor fantastique où pour se faire nous allons tous essayer de dénicher la langue. »

Un c'hoari a veit adkavet ar yezh. Un ton skañv ha farsus a veit komz a draoù a-bouez get muioc'h a soutilled c'hoazh. Àr ar leurenn e chom Charles Etchepareborde hag e ra àr-dro an dud pedet, get sikour Hugo, a veit an abadenn. E deroù an abadenn e vez klevet testeni tud a lâer eo ar brezhoneg yezh ur rummad kozh, nebeutoc'h-nebeut a roudoù ag ar brezhoneg a zo. Ur seurt doujañs o deus, memestra, a-ziàr ar yezh a vehe un elfenn istorel a veit lod. N'eo ket o yezh èl a lâer Annie :

Annie – La langue bretonne, c'est la langue de mes parents, de mon pays mais ce n'est pas la mienne.

Charles – Comment ça ?

Annie – Bin... On ne m'a jamais parlé breton personnellement.

N'eo ket tout komz ha kompren brezhoneg, pe gerioùigoù d'an nebeutañ : amann, bara... Tamm-ha-tamm e vez diskouezet d'an arvesterion eh eus brezhoneg c'hoazh, un tamm pep lec'h tro-dro dezhe, ha pa ne vehent ket emskiant a bep tra : ar lec'hanvadurezh, an anvioù-tud, ar « bretonnismes », ar sonerezh hag ar c'han, ar panelloù-hent...

Ur gelaouadenn fromus-tre a oa bet graet e ti ar re gozh Pont-Skorf. Setu un nebeud tennadoù ag ar pezh a oa bet enrollet 'barzh « Aux couleurs du temps », ti ar re gozh get un nebeut annezourion :

Klañvdiourez – Julienne ! Julienne !

Julienne – oui ?

Klañvdiourez – Julienne, on va vous parler breton

Julienne – Oui... *Àr ton ur souezh bras.* Ah oui ??

Komedian – Boñjour deoc'h itron.

Julienne – Bah oui c'est comme ça... c'est comme ça... bah oui...

Komedian, *é c'hoarzhin* - c'hwi a gomza brezhoneg ?

Julienne – Bah oui... Bah oui... [...]

Ar vaouez 2 – C'était comme une autre langue hein. C'était... c'était... ouais...

Klañvdiourez – Vous avez deux langues.

Ar vaouez 2 – Bin le français puis... et ça quoi... Ce qu'on connaît en breton. Bin c'est tout hein. Bin ouais...

Komedian – S'il y avait un mot par exemple dont vous vous rappelez ? Tout à l'heure on disait

« labourat ».

Ar vaouez 2 – Labourat, ya.

Komedian – Et s'il y avait un autre mot par exemple ?

Ar vaouez 2 – Ar sul. Ar sadorn. Euh... Je ne sais pas... Ar park !... Ar botoù-koad.

Klañvdiourez – Vous avez des choses à dire madame Le Guen ? [...] Vous avez des choses à dire en breton ?

Itron Le Guen – Oui je peux dire ! Je peux parler en breton moi !

Klañvdiourez – Bin oui, vous pouvez parler en breton vous !

Ar vaouez 2 – Blev, c'est les cheveux. [...]

Ar vaouez 3 – Ah oui ça c'est le breton mais c'est pas le breton de chez nous ça. Oh non ! « Langue où es-tu ? ». Mais je comprends pas. C'est pas le breton de chez moi. De chez nous quoi si on veut.

Komedianez – Et là c'est en français.

Ar vaouez 3 – Oui je sais bien. « Langue, langue où es-tu ? Langue je vais te »... Je ne vois pas.

Komedianez - « Te dénicher » !

Ar vaouez 3 – Ah oui ! « Langue je vais te dénicher ». Bin oui mais... Comment expliquer ça en breton ?

Komedianez - « Langue, langue ou es-tu ? », comment vous diriez-vous du coup en breton ?

Ar vaouez 3 – An teod, an teod e menn e oc'h ? An teod, an teod e menn e oc'h ? Eh am da vonet da gavet ac'hanoc'h [...] C'est pas mon breton ça. Non. [...] Non je ne comprends pas. C'est pas le breton de chez nous ça.

Komedianez – Mais si je vous dis « Langue, langue ou es-tu ? », vous diriez comment en breton ?

Ar vaouez 3 - hum... langue, langue 'zo aet kuit. Ho teod, ho teod 'zo aet kuit. Aet eo kuit ho teod. C'est ça...

Komedianed – Mersi bras.

Ar vaouez 3 – C'est ça... que la langue est partie quoi... bin oui...

Komedianez – Elle est partie où alors ?

Ar vaouez 3 – Ah bah ça, j'sais pas où... ou on l'a avalé ou bien... ma 'peus lonket ho teod... bin... comment on va dire ça ? Ma 'peus lonket ho teod... Gellit ket mui kaozeal. Là vous ne pouvez plus parler... Voilà... Là il y a une fin à tout... La langue c'est la fin de la vie quoi... oui... voilà.

Komedianed – Mersi bras deoc'h.

Ar vaouez 3 – De rien, pas pour ça toujours ! [...]

Soñjòù a bep seurt a zo en tennad-mañ. Souezhet-bras eo Julienne pa glev eh eus tud a zo daet da gomz brezhoneg gete, geti : « Oui... Ah oui ?? ». Ar sell àr ar brezhoneg a zo liammet get ar rummad tud-se : « C'était comme une autre langue hein. », « Bin le français puis... et ça quoi... Ce qu'on connaît en breton. ». Memestra pa vez trugarekaet an trede maouez he deus komzet brezhoneg get ar gomedianed e reskont : « De rien, pas pour ça toujours ! ». Komzet e vez ag ar yezhoù e mod-se : « le français » ha « ça ». « Ça » aveit komz ag ar brezhoneg. « Ça » a zo ur raganv-diskouez a c'hell bout implijet aveit komz ag un dra diziviz. Èl ma oa sklaer statud ar galleg mes amsklaer hani ar brezhoneg. Ur sell a zo liammet get ur rummad-tud resis en deus bevet droukziforc'h hag a zo bet desavet er skol get an difenn da gomz brezhoneg. Donet a ra en-dro memestra get an eil maouez pa vez goulennet geti hag-eñ he deus soñj ag ur ger bennak e brezhoneg. Ar c'homedian a lâr dezhi : « Tout à l'heure on disait « labourat ». ». Hag hi a gomze galleg hepken betak ar poent ma reskont : « Labourat, ya. ». Mes skouer an trede maouez a zo, marse, an hani dedennusañ. Pa vez goulennet geti treiñ ar frazenn-mañ e brezhoneg : « Langue, langue où es-tu ? Langue, langue je vais te dénicher. ». N'eo ket troet « langue » get ar meizad sokiologel « yezh » mes get ar lod ag ar c'horf « teod ». Aveiti e vez liammet ar brezhoneg get ur bed pleustrekoc'h. Ur chañchamant pouezus a sell a zo da notiñ ivez get an trede maouez. Diaezamantoù he deus da dreiñ ar frazenn ag ar galleg d'ar brezhoneg. Klask a ra en em gaeraat. Krogiañ a ra get : « c'est pas le breton de chez nous ça ». Kenderc'hel a ra get : « C'est pas le breton de chez moi. ». Hag echu a ra get : « C'est pas mon breton ça. ». Ur seurt adperc'henniñ ag ar brezhoneg a za àr-wel. He yezh a za da vout en-dro, tamm-ha-tamm ha dre forzh komz get ar gomedianed. Adkavet ur seurt fiziañs hag ur seurt lorc'h get he mestroniñ ag ar yezh. Fromusoc'h c'hoazh eo ar senenn-mañ pa lak dre gomz, an trede maouez, he c'herse hag he foan a-ziàr he yezh. Pa vez goulennet geti treiñ « Langue, langue où es-tu ? » e tro ar reskont e « hum... langue, langue 'zo aet kuit. Ho teod, ho teod 'zo aet kuit. Aet eo kuit ho teod. C'est ça... ». Ar yezh a zo aet kuit aveiti neuze. N'eo ket kuzhet mes aet kuit. Kenderc'hel a ra : « Ah bah ça, j'sais pas où... ou on l'a avalé ou bien... ma 'peus lonket ho teod... Bin... comment on va dire ça ? Ma 'peus lonket ho teod... Gellit ket mui kaozeal. Là vous ne pouvez plus parler... Voilà... Là il y a une fin à tout... La langue c'est la fin de la vie quoi... Oui... Voilà. ». « Ma 'peus lonket ho teod... Gellit ket mui kaozeal » da lâret eo un dra a zo chomet e-barzh, enni mes un dra tavet memestra. Lonkiañ aveit derc'hel, serriñ, chom mut. « Voilà... Là il y a une fin à tout... La langue c'est la fin de la vie quoi... Oui... Voilà. ». Ar liamm kreñv etre yezh ha buhez aveit diskouez na peseurt talvoudegezh he deus ar gomz.

Prederiñ a ra Teatr Piba àr goulenn ar yezhoù ha marse, resisoc'h àr goulenn ar brezhoneg, setu petra vez lennet àr o lec'hienn internet just a-walc'h : « La langue, les langues – bien sûr, sont au cœur de notre travail. Tout d'abord, parce que la langue bretonne, nous en sommes convaincus, est porteuse d'un imaginaire, d'une certaine vision poétique du monde, qui témoigne encore d'un lien

« privilégié » avec les éléments et la nature. Par ailleurs, parce qu'elle cultive de fortes particularités dialectales, la langue bretonne appelle sans cesse à un travail sur les musicalités, les rythmes, des prosodies particulières, dont la richesse de la création musicale bretonne peut témoigner. Mais également en ce qu'elle pose selon nous un véritable défi: comment donner à entendre ce théâtre au-delà des frontières -réelles ou plus abstraites – fixées par la langue -la fameuse ligne Loth ? Car comment mettre en scène, en effet, la restitution d'une parole, d'une dramaturgie, en dépassant des formes qui pour être « efficaces » – sur-titrage, oreillettes proposant une traduction « simultanée »-, n'en sont pas moins froides, voire chirurgicales, lorsqu'elles se rapportent au spectacle? Le défi à relever ici est-il donc technologique ? Artistique ? Linguistique ? L'énergie, le corps et la présence de l'acteur peuvent-ils nous permettre de dépasser ce 'problème' posé par la langue ? Ici encore, la question reste ouverte. »¹⁷³. Amañ e vez komzet ag ar yezhoù dre vras. Diskouezet e vez o c'hoant labourat àr ar yezhoù ha gete. Ar brezhoneg, anat eo, mes pas hepken. Perak ar brezhoneg neuze ? Ne vehe ket implijet ar brezhoneg aveit servij pal an efedusted mes aveit degas un tamm barzhoniezh hreveze. Komz a raont tud Teatr Piba ag ar brezhoneg en deus « encore [d']un lien « privilégié » avec les éléments et la nature. ». Spered ar brezhoneg a vize dishañval a re ar yezhoù brasniver ? Meuleudi ur seurt plaended, gwirvoud. Ar brezhoneg a vehe ur yezh onestoc'h en ur mod ? Pe ur yezh 'dize miret spered an amzerioù kozh kar ur liamm « privilégié » a zo etre ar brezhoneg hag an natur « c'hoazh » ? Ar ger « c'hoazh » a zo talvoudus amañ. Ur yezh kentañ, gouez, eeunek ? Kenderc'hel a raont é poueziñ àr sonerezh ar yezh, ar yezh a zo ur sonerezh hec'h-unan : « elle cultive de fortes particularités dialectales, la langue bretonne appelle sans cesse à un travail sur les musicalités, les rythmes, des prosodies particulières, dont la richesse de la création musicale bretonne peut témoigner. » Implij ar brezhoneg aveit e varzhoniezh, e sonerezh. An dra a za àr-wel a zo ur seurt kred arzel aveit justifiñ implij ar brezhoneg. Ne vez ket arc'het ur liamm bennak get ar stourm é sevel pezhioù-c'hoari e brezhoneg, hag e yezhoù arall, ha skrivet e vez splann : « Le défi à relever ici est-il donc technologique ? Artistique ? Linguistique ? ». N'eus nameit defioù teknologek, arzel pe yezhoniel é c'hoari get ar yezhoù ; hag ar brezhoneg èl ar yezhoù arall. Ne vez ket harzet labour Teatr Piba àr ar brezhoneg hepken. Strishoc'h e vize bet ar framm : « comment donner à entendre ce théâtre au-delà des frontières -réelles ou plus abstraites – fixées par la langue ». Setu perak ar yezhoù dre vras. Krouiñ liammoù, sevel pontoù etre ar yezhoù. Lakaat da welet degouezhioù ar yezhoù minorel tro-dro ar bed da skouer. Mes penaos labourat get kement a yezhoù ? Komz a gudenn an c'hoariva liesyezhek : penaos leurrenniñ ar yezhoù, penaos leurrenniñ get meur a yezh : « comment mettre en scène, en effet, la restitution d'une parole, d'une dramaturgie, en dépassant des formes qui pour être « efficaces » – sur-titrage, oreillettes proposant une traduction « simultanée » [...] L'énergie, le corps et la présence de l'acteur peuvent-ils nous

173 Àr lec'hienn Teatr Piba, <https://www.teatrpiba.bzh/charte/>

permettre de dépasser ce ‘problème’ posé par la langue ? ». N'eus reskont erbet mes klasket e vez berped toullañ hentoù nevez.

IV.1.3. Prederi liammet get hor c'hevredigezh ha hor c'houlz

Er fin, eh eus un emdroadur diwezhañ a-ziàr an danvez get rummad yaouank ar leurenourion : temoù ar pezhioù-c'hoari. Èl hon boa lâret uheloc'h dija : n'eo ket mui kreizet pep tra àr Breizh. N'eo ket mui Breizh lec'h pennañ pe nameitañ an istoer. N'eo ket mui liammet temoù ar pezhioù-c'hoari doc'h hengoun, istoer pe sevenadur Breizh hepken. Ar levezonioù-se a vez kavet, lennet c'hoazh memestra er pezhioù-c'hoari. Daveoù a vez graet, èl-just, mes an temoù a zo bremañ tostoc'h a gudennoù, a brederi ar gevredigezh a-vremañ.

Klaskamp kaout ur brassell àr un nebeud pezhioù-c'hoari a-vremañ.

Krogamp get ar strollad La Obra a zo « ur gompagnunezh c'hoariva brezhon-liesyezhek ».. Aveit lâret un tamm hiroc'h a-ziàr ar strollad La Obra e c'hellamp lenn àr o lec'hienn internet : « Ur gompagnunezh c'hoariva eo Strollad La Obra, bet savet gant Céline Soun e Chile e 1999 ha staliet hiziv an deiz er Pont (Pontekroaz) e Penn-ar-Bed. E meur a vro e Amerika ar Su (Chile, Mec'hiko, Guatemala) e oa bet krouet oberennoù-c'hoari gant ar strollad. Diwar-vremañ e vez staliet La Obra e Breizh. Kentañ danvez he arvestoù a c'hoarvez diouzh debordamant al leur-c'hoari, kej ha meskaj, sevenadur ha yezhoù ar re wasket (ar brezhoneg en o zouez). Dre-se e ya alies La Obra da dapout krog e dalc'hoù pennañ hor c'hevredigezh : ekologiezh, divroañ, gouennelouriezh, ingalded etre ar merc'hed hag ar baotred, bedeladur ha kement ‘zo. [...] »¹⁷⁴.

Get an abadenn *Kakaw*¹⁷⁵ e vez kontet istoer ar chokolad : penaos e veze gouniet ar c'hakao ha fardet ar chokolad, e Amerika Latina, e-raok, ha penaos e vez graet bremañ. Komz ag industri ar c'hakao aveit diskuliñ : ar gevredigezh beveziñ, aozioù labour kriz ha direizh ar beizanted e Amerika Latina, gwask ar re c'halloudus àr ar re vresk, an dizeur ekologel. Mes komz ivez ag ar yezhoù : ar brezhoneg hag an tzotzil, ur yezh Maya. Diskouez « livioù an hengoun hag al lidoù Maya » aveit sevel ur liamm etre an daou sevenadur hag an div yezh vinorel.

Àr lec'hienn ar strollad Paritito e c'hellamp lenn o c'hinnig e mod-se : « Bodañ a ra *Paritito* komedian.ez.ed liammet gant an c'hoant c'hoari gerioù gwirion, re hor gwirionezioù deomp. Dibunañ a reomp un doare teatr diazezet war ur selaou dreist-aketus, ha red ar c'homzoù divoutin. Kinnig a reomp e kredfemp en em welout, klevout an eil re ar re all. Ha n'eo ket hen ober evit ober van. Hen ober da vat ne laromp ket! [...] Dre an teatr-mañ e sav ur

174 Àr lec'hienn internet strollad La Obra, <https://laobra.bzh/association>

175 *Kakaw. Op. Cit.*

goulenn ennomp : piv omp-ni, maouezed, brezhonegerien, tud distabilaet, breskaet, divroet, an holl ac'hanomp ha ne vezomp ket kaset gant tizh bras an doare nemetañ da soñjal, tizh ar muiañniver ? Piv omp-ni, e vez graet ac'hanomp “an dud” gant an dud? »¹⁷⁶. Get o abadenn *Privezioù publik*¹⁷⁷ e vez kontet istoer peder maouez en ur greizenn goñvers lec'h bennak e Breizh. Choazet o deus aveit o fezh-c'hoari ur lec'h dic'hortoz mes strategel, ur lec'h prevez ha publik àr un dro. Lec'h tremen maouezed a bep seurt, a bep oad. Lec'h kuzhutadennoù, kengred, selaou, lec'h ar c'homzoù gwirion. Ur seurt repu. Amañ e vez komzet a feminism, a dud o deus chañchet o reizh pe o deus un identelezh dishañval (reizh ha jener), a wirioù ar maouezed, a feulster a-enep ar maouezed. Mes komzet e vez ivez a verzioù ar yaouankiz, ar vraventez, a barfeted a lak ar gevredigezh àr skoaz ar merc'hed. Tamallet e vez ar gevredigezh batriarkel ivez. « Petra a chom en XXI^o kantved deus komzoù ar maouezed kenetreze ? Penaos bevañ hon feminismoù hiriv an deiz ? Petra a chom d'ar maouezed da vevañ hepte ? Penaos e tremen komzoù ar maouezed diwar-benn ar feulster ? Evel maouezed, petra hon eus da lavarout ha ne c'hloazfe ket ac'hanomp ? Peseurt lodenn deus hon buhez e vev ar brezhoneg enni ? Prevez pe publik ? Piv a choaz peseurt yezh evit peseurt implij ? Piv a c'hell c'hoazh kemer amzer da selaou ouzh ar re all ? Petra eo deuet hor c'hengred da vezañ ? »¹⁷⁸.

Un abadenn a gomz neuze kement ag ar feminism hag ar brezhoneg. Lakaat àr-wel ar liamm etre an daou sujed : hani ar gwask. Gwask àr ar maouezed, gwask àr ar yezh. Komz a ra a wir ar maouezed da gomz : « Petra a chom en XXI^o kantved deus komzoù ar maouezed kenetreze ? [...] Penaos e tremen komzoù ar maouezed diwar-benn ar feulster ? Evel maouezed, petra hon eus da lavarout ha ne c'hloazfe ket ac'hanomp ? » mes ivez ag ar gwir da gomz e brezhoneg : « Peseurt lodenn deus hon buhez e vev ar brezhoneg enni ? Prevez pe publik ? Piv a choaz peseurt yezh evit peseurt implij ? ». Diskuliiñ na pezh diaes e chom aveit ar maouezed, hiziv an deiz, bout selaouet, ha, bout klevet marse muioc'h c'hoazh. Na pezh amjust e chom degouezh ar brezhoneg ha harzet e implij. Diskouez na pezh poanius beviñ an daou zegouezh-mañ. Penaos e lak ar gevredigezh da vout re strizh kaoued ar brezhonegerezed.

Get Teatr Piba e vez tabutet ivez àr temoù an amzer-vremañ. Un nebeud gerioù a-ziàr ar strollad a vez kavet àr o lec'hienn internet : « Sa création est la suite logique des rencontres et collaborations de différents artistes ayant en commun la langue bretonne, et dont les parcours croisés et les expériences partagées les ont conduits à un même désir : un théâtre en langue bretonne contemporain, vivant, ouvert sur le monde. Pour évidente qu'elle soit, cette rencontre et ce désir suscitent de réels et sincères questionnements sur les enjeux posés par la création d'une compagnie

176 Àr lec'hienn internet Paritito, <https://paritito.com/>

177 *Privezioù publik. Op. Cit.*

178 *Privezioù publik* àr lec'hienn internet Paritito, <https://paritito.com/archives/>

de théâtre professionnelle en langue bretonne aujourd'hui : Quel public visons-nous ? Du breton, oui, mais quel breton ? Quelle place peut avoir un public non brittophone dans une telle création ? Et plus largement encore, peut-on faire le pari d'une création en langue bretonne qui « s'exporte » ? [...] Dès lors, les objectifs de la compagnie semblent se dessiner plus nettement: car, au-delà du défi posé par l'utilisation d'une langue minoritaire – avec tout ce qu'implique un tel postulat, nous souhaitons interroger une époque qui, dans un contexte politique et social difficile, semble plus favorable à un nivellement culturel global qu'à l'émergence de particularismes et à la subsistance de formes artistiques singulières – voire, subversives. Pourquoi alors est-il si important de faire entendre les voix des minorités, tout en assumant parfaitement la réalité et la richesse des métissages et des échanges ? Cultures minoritaires, aujourd'hui, qu'est-ce que ça veut dire ? D'où venons-nous ? Que sommes-nous ? [...] »¹⁷⁹.

Un c'hoant modernaat dre « un théâtre en langue bretonne contemporain, vivant, ouvert sur le monde. ». Un c'hoariva a-vremañ a ne vehe ket riell. Un c'hoariva a ginnigehe stummoù nevez hag ur sell digor àr ar bed. Labourat get ar brezhoneg ha kempoueziñ get harzoù fetis implij ar yezh : « Du breton, oui, mais quel breton ? Quelle place peut avoir un public non brittophone dans une telle création ? Et plus largement encore, peut-on faire le pari d'une création en langue bretonne qui « s'exporte » ? ». Ur sell digoroc'h hag un c'hoant astennerezh. Monet a ra pelloc'h o c'hoant hag implij ar brezhoneg, implij ur yezh vinorel en o labour. Implij ar brezhoneg, ar yezhoù minorel aveit komz ag ar c'houlz, ag ar bed : « une époque qui, dans un contexte politique et social difficile, semble plus favorable à un nivellement culturel global qu'à l'émergence de particularismes et à la subsistance de formes artistiques singulières – voire, subversives. ». Foata ket, èl ma vez lâret e galleg, « regarder par le petit bout de la lorgnette ». Da lâret eo ne fellehe ket sellet doc'h ur lod bihan ag an traoù ha marse monet re-bell geti, gwallekaat an hollad, kaout ur sell re-strizh... Diverkiñ, levniñ an dibarelezhioù neuze ? Setu an diskoulm ? « Pourquoi alors est-il si important de faire entendre les voix des minorités, tout en assumant parfaitement la réalité et la richesse des métissages et des échanges ? ». Setu an diskoulm a vez kinniget gete, puñsaat 'barzh pinvidigezhioù ar sevenadurioù minorel, krouiñ liammoù hag eskemmoù etreze aveit reiñ muioc'h a-bouez d'o labour, muioc'h a dregern d'o mesaj. Kenlabourat get minorelezhioù arall aveit monet pelloc'h. Setu petra 'oa bet graet get *Merc'h an eog*¹⁸⁰. Un abadenn liesyezhek (brezhoneg, galleg, kembraeg, saozneg, kreoleg) a oa bet savet get an Theatr Genedlaethol Cymru e Kembre. *Merc'h an eog* a gont istoer Mair a za en-dro, get he dousig Loeiza, en he familh e Kembre aveit obidoù he moereb. Amañ e vez komzet a Vreizh ha Kembre, ag ar yezhoù minorel, ag ar wask àrne, ag ar c'hudennoù liammet get o statud, o skeudenn. Mes komzet e vez ivez a hañvalreizh, a feminism.

179 Àr lec'hienn internet Teatr Piba, <https://www.teatrpiba.bzh/charte/>

180 *Merc'h an eog*. Op. Cit.

Er fin e vez komzet ag an divroñ get *Eden Bouyabes*¹⁸¹. *Eden Bouyabes* a zo anv ur c'hamp repuidi. Ur lec'h damhañval a janglenn Calais. Diskuliñ an amjustis, an disurente, an diyec'hed, dallidigezh ar galloudoù publik, dispriz ar gwirioù mab den. Mes ivez diskouez ar liammoù etre ar minorelezhioù gwasket hag ar c'hengred etreze. Kinniget e vez ar pezh-c'hoari èl-hen get ar strollad : « Ul lec'h gant harzoù ha n'int ket sklaer an hini eo. Ur c'hornad restachoù etre ur gevredigezh karget a hendadoù lastrez hag ur bed lintret gant an dienn enep roufennoù, kollet e vemor gantañ. Eno eo e vez berniet an dremenidi a c'hortoz an treizher, un treizh nevez, pe n'eus forzh petra gant ma vo nevez. A verniadoù, a garradoù, a garrigelladoù, a c'harlantezennadoù, gant trenioù pe bigi e tremenont... Peogwir int tremenidi. Tud en o zouez ne glaskont ket mui, divizet ganto chom a-sav, chom aze, grwiziennañ a reont e-lec'h m'emaint, etre daou, betek an dremenvan. N'int ket « deus du-hont », na deus lec'h all, eus lec'h m'int bet kaset gant o zreid emaint. Chom a reont o sevel o istor hag o mojennoù dezho. Annezidi « Eden Bouyabes » a ijin o buhez, gant o daouarn lous hag o yezhoù mouesk, degemer a reont n'eus forzh pe hini en o Breizh houarn dezho ha n'he deus anaoudegezh ofisiel ebet, nag he yezh ivez. Ne reont ket faoutr kaer. Dindan o zreid e touaront ar re varv, n'eus forzh deus pelec'h e oant deut. Pardonin a reont d'an holl bec'herien, aozañ a reont planedennoù meur d'ar buhezioù dister, ha diwar huñvreoù ratous e reont mojennoù evit an nevez-hañv, an hañv, an diskar-amzer pe ar goañv. »¹⁸². *Eden Bouyabes* a vehe neuze « Ul lec'h gant harzoù ha n'int ket sklaer an hini eo », « o Breizh houarn dezho ». Ur lec'h hep harzoù resis aveit komz a Breizh. Ur c'haoc'higell aveit berniñ ar repuidi, o c'hlenkiñ. Tud anc'hoantadus. Ar re a zo gwelloc'h kuzhat, lakaat a-gostez. Neuze e vez degemeret an holl 'barzh o Breizh « ha n'he deus anaoudegezh ofisiel ebet, nag he yezh ivez. ». Komz a gudenn anavezadenn ofisiel ar brezhoneg, ur yezh hep statud èl kement a yezhoù minorel. *Eden Bouyabes*, baradoz kollet minorelezhioù ar bed a-bezh. Minorelezhioù mesket, kemmesket. Komz ivez a gengred etreze : « Chom a reont o sevel o istor hag o mojennoù dezho. Annezidi « Eden Bouyabes » a ijin o buhez, gant o daouarn lous hag o yezhoù mouesk, degemer a reont n'eus forzh pe hini [...] ». Komz a Vreizh èl un douar degemer e-lec'h e vo komprenet ken mat degouezhioù ar minorelezhioù arall. Klotiñ a ra dres get komzoù Teatr Piba hag e c'hoant komz ag ar minorelezhioù hag o yezhoù er bed a-bezh.

Nameidennoù a vez kavet memestra get rummadoù koshoc'h ar leurenourion. Gellet a ramp menegiñ ar labour treiñ a oa bet graet get Goulc'han Kervella, get strollad Ar Vro Bagan ar pezh-c'hoari *Feulster nann* !¹⁸³. Ar pezh-mañ a gont istoer tri den yaouank Lucky, Muis hag Amina goude un darvoud skrijus : muntr Kevin, un pevarvet den yaouank hag a oa o mignon. Liammet eo get ar

181 *Eden Bouyabes. Op. Cit.*

182 *Eden Bouyabes* ar lec'hienn Teatr Piba, <https://www.teatrpiba.bzh/project/eden-bouyabes/>

183 *Feulster... Nann !. Op. Cit.*

raktres Offspring, savet e 1997, aveit kizidikaat an dud yaouank 15-25 blez doc'h an c'hoariva e yezhoù minorelaet Europa. Er blez-se e oa c'hoarvezet un darvoud mantrus e kêrbenn Bro-Friz : drouklazh ur c'hrennard get ur strollad tud yaouank. Fromet ha feuket oa an dud get ar feulster-se. Ur pezh-c'hoari arall zo bet savet get Ar Vro Bagan, e 2021. *Mont a raio kuit*¹⁸⁴ a ginnig un tem diaes mes pouezus da lakaat dre gomz : hani ar c'hleñved spered hag an emlazh. Sujedoù a zo chomet tabou e-pad pell. Diàr c'houlenn un tad a familh en deus skrivet Goulc'han Kervella, leurenour Ar Vro Bagan, istoer e vab, 18 vlez, a oa klañvet trumm diàr ar c'hleñved skizofreni. Seizh vloaz war-lerc'h e oa en em zistrujet. Kontiñ a ra buhez ar paotr yaouank get e gleñved, e stourm a-enep ar skizofreni, e zarempred get ar re arall mes ivez dic'halloud ha glac'har e dud.

IV.2. Reneveziñ ar leurenniñ

An dispac'h dramaourel-mañ a ya asambles get chañchamantoù a-bouez àr ar leurenn a-ziàr ar son, ar gouloù, ar c'hinkladurioù... Leusket e vez muioc'h a blas d'an damvenegiñ, d'an ijin ha liveoù kompren niverusoc'h a zo c'hoazh. C'hoariet e vez get ar lunioù-stil a-drugarez d'an neuzioù. Pep tra a zo difetisoc'h. Muioc'h a frankiz a vez gwelet, pellaet e vez an harzoù ha n'eo ket mui ken strizh ar framm.

IV.2.1. Ar son

Ur liamm nevez get ar son a zo get ar rummadoù yaouank. Stummoù liesseurt a vez klevet. Èl hon boa displeget en ur lodenn arall e c'hell bout ar son meur a dra : ar vouezh, ar sonerezh, an trouzioù. Un diforc'h a c'hellamp kaout e galleg etre « oralité » hag « auralité ». « La théâtralité des représentations scéniques actuelles repose largement sur leur oralité et leur auralité. L'émergence actuelle de la dramaturgie du son n'est pas simplement une question de technique artistique ou de style théâtral, elle est plutôt la preuve d'un changement conceptuel du discours théâtral. »¹⁸⁵ a lâr an dramaour Mladen Ovadija. Roet e vez muioc'h-mui a blas d'ar son dre vras. Ne vez ket mui graet ar son get c'hoari ar gomedianed hepken. Ne vez ket mui implijet ar sonerezh aveit skeudenniñ prezeg an tudennoù, ambroug ur chañchamant kinkladur. Ar son en deus e blas, èl un dudenn nevez. Traoù 'zo ne vezont ket damveneget, degaset nameit dre ar son. Ar son aveit arliviñ, kreñvaat, krouiñ ur chañchamant lusk, lakaat e lec'h komzoù ar gomedianed. Mladen Ovadija a gendalc'h « L'émergence actuelle de la dramaturgie du son n'est pas seulement une question de technique artistique : elle découle de la reconnaissance par les avant-gardes de la matérialité du son et de la

184 *Mont a raio kuit. Op. Cit.*

185 OVADIJA Mladen, *Dramaturgie du son : la matérialité de la voix et l'architecture du son / bruit dans le théâtre de Romeo Castellucci et de Robert Wilson, 2014*

fondation d'une nouvelle esthétique qui traite le son comme constituant intrinsèque d'une nouvelle théâtralité intermédiaire. Elle repose sur deux dimensions indissociables du son au théâtre : la dimension corporelle de la voix, du geste vocal et de l'incantation, et la dimension structurelle du son (concret ou abstrait) de la scène. »¹⁸⁶. Da lâret eo gober àr-dro ar son èl un hollad ha pas èl elfennoù hag a c'haller digevrediñ. Krouiñ liammoù, heklevioù fetis ha difetis, broudiñ an ijin. Ar son èl ur vektor treuzkas.

Ur skouer dedennus a zo ag implij ar son 'barzh *An Albatroz*¹⁸⁷ get ar stollad Safar. Àr ar leurenn emañ Lukaz Nedeleg, ar c'homedian, a gont istoer Jean-Marie Le Bris, breizhad a Zouarnenez ha gwastadour an nijerezh. Àr ar leurenn emañ ivez Youenn Bodros, sonour, a souten prezeg Lukaz Nedeleg get e voest an diaoul. E akordeoñs a vez implijet doc'h un tu aveit an trouziou : anal buan boest an diaoul aveit skeudenniñ berranal martoloded a roeñv, c'hwezh ar benveg sonerezh aveit skeudenniñ ur barr-avel. En em souten a ra ar c'homzoù hag an akordeoñs er skouerioù-se aveit aesaat kompren an arvesterion é tremen d'ur yezh d'egile. Mes implijet e vez ivez aveit ar sonerezh pa « slam » e brezhoneg Lukaz Nedeleg : « Istorioù bihan, bihan am eus kontet deoc'h [...] Et tout ça c'est que des poussières d'histoires, c'est que des poussières d'histoires et c'est sûr elles volent au vent. ». Klokaat a ra c'hoari ar c'homedian get sonerezh an akordeoñs. Ar son a vez graet en abadenn-mañ a-drugarez da voest an diaoul hepken. Ur benveg a c'hell bout implijet aveit meur a stumm hag a servij palioù niverus. Skouerioù an dibaboù leurenniñ a zo bet graet aveit *An Albatroz* a skeudenn mat an c'hoant skañvaat ar leurenniñ get ar rummadoù yaouank.

'Barzh skouerioù resis e vez ar son an harp kentañ hag an harp nameitañ. Ur c'hiz nevez a zo daet àr-wel e brezhoneg abaoe ur pemzek vlez bennak : ar faltazioù radio. Ar faltazioù radio a zo ur stumm gwall zishañval ag ar pezhioù-c'hoari klasel. Arvesterion a c'hell bout pe get, 'barzh ar sal, e-pad an enrolladenn mes n'eus kinkladur pe c'hoari gouloù erbet. Ur sapre diaezamant eo é soñjal er leurenniñ a vez graet neuze get ar son hepken. E-keñver an « oralité » e vez labouret get ar gomedianed àr ar pouez-mouezh, an taol-mouezh, ar lusk, ar c'has, an disklip, ar live-son pe c'hoazh ar c'hreñvder. Hag e-keñver an « auralité » e vez graet get sonerezh pe an trouziou, enrollet en e-raok pe graet àr-eeun àr ar leurenn. Ret sikour an arvesterion pe ar selaouerion en o c'hompren ha kempoueziñ ezvezañs ar skeudenn. Teatr Piba en deus enrollet dija meur a faltazi radio divyezhek pe e brezhoneg : *Ar Maezioù* (2015), *Teir-oberenn ar peñse* (2016), *Paotr e valizenn* (2017), *Maen Brest* (2017), *Skeulioù er c'houmoul* (2018), *Louise an arzhed* (2022).

186 *Ibidem*.

187 *An Albatroz. Op. Cit.*

IV.2.2. Ar leurrenaoziñ hag ar gouloù

Un dro-lâr a zo e bed an c'hoariva a lâr : « Ma ne welamp ket, ne glevamp ket ». Ar frazenn-mañ a zispleg mat na pezh talvoudegezh he deus ar gouloù. Ne servij ket ar gouloù ur pal kenedus hepken. Soñjal e mod-se e vehe re strizh. An emdroadur a zo bet gant ar gouloù a zo tost ag an hini zo bet gant ar son. Muioc'h-mui a blas hag a dalvoudegezh a vez roet d'ar gouloù. Ar gouloù aveit souten ar pezh. Ar gouloù a zo diazezet àr an destenn, an hent en deus c'hoant kemer ar leurrennour hag ar pal en deus c'hoant tizhout. Servij a ra ar gouloù ar pezh-c'hoari doc'h un tu mes kemer a ra perzh èl un elfenn kreiz doc'h un tu arall. Ar son hag ar gouloù a vehe marse hiziv an deiz, harpoù kentañ ar leurrenniñ get c'hoari ar gomedianed. Ar c'hiz a zo bremañ lakaat nebeut a draoù àr ar leurrenn. « Elle doit prendre en compte le décor, autre élément essentiel, car elle en est le complément. Elle peut le transformer et elle peut le remplacer s'il n'y en a pas. Elle peut servir également à délimiter l'espace, à concentrer, à élargir... Elle joue un rôle pour attirer le regard, elle peut agir comme un zoom en soutenant un objet par exemple, ou un point précis. Elle peut aussi, dans certains cas, servir à détourner l'attention du spectateur, et un changement de lumière volontairement visible doit signifier quelque chose pour le public. Il doit en comprendre le sens. Par exemple pour marquer un changement de lieu, ou un espace temps [...] »¹⁸⁸ a lâr Geneviève Soubirou, krouerez gouloù aveit an c'hoariva. Setu perak e kemer ar gouloù muioc'h-mui a blas àr ar leurrenn. Ar gouloù a gemer muioc'h aveit e-raok plas ar c'hinkladurioù. Servij a ra pal an damvenegiñ ha c'hoant ar leurrennourion leuskel muioc'h a frankiz d'an arvesterion en o c'hompren. Giz ar rummadoù yaouank a zo lakaat nebeut a draoù àr ar leurrenn bremañ. Gwelet e vez leurrenoù get nebeutoc'h a zanvez aveit e-raok ha peurgetket get un dra pe zaou a c'hell bout implijet aveit servij 'barzh meur a zarvoud.

Neuze e vez gwelet 'barzh *Privezioù Publik*¹⁸⁹, get Paritito, kuboù gwenn dispartiet an eil doc'h egile get linennoù gwenn, treset àr ar leur. Ar c'huboù a c'hell bout privezioù, kadoerioù, savennoù. Ar linennoù a c'hell bout ar speurennoù etreze. Speurennoù fetis doc'h un tu, speurennoù etre ar privezioù, ha speurennoù difetis doc'h un tu arall, speurennoù etre ar maouezed, speurennoù etre ar bed prevez hag ar bed publik. Choazet zo bet krouiñ speurennoù èl linennoù àr ar leur aveit harziñ lec'h an c'hoari, skeudenniñ ar lec'h 'barzh ijin an arvesterion hep serriñ sell an arvesterion. Marjanik, plac'h ar c'hempenn, a gousk er privezioù e-pad an noz. Hep ti nag aoz eo Marjanik. Er senenn diwezhañ ar pezh-c'hoari e vez kuzhet Marjanik mes klevet a ra pep tra a vez lâret etre Leila hag Abigaëlle diâr-benn Libellule, mignonez Marjanik. Traoù fall a lâr an div arall diâr-benn Libellule ha Marjanik ivez :

188 SOUBIROU Geneviève, *La lumière au théâtre, h.d.*

189 *Privezioù publik. Op. Cit.*

Abigaëlle ha Leila o tont tre. Leila a dremen dirak pep loch da sellet hag-eñ n'eus troad ebet da vezañ gwelet dindan.

Leila – Ar plac'h-se zo gevier-tout, 'lari ket din ar c'hontrol.

Abigaëlle – N'ouzon ket re.

Leila – Une grosse mytho, oui. N'ouzon ket perak e selaouomp outi. N'emañ ket amañ evit pell forzh peseurt mod.

Abigaëlle – Petra 'faot dit laret ?

Leila – Graet 'm eus war-dro. [...] Komzet 'm eus bet gant Gwendal. Selaou a ra ouzhin, gout a rez. Displeget 'm boa dezhañ e oan trist o welet Marjanik ken ankeniet gant istorioù Libellule.

Abigaëlle – Ankeniet eo Marjanik ?

Leila – Hag ez eo. Ne welez ket ? A-raok e oa ar plac'h-mañ ken skañv hag ur valafenn, eo deuet da vezañ pounneroc'h ha teñvaloc'h eget ur bilig.

Abigaëlle, *o c'hoarzhin* – Gwir eo, en ur mod. Sur out ez eo Libellule a zo kaoz ?

Leila – Piv all ? Ouzhpenn-se e vez amañ muioc'h-mui, o kontañ istorioù tort ha n'int mat da zen ebet. Te 'gav dereat e chomfe en noz, 'mod-mañ, el lec'h ma labour Marjanik ?

Abigaëlle – Te 'soñj dit e chom Libellule en noz da gousket amañ ?

Leila – Krediñ ne ran ket, gouzout 'ni eo a ran. Gwendal a zo bet o paka banneoù gant paotred ar sécurité, ha graet o doa war-dro. N'oa ket trapet anezhi, met ur sac'h-kousket o doa kavet war al leur. Douetañs 'peus c'hoazh bremañ ?

Abigaëlle – Ec'h ! Heugus eo ! Met piv a gouskfe 'barzh ar privezioù mod-se ? Gwall-gollet ez eo dav bezañ aveit ober kement-mañ ! Pa soñjan 'm eus bet poket dezhi ! Pegen lous ! [...]

Marjanik a zigor dor he loch, a ziskenn deus he gwele a-istribilh, hag a ya, teñval he fenn ganti, da gerc'hat ar pannelloù melen « Attention sol glissant ».

Marjanik – Sortez d'ici.

Leila- Ah Marjanik, t'étais là ?

Marjanik – Faut que je lave, faut partir.

Abigaëlle – Ça va pas ?

Leila – T'as entendu c'est ça ?

Marjanik – Evidemment que j'ai entendu. Vous croyez que je comprends pas assez bien le breton, c'est ça ? [...] 'Maez ma buhez. Bremañ. [...]

C'hoariet e vez get ar gouloù aveit sklêrijenniñ ar gomedianez-mañ-komedianez. Unan àr Marjanik 'barzh he logell, unan arall àr Leila hag Abigaëlle, en antre. Lakaet e vez ar gouloù àr ur poent resis ha pa vehe digor ar leurenn e vez komprenet mat n'emaint ket er memes lec'h memestra. An disparti a vez graet ivez get ar yezh. Leila hag Abigaëlle a zo é flapiñ e brezhoneg mes pa erru Marjanik er

jeu e yaont e galleg en-dro : « Ah Marjanik, t'étais là ? ». Un troc'h fetis a vez graet a-drugarez d'ar spas hag unan arall a vez graet a-drugarez d'ar prezeg ha d'ar c'hode-switching.

Skouerioù arall a zo get Teatr Piba. Ar pezh-c'hoari *Metamorfoz*¹⁹⁰ a ziskouez ur leurennaoziñ dister mes lipet ha peurlipet memestra. Prantad un huñvre eo prantad an abadenn. Metamorfozioù hag eñvorennoù a bep seurt. C'hoariet e vez get an displann : àr ar leurenn ha 'barzh komzoù an tudennoù.

En ur senenn emañ Eva, ar vamm-gozh, é oueliñ é soñjal en amzer paseet : he buhez plac'h yaouank nevez euredet, e Bro-Laos, get he gwaz Norbert a oa gwazour trevadennel. Oueliñ a ra kar choazet en deus he gwaz he dilezel aveit ur vuhez lan a anvanturioù e-kreiz ar janglenn.

Àr ar leurenn e vez c'hoariet get ar brizh-heol. N'eus nameit bannoù-heol a sil a-bell er leurenn. Àr ar leur ur leton glasvezus. Teir zudenn a zo hanter goulaouet. Norbert/Divanac'h, dirak. Skeudenn Norbert pa oa yaouank get e wiskamant gwenn, daoulinet àr ar leur, é sellet doc'h e zaouarn. Meluz/ar janglenn, e-kreiz. Ur plac'h vlevak, get blev hir àr he dremm hag he c'horf betek he daouilin. Ur seurt mojenn. Hag Eva, er foñs. Eva a zo harnezet àr ur garrigell. Metaforenn ar vaouez serret en ur c'horf-balen, serret 'barzh protokoloù ha reizhoù ar gevredigezh. A-dreñv dezhi e vez skignet skeudenn ur loargann bras-meurbet.

'Barzh ar senenn-mañ e vez klevet komzoù hep penn na lost, displann, èl ma vezont alies 'barzh an huñvreoù. Ne sikour ket ar c'hañchamantoù yezh an arvesterion en o c'hompren. Ar c'hontrol tout eo. An c'hoant a zo amañ brellañ an hentoù, bout tostoc'h a tem an huñvre, 'barzh ar c'homzoù ha 'barzh ar fedoù. An huñvre a aotre ar metamorfoz get liveoù dishañval.

'Barzh *Eden Bouyabes*¹⁹¹ get Teatr Piba e tremen an istoer en ur c'hamp repuidi anvet Eden Bouyabes just a-walc'h. Ar leurenn a zo, ur wezh oc'hpenn, dister : ur gibell merglet, ur laezenn douar, kasedoù koad, ur gadoer-vrec'h get ur lamp mezegiñ, ur marc'h-houarn kozh ha merglet, ur vagoer koad uhel-tre e foñs ar leurenn. Magoer Eden Bouyabes a vir ar repuidi er c'hamp. E-touez ar gomedianed e vez gwelet poupinelloù-pilh bej, margodennoù hep dremm ken bras hag un den. Engroez an divroidi. C'hoariet e vez kalz, amañ ivez, get an amsked.

En arvest 1, lodenn 4, eh eus ur senenn anvet *Dihun an hini varo* :

Emañ Sobrino ec'h ober un toull. Donet a ra àr-wel Gastrig é lenn levr Epictète hag e sachiñ ur garrigell. Àr ar garrigell emañ korf Stella, ur vaouez gozh, astennet ha goloet he c'horf get ur liñsel.

Gastrig - « Souviens-toi, dalh soñj, ma kredez eo dieub an traoù n'int ket kustum beza, ha ma soñjez eo dit ar pezh a zo stag ouz unan all, e kavi skoillou war da hent, pouez a vo war da joug,

190 *Metamorfoz. Op. Cit.*

191 *Eden Bouyabes. Op. Cit.*

strafuilhet e vi, fachet e vi gand an doueed ha gand an dud. 'Skoaz ma kredez out perhenn war ar pezh zo dit-te ha ma kredez n'out ket war ar pezh zo da unan all, ne vi ket rediet biken da ober ar pezh 'peus ket c'hoant da ober, den na viro ouzit a ober ar pezh a faot dit ; ne glemmi ket war-lerh den ebed ; ne damalli netra da zen ebet ; ne ri ket an disterra tra en despet dit ; den ne raio droug dit, n'ez-po enebour ebed peogwir ne hoarvezo netra fall ganit » - An dorn-leor. Kleved 'rez Niz ? Lemm e spered, an Epictète, Maracaibo ! Kement-se n'eo ket keusteuenn da vaga ar pennou-boueta plad, kea !

Sobrino – Touller-beziou... Uhella micher a zo, kea ?

Gastrig - ... « Krouet e oa bet mabden gand an doueed 'benn ma vefe eüruz ; dre e faot dezañ eo ma ne zeu ket a-benn da veza » - An hendivizou. Eun touller-beziou dieub on-me ! [...]

Sobrino a zo ec'h ober un toull é tenniñ e voned pa erru ar garrigell. Korf astennet ha goloet Stella get ur lienenn gwenn a zo trawalc'h aveit kompren e vo douaret an hani gozh a-benn nebeut. Lenn a ra Gastrig a vouezh-uhel skridoù Epictète¹⁹² aveit deskiñ sur a-walc'h. Komzet hon boa dija en ur lodenn arall ag e c'hoant pignat àr ar skeul sokial. « Eun touller-beziou dieub on-me ! », da lâret eo ar ouiziegezh hepken a roio dezhañ ar frankiz. Mes lenn testennoù prederouriezh a zo ivez ur voaien lidiñ obidoù Stella. Epictète a oa ur prederour gresian, ur « stoïcien ». Kelenn a rae ar vuhezegezh dreist-holl. Poueziñ a rae àr an ober. Hrevezañ eo sujet mab den d'un tonkadur poellek ha didrugarez, reizhet get reolennoù an natur. Pal e gelenn eo an eürusted. Ret eo d'an dud en em soñjal hepken àr ar lod a c'hellont mestroniñ hag asantiñ ar lod a vez divizet get an tonkadur.

Komz a brederouriezh, e brezhoneg oc'hpenn, e c'hell bout diaes mes reiñ a ra damkaniezhioù Epictète un heklev brav 'barzh ar senenn-mañ. Aveit diskouez mat d'an arvesterion emañ Gastrig é venegiñ Epictète e krog e dennad e galleg get gerioù brudet Epictète : « « Souviens-toi, dalh soñj [...] ». Derc'hel soñj berped a draoù a-bouez : « ma kredez eo dieub an traoù n'int ket kustum beza, ha ma soñjez eo dit ar pezh a zo stag ouz unan all, e kavi skoillou war da hent, pouez a vo war da joug, strafuilhet e vi, fachet e vi gand an doueed ha gand an dud. ». Asantiñ an tonkadur aveit bout eürus ? Kentel uvelded roet get ar repuidi d'an arvesterion.

Ur bochad chañchamantoù a zo neuze get rummad ar leurenourion yaoauank : lod brasoc'h aveit ar re arall, sur a-walc'h. Chañchamantoù a-ziàr ar stumm : leurennoù skañvoc'h, disteroc'h. Muioc'h a blas d'an ijin get liveoù kompren niverus ha dishañval. Chañchamantoù e-keñver an danvez ivez : ar sell àr ar bed hag àr Breizh, ar sell àr ar yezhoù, minorel pe get, temoù o fezhioù-c'hoari staget muioc'h get o c'houlz. Diskouezet e vez gete ur sell digoroc'h ha ledanoc'h àr statudoù ar minorelezhioù er bed a-bezh ha darvoudoù o yezhoù. Arc'het e vez o c'hoant d'o lakaat àr wel, d'o zalvoudekaat. Ar lod muiañ dezhe a asur labourat get hag aveit ar liesyezhegezh.

192 Epictète, prederour gresian, 50 – 125/130.

Un dra a chom amsklaer memestra get ar rummadoù yaouank 'barzh o liamm get ar brezhoneg. Arc'het e vize krouiñ ha labourat e/àr/get ar brezhoneg mes ne vize ket sammet penn-da-benn a-benn ar fin ? Studiamp pizh an « épitexte » hrezvez meizad Gérard Genette a-ziàr ar « paratexte »¹⁹³ : ar pezh a zo àr-dro pe a astenn an destenn. Iskis eo memestra lenn traoùigoù a seurt-se àr lec'hiennoù internet o strolladoù c'hoariva.

Ar strollad Paritito a ginnig ur lec'hienn e galleg hag e brezhoneg. Àr o deskriviñ e brezhoneg e c'hellamp lenn neuze : « E Penn-ar-Bed emaoamp staliet, ha labourat a reomp e brezhoneg. Hon krouidigezhioù a ra gant gallegoù du-mañ kement ha brezhonegoù ar vro, o vont d'un eil yezh d'eben evel ma reomp en hon buhezioù gwir. ». Mes pa dremenamp doc'h tu ar galleg e chañch talvoudegezh ha ster ar frazenn : « Nous sommes basés en Finistère, et nos créations utilisent les différents dialectes du breton et les dialectes du français d'ici, en passant d'une langue à l'autre – comme dans nos vies réelles. Au sein de la compagnie, nous travaillons en breton, mais ça c'est parce que ça nous fait rire. »¹⁹⁴. Labourat e brezhoneg kar farsus eo ? Ur private joke hepken ? Perak e vez ezhomm resisaat traoù e galleg ha ne vezont ket resisaet e brezhoneg ?

A-ziàr pezh-c'hoari *An Albatroz*¹⁹⁵ e vez lennet get ar strollad Safar : « La langue bretonne y fait son apparition, apportant sa percussion à un spectacle qui voyage quelque part entre le rêve et l'histoire. »¹⁹⁶. Ar brezhoneg ur figurantez n'he deus ken nameit ur perzh bihan en abadenn ? E mod-se e vez kinniget an traoù e-keñver ar brezhoneg ? Ur voaien e vehe da zinec'hiñ ar c'hallegerion o dize c'hoant preniñ pe monet da welet an abadenn a-ziàr plas ar brezhoneg kentoc'h ? Da lâret eo : "Rit ket bil ne vo ket re a vrezhoneg memestra".

Get Teatr Piba e vez skrivet ivez : « En s'interrogeant plus largement sur la place et sur l'intérêt d'une création en langue bretonne aujourd'hui, d'autres questions essentielles -et plus polémiques- peuvent se poser : En avons-nous fini avec les polémiques poussièreuses sur le repli identitaire, sur l'amateurisme suspecté de l'expression théâtrale en langue bretonne ? Comment assumer l'héritage de 30 ans de militantisme ? L'engagement est-il compatible avec une exigence artistique ? À mesure que se posent les questions, commence pourtant à apparaître un autre point formel d'accord : nous plaçons nos exigences et objectifs au niveau artistique en premier lieu, sans dénier l'importance d'un travail sur la langue, et nous souhaitons travailler dans une perspective créative contemporaine ouverte. »¹⁹⁷. Neuze n'int ket strourmerion mes arzourion. Memestra e vez diskuiliet traoù, krouet tabutoù get labour Teatr Piba. N'eo ket ur labour neptu tamm-erbet. Ha n'eo ket engouestlet ken sur ha tra o arz dija ?

193 GENETTE Gérard, meizad ar *paratexte*, 1987.

194 Àr lec'hienn internet Paritito, <https://paritito.com/>

195 *An Albatroz. Op. Cit.*

196 Àr lec'hienn ar gompagnunezh Safar, <https://ciesafar.com/spectacles/an-albatroz/>

197 Àr lec'hienn Teatr Piba, <https://www.teatrpiba.bzh/charte/>

Diaes eo gouiet resis petra eo mennozh ar re yaouank a-benn ar fin : ober goap doc'h ar re gozh hag o c'hoariva stourm pe c'hoant diskouez e c'hell an c'hoariva brezhonek degas traoù arall, traoù oc'hpenn ha n'eo ket en em zifenn hepken ?

Klozadur

Ur bochad emdroadurioù a zo bet en c'hoariva brezhonek adalek ar bleadoù 80'. Lod brasoc'h aveit ar re arall, sur a-walc'h mes emdroadurioù a-bouez memestra. Emdroadurioù dedennus a zo dija tro-dro an c'hoariva brezhonek.

Ar chañchamant pennañ a zo liammet get un c'hoant digoriñ. Un c'hoant ledanaat ha donaat ar prederiadennoù. N'eo ket mui un c'hoariva pobl nameitken a ginnige d'an dud c'hoarzhin get sketchoù pe farsadennoù. N'eo ket bet skarzhet ar fent mes n'eo ket mui pal kentañ an abadennoù hag emdroet eo marse ivez stumm ar fent. Pezhioù-c'hoari liesseurt a vez kinniget bremañ ha daoust ma vez kavet berped pezhioù-c'hoari farsus e vezont kinniget dreist-holl get rummadoù koshoc'h a leurenourion ha ne reont ket mui ar lodenn vrasañ ag ar pezhioù-c'hoari. Abadennoù niverus ha dishañval-bras a vez gwelet : abadennoù krouet penn-da-benn pe pezhioù-c'hoari klasel azasaet.

N'eo ket mui an c'hoariva brezhonek un c'hoariva diàr ar maez hepken kennebeut arall. Daet eo da vout ivez, ha d'ar muiañ, un c'hoariva ag ar salioù. Saliou bihan pe bras, leurennoù ofisiel (leurennoù kenouestlet, kreizennoù dramaek...) pe salioù àr ar maez. Tenniñ a reont gounid bremañ a rouedadoù skigniñ. Ha skignet e c'hell bout lod ag an abadennoù pelloc'h aveit harzoù Breizh. Kalzik abadennoù, ar braz anezhe memestra, a weler c'hoazh er salioù bihan àr ar maez.

Erfin eh eus un c'hoant sachiñ muioc'h a dud é kempoueziñ get o liveoù mestroniñ dishañval ag ar yezh. Ne vize ket bet, marse, ar strategiezh a-reizh kenderc'hel da ginnig pezhioù-c'hoari e brezhoneg penn-da-benn hepken ha c'hoari aveit un niver bihanoc'h-bihan a vrezhonegerion a-vihanik. Degemeret e vez bremañ brezhonegerion barrek pe varrekoc'h mes ivez gallegerion. Setu perak e oa daet da vout ar liesyezhegezh un dalc'h pouezus en c'hoariva brezhonek get razh an abegoù-se adalek un dek vlez bennak. Kendalc'h get ar brezhoneg, ar pellañ hag ar muiañ posubl, a zo ar pal, anat eo. Mes get sikour, harp ar yezhoù arall.

Èl e oa bet meneget er c'hudennadur, leurenniñ e brezhoneg a dalv leurenniñ ar brezhoneg ha reiñ o lod d'ar yezhoù arall. Mes peseurt yezh ha peseurt lod ? Komprenet hon eus dija n'eo ket ar galleg an harp nameitañ mes ar saozneg, ar latin, ar c'hembraeg a zo ivez ivez... Studiet e oa bet aveit ar yezhoù brasniver get Dandelion Epaud 'barzh e zezenn : « Le fonctionnement des pièces plurilingues n'est pas fondamentalement différent de celui de leurs consœurs monolingues. En effet, ce n'est pas tellement qu'elles créent à elles seules une nouvelle forme théâtrale, mais plutôt un nouveau rapport à la langue qui devient un véritable outil de narration, au-delà même de ce qu'elle dit. »¹⁹⁸

198 EPAUD Dandelion, *Plurilinguisme sur les scènes contemporaines de 1990 à 2010 : musique de la langue et bruit du monde*, 2024 , p 484.

Skoilhoù bras ha niverus a zo ec'h implij meur a yezh ha ret eo soñjal enne e penn-kentañ-tout ar labour krouiñ. Mes pa vez komzet a veur a yezh ne vez ket berped ar memes kementadoù 'barzh an divizoù. Ar lodenniñ a vez graet e modoù dishañval bewezh hag aveit abegoù dishañval ivez. D'an arvesterion da dapout ar pezh o deus ezhomm aveit heuliiñ an istoer. Gellout a ramp menegiñ labour yezhoniel Daniel Coste, Danièle Moore ha Geneviève Zarate a-ziàr meizad ar varregezh liesyezhek : « On désignera par compétence plurilingue et pluriculturelle, la compétence à communiquer langagièrement et à interagir culturellement possédée par un locuteur qui maîtrise, à des degrés divers, plusieurs langues et a, à des degrés divers, l'expérience de plusieurs cultures, tout en étant à même de gérer l'ensemble de ce capital langagier et culturel. L'option majeure est de considérer qu'il n'y a pas là superposition ou juxtaposition de compétences toujours distinctes, mais bien existence d'une compétence plurielle, complexe, voire composite et hétérogène, qui inclut des compétences singulières, voire partielles, mais qui est une en tant que répertoire disponible pour l'acteur social concerné. »¹⁹⁹. N'eo ket ret neuze mestroniñ peurvut an holl yezhoù a vez kinniget en abadenn. N'eo ket grevus a-benn ar fin mestroniñ mui-pe-vui ar yezhoù a vez klevet à ar leurenn kar liammet eo forset-mat get an implij a reomp ag ar yezhoù-se. A-benn-eno e c'hell pinvidigezhioù ar yezhoù oc'hpenniñ, dreistlakaat pe nulliñ elfennoù, fromoù, soñjoù 'zo. Gwell a-se pa n'eo ket ken barrek an holl arvesterion a-ziàr ar yezh hag ar sevenadur.

Klasket em eus displegiñ perak e vez graet get yezh-mañ-yezh e degouezh-mañ-degouezh. Kompren ivez perak e oa ret implij ar yezhoù arall e degouezhioù 'zo. An diglosiezh hag an digulturiñ eo an abegoù pennañ mes n'int ket ar re nameite. Kement a abegoù hag a stummoù a zo. Servij ur pal fetis hag aesaat ar c'hompren, servij ur pal arzel é taveiñ d'ur sevenadur pe menegiñ un oberenn arall, reiñ lusk d'an abadenn ha degas fent a-drugarez d'ar yezhoù... « Finalement, on peut se demander si la langue n'est pas, au même titre que le reste, un matériau comme un autre. Varier les langues ne serait alors qu'une autre façon de varier les supports. »²⁰⁰. Dibaboù a vez graet ivez hrevez renkadiñ ar ster a fell d'ar leurenourion reiñ d'an arvesterion, rhevez ar frankiz a vez leusket dezhe. Lod a ro ar mennad d'ar ster, lod arall a soñj e c'hell ar yezh krouiñ ur ster er-maez ag ar gerioù.

Leuskel da welout, da glevout, da gompren ar pezh o deus c'hoant ar leurenourion da reiñ d'an arvesterion hepken. C'hoari muioc'h get an traoù difetis. Neuze damvenegiñ ha degas ar yezhoù arall get soutilded hag a-drugarez d'ur bochad finesaoù leurenniñ. Kemer harp à an doare a-drugarez d'ar skrid, d'an tudennoù. Kemer harp à an danvez a-drugarez d'ar son, d'ar gouloù, d'ar

199 COSTE Daniel, MOORE Danièle ha ZARATE Geneviève ; *Compétence plurilingue et pluriculturelle*, 1997

200 EPAUD Dandelion. *Op. Cit.*

skeudennoù pe d'ar c'hinkladurioù. Reiñ muioc'h a emrenerezh hag a choaz d'an arvesterion. Dezhe da zastum ar munudoù amañ hag aze aveit krouiñ ha magiñ skeudennoù o spered.

Ar yezhoù o deus efedoù emskiant ha diemskiant àr hor barregezh kompren : penaos lec'hiiñ hag amzeriñ elfennoù istoer ar pezh-c'hoari. N'eus keñveriadur erbet amañ etre ar yezhoù. N'eo ket ar pal klask gouiet e-menn emañ harzoù yezh-mañ-yezh. Mes prouiñ kentoc'h n'eus harz erbet, kentoc'h implijoù pe liammoù dishañval get yezh-mañ-yezh. Get yezh-mañ-yezh e vo dishañval treuzkas ar fromadennoù, an titouroù, ar sell àr ar bed... Diskouez eh eus ivez ur liamm tenn ha kreñv etre yezh ha soñj. Ur sell hon eus holl àr razh ar yezhoù ha n'eo ket ar memes sell èl-just àr pep hani, etre ar yezhoù brasniver hag ar yezhoù bihanniver. Lakaat ivez da welout an darempredoù galloud etre ar yezhoù. Goulennata identelezh ar yezhoù kinniget àr ar leurenn. Klask chom hep o c'henstrolliñ doc'h un tu bennak mes o degemer èl m'emaint. Klask goulennata ar rakvarnioù, c'hoari gete, o zorriñ pa vez posubl. Ar yezhoù evit en em anavout hag anavout ar re arall ivez. Dandelion Epaud hon eus meneget e labour uheloc'h a lâr a-ziàr an dra-se : « Le passage d'une langue à l'autre est d'ores et déjà significatif. Il permet de modifier la valeur sémantique d'une partie du discours, de marquer l'opposition entre des groupes vécus comme nous / les miens et eux / les autres, de signifier l'adhésion à un discours, le statut d'une information, etc. Le changement de code linguistique fait donc partie intégrante du message et il est nécessaire de connaître les associations faites avec chaque langue pour l'interpréter correctement. »²⁰¹. Dre ar yezhoù klask gouiet, anavout, kompren an arallded.

Erfin eh eus bet marse muioc'h c'hoazh a emdroadurioù e c'hoariva brezhonek ar leurenourion yaouank, e-keñver an danvez hag an doare. N'eo ket mui an c'hoariva brezhonek, un c'hoariva e brezhoneg hepken hag un c'hoariva a-ziàr Breizh. Ledanoc'h-ledan ar sell, digoroc'h-digor ar prederiadennoù. Daet eo da vout Breizh un tamm ag ar bed gete. Klask a reont muioc'h-mui tremen ag ur sell hiniennel d'ur sell hollvedel. Memestra e sellont c'hoazh doc'h ar bed dre Vreizh ha dre ar brezhoneg ivez 'barzh ur bern pezhioù. Muioc'h-mui e savont pezhioù-c'hoari diàr-benn kudennoù hor c'hevredigezh ha dalc'hoù hor c'houlz abaoe un nebeud bleadoù : ekologiezh, heñvelrevelezh, divroiñ, gwirioù ha plas ar merc'hed... Chañchet e vez talvoudegezh ar leurrenaoziñ aveite hag a-drugarez dezhe. Klasket e vez gete diskar plas ar c'hinkladurioù e-kerzh elfennoù leurrenaoziñ difetisoc'h èl ar gouloù pe ar son. Kaout leurennoù dister a-wezhioù aveit kavout ar ster a-hend-arall, ur ster a c'hellehe bout dishañval aveit pep hani. Leuskel neuze muioc'h a frankiz d'an arvesterion en o c'hompren mes marse ivez klask dimeziñ an dour hag an tan, ha chom hep diskouez mennozhioù a c'hellehe bout tamallet da vout strizh ha serret. Diskouez n'eo ket an c'hoariva

201 *Ibidem.*

brezhonek un c'hoariva stourm hepken, pe un c'hoariva a stourm aveit pennkaozioù hollvedeloc'h bremañ. Abegoù stourm a vehe barnet reishoc'h, gwelloc'h aveit ar re arall ? N'eo ket ar yezh un abeg mat a-walc'h aveit stourm rhevez ar lod muiañ sur a-walc'h. Gwelloc'h dezhe komz a sujedoù « doc'h ar c'hiz » aveit komz ameeun ag ar yezh a-benn ar fin. Goulennata plas forzh peseurt minorelezh, lakaat da welout an droukziforc'hiñ hag ar gwask, goulennata talvoudegezhioù ha mennadoù an dud a-ziàr ar bed hag an amzer da zonet. Kreiziñ àr ar gomz kentoc'h aveit kreiziñ muioc'h àr ar yezhoù. Reiñ ivez da glevout muioc'h a liested 'barzh ar yezhoù a vez kinniget àr ar leurenn.

Poentoù niverus arall a vize bet dedennus da studiiñ er c'hounskrid-mañ. Ur mank a zo e-keñver implij ur yezh resis er liesyezhegezh 'barzh an c'hoariva brezhonek. N'eo ket bet studiet lod ur yezh a zo bet implijet get Teatr Piba en o abadenn nevez *Hentoù gwenn*²⁰² : yezh ar sinoù. Ur c'heuz bras eo. Re zister korpus ar pezhioù a-seurt, re nevez an danvez. Penaos e vez savet abadennoù liesyezhek etre yezhoù dre gomz ha yezh ar sinoù. N'eo ket ar memes liamm get ar c'horf. Penaos reiñ da gompren hep sonerezh ar yezhoù mes dañs ar sinoù ? Peseurt talvoudegezh a vez roet d'ar ster ? Labourat get yezh ar sinoù a dalv labourat get ar c'horf mes get variezonioù yezhoniel, luskoù dishañval. Koubliñ dre ar c'horf an c'hoari, ar c'horfeztaol hag ar yezh. Dedennus e vize bet ivez klask pelloc'h àr plas ha talvoudegezh an didrouz 'barzh ar yezhoù. Ar memes talvoudegezh ha pouez zo get an didrouz en holl yezhoù ?

Ar liesyezhegezh en c'hoariva brezhonek, pe forzh peseurt yezh vinorel, he dehe ar memes ster, talvoudegezh hag ar liesyezhegezh en c'hoariva ar yezhoù brasniver ? Dishañvalderioù a vehe get ar yezhoù minorel ? Pere ? Setu petra en deus klasket kompren Dandelion Epaud en e zezenn : « On trouve ainsi plus facilement des choses sur le théâtre plurilingue au Québec ou en Afrique. Au niveau de la France, on peut aussi trouver des éléments autour des langues dites régionales où des œuvres peuvent parfois être soit monolingues en breton ou langue d'oc, soit bilingues avec un apport en français. Si ces études sont intéressantes, remises dans le contexte général de la recherche, elles s'appuient sur un présupposé : ces œuvres seraient *logiquement* plurilingues, parce qu'elles seraient issues de contextes sociolinguistiques où le plurilinguisme est une évidence, soit parce qu'il est l'ordre même des choses dans ces endroits, soit par volonté militante. Un présupposé qui n'est pas complètement faux, mais me semble incomplet. Comme on a pu le voir, même la France n'est pas aussi monolingue que les discours officiels veulent le prétendre. »²⁰³. Implij ar liesyezhegezh 'barzh an c'hoariva brezhonek a vehe hepken diskouez ur skeudenn emhañveler ag ar wirionez ?

202 *Hentoù gwenn*, Teatr Piba, 2023. <https://www.teatrpiba.bzh/project/nos-voies-lactees/>

203 EPAUD Dandelion. *Op. Cit.*

Lan a rakvarnioù a zo c'hoazh kenstaget doc'h an c'hoariva brezhonek. Liammet eo c'hoazh 'barzh spered ar lod brasañ doc'h ur skeudenn gozh. Un c'hoariva mod-kozh neuze get temoù poultrennek ha kenedoù diamzeriet. Gwashoc'h c'hoazh : c'hoariva ur strolladig stourmerion strizh o spered. Goude lenn, selaou ha klevout doc'h kement a bezhioù-c'hoari e vez gwiriet na pagen pell doc'h ar wirionez eo ar skeudenn-mañ. Gwir eo eh eus pezhioù-c'hoari a bep seurt get sujedoù ha kenedoù dishañval-bras. Ha gellout a reer "pakiñ" an c'hoariva en ur skeudenn ? Mes lâret eo serr an c'hoariva brezhonek àrnañ e-unan a vize bet amjust ha faos. Gouiet en deus an c'hoariva brezhonek emdroiñ eñ ivez e-keñver an danvez hag an doare. Kenderc'hel a ra ar brezhoneg da vout, ivez ha c'hoazh, yezh an arz, yezh krouiñ bed an c'hoariva ha bed an arzoù dre vras, e Breizh. Ha pa vez rekouret d'ar yezhoù arall ne vez ket tamallet an diglosiezh hag an digulturiñ hepken. Diskouez a ra ivez na pegen digor e chom ar speredoù en c'hoariva brezhonek, prest da vout maget, pinvidikaet get barzhoniezh, sonerezh ar yezhoù arall. Muioc'h a varzhoniezh fetis ha difetis a zo marse é c'hoari get meur a yezh. Ha traoù a c'hellehe bout gwelet èl redioù a vez treuzfurmet, get hardizhegezh, fent ha bolontez, get ar leurenourion aveit donet da vout un elfenn diazez ag ar pezh-c'hoari, un elfenn a binvidika ar ster hag ar stumm.

Levrlennadur

Levrioù

Amoko 2, pezh-c'hoari ; Ar Vro Bagan, Goulc'han Kervella ; 1995 ; Brud Nevez, Emgleo Breiz

Ar Basion Vras, La Passion Celtique ; Ar Vro Bagan, Christian Desbordes ; 1991.

Ar Roue Ubu, Ubu Roi ; Alfred Jarry ; Ar Vro Bagan ; lakaet e brezhoneg gant Goulc'han Kervella ; 2008 ; Skol Vreizh.

Eden Bouyabes ; Erwan Cloarec ; Teatr Piba ; version bretonne Aziliz Bourgès ; 2011 ; Emgleo Breiz.

Fest ar Pimoc'h, Charcuterie fine ; skrivet gant Tilly ; Ar Vro Bagan ; lakaet e brezhoneg gant Goulc'han Kervella ; 2006 ; Skol Vreizh

Feulster... Nann ! ; Jan Veldman ; troet gant Goulc'han Kervella ; 2017 ; Embannadurioù Al Liamm.

Gwerzenn ar vezhinerien, pezh-c'hoari ; Diwar romant Yvonne Pagnier *Pêcheurs de goémon* ; Ar Vro Bagan ; 2005 ; Embannadurioù Delioù Editions.

Ma c'helljen-me kanañ laouen ; strollad Ar Vro Bagan ; 1977 ; Embannadurioù Al Liamm.

Metamorfoz ; Skrivet gant Aziliz Bourgès hag Erwan Cloarec ; Teatr Piba ; 2014 ; Berlobi.

Mont a raio kuit ; Goulc'han Kervella, Ar Vro Bagan ; 2022 ; Skol Vreizh.

Privezioù Publik, pezh-c'hoari divyezhek uniseks ; Mélanie Giotto ; 2016 ; Embannadurioù Goater.

Kelaouennoù ha kazetennoù

Hopala, débats de Bretagne et d'ailleurs ; n°11, juillet-octobre 2002 ; atersadenn get René Lafitte a Théâtre (s) en Bretagne ; p 36-39 ; get Gérard Prémel

Telerama ; Comment et pourquoi les cinéastes « brisent le quatrième mur » ? ; Romain Capelle ; ar 27 a viz Eost 2015 ; reizhet an 8 a viz Kerzu 2020.

<https://www.telerama.fr/cinema/comment-et-pourquoi-les-cineastes-brisent-le-quatrieme-mur,130600.php>

Pennadoù skiantel

CAIRE MÉRIDA, Marie-Pierre. *Le bilinguisme dans le théâtre Catalan au XIX^e siècle : un procédé dramatique* In : *Écrire en situation bilingue – Volume I : Communications* [en ligne]. Perpignan : Presses universitaires de Perpignan, 2004 (généré le 13 mai 2022). Disponible sur Internet : <<http://books.openedition.org/pupvd/34134>>. ISBN : 9782354123765. DOI : <https://doi.org/10.4000/books.pupvd.34134>.

COSTE Daniel, MOORE Danièle ha ZARATE Geneviève ; *Compétence plurilingue et pluriculturelle* ; Version révisée et enrichie d'un avant-propos et d'une bibliographie complémentaire ; Parution initiale : 1997 ; Vers un Cadre Européen Commun de référence pour l'enseignement et l'apprentissage des langues vivantes: études préparatoires ; Version révisée : 2009 ; Division des Politiques linguistiques, Strasbourg ; <https://rm.coe.int/168069d29c>

DAVID, Gilbert ; *La mise en scène actuelle : mise en perspective* ; 1985 ; *Études littéraires*, 18(3), 53–71. <https://doi.org/10.7202/500718ar>

DUSIGNE Jean-François ; *Jouer, étranger à sa propre langue* , *Nouvelle revue d'esthétique*, 2009/1 (n° 3), p. 67-71. DOI : 10.3917/nre.003.0067. URL : <https://www.cairn.info/revue-nouvelle-revue-d-esthetique-2009-1-page-67.htm>

GADET Françoise, VARRO Gabrielle, « *Le “scandale” du bilinguisme* », *Langage et société*, 2006/2 (n° 116), p. 9-28. DOI : 10.3917/ls.116.0009. URL : <https://www.cairn.info/revue-langage-et-societe-2006-2-page-9.htm>

HUPEL Erwan ; *Le renouveau du théâtre en langue bretonne* ; 2012 ; journée d'étude organisée par le centre d'études médiévales et dialectales de Lille 3. Lille, 28-29 septembre 2010. Thème du colloque : *Présence des littératures contemporaines en langues régionales de France*. Actes parus sous la direction de Jacques Landrecies, centre d'études médiévales et dialectales de Lille 3, Lille, pp. 203-216.

HUPEL Erwan ; *Reconsidering Breton theatre : minorised literature beyond minorization issues* ; 2015 ; Simposio Estudos literarios e campo cultural galego. Faculdade de Filosofia, Universidade de Santiago de Compostela, 2-3 septembre 2015, (actes à paraître).

HUPEL Erwan ; *Le coeur et l'esprit : déchirements et stratégies d'autotraduction chez quelques auteurs bretons* ; Glottopol, Revue de sociolinguistique en ligne ; n° 25 – janvier 2015 ; *L'autotraduction : une perspective sociolinguistique* ; Numéro dirigé par Christian Lagarde

HUPEL Erwan ; *Termajied ar feiz hag ar brezhoneg* ; Al Liamm niverenn 455 ; 2022.

LANGÉARD Chloé, *Les projets artistiques et culturels de territoire. Sens et enjeux d'un nouvel instrument d'action publique*, *Informations sociales*, 2015/4 (n° 190), p. 64-72. DOI : 10.3917/inso.190.0064. URL : <https://www.cairn.info/revue-informations-sociales-2015-4-page-64.htm>

MARTIN Roxane ; *Histoire et épistémologie de la notion de mise en scène*, *Pratiques* [En ligne], 191-192 | 2021, mis en ligne le 15 décembre 2021, consulté le 19 mai 2022. URL : <http://journals.openedition.org/pratiques/11254> ; DOI : <https://doi.org/10.4000/pratiques.11254>

NOLETTE, Nicole. *Le théâtre bilingue de l'ouest Canadien : stratégies et enjeux de traduction* In : *La traduction dans les cultures plurilingues* [en ligne]. Arras : Artois Presses Université, 2011 (généré le 13 mai 2022). Disponible sur Internet : <<http://books.openedition.org/apu/5341>>. ISBN : 9782848324470. DOI : <https://doi.org/10.4000/books.apu.5341>.

OVADIJA Mladen. *Dramaturgie du son : la matérialité de la voix et l'architecture du son / bruit dans le théâtre de Romeo Castellucci et de Robert Wilson.*, *L'Annuaire théâtral*, numéro 56-57, automne 2014, printemps 2015, p. 47–57. <https://doi.org/10.7202/1037327ar>

PAVIS, Patrice. *Chapitre XVIII. Production et réception au théâtre : La concrétisation du texte dramatique et spectaculaire* In : *Vers une théorie de la pratique théâtrale : Voix et images de la scène. 4^e édition revue et augmentée* [en ligne]. Villeneuve d'Ascq : Presses universitaires du Septentrion, 2007 (généré le 18 mars 2024). Disponible sur Internet : <<http://books.openedition.org/septentrion/13742>>. ISBN : 978-2-7574-1856-7. DOI : <https://doi.org/10.4000/books.septentrion.13742>.

PAVIS Patrice ; *Quelles théories pour quelles mises en scène ?*, dans : , *L'analyse des spectacles. Théâtre, mime, danse, cinéma*, sous la direction de PAVIS Patrice. Paris, Armand Colin, « Collection U », 2016, p. 317-342. DOI : 10.3917/arco.pavis.2016.01.0317. URL : <https://www.cairn.info/--9782200614027-page-317.htm>

PAVIS Patrice, *Chapitre 1. D'où vient la mise en scène ? Origine et théorie*, dans : , *La mise en scène contemporaine*. sous la direction de PAVIS Patrice. Paris, Armand Colin, « Hors collection », 2019, p. 13-28. URL : <https://www.cairn.info/--9782200623746-page-13.htm>

SCHMIDT Prisca ; *Le théâtre comme art d'apprentissage de la langue étrangère*. In: *Spirale. Revue de recherches en éducation*, n°38, 2006. Les langues à l'école. pp. 93-109; doi : <https://doi.org/10.3406/spira.2006.1272>
https://www.persee.fr/doc/spira_0994-3722_2006_num_38_1_1272

SOUBIROU Geneviève ; *La lumière au théâtre* ; Académie des Beaux-Arts, Institut de France ; <https://www.academiedesbeauxarts.fr/la-lumiere-au-theatre>

Tezenn

EPAUD Dandelion ; *Plurilinguisme sur les scènes contemporaines de 1990 à 2010 : musique de la langue et bruit du monde* ; Thèse présentée et soutenue à Rennes, le 2 février 2024 ; Unité de recherche : EA 3208 - APP Arts Pratiques et Poétiques.

Lec'hiennoù internet

Ar Vro Bagan ; <https://arvrobagan.bzh/fr/accueil/>

Kompagnunezh Safar ; <https://ciesafar.com/e-brezhoneg/>

La langue française ; *Quatrième mur* ; <https://www.lalanguefrancaise.com/dictionnaire/definition/quatrieme-mur>

Radio Breizh ; <https://www.radiobreizh.bzh/fr/>

Strollad La Obra ; <https://laobra.bzh/>

Strollad Paritito ; <https://paritito.com/presentation-de-paritito/>

Teatr Piba ; <https://www.teatrpiba.bzh/contact/>

Korpus

Al labous hag ar pesketour – Ar Vro Bagan – 2002
Amoko 2 - Ar Vro Bagan - 1995
An Albatroz – Kompagnunezh Safar – 2022
Ar Basion vras, La passion celtique – Ar Vro Bagan – 1991
Ar maezioù – Teatr Piba - 2015
Ar roue Arzhur – Ar Vro Bagan - 2023
Brezel e Bro-Leon – Ar Vro Bagan - 1998
Buhez Yann Gonan – Ar Vro Bagan - 1998
Eden Bouyabes – Teatr Piba - 2010
Fest ar pimoc'h – Ar Vro Bagan - 2006
Fêtes et légendes de Kerjean – Ar Vro Bagan - 1990
Feulster... Nann ! - Ar Vro Bagan - 2017
Gwerzenn ar vezhinerien – Ar Vro Bagan - 2005
Kakaw – Strollad La Obra - 2022
Kof-ha-kof – Ar Vro Bagan - 2022
Ma c'helljen me kanañ laouen – Ar Vro Bagan - 1977
Merc'h an eog – Teatr Piba - 2016
Metamorfoz – Teatr Piba - 2014
Mont a raio kuit – Ar Vro Bagan – 2021
Neizheta, elle niche où la langue ? - Teatr Piba - 2022
Piv ? Penaos ? Ha Petra ? - Strollad Kallag ha Gwerleskin - 2022
Privezioù Publik – Strollad Paritito - 2015
Ubu Roue – Ar Vro Bagan - 2008
War hent Youenn Gwernig – Ar Vro Bagan – 2019

Al labous hag ar pesketour – Ar Vro Bagan – 2002

<https://arvrobagan.bzh/fr-br/abadennou/al-labous-hag-ar-pesketour/>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn :

« Un abadenn diwar-benn an endro, plijus gant sonerezh evit ar vugale azalek 3 bloaz.

War un enezenn vihan ez eus ur pesketaer o chom. Doujañ ha diwall an natur a ra. Un drovezh e pak ul labous bet kouezhet e-touez mazout an Erika. Digemer anezhañ hag e louzaouiñ a ra.

Tamm ha tamm e pare a-drugarez d'ar pesketaer. Hemañ a zesk dezhañ espern madoù an douar ha difenn ar mor diouzh al loustoni, ar saotradur. Pa dremen e dud dreist an enezenn, d'an distro diouzh o goañvezh eo pare da vat. Mont a ra kuit en-dro asambles ganto.

Al labour-skol a c'hello bezañ graet diwar-benn an endro hag an natur. ».



©<https://arvrobagan.bzh/fr/creations/loiseau-et-le-pecheur-al-labous-hag-ar-pesketour/>



©<https://arvrobagan.bzh/fr/creations/loiseau-et-le-pecheur-al-labous-hag-ar-pesketour/>

Amoko 2 – Ar Vro Bagan – 1995

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn : « D'ar 16 a viz Meurzh 1998. Emañ an Amoko 2 o tremen er-maez d'an aodoù Breizh. Ul lestr nevez eo, diouzh doare, karget leun-barr a betrol (550 000 T). Erru eus Arabia, o vont da ziskargañ da Vro-Saoz... 20 vloaz zo abaoe peñse an Amoco Cadiz. Gwellaenn a zo deuet en traoù war ar mor, evit doare, lezennoù nevez a zo bet savet. Biken ne c'hoarvezo ken ur seurt abadenn. Albert Abalea, ur maer breizhat, deuet da vezañ galloudus abaoe prosez Chicago, en deus c'hoant da lidañ an 20vet deiz-ha-bloaz. Ha pedet gantañ d'ober ur veaj e bourzh an Amoko 2 an holl re o deus kemeret perzh en afer an Amoco Cadiz. Bez'emañ ar Vretoned, pennoù-bras ar parrezioù, tud ar vro, ur pesketaer, ur c'houer, merc'hed yaouank, merc'hed kozh, difenn an natur, ur c'haner, ur c'hazetenner, ur c'homandant ramoker...Bez'emañ ar barner bras MacGarr, an alvokad Cicero, renerez ar gompagnunezh Amoko... Mat ez a ar veaj. Laouen ha disoursi eo an dud. Ankounac'haet ganto an tabutoù a zo bet. Emañ an Amoko 2 o tremen e-biou d'an Enez-Eusa. Doare fall zo gant an amzer, ur barr-avel zo da gaout... ».

An albatroz – Strollad la Obra – 2022

<https://laobra.bzh/spectacle-vivant/spectacles/an-albatroz>


Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn : « Gant Lukaz Nedeleg ha Youen Bodros ouzh an akordeoñs.

Kontañ a ra « An Albatroz » istorioù mor hag istorioù oabl dre istor bihan Yann-Vari ar Brizh, dre gomz ha dre son boest an diaoul. Ur c'habiten eus Douarnenez a oa Ar Brizh, sorc'hennet gant ar soñj a oa deuet dezhañ pa oa o sellet ouzh al laboused-plavañ 'ba' morioù ar Su : mont dre nijal da saveteiñ ar vartoloded kollet er mor. Ur wech deuet war-e-giz da Zouarnenez e vo savet gantañ ur c'harr-nij diwar batrom un albatroz.

An abadenn-mañ a lak da vevañ taolioù-esae hag a vez alies-mat c'hwitet, alies-mat strujus ivez. Kavet e vez enni tudennoù dister, didalvout, un tamm kamm ivez. Bev-mat int er pozioù koulskoude. Hag eveldomp e klask ar re se toullañ un hent e-touez dizurzh ar bed. ».



©<https://ciesafar.com/spectacles/an-albatroz/>



©<https://ciesafar.com/spectacles/an-albatroz/>

Ar basion vras – Ar Vro Bagan – 1991

<https://arvrobagan.bzh/fr-br/abadennou/ar-basion-vras/>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn :

« Gant kalvariou ar vro eo bet levezonet ar Basion Vras

- Skrivet ha leurennet gant Goulc'han Kervella
- Sonerezh : Christian Desbordes gant Laz-Kanañ Penn ar Bed.

E 1991 eo bet savet *Ar Basion Vras* gant strollad *Ar Vro Bagan*, C'hoariva ha sonerezh kemmesket enni. Gant misteriou ar grenn-Amzer, c'hoariva poblek Breizh hag ar c'halvariou eo bet levezonet ar pezh-c'hoari. Eno e laver roue eus poaniou kriz ha maro Jesus Krist.

Evit gellout skrivañ ar pezh-c'hoari, Goulc'han Kervella en deus kemeret harp war kalvariou ar vro. Sonerezh : Christian Desbordes gant Laz-Kanañ Penn-ar-Bed. ».



©<https://arvrobagan.bzh/fr/creations/la-passion-celtique-ar-basion-vras/>



©<https://arvrobagan.bzh/fr/creations/la-passion-celtique-ar-basion-vras/>

Ar maeziou – Teatr Piba – 2015

<https://www.teatrpiba.bzh/br/project/ar-maeziou/>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari faltazi-radio get ar strollad èl-henn :

« Enrollet dirak an arvestourien d'ar merc'her 16 a viz Gwengolo 2015 e sal an Arhemuse (Briec) ha skignet war-eeun gant Radio Kerne

An Doktor Richard hag e vaouez Corinne o deus kuiteet Londrez, a-benn bevañ ur vuhez siouloc'h, war ar maez, e lec'h ma chomont bremañ. Distreiñ a ra Richard an nozvezh-mañ, gant ur vaouez dianav, « en deus kavet astennet en ur foz, war vord an hent », emezañ. O kousket emañ hi.

An enrollañ-skignañ a vo graet en un tenn dirak an arvestourien. Termenet e vo an dachenn-labour gant ar son da gentañ penn ha pa 'vefe ar mod da labourat tost deus spered un arvest bev. Pal an tri aktour, ar soner hag an trouzer, asambles gant al leurenner, a vo da reiñ buhez da ved Martin Crimp en ur gomposiñ gant ar poziou an trouziou hag ar sonerezh. ».



©Laurent Rousseau



©Laurent Rousseau

Ar roue Arzhur – Ar Vro Bagan – 2023

<https://arvrobagan.bzh/fr-br/abadennou/ar-roue-arzhur/>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn :

« Deuit da zizoloiñ istor ar Roue Arzhur hag an Daol Grenn !

Un abadenn skrivet ha leurennet gant Goulc'han Kervella.

En ur c'hovel emañ ar Mestr Gov o labourat. An hini en deus turgnet ar c'hleze Kaledvoulc'h an hini eo !

« Piv 'oa ar Roue Arzhur ? » a c'houlenn un toullad mevelien yaouank, korriged anezho.

Ha setu eñ da gontañ an istor bet c'hoarvezet er VIvet kvd, e Breizh-Veur etre Kembre ha Kernev ; ha diwezhatoc'h en Arvorig deuet da vezañ Breizh-Vihan. Kaoter Gundestrup ar Gelted kozh eo emañ o klask ! Ret eo reiñ e nerzh hag e c'halloud en-dro d'ar Roue Arzhur. Evit argas an enebourien hag adsevel Breizh a-nevez etre an daou du eus ar Mor.

Un abadenn tan ha kurun gant tudennoù hag anevaled dreist-naturel, dañsoù, emgannoù... ».

©<https://groupe-d-amis-29.webnode.fr/l/spectacle-le-roi-arthur/>



©<https://www.ouest-france.fr/bretagne/kerlouan-29890/le-roi-arthur-un-son-et-lumiere-inedit-au-village-de-meneham-a-kerlouan-9990a606-32d4-11ee-b9d2-1b752abb2bfa>



39-45 Brezel e Bro-Leon – Ar Vro Bagan – 1998

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn : « L'invasion de la Bretagne, la vie quotidienne des paysans, des gens des villes, des pêcheurs, artisans, goémoniers... pendant quatre longues années d'occupation... La résistance et ses héros... La libération du Finistère... Le retour à la paix... ».

Buhez Jan Konan – Ar Vro Bagan – 1998

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn :

« Buhez Konan :

E 1765 eo bet ganet Jan Konan e Sante-Kroe e-kichen Gwengamp. Gwiaderien baour e oa e dud. D'e zaouzek vloaz setu eñ mevel bihan en abati Keriti-Beauport. Eno e tesko lenn ha skrivañ. Da zibenn e vuhez, hag eñ gwiader e Tredraezh, en em ro da skrivañ e eñvorennoù-yaouankiz : e veaj d'an Douar-Nevez da besketa morued, peñse al lestr-Sovaj, ar garantez gant un Indianez, an nozvezh skrij en enezenn c'houez, an distro da Vrest, brezelioù an Arme republikan, ar stourm a-enep chouanted Bro-Dreger...

Ar pezh-c'hoari :

Levezonet eo eñvorennoù Jan Konan gant sevenadur Breizh hag ivez gant skridoù en deus bet lennet en Abati. Kemmesket eo enno ar wirionez ha faltazi ar pezhioù-c'hoari poblek a skriver hag a c'hoarier e Bro-Dreger d'ar mare-se. Dre ma vez Konan o skrivañ hag o labourat war ar stern e vez gwelet ar strollad c'hoariva o sevel ur pezh-c'hoari bet skrivet gant Konan e-unan. Al lien o tont eus ar stern eo al liamm etre darvoudoù e vuhez. Gwiadet eo ar pezh gant kaniri, dañsoù, goulaoù, kinkladurioù, margodennoù bras, taolenoù liesliv, o reiñ buhez da ijin dreist-ordinal Jan Konan. ».

Eden Bouyabes - Teatr Piba – 2010

<https://www.teatrpiba.bzh/br/project/eden-bouyabes/>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn : "“Kontet zo bet din... met daoust hag eñ eo dav deomp reiñ kred da bep tra ? Kontet zo bet din e oa erruet tremenidi kentañ Eden Bouilhables deus tu ar c'hreizeiz, d'ur mare kalet a amzer walarn krizh... deus ar re a vrod dantelaj mic'hi sall ouzh ar mourroù kalz pelloc'h evit pleg an divfroen... War gein o azened ! Met... d'am soñj e oa kañvaled 'ni oa... Laret zo bet din oa bet treuzet ganto ar menezioù hag an traoniennoù, kuzhet dindan tres louvedeg louet... Gwisket gant o flaergenn, didrouz ha disgwel, o doa treuzet ar c'herioù hag ar c'hontreoù. Ha pa oa sklasus an avel viz er boulc'henoù pe en traoniennoù don, ha 'benn diskornañ o eskern darwished diskaret, e veze dibajennet a- dammouigoù ganto o levrioù ponner leun a furnez hag a vraventez, da vezañ lonket gant ur seurt tan kommana a netra hep keuz ebet.”

Eden Bouyabes, Erwan Cloarec

Ul lec'h gant harzoù ha n'int ket sklaer an hini eo. Ur c'hornad restachoù etre ur gevredigezh karget a hendadoù lastrez hag ur bed lintret gant an dienn enep roufennoù, kollet e vemor gantañ. Eno eo e vez berniet an dremenidi a c'hortoz an treizher, un treizh nevez, pe n'eus forzh petra gant ma vo nevez. A verniadoù, a garradoù, a garigelladoù, a c'harlantezennadoù, gant trenioù pe bigi e tremenont... Peogwir int tremenidi. Tud en o zouez ne glaskont ket mui, divizet ganto chom a-sav, chom aze, grwiziennañ a reont e-lec'h m'emaint, etre daou, betek an dremenven. N'int ket « deus du-hont », na deus lec'h all, eus lec'h m'int bet kaset gant o zreid emaint. Chom a reont o sevel o istor hag o mojennoù dezho. Annezidi « Eden Bouyabes » a ijin o buhez, gant o daouarn lous hag o yezhoù mouesk, degemer a reont n'eus forzh pe hini en o Breizh houarn dezho ha n'he deus anaoudegezh ofisiel ebet, nag he yezh ivez. Ne reont ket faoutr kaer. Dindan o zreid e touaront ar re varv, n'eus forzh deus pelec'h e oant deut. Pardonñ a reont d'an holl bec'herien, aozañ a reont planedennoù meur d'ar buhezioù dister, ha diwar huñvreoù ratous e reont mojennoù evit an nevez-hañv, an hañv, an diskar-amzer pe argoañv."



©Anne-Sophie Zika



©Anne-Sophie Zika

Fest ar pimoc'h – Ar Vro Bagan – 2006

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn :

« Un dervezh hag un nozvezh.

Etre c'hwec'h eur nemet dek diouzh ar mintin ha teir eur ugent e-kreiz an noz. En ur gigerezh naet ha kempenn, re naet zoken, kalz re gempenn. An tad, ar vamm, ar mevel yaouank, ar vatezh... Hag ar mab... ar mab !

Troet diwar pezh-c'haori Tilly. ».

Feulster nann ! – Ar Vro Bagan – 2017

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn : « Tri c'hoarier yaouank, en-dro dezho war al leurenn, arvesterien ken yaouank all. Gerioù divalav, jestroù skoemp. Selloù kalet, selloù kollet. Feulster ! Peadra da brederiañ war un danvez skrijus, ur gwir binim evit hor c'hevredigezhioù.

Troidigezh Goulc'han Kervella a ro tro da bep hini da lenn, da zisplegañ pe da c'hoari Feulster... Nann !

En 1997, le projet Offspring a vu le jour pour sensibiliser les jeunes de 12-25 ans au théâtre en langues minoritaires dans l'Europe. Cette même année vit un événement horrible dans la capitale de Frise : le meurtre d'un adolescent par un groupe de jeunes du même âge. La population en fut émue et terrifiée. "Gewelt ...Nee !" - "Violence... Non !" fut alors mis en scène et jouée surtout dans les lycées.

Cette traduction de Goulc'han Kervella, directeur d'Ar Vro Bagan, première troupe professionnelle en breton, permet à tout un chacun de lire ou jouer la pièce. Dans l'espoir que la jeunesse bretonne s'empare de cette pièce internationale. ».

N'eo ket bet c'hoariet ar pezh-c'hoari-mañ, ur levr a zo hepken. Troet diàr Jan Veldman.

Fêtes et légendes de Kerjean – Ar Vro Bagan – 1990

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn :

« « Ce spectacle a été créé en été 1990 au Château de Kerjean à St Vougay dans le Léon, sous le titre « Fêtes et légendes, les nuits de Kerjean », Kerjean veut garder la mémoire de son prestigieux passé. Grâce au pouvoir magique de Miorcec de Kerdanet, historien du XIXe siècle et d'un Musicien descendu de la voûte lambrissée de la chapelle, les spectateurs sont entraînés dans un long voyage à travers le temps. Du grenier aux oubliettes, légendes et mystères de Kerjean vont rejaillir de l'histoire. » Goulc'han Kervella. ».

Gwerzenn ar Vezhinerien – Ar Vro Bagan – 2005

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn : « Jaïg, ur bezhiner yaouank, a garfe dimeziñ gant Jeannyvonne. Houmañ 'vat n'he deus ket c'hoant bevañ buhez kalet tud an Arvor. Gwelloc'h vefe ganti fortunañ gant ur martolod. Gant an dipit ez a Jaïg de vezhina da Gemenez e-kichen Molenez. Eno e chomo er goañv ivez asambles gant ar paour kaezh meveled war-dro ar bezhin peñse... War-dro ar bloavezh 1938 eo c'hoarvezet an istor-mañ d'ar mare ma oa freuz-stal war ar bezhin. Kalz a vezhinerien a rankas kuitaat ar vicher. Ar merc'hed ivez a glaske kaout ur vuhez aesoc'h. Diwar romant Yvonne Pagniez « Pêcheur de goémon » eo bet savet ar pezh-c'hoari-mañ gant Goulc'han Kervella evit « Ar Vro Bagan ». ».

Kakaw – Strollad la Obra – 2022

<https://laobra.bzh/spectacle-vivant/spectacles/kakaw>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn : « Evit ar familhoù eo ar pezh-c'hoari-mañ. An abadenn-mañ a gas ac'hanomp da Amerika Latina evit gweladenniñ istor ar chokolad mod-all : penaos e veze fardet ar c'hakao mod-kozh ha penaos e vez fardet hiziv an deiz ? E peseurt mod e vez aozet ar c'hakao, eus parkoù Amerika Latina d'hon taolioù leizh a chokolad warno ?

Kakaw zo kalz a livioù dezhi, livioù an hengoun hag al lidoù Maya. E-pad pemp munutenn ha daou ugent e vez pedet an arvesterien da vont gant ur veaj farsus ha barzhok war un dro. ».



©<https://laobra.bzh/spectacle-vivant/spectacles/kakaw>



©<https://laobra.bzh/spectacle-vivant/spectacles/kakaw>

Kof-ha-kof – Ar Vro Bagan – 2022

<https://arvrobagan.bzh/class/kof-ha-kof-grand-bal-au-pays-pagan/>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn : « Kontañ ra Kof ha kof istor un ostaleri vihan eus an Arvor o tont da vezañ sal-zañs ha boest-noz, diwezhatoc'h.

Arvest I

Deiz Meurlarjez e 1932, e ostaleri Sav-Heol, dalc'het gant Laouig ha Soaz. Emeur oc'h aozañ ar gouel. Ur pesketaer hag ur martolod-brezel a zo o klask kaout Finn, ar verc'h-henañ, da fortunañ.

Arvest II

Miz gouere 1954. Inouet eo Jaïg, mab Finn, er vro. Klañv eo defod mont da Bariz. Touristed e-leizh a zo krog da zont d'an aod. 'Benn ar fin e chomo Jaïg er gêr hag e kresko an ostaleri evit ober ur sal-zañs, « Kalypso ».

Arvest III

E 1976. Fall ar stall gant ar balioù. Dont a ra « Kalypso » da vezañ ur voest-noz, « Ar Pifoun »

Gant Yvon Etienne ha Jacky Bouilliol eo kaset ar c'hanaouennoù hag ar sonerezh en-dro. Lakaet e vez an dud da zañsal er sal. ».



©<https://www.letelegramme.fr/cotes-d-armor/tregastel-22730/spantheatrespan-kof-ha-kof-par-la-troupe-ar-vro-bagan-2962970.php>



©<https://www.brezhoneg.arvrobagan.bzh/abadenn-kof-ha-kof/>



©<https://arvrobagan.bzh/fr/spectacle-kof-ha-kof-joue-contre-joue-2/>

***Ma c'helljen me kanañ laouen* – Ar Vro Bagan – 1977**

Kontiñ a ra, en ur mod kriz ha flemmus, aloubadeg Breizh get touristed, embregerezhioù galloudus, politikerion... Penaos e vez prenet ha gwerzhet douar, tier, traoù a bep seurt mes savet ivez kazinoioù, kreizennoù nukleel ha me ouia-me, gete. Penaos eo diberc'hennet ar Vretoned a bep tra 'deus talvoudegezh dibriz aveite : o hengoun, o yezh, o bro, o frankiz...

E raskrid ar pezh-c'hoari eh eus skrivet get Goulc'han Kervella, oberour ar pezh-c'hoari : « Daoust hag e c'hell chom an c'hoariva brezhoneg distag diouzh buhez hor bro hep kemerout perzh e stourm pobl Vreizh ? [...] *Ma c'helljen...* a zo ur pezh-c'hoari engouestlet penn-da-benn. Fraezh e vez diskouezet e peseurt stad emañ ar vro hag e vez gwelet pobl Vreizh o tihuniñ da c'houde un hir a gousk. Ur pezh a « bolitik-faltazi » ez eo eta. ».

***Merc'h an eog* - Teatr Piba – 2016**


<https://www.teatrpiba.bzh/br/project/merc-an-eog/>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn : "Ur grouadenn etrevroadel savet e-korf pevar bloaz kenlabour etre Teatr Piba ha Teatr Genedlaeldol Cymru (C'hoariva Broadel Bro Gembre). Ur pezh-c'hoari liesyezhek e brezhoneg, kembraeg, galleg ha kreoleg.

Gant an hiraezh eo dalc'het Mair dibaoe m'eo distroet deus un obidoù familh e Bro-Gembre. Kaoz 'z eus bet eno da werzhañ ti-feurm ar re gozh. War chouk ar gembreadez ez eo kouezhet bec'h ar girriegerzh ha moustr an amzer dremenet.

O sevel goulennoù outi he-unan emañ Mair diwar-benn he buhez e Breizh, diwar-benn he evurusted hag an darempred he deus skoulmet gant he dousig Loeiza.

A-greiz-holl ez en em gav pell deus he buhez, pell diouti he-unan. A-greiz-holl e teu un amezeg sichant da ginnig ur prof iskiz dezhi, 'vel un ofrant...".



©Kirsten McTernan



©Kirsten McTernan



©Kirsten McTernan

Metamorfoz - Teatr Piba – 2014

<https://www.teatrpiba.bzh/br/project/metamorfoz/>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn :

""Hon buheziou-pad e tisoñjomp hor c'hemmoù...»

Bamet ' vezomp gant an dezrevelloù metamorfoz a vev ennomp. En enno emañ ar galloud da gemm ha war un dro e termenont ar stumm hag ar penn-natur. Petra a gemm ennomp? Petra a gemm ac'hanomp? Netra ne vir ouzh ar c'horf da gemm an eil devezh goude egile. Ne c'hellomp bezañ sur deus un dra nemeken, fin a vo dezhañ. Skridoù, goulioù eo ar peurest. Ha ni, kleizhennet, da vont a-hed gwenodennoù bet difraostet a vloaz da vloaz gant frouezh hor buheziou kent, sorc'hennet alies ken tost deomp e seblant bezañ an traoù. Bep a dammig e kasomp kemmigoù war an dachenn diabarzh, o tisoñjal, o ruzañ, oc'h ober van chom hep klevet ar biroù a nij tro-dro deomp. A-wechoù e pakomp unan en hor c'hein, ken ma laoskomp ur mell vlejaden, ken ma chomomp berr alan war-lerc'h. D'ar seizh avel e talm hor c'halon. Kartenn ar vro : didalvoud. An hentoù a anavezomp : didalvoud. Liv an oabl : un dra all. Un toull laosket gant an ezvezañs, ur borched e tifoup pep tra drezi betek bezañ stlaket, brevet hon izili, strewet a bep tu. Aze emaoomp c'hoazh war-lec'h an taol tourmant. N'eo ket ni ken avat. Marvet un dra ennomp ha ganet un dra war an dro. Un ribin nevez a gas da vroioù dianav.

Un den, war nes mont da vakañsiñ gant e vignoned, 'n em gav trumm gant relegoù e dad kozh war e chouk ...

Petra ober gant eskern an hendad marvet pell-zo e bro Laos ? Lezel anezhañ en ti-pakajoù pe kas anezhañ da veajiñ gantañ ? Kontañ a ra Metamorfoz beaj diabarzh Abeguile o pegañ gant istor e familh.

Ur vuhez all a sav ennañ, mouse'hoarzhoù frank, mareoù

fromm : Ur fanfar dianket

Ur plac'h vlevk

Maouez an alc'hweziou

Skeudoù an amzer dremenet o treuziñ huñvre an tad kozh

Krenadennoù un den

Mab Egile"



©Anne-Sophie Zika



©Anne-Sophie Zika



©Anne-Sophie Zika

Mont a raio kuit – Ar Vro Bagan – 2021

<https://www.teatrpiba.bzh/fr/project/metamorfoz/>

<https://arvrobagan.bzh/fr-br/abadennou/mont-a-raio-kuit-br/>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn :

« *« War c'houlenn un tad a familh eo em eus skrivet ar pezh-c'hoari-mañ : e vab, 18 vloaz, a oa klañvet trumm diwar ar c'hleñved skizofreni. Seizh vloaz war-lerc'h e oa en em zistrujet. C'hoant en doa an tad e vefe savet ur pezh-c'hoari diwar an istor trist-se. Evit sikour anezhañ da harpañ ouzh ar glac'har hag ivez, marteze, ar re yaouank, klañv o spered ha d'ev d'en em zistrujañ. »*

Goulc'han Kervella

Mont a raio kuit a gont istor un den yaouank er bloavezhioù 1990, klañvet trumm diwar ar c'hleñved skizofreni pa oa 18 vloaz hag en em zistrujet seizh vloaz war-lerc'h. Savet diwar un istor gwir, ar pezh-c'hoari fromus-se a c'hellfe sikour an arvesterien yaouank hag o familhoù da gompren gwelloc'h an dud klañv o spered ha d'ev d'en em zistrujañ.

« *Klañv-bras eo ho mab gant e spered !* »

Evel un taol horzh war benn ar Vamm hag an Tad eo komzoù ar medisin. Echuet e studi gant ar Mab, edo o vont da zeskiñ ur vicher. E-pad seizh vloaz e chomo klañv. Dirollet e spered. Klasket en doa deskiñ ur vicher all. Un devezh avat... ».



©<https://arvrobagan.bzh/fr/creations/un-jour-il-partira/>



©<https://arvrobagan.bzh/fr/creations/un-jour-il-partira/>



©<https://arvrobagan.bzh/fr/creations/un-jour-il-partira/>

Neizheta, elle niche où la langue ? - Teatr Piba – 2022

<https://www.teatrpiba.bzh/project/elle-niche-ou-la-langue/>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn : « Qu'elle soit présente en creux (regret de ne pas la parler, de ne pas l'avoir transmise) ou en relief (transmission active, militantisme), la langue bretonne est là, au quotidien, elle nous construit et nous entoure. Mais où précisément ? Où se niche-t-elle ? C'est à cette question que notre projet veut répondre de manière ludique, inclusive et joyeuse.

Il s'agira de questionner le rapport que nous entretenons à notre langue, à nos langues : celles qui nous suivent, qui sont invisibles ou transparentes, celles qui nous embarrassent ou celles que nous semons, celles que nous cachons ou que nous poursuivons. Le projet ambitionne une approche collective qui s'attacherait à déceler, dans nos témoignages intimes ou nos anecdotes familiales, les relations, en aller-retours, avec ces langues héritées et covées ; ces langues qui comme autant de territoires fantômes, nous habitent, nous façonnent ; ces langues qui, en creux, travaillent et poussent, se ramifient et se transforment de génération en génération.

Le projet veut aborder cette sorte d'archéologie intime en donnant à entendre, avec humour et distance, une polyphonie intergénérationnelle en va-et-vient entre réel et fiction, en va-et-vient entre les langues, guidés par une question : elle se niche où la langue ? ».



©<https://www.teatrpiba.bzh/project/elle-niche-ou-la-langue/>



©<https://www.teatrpiba.bzh/project/elle-niche-ou-la-langue/>



©<https://www.teatrpiba.bzh/project/elle-niche-ou-la-langue/>

Piv ? Penaos ? Ha petra ? – Strollad Gwerliskin ha Kallag – 2022

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn :

« Komedenn bolis e brezhoneg penn-da-benn. Krouidigezh nevez an daou strollad :

Strollad Gwerliskin ha Strollad Kallag.

Piw ? Piw zo bet kad da lazhañ aotrou maer ur gêr vihan sioul deus Kreiz-Breizh ?

Penaos ? Penaos ur muntr ken spontuz, da zez ar marc'had ouzhpenn, pa oa bodet toud an dud evid enoriñ un den meur ha madelezhuz evid ar barroz ?

Petra ? Petra zo kaoz d'ar muntr-se ? Peseurt itrikoù, peseurt, drouksoñjoù a oa e-barzh penn ar muntrer a-benn ober un torfed ken euzhuz ? Piw eo an Doktor Kilhog, un den misteriu mar zo ?

Ur pezh-c'hoari fentus ha dirollet, evel kustum gant an daou strollad-mañ, daoust d'an tem da vezañ siriuz, ha gant tammoù traoù dic'hostoz ive. Deoc'h da weled...

Ha kalz a blijadur da-heul, mechañs ! »



©<https://www.letelegramme.fr/cotes-d-armor/plougras-22780/span-classamorce-theatre-en-bretonspan-dimanche-a-la-salle-multifonctions-3407371.php>



©<https://www.letelegramme.fr/cotes-d-armor/guingamp-22200/span-classamorcefestival-digorspan-un-final-au-theatre-avec-piv-penaos-ha-petra-4000595.php>

Privezioù publik - Kompagnunezh Paritito – 2015

<https://paritito.com/archives/>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn : « Privezioù ez eo ur ger a gas da soñj en dachenoù prevez ha dibublik. Privezioù publik a zo neuze dioute ur c'hroaz-hent daou du, o vezañ lec'hioù personel, lec'hioù an tabou hag ar pezh 'vez da guzhat, pa vezont ivez evit ar maouezed lec'hioù gwir emgav pe tremen dianav. Pep frailhenn zo da gaout er gevredigezh a da vezañ kavet eno ivez : disheñvelderioù yezhoniel, sokial, sevenadurel, disheñvelderioù seksuel ha reizhel. An aon rak an traoù lous, hag ar pezh a weler e-barzh. C'hwezhoù ar re all.

El lec'h prevez ha publik-mañ, en ur galiri kenwerzh lec'h bennak e Breizh, e vez maouezed o tremen, hag e tizoloer an darempredoù etreze. Marjanik, ar plac'h a gempenn al lec'h, a wel pep hini all o tremen: Leila skañv he fenn hag he brozh, hag a zo atav ur ger fentus ganti, Abigaëlle ar werzherez bravigoù a gred ken start barzh ster he labour betek ma ne rafe ket ken... ha Libellule, anat deoc'h! Met deus a belec'h e teu al Libellule-se? Penaos e ra-hi evit bevañ etre maouezed nemetken ? Daoust hag a zo diouti da vat ? Daoust hag ez eo ar maouezed a blij dezhi pe unan nemetken ? Ha livañ gevier a rafe ? Ha dreist-holl, piv a vez o kousket er privezioù da noz ? Piv a leñv a-dreñv an nor ?

An ton realism vurzhdus choazet evit ar pezh a lez sevel fraezh goulennoù politikel diazez. Petra a chom en XXI^o kantved deus komzoù ar maouezed kenetreze ? Penaos bevañ hon feminismoù hiriv an deiz ? Petra a chom d'ar maouezed da vevañ hepte ? Penaos e tremen komzoù ar maouezed diarbenn ar feulsteur ? Evel maouezed, petra hon eus da lavarout ha ne c'hloazfe ket ac'hanomp ? Peseurt lodenn deus hon buhez e vev ar brezhoneg enni ? Prevez pe publik ? Piv a choaz peseurt yezh evit peseurt implij ? Piv a c'hell c'hoazh kemer amzer da selaou ouzh ar re all ? Petra eo deuet hon kengred da vezañ ?

Setu ar goulennoù ne vo ket respontet diouto er pezh.

Peogwir petra soñj deoc'h, tudoù ? ... e vo kavet diskoulmoù evidoc'h hep ma rafec'h seurt ? ».



©<https://paritito.com/archives/>

©<https://paritito.com/archives/>



Ubu Roue – Ar Vro Bagan – 2008

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn : « “Kraoc’h !” eme ar Roue Ubu. Ur farsadenn eo da gentañ pennoberenn Jarry, bet skrivet gantañ pa ne oa nemet pemzek vloaz. Ur gwir bourc’hiz eo Ubu, deuet da vezañ un den gouez ha poltron, leun a gounnar hag a vrasoni. Ha ma vefe an tad Ubu ur seurt meleziour eus ar pezh a c’hell dont da vezañ kement hini ac’hanomp ?

Troet diwar pezh-c'hoari Jarry. ».



©<https://mobile.abp.bzh//theatre-le-roi-ubu-a-loco-al-mendon-vendredi-soir-prochain-12618>

War hent Youenn Gwernig – Ar Vro Bagan – 2019

<https://arvrobagan.bzh/fr-br/abadennou/war-hent-youenn-gwernig/>

Kinniget eo ar pezh-c'hoari get ar strollad èl-henn :

« Ur pezh-c'hoari gant kanaouennoù, sonerezh ha video.

- Skrivet ha leurenniet gant Goulc'han Kervella
- Sonerezh : Tangi Le Gall-Carré (Boest an Diaoul), Erwan Moal (Gitar)
- Kan : Tangi Merien, Typhaine Corre, Erwan Billant

Ganet e Skaer e 1925. Kizeller-koad diouzh e vicher. Binaouer, barzh, skrivagner ha kaner. Etre 1957 ha 1969 emañ o chom e New-York gant e wreg Suzig hag e deir merc'h, Annaig, Gwenola, Mari, kanerezed. Ober a ra anaoudegezh gant Jack Kerouac (Beat Génération).

Distro e Breizh e kan evit ar stourmoù sokial ha sevenadurel. Rener an abadennoù brezhoneg e FR3 Roazhon e 1983.

Ur gwir varzh, ur stourmer, laouen, uvel ha digor war ar bed. Un den mat !

Tremen a ra ar pezh-c'hoari en ur studio TV. Emaer oc'h enroll un abadenn diwar-benn buhez hag oberennoù Youenn Gwernig. Pedet eo bet an arvesterien da gemer perzh en abadenn-se. »



©<https://arvrobagan.bzh/fr/creations/war-hent-youenn-gwernig-kinnig/>



©<https://www.pakerprod.bzh/album/war-hent-youenn-gwernig/>



©<https://www.letelegramme.fr/morbihan/orient-56100/pays-de-orient-emglev-bro-an-orient-prepare-les-deiziou-2021-3711313.php>



©<https://www.letelegramme.fr/finistere/carhaix-29270/ar-vro-bagan-racontera-youenn-gwernig-le-11-mars-a-lespace-glenmor-3619548.php>

